

**AR FEIZ  
HAG AR VRO.**

**1789-1814.**



Ar feiz ! eur lez ! eur galon !  
Ar c'hiz gon, ar c'hiz wirion !  
TALIZIN.

**E GWENNED.**

**MOULET GAND DE LAMARZELLE.**

**1847.**

AR FEIZ  
HAG AR VRO.

1789-1814.



Eur feiz ! eur iez ! eur galon !  
Ar c'hiz goz , ar c'hiz wirion !  
TALIEZIN.

*Paul Barthelemy*  
E GWENNED.

MOULET GAND DE LAMARZELLE.

1847.



D'ANN AOTROU  
**HERSART DE LA VILLEMARQUE,**

MARC'HEK EUZ A URZ ANN ENOR,  
BARZ A VREIZ-VEUR HAG A VREIZ-ARVORIK  
HA KUTUILLER BARZAZ-BREIZ,

**AL LEOR-MA**  
**A ZO GWESTLET**

GAND

**HE GENVROAD ANAOUDEK,**

**A : DURAND, BELEK.**

D'ANN AOTROU

**HERSART DE LA VILLEMARQUE,**

MARC'HEK EUZ A URZ ANN ENOR,

BARZ A VREIZ-VEUR HAG A VREIZ-ARVORIK

HA KUTUILLER *BARZAZ-BREIZ*,

**AL LEOR-MA**

A ZO GWESTLET

GAND

**HE GENVROAD ANAOUDEK,**

A : DURAND , BELEK.



Ann taoliou kaer meurbed  
Gret gand ar Vretoned  
O tifenn ann Iliz,  
O virout ho frankiz,  
Ha kant ha kant kentel  
Deut digant tud santel,  
Ann traou-ze a garann  
Hag aman ho larann.

## KENT-SKRID.

---

EL leor-man e kaveur dastumet ha reizet ar c'ha-  
naouennou ar re gaera savet enn enor d'ar Feiz ha  
d'ar Vretoned, epad ann amzer druezuz a c'halveur  
e gallek ar *Revolusion*. Ann dud koz ho deus he  
gwelet, hag a oar ervad petra oa; ann dud ionank  
n'ho deuz ket, ba kalz na ouzont doare ebed anezhi.  
Leveromp eta penaoz e teraouaz.



Eur stroll euz ar pennoù kenta e-touez ar c'hal-laoued, a leveret anez-han, e gallek, ann *Asamble Nasional*, a zougaz eul lezen direiz, ar zeiz war-n-ugent a viz Du, 1790. Hervez al lezen-man a vije taolet er meaz euz ho c'harg, ann holl veleien pere n'ho divije ket great, abenn eiz deiz, al le a lealded d'al lezennou nevez, great evit ar c'hloer pere ne c'houljent ket

Dinae'h ho gwir Eskob ha dont d'hen dilezel,  
Dianzavout a grenn galloud ann Tad-Vikel,  
Terri ann holl westlou ha rei d'ar Renerien  
Pep gwir war ann Iliz d'he zrei ha d'he c'hempenn.

Kement-se a c'hlac'haraz ar veleien hag ar gristenien vad. Mar boe gwelet, euz eunn tu, kalz hag a choumaz digeflusk ebarz ar Feiz, e oe ive gwelet, siouaz ! euz ann tu all, kalz hag a zeuaz d'he dilezel ha d'he gwerza. Ann niver bihana koulskoude euz ar veleien a zeuaz d'ober al Le : evel-se, hervez ma levereur, ugent hep ken her greaz enn Eskopti Gwenned : seitek e hini Leon, euz a bere pevar en em zislavaraz hep dale : eur c'hant hanter, e hini

Treger, muioe'h e hini Kemper, ha nebeutoc'h e hini Sant-Briek. Kant pemp ha tregont Eskob, hag ouc'hpenn kant mil belek ne aotrejont ket hen ober : kerkent ann *Asamble* ho diskleriaz torret eus ho c'hargou hag a lekeaz enn ho leac'h, ar re pere ho devoa great al Le. Ar re-man en em lekeaz da ren ann eneou, petra bennak n'ho devoa bet beli ebed war-n-ezho, na digand ar Pab na digand ar gwir Eskibien, ha dre eno e oent kiriek d'ar striv-ze pehini a c'hlac'haraz Iliz Bro-C'hall, epad eunn dek vloaz.

Ar bastored, enn eur guitaat ho denved, a reaz d'ezho dre gomz ha dre skrid, meur a gentel evit ho c'heleenn ha lavarout d'ezho penaoz ober epad ann dispac'h, hac evit ho alia da choum stard enn ho Feiz ha feal d'ho Doue.

Goude beza dilezet ho farresiou, e choumijont, darn e touez ho denved, ha darn all e touez ho c'herend hag o mignouned : peoc'h ho doe, eur maread amzer, hogen kement-se ne hadaz ket pell. Enn nao war-n-ugent a vis Du, 1791, ann *Asamble*, hanvet neuze al *Lezennourez*, a dennaz digand ar re ne deurvezent ket ober al Le, al leve a oa bet lezet gant-



ho. Er c'houec'h war-n-ugent a viz Eost, euz ar bloaz warlerc'h, hi ho barnaz da veza kaset er meaz euz ar vro : al lezen-man a oe douget a nevez gand ar *Gonvansion*, d'ann unan war-n-ugent a viz Ebrel, 1793, hag er bemp war-n-ugent a viz Du, 1795. Al lezen euz ar c'houec'h war-n-ugent a viz Eost, a oe sevenet gand ar grizder ar vrasa. Neuze e oe gwelet eunn niver braz a veleien, o kuitaat Bro-C'hall, evit tremen e Spagn, enn Italia, enn Alamagn hag er broiou pell, da glask eur peoc'h pehini ne gavent ket enn ho mamm-vro. E Bro-Zaoz dreist-holl, e tremenaz ann niver brasa anezho. Abenn divez 1793, hervez eur skrid dorn euz ann Aotrou ar C'hellek, persoun a Blougiel, taost da Landreger, en em gave enn enezen Jerzea, tri mil daou c'hant eiz ha tri-ugent belek, euz a bere, nao-ugent a zeue euz a Eskopti Sant-Briek, c'houezec ha seiz-ugent euz a hini Treger, daou ha tri-ugent euz a hini Leon, trizek ha tri-ugent euz ha hini Kemper, hag eiz war-n-ugent euz a hini Gwenned. Hanoiou beleien Treger a zo aman enn divez.

Teurvezit, va Doue, diwall hor pastored,  
Mont a raint holl da goll, ma n'ho skoazellit ket.  
Ho mirit enn harlu : klevit hor pedennou  
Hag ho c'hargit dre holl, euz ho madelezou.

E Bro-Zaoz ho doe ar veleien eunn digemer euz ar gwella. Ar re a dremenaz di, a gavaz eno daou Eskob euz a Vreiz, ann Aotrou De La Marche, Eskob a Leon, hag ann Aotrou ar Mintier, Eskob a Dreger; ann daou-man a hevele beza bet kaset diarok gand Doue, d'ar vro-ze, evit digemer ar veleien forbannet. Ann Aotrou De La Marche a iez da Londrez, kerkent ha ma oe diskennet e Bro-Zaoz : he vertusiou hag he spered kaer, a reaz d'ez-han, hep dale, kalz a vignouned. Ann Aotrou ar Mintier a choumaz e Jerzea, e pe leac'h e teuz da veza skoazel ha frealzer ar veleien a ziskennaz enn enezen-ze : evit-ze, hen enorent holl, evel eunn tad euz ar gwella. — Saozon, e touez pere, en em gave tud pinvidik, en em glevaz evit basta ar veleien-man enn ho ezoummou : neuze e oe douget gant-ho eul lezen evit ma vije roet da bep den harluet, eur skoazel kevatal ouc'h he renk hag he stad : Ann Aotrou De La Marche en doa ar garg euz ar rannou-ze e Londrez ha war dro, hag ann



Aatrou ar Mintier, e Jerzea hag e Gerneze. Enn 1796, ar roue Bro-Zaoz, gand aoun ne savje ar gernez e mesk kemend a dud, pe gentoc'h gand aoun rag eunn diskenn brezilidi gall e Jerzea, a reaz digas d'ann douar braz, ar veleien hag ann dudchentil en em gave eno : hogoaz holl ez ejont da Londrez. Ann Aotrou ar Mintier a c'houlennaz ma choumje ar re glanv hag ar re goz e Jerzea. Evel ma kuitae he-unan, enn divez niz Eost, e tigasaz beleien da aochou Bro-C'hall, evit ma hellje ann Eskibien enn harlu, en em glevont gant beleien ha tud vad ho Eskoptiou : ann Aotrou Kellek a zeuaz da du Landreger.

Ann Eskibien pere a oa tregont anezho, hag ann holl veleien, en em ziskouezaz dellezek euz eunn digemer ker mad, ha dre ho buezegez e rejont d'ar Zaozon, douja c'hoaz ar Feiz pehini a oa kent, ken heuliet er vro-ze. El Londrez hag e kalz a leac'hioù all, e savjont meur a Iliz : kalz a Zaozon a zistroaz d'ar gwir Lezen, ken doue ez ea enn ho spered hag enn ho c'haloun, santelez ha karantez ann dud harluetman. Enn eur gimiada Bro-Zaoz, e toljont c'hoaz enn-hi a-leiz-dorn, ann had talvouduz-ze pehini na

ehan ket abaoue da zougen mui-ouc'h-mui, ar frouez a vuhez.

Kalz a veleien a varvaz er broiou pell : kalz ivez a varvaz e Bro-C'hall, darn er bac'hioù, darn bannet enn enezen Re, ha darn all dastumet e koz lestri, e Rochefort : kavout a rer ama enn divez, hanoioù ann darn vuia anezho.

Petra bennak ma vije heskinet ha zo ken merzeriet ar veleien a gavet e Bro-C'hall, kalz koulskonde, a choumaz er vro : ho c'harantez evit ho denved, ho c'herend, ho mignoned, enn eur ger evit ann holl dud choumet feal d'ar Feiz, ho dougaz da choum enn ho zouez, evit basta da ezoummou ho eneoù : hogen red e oa d'ezho en em guza, tost davad e giz loened gouez : eunn deiz e vijent dindan ann douar, pe er grinolioù, er c'hreier, er c'hoajou, er balancier..... ha d'ann noz e kuitaent ho c'huz evit redeg a-bep tu da frealzi ann dud feal. E-touez ar re ne dec'hjont ket, en em gave ann Aotronez Jayre, ann Hermit, ar Jann, ar C'horr hag ar C'herrek pere ho deuz savet kalz euz ar c'hanaouennou a zo el leor-man. Tremen a rejont meur a vloaz euz ar *Revolusion*, kuzet enn eunn nebeut tier e Plouaret hag e Plouberr, diagent



enn Eskopti Treger, hag hirio' enn Eskopti Sant-Briek. C'hoaz a oa gant-ho ann Aotrounez Jegou, Rojer ha Malledant : holl e tougent eul lez-hano, ha pa zeuje ho mignouned da gomz anezho dirak *Sitoianed*, ne vije komzet nemed eus a *Lukaz*, lez-hano ann Aotrou ann Hermit, ar *miliner*, hini ann Aotrou Malledant; ar *skrivagner*, hini ann Aotrou ar Jann; ar *c'higer*, hini ann Aotrou Jegou, hag *Fanchoun*, hini ann Aotrou ar C'horr. Evel-se e komze ho mignouned. — Lavar d'ar *miliner* a zo meur a zac'had da vala e Kerhuelen. — Deuz dimerc'her d'ar wern ha digaz ar zac'h gan-ez. — Erbet ar *c'higer* da zount, enn divez ar zizun, da ziskarr loened da Ger-Oferen, ha *Fanchoun* da glevout ouc'h ar gwadegennoù. — Lavar da *Lukaz* pehini a zo eul louzaouer mad, dont da welet va mamm a zo klanv braz. — E krec'h ar vilin ez euz eul lizer mereuri da ober, ped ar *skrivagner* d'en em gavout eno diriou goude kresteiz. —

Evel-se e c'houlennet kelou euz ann Aotrounez-man, hag ho fedet da vont el leac'h ma vije ezoumm anezho, hep rei da c'houzout nep doare. Enn noz warlerc'h, e tapet war ziou skoaz eur paotr feal

bennak, eur zac'h e pehini en em gave *binviou* ar *c'higer*, *paperiou* ar *skrivagner*, pe *louzou* ha *tread Lukaz* : leuskel a ret arok hep sellet nep amzer : dre aman ha dre abont e vije great pe eured pe badiziand, kovesaet pe iac'h, pe glanv, pe ann eil hag e-gile; hag enn divez e vije lavaret ann oferen dindan eur wezen bennak, enn eul loch, pe enn eur c'hraou, e peleac'h en em gave ann dud feal euz a ziwadro, ha zoken euz a ziabell; pe mar bije doan ne arruje ar zoudarded d'ober eno ar furch, ez eat da eul leac'h all. Ar Vretoned a zokaloun hag ijin holl enn hevelep darvoudou. Selaouit ha sellit gant evez : son a ra ann hanter noz. Eur skleur horelluz a sked a bell war ar mor : klevout a rer dinserez eur c'hloc'h, hanter gollet e mesk hibout ar gwagennoù. Kerkent euz ann holl c'herrek, euz holl troiou ha distroiou ann aod, e tispak ne ouzeur ped hir dra du hag a risk sioulik war ar c'hoummoù; bagou pesketaerien int, karget a baotred, a vere'hed, a vugale, a dud koz, pere a denn d'ann doue vor : merdei a reont e trezeg ann hevelep pal : a vremen e kleveur a dostoc'h son ar c'hloc'h : ar skleur, pell da genta, a zeu splanoc'h; goude holl ar peza denn kemend a



dud, en em ziskonez e kreiz ar c'hoummon : na petra eta?..... Eur vagik hag enn hi eunn aoter savet hag eur belek dare da lavarout ann oferen. Eno ne zeuio ket a wardou; eno ne vezo ket furchet; eno ivez ez eo en em strollet evit al Lid, ann arvoriz diwardro : holl int deuet, holl int daolinet e-tre ar mor a groz hag ann Env koumoulek. — Mennit, mar gellit, eunn evelep arvest; ann noz, ann dewalijen, ar c'hoummou; daou vil benn pleget enn dro da eunn den, enn he zav war ar poul-tro, ar c'han euz ann ofiz santel, hag e-tre pep lavar, ar c'hrosvol euz ar mor, o hibouda evel mouez Doue!!....

Abarz ann deiz, pep hini a zo distro d'ar gear ha *Lukaz* d'he guz, pe mar krede gant heman e vije riskl distrei d'ez-han, e teue, e giz da eul loen gouez, da glask eur c'huz all, evit dihencha ar re a oa ouz hen redek. Kaer e vije ober hu, furchal ha c'houesa dre holl, enn tu ebed ne vije na klevet al *louarn* na lavet he roudou : den n'en divije he welet na klevet komz anezha :

Eur belek katolik zo eunn evn gwenn ervad;  
Hirio ma el lannek, arc'hoaz e vo er c'hoad;

Disul enn eunn neiz pik, dilun enn eunn neiz bran,  
Hag el lec'h ma tebr lein ne zebr nep tro he goan;

ha mar tigoueze gant-han beza eur wech bennak kemeret berr enn he doull, e troe buan a gomz hag a zoare : eur bal war he skoaz, hag eur falz war goupl he vreae'h, evel eul labourer o vont da welet he barkou, pe eur vaz-foed enn he zorn, e giz da eur marc'hadour oc'hen, pe eur c'hourater kezek, e kase ar c'huilierien da gavout eur c'hoz mecherour-pleg bennak, war he c'hri enn eunn tu, enn eur rei d'ezho da venna e oa ar mecherour-ze, eur belek koz pehini a oa deuet da veza kemener : kerkent e vije paket ar paour keaz *Fransez*, ha kaset dirak ar *Munisipal*; heman a destenie ne oa ket *Fransez* eur belek, hag a roe urz d'hel lezel da zistrei d'he c'hri. Ar c'huilierien a gounnare : Dom Ervoan a dole pell he bal hag he falz, hag a dec'he d'eul leac'h all.

Evel-se dre droidellou, evel ivez dre breder ha fealded ar gristenien, ha zoken *sitoianed*, evel ann Aotrou Lambert e Pennpoul-Goelo, e teuaz da dec'het diouz ar maro, kalz euz ar veleien choumet er vro, ha dreist holl e-touez ar *Vretoned*.



Houn-nez eo ar stad a redi e pehini ez eo bet, e-pad eunn dek vloaz, ar veleien feal pere, war ho buez, ho deuz miret ar Feiz enn hon bro, hag hini ann dud feal a felle d'ezho ober ho dleadou a gristen, daoust da c'harventez ann heskin. Kaloun ar veleien-ze a oa ker braz, ken na vije ket kavet unan hag en dije goulennet monet da eur vro all evit tec'hel rag ann heskin, e-pad ma tistroe d'ar vro, meur a zen harluet, a zalek divez 1792, evit kemer lod e labouriou hag e gwallou ho c'henvreuder, choumet e Breiz. Gallout a rear henvel ann Aotrou Richard, belek euz a barroz Iviaz, enn Eskopti Sant-Briek, maro e 1827, vikel vraz euz ann hevelep Eskopti, ha kend ann dispac'h, persoun e Ploubazlannek, tost da Bennpol. Kuitaat e eure Jerzea evit dont da rei d'he bobl, ar skoazellou euz a bere eo eur Pastor dleour d'he barresianed. C'hoaz a heller ivez henvel ann Aotronez Lajat hag ar Gall pere a oe hep dale, paket e Landreger ha barnet d'ar maro; ar Huerou, belek e Sant-Eutrop-Plougouven, pehini a varvaz nebeut goude; enn eur ger, meur a velek all euz a Vreiz.

Evit en em dizenoui, kelen ha krevaat ho mignou-  
ned hag ho divuza ivez a wechou, ann Aotronez a

bere hon euz komzet da genta, ha meur a hini all, a reaz eunn niver braz a ganaouennoù pere a oa desket kerkent: ho c'hana a reat d'ann dud vad pere a gave eunn-ho peadra da gemer kentel ha d'en em grevaat enn ho foanion. Evez a lekeet d'ho c'hana, rak kastiset a vije ar re tamallet dirak ann *Nasion*, da veza kanet ar seurt kanaouennoù, kerkoulz hag ar re gant pere e vije kavet skridou euz anezho: pa furchet ann tier evit kalsk beleien goz, e klasket ivez ar skridou a gomze a Zoue, pe enep ann *Nasion*. Kement-se a reaz da galz a dud teurel enn tan, ar paperiou roet d'ezho gand ar veleien-goz, pe ho c'huza el leac'hion e pere ez int bet dispennet ha malet gand al leiseded hag al loened fall: unanik bennak koulskoude euz ar c'hanaouennoù-ze a zo bet diwallet, evel mennosion ann Aotrou al Lae, persoun Perroz-Gwirek: ar re all, evel ar re a zo el leorman, n'int choumet nemed e penn ann dud ho doa ho disket. Evit ho skriva a zo renket monet da gavout ann dud-ze. Ar re-man a zo arru tano braz enn hon touez, hag ar re a vale c'hoaz, a dosta d'eunn oad e pehini e kustumer dont da ankounaat meur a dra: e maint holl a reaz da bevar-ugent vloaz; meur a hini



zoken a zo lamet enn tu all : war-ze skrivagner ar c'hanaouennou-man en deuz, enn eunn hevelep deiz, klevet o kana, pevar den hag ho doa etre-z-ho, tri c'hant pemp bloaz ha tregont a oad : tri euz ar re-man a zo eat abaoe dirak Doue : unan a choum c'hoaz hag he hano Fanchoun ar Person, euz a barrez Plouaret : ar c'hreg-man e deuz roet meur a ganaouen enn he hed, ha tamm pe damm euz a galz a re all pere a zo aman : meur a zen all euz ann hevelep parrez, evel Prijanted ar Wern ha hugale Matto ar Gallo, kerkoulz hag ann Aotrou Herry, belek, ha Jann-Loeiz ar Bizek, sagramd enn Iliz veur Landreger, ho deuz ivez skozellet kalz da skriva ar c'hanaouennou-man; mes dreist holl e renkeur henvel ann Aotrou Theodore Hersart De La Villemarqué, euz a Gemperle, e Kerne. Ann Aotrou-man, den gwiziek, ha warlerc'h ann Aotrou ar Gonidek, kenta reizer ar gwir vrezonek, en deuz roet meur a gelen vad da skriva al leor-man aotreet en deuz ivez e vije gwestlet d'ezhan : evit kement-ze holl, bennoz war-vennoz d'ann den mad-ze!

Ar c'hanaouennou n'int ket holl peur oberiou, ha n'int ket ker kaer ha kalz a ganaouennou all euz ar

vro : kredet e zo koulskoude e oa mad ho skriva hag ho miret holl : n'ho roer ket d'ann dud gwiziek braz, evel traou euz ar re gaera; mes mennet e zo e vijent dudiuz d'ar re nebentoc'h disket, evit pere a oant bet savet da genta, ha pere ho c'hane neuze gant kalz a blijadur : hag enn deun, aliez ec'h arru ma vireur gant preder kalz a draou ha n'int ket euz ar re dalvoudusa. Ann hevelidigez a zo e tre-z-ho a ziskouez penaoz, e pep korn a Vreiz, e oa beleien hag a zalc'he d'ann hevelep Feiz, hag a roc eunn hevelep kelennadurez d'hon Tadou. En em laouenaomp, Bretoned, euz a gement-ze, ha miromp gant kalz a breder, kel liez a dra c'hoarvezet, petra bennak ma int hevel ha n'int ket holl euz ar re dalvoudusa. Eur bugel evit mirout ar pezh a zeu d'ezhan aberz eunn tad mad, ne zell ket bepred hag hen ave ann dra-ze euz ar brasa talvoudegez.

Kalz ivez euz ar c'hanaouennou-man ne maint ket marteze war ho hed : ann dra-ze a zo deuet dre'n abek ma int bet kanet d'ann hini en deuz ho skrivet, gant tud pere ho deuz ankounac'heat pennad pe bennad anezho. Ma vijent bet skrivet eunn daou ugent vloaz bennak zo, e vijent bet kavet war ho hed; rak



neuze kalz tud ho gwic mad. Evel ivez e vije bet re zivezad, ma vije gortoet c'hoaz eunn dek pe unnek vloaz evit ho dastum. Eat a vijent holl d'ann douar gand ann dud koz ho goar c'hoaz hirio ann deiz. Ne-beut ivez a zo bet skrivet e skoaz ar re a zo bet savet tu-hont ha tu-man e touez ar Vretoned. Eunn all bennak goude kement-man, a zizoloo re ann Aotrounet Hellez, Rojer, Robin, ar C'hellek, Derrien, Malledant, etc.... ha meur a hini all pere n'int ket bet dizoloet enn dro-man, petra bennak ma zo bet furchet e liez korn euz a Vreiz.

Plijet gant Doue e vent kavet evit ne-d-aio ket da goll ann oberiou-ze euz hon tudou koz!!

Lakaat a rer moula ar re a zo kavet evit ho mirout gwelloc'h a ze ha deski ivez dre-z-ho d'ar Vretoned, doare ar *Revolusion*, ha petra ho defe hi ho-unan da ober, ma zeufe Doue d'ho arnodi, evel m'en deuz arnodet ho zadou : ne zo bet nep c'hoant el leor-man, da iselaat den, na da ziskouez sotoni nikun; evel-se n'ez euz lezet enn ho holl, nemed hanoiou *Mirabeau*, *Robespierre* hag eunn allik bennak pere a geveur ebarz ann holl levriou.

Al leor-man a zo bet skrivet  
Hep c'hoant da facha den ebet ;  
Skrivet eo bet da rei kentel  
D'ann dud vad euz a Vreiz-Izel.

Eur ganaonen a ziverra ann amzer da nep he c'han pe he c'hleo kana : he skolia a ra ivez ouc'h-penn, hag ober d'ezhan aliez ankounac'haat he boaniou : evel-se ar c'hanaouennou a zo el leor-man, re ann Aotrou al Laé, ha meur a hini all pere a ganet dre Vreiz, a harpe ar Vretoned enn ho Feiz; en em zizenoui a rent ivez ouc'h ho c'hana, hag arruet a rejont er giz-ze, er bloavez mil eiz kant pevarzek, e pchini, teneraet dre ho huanadou, Doue ar peoc'h hag ann armeou, a dolaz war-n-ezho eur zell a druez, hag a ebanaz enn eunn taol ann heskin hag ar brezel. Goude beza glanet hon bro hag he gwelc'het, evit lavaret mad, deuz he gwallou, e teu kerkent d'hon frealzi hag d'hon tenna deuz ann doan. Tomma hag unani a ra dre ann tan euz he garantez, ar c'halonou pere a oa ienet ha dizunanet holl. E 1801, e tigo-reur ann Ilisou; ar veleien harluet a zistro d'ar vro; ar re guzet en em diskouez : stoui a reont gant ho fobl



e harz treid ann aoteriou hag ankounac'haat a reont holl ho enkrez hag ho foan, kerkent ha ma hellont kevret, pedi ha gwela dirak ann Doue a frealz hag a ra trugarez :

Bez laouen'ta, va Breiz, n'ez po mui ar vorc'hed,  
An desiou a zroug-our diwar-n-oud zo troet :  
Kuncet eo Doue, ne vo mui ez kenver  
Nemed emn Doue mad ha karget a zouder.

Ar *Revolusion*, a dle hon dougen da arvesti gand estlamm, giz ann Aotrou Doue da ren Rouantelezou ar bed-man. Mar kasti eur bobl bennak, n'her gra nemed evit hel lakaat da zistrei d'ar gwir, hag he vadelez a zidarz hepred, beteg ebarz ann taoliou a sko he zorn. Gwelout a rer kement-man, dreist pep tra, ebarz ar pezh en deuz great e kenver hon bro, abaoue eunn hanter kant vloaz. Dre hon dirollou hag hon oberiou fall, hor boa dellezet, evit lavarout mad, e teuje ar goulou euz ar Feiz da baouez da luc'ha war hon bro, ha de c'huitaat evit mont da skleria eur vro all. Evit gwir, eunn heskin ken estlammuz a skoaz ar Relijion, ma hellet kredi, e oa evit mad kollet da

Vro-C'hall. Mes digeri a reaz ar C'hallaoued eunn nebeut ho daoulagad, poket a rejont d'ann dorn ho skoe, ha kerkent, Doue, evel eunn tad mad, a baouezaz d'ho c'hastia : ann heskin ne badaz nemed eunn dek vloaz..

E Bro-Zaoz e c'hoarveaz ivez, eunn tri c'hant vloaz zo, eunn heskin pehini na oe na nebeutoc'h kriz, na nebeutoc'h garo : heman, deraouet dindan Herri eiz, c-tro ar bloaz 1532, en deuz, siouaz ! glac'haret ar Rouantelez-ze, epad meur a gant vloaz.

Eunn hon amzer a zo deraouet eunn heskin all e Rouantelez Spagn : heman, ker kriz hag ann daou all, a ren abaoue tremen ugent vloaz zo, ha Doue hep ken a oar peur ec'h ehano.

Eunn dra all c'hoaz a dle ober d'e-omp arvesti mui ouc'h mui, giz d'ober ann Aotrou Doue ha trugarekaat he vadelez. Ar veleien pere na deurvejont ket dinac'ha ar Feiz, enn eur ober al Le, ho deuz dre ziou zoare skoazellet kalz ar Relijion : darn a choumaz er vro hag a grevaaz dre ar Zakramanchou ha dre ho c'hentelliou, ar gristenien vad enn touez pere e oant choumet : anez kement-se, e vije bet kalz marteze digalonnekeet, hag ivez gwenvet. Darn all a dre-



menaz d'ar broiou pell. Dougen a rejont gant-ho ar goulou euz ar Feiz : gant-han ho deuz digoret ho daoulagad da veur a zen dallet dre ar falz kreden , hag ouc'h he sklearder ho deuz hadet enn holl vroiou e pere ez int tremenet , eunn had pehini en deuz douget kalz a frouez mad. Hag evit gwir , ha ne zes-komp-ni ket bemdez , penaoz enn Allemagn , ha dreist holl e Bro-Zaoz , ez a bepred war greski ann niver euz ann hugunoded a zeu d'ar gwir Iliz. Bep miz , hag evit lavaret mad bemdez , e komzeur euz eunn distro bennak c'hoarvezet er broiou-ze , ha kalz euz ann distroiou a c'hoarvez e-touez ar re vraz , ar vnistred hag ann dud wiziiek.

Trugarekcomp eta ann Aotrou Doue da veza le-keat a nevez ar Feiz da c'houlalaoui ebarz enn hon bro : pedomp hen d'he dere'hel da vad ann dro-man , enn hon touez ; en em harpomp out-hi ha diwallomp dre hon oberiou fall d'he lakaat d'hor c'huitaat eunn eil gwech : pa ve dispriset pe heskinet enn eur vro , e tilez aliez ar vro-ze , hag e tremen da eur vro all. Evit he miret plegomp d'ann Iliz romen : enn hi hep ken e kaveur ar gwir Feiz : hi eo ar gwir Iliz savet gant Jezuz-Krist , breman a zo triouec'h kant vloaz :

ar re ne gredont ket evel-t-hi na hellont ket ren pell , hag hervez komsiou ann Aviel , ez int evel skoultrou tonket d'ann tan peur-baduz : ren ann heretiked a zo berr : eunn daou c'hant rumm a zo teuzet abaoue ar rumm kenta : enn eunn hevelep giz e teuz ivez ar mac'herien gant ho c'hounnar. Arc'h Noe ne benseaz ket e livaden ar bed ; ann Iliz romen ne benseo ket ivez , hag a ve a bep tu heskinet : stardet eo gant he Mestr , evel eur garrek e kreiz ar mor doue : kaer en devo ar mor hag ar bariou avel dont d'he skei a bep mare , ne spounto tamm rag ho c'hounnar , bepred e choumo stard ha ker sioul evel biskoaz , ha goude ar barr amzer , e vezo gwelet kurunet a eon gwenn , arvez euz he gounid , evel ivez euz a nebent a c'halloud he enebourien.

A. D.





# KENTEL

DIWAR BENN

## ANN ASAMBLE NASIONAL.

— 1789 —

TEIR stad Rouantelez Bro-C'hall a oe strollet evit klask ann tu da baea dle ar vro. En em zastum a rejont e Versaill, ar bemp a viz Mae, 1789. Eno en em gavaz war dro unnek kant eiz hag hanter-kant kannad : daou c'hant dek ha pevar-ugent euz a stad ann Ilis; daou c'hant dek ha tri-ugent euz a stad ann dudchentil, ha pemp kant triouec'h ha pevar-ugent euz a stad ar vourc'hisien : e-touez ar re-man a oa tri c'hant pevarzek den a lezen. Ar stad-man e doa taost da zaou-ugent kannad mui eged ann diou all, dre ann dinac'h a reaz tudchentil Breiz da gas ho c'hannaded da Bariz, o veza ne felle ket d'ozho terri kustumou ar Vretoned. Evel-se stad ar vourc'hisien en em gavaz ar grenva hag a reaz d'ann diou all plega.

Ar stroll braz-ze a gemeraz ann hano a *Asamble Nasional*,



enn drizeg a viz Even, 1789, hag a reaz e seiz miz war-n-ugent, daou vil pemp kant seiz hag hanter-kant lezen. Enn deiz kenta a viz Here, 1791, ar stroll a oe galvet *Asamble Legislative*, pe stroll hag en doa gwir da ober lezennou; ober a reaz ivez da vad ha kaer, enn eur bloaz, seitek kant daouzek lezen.

Enn daou war-n-ugent a viz Gwengolo, 1792, ar stroll a gemeraz eunn hano nevez hag a oe hanvet ar *Gonvansion*. Houma a reaz, e tri bloaz hag eur miz, unnek mil daou e'hant dek lezen. Enn holl : pempzek mil pevar e'hant naontek ha tri-ugent lezen : hervez lod, e oe great zoken, eiz mil war-n-ugent diou ha tregont lezen.

Kel liez a lezen ken iskiz, pe zoken iskisoc'h ann eil eget eben, ne dalvejont nemet da sodi sperejou ann holl ha da vrella pep tra. Enn dilere'h kement-se hon bro gez en em welaz goloet a zireisiou a beb giz, enn hevel doare ma hel-leur sellout ar stroll evel ar vammen gontamnet.

Abeleac'h ez eo redet ann drougiez, ar gwallo  
Ha kement dislealded ho deuz gwastet hon bro.

Evit skoazella paea dle ar Rouantelez, ar stroll a bedaz enn daou war-n-ugent a viz Gwengolo, ann holl C'hallaoued da zigas da Bariz, ho listri hag ho braventiou aour hag arc'hant; eur bloaz goude, e oe kavet e save ar roiou-ze euz ann dud vad da zaouzek milion pemp kant mil liour. Ar strol-man eo ann hini a gomzer anez-han aman warlerc'h.

Ann daou skrivagner a bere ez eo komzet, a hanvet Voltaire ha J.-J. Rousseau. Ar Voks-hall, a oa eul leac'h euz a Bariz, galvet er gez-ze dre eunn hano saoz.

Ar ganaouen-man a zo bet roet d'in gant Jann-Mari ar Gallou, euz a voure'h Plouaret.

❦❦❦ I. ❦❦❦

## KANAOUEN

ANN ASAMBLE NASIONAL.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Gwerz ar Gananeen* — 74 (1).

Kalz a dud fur a gavann nec'het,  
Ha peurgedged ebarz em bro,  
E maint o tournial ho spered  
O klask klevet al lezenno;  
Hogen bikenn na vezint klevet  
Nag er vro-man nag e lec'h all,  
Ancz gouveet penoz eo gret  
*Ann Asamble Nasional.*

N'hon boa-ni ket klasket da gentan  
Enn touez tud ar Rouantelez,

(1) Ar re ne onzont ket toniou ar c'hanaouennou-man, a gavo toniou d'ez-ho war *gan plen mentet*, e leor *Kanaouennou Santel* ann Aotrou HERRI, belek. *Gwerz ar Gananeen* a zo ann ton 74, ebarz al leor-ze. Iiviziken e vezo lekeat evel-se ar petved dirak pep ton, pa vezo kemeret ann toniou euz a leor ann Aotrou HERRI.



Ar re a gavemp divezatan  
Euz a ger ha diwar ar mez ;  
Hep lezen , hep skiant , hep studi ,  
Bete ma wijent kozeal ,  
Holl e voant mad-mad da gelenni  
Enn *Asamble Nasional*.

Klevet hoc'h euz komz a arc'h Noe  
Da bini a oe digaset  
Anevaled deuz a herz Doue  
A gement korn a oa er bed :  
Nemed eiz den na oe dastumet  
Gant kel liez a aneval :  
Ped a venn d'ac'h-hu a ve kavet  
Enn *Asamble Nasional* ?

Tud a Iliz ha kuzulerien ,  
Heretiked , chismatiked  
Ha tudchentil ha labourerien  
Juzevien ha filosofed ;  
N'helle ann eil klevet egile  
Pe arrujont ebarz ar zall :  
Penez ober gand ar rumm tud-ze  
Enn *Asamble Nasional* ?

Da genta ho devez easet  
Tremen 'vit tud euz ar gwella :

Tri miz kren ho deuz goude strivet  
Hep gallout poellan war netra :  
Mes evit laerez ann tenzorio  
Ez int en em glevet raktal  
Ha chetu eno holl vennosio  
Ann *Asamble Nasional*.

Ar bale'her ha goude ar c'hrinded,  
Ann orged hag ar warizi ,  
Ann dibri , ann evan direizet ,  
Buanegex ha diegi  
'Barz ar Gristeniez oa kemeret  
'Vel seiz pec'hed , penn d'ar re all ,  
E maint holl breman ho seiz kevret  
Enn *Asamble Nasional*.

Dre vale'her ho deuz d'imp digaset  
Eur paper a ro da c'hout skler  
E rajent d'ar bed holl souezet  
Chom d'arvestin ho skiant kaer ,  
Hag anzav n'euz den fur nemet-he  
Enn amzer-man na bet gwech all :  
Chetu ar bale'her a ziaze  
Enn *Asamble Nasional*.

Ho bouklo arc'hant o deuz roet  
Evit sikour pean ar gle ;



Mes ho gopr ho deuz bet holl miret,  
Feuret deuz a nao skoed bemde :  
Kemer a hellont mad habaskded,  
Nao skoed bemde n'ed-eo ket fall ;  
Gonid a zo kalz diouz ar c'hrinded  
Enn *Asamble Nasional*.

Enoret ho deuz evel daou sant  
Ha laket ober skeudenn  
Da zaou skrivagner, tud diskiant,  
Gwech all harluet deuz ho bro,  
Enn abek d'ar mezusan orged  
Hag a galz a zirolo all :  
Kerzet neuze da glasg ar glanded  
Enn *Asamble Nasional*.

Evel ma komz eunn den a enor,  
Eunn den seven hag eunn den fur,  
E ve harluet deuz ar gador,  
Gret d'ez-han mil displejadur ;  
Biskoaz n'eo fallet ar Warisi  
Enn touez ann artizaned fall :  
E ma noz ha de ouz ho leski  
Enn *Asamble Nasional*.

Klevet am euz ho devoa leinet  
Ha hed ouz tol a hed ann de,

Enn dervez ma oa bet kempennet  
Ann dudchentil hag ho danve.  
Mar ho barnet diouz ho dirollo  
Ha diouz ho c'homzo displeal,  
E reont, hep mar, re-gorfado  
Enn *Asamble Nasional*.

Nemet dre varro buanegez  
Ne glever prezeg el lec'h-ze,  
Na helfe den prizan ped drougiez  
A rebec'h ann eil d'egile,  
Ar blasfemo, ar c'hunuchenno,  
Ar salmenno hag ar skandal,  
Ne glever ken rumm litanio  
Enn *Asamble Nasional*.

Kent evit lakat war ar paper  
Ho lezenno hag ho reizio,  
E klejent komer mad ho amzer  
Da reolian ho memnosio :  
Gwell eo gant-he mont da chalvantat  
D'al Luksamboure'h ha d'ar Voxx-hall  
Evit n'ed-eo chom da labourat  
Enn *Asamble Nasional*.

Rak-ze war lezen ar seiz pec'hed  
E renkont trei ar c'hatekiz :



Ann Eskibien a zo harluet  
Ar Pab n'eo mui penn ann Iliz :  
Ha mar fel d'ac'h gout piou he reno,  
Et da Bariz, penn-ker Bro-C'hall,  
Eno her c'hafet ebarz skrijo  
Ann *Asamble Nasional*.

Mar be bikenn kaset re neye  
E lec'h ar re a zo eno,  
M'em euz eur c'hi a lar mont ive,  
N'euz ki gwelloc'h deuz a c'heño :  
Ne anav dichentil na markiz,  
Pab nag Eskob na Kardinal,  
Hen-nez ne vo ket eur pezh dic'hiz  
Enn *Asamble Nasional*.

— SKLERIDIGEZ. —

Ann danevel-man euz ann *Asamble Nasional*, a zo bet savet gand ann Aotrou ar Gwillou. — Gion ar Gwillou a oa gihidik euz a barrez Lanvellek, gwech all e eskopti Dol, hag hirio e hini Sant-Brick. Gion a vianik a ziskoueze kalz a spered, kement-se a reaz da varkiz Rozambo, hel lakaat ebarz ar skoll, hag he gas goude da Bariz da beurachui he studi. Pa arruaz ar paour keaz breiziad-man eno, e oe da gentabourd hag ebad ar skolaerien all : ne wie na komz na trei e

giz ann Aotronez iouank-ze : mes hep dale e tilunaz hag e trec'haz war-n-ezho holl. Pa en doa klozet he studi, e oe kougouleet ha dilennet kerkent da vestr filosofi : ebarz ar garg-ze e oe anaveet mui-oc'h-mui he spered mad hag he skiant : ne zalc'haz enn hi nemed eur maread amzer : hogen goude beza bet heleget, e c'hoantaaz distrei da Lanvellek. Eno e oa Persoun pa arruaz ar *Revolusion*. Goude beza dinac'hel al Le, e tremenaz enn divez 1792, da Enezen Jerzea, hag eno e varvaz eur c'houec'h-miz goude, enn tro ann oad a hanter-kant vloaz. Ann Aotrou al Lae he vignon hag he genreur-harlu, a skrivaz d'he gerent diwar-benn he varo.





# ANN ESKIBIEN

HAG AR VELEIEN GOZ,

HA RE NEVEZ ANN ASAMBLE.

— 1791 —

## KENTEL.

Breiz a zo eur vro dishevel ouz ann holl vroiou all : bet pell frank, enn amzer he Roueou hag he Duked, ha knstumet da c'honid enn emgannou, e deuz enn hi he-unan, eunn ezoumm a frankiz pehini a glask hepret da walc'ha : mes daoust d'ar c'hoant-ze, e choumaz a viskoaz stag ouc'h he renerien, ha dreist holl, ouc'h he Done, hag e savaz evit ho difenn. Evel-se pa arnuz er vro lezennou nevez ann *Asamble Nasional*, e oe gwelet dre Vreiz dispac'h vraz diwar ho fenn.

E niz here, 1789, tud iaouank Landreger en em sav enep gwardou kear, hag a gemer eur c'habitan. Ann Aotrounez a Gergre, a Drogoff hag ann Eskop, a zo tamallet euz a gement-ze ha galvet dirak *munisipalite* kear. Ann Eskop a zinac'h dont hag a zo diskuliet d'ann *Asamble*. Eunn nebeut deisiou goude, ez eo diskuliet a nevez, abalamour d'eur gemennadurez roet da dud he Eskopti ; mes kement-man holl a chom heul fall ebed evit-han : e keit-ze Lannuoniz ha Landregeriz a sav a darre evit mirout na vije kaset ed da Vrest.

Enn dregont a viz Genver, 1790, ann *Asamble* a zoug eul

lezen ma vo rannet ar vro enn *Departamanchou* hag enn *Distrigou* : gwestlou ar venec'h hag ar leanezed a zo torret : ho madou evel ivez re ann ilizou ha re ar veleien, a zo disklariat madou d'ann *Nasion*, ha lekeat e gwerz : kavaille a rer ann dud keaz-man ho-unan ha skuilla a rer dre ar vro skrijou fall enn ho enep : ann Eskibien ho dislavar gand habaskded : ne c'houlennont ket komz c'hoaz re-huel, ken na vije embannet al lezennou nevez great war ar gloer, enn daouzek a viz Gouere : embannet int er bevar war-n-ugent a viz Eost. Evel ma choume ar gloer feal d'ho gwestlou, e oent gour-drouzet euz ann harlu hag euz ar maro ; hag evel ma tinac'hent *toui*, e oent dibourc'het euz ho madou, petra bennak ma oant ivez d'ezho, da nebeuta dre eunn hevelep gwir, ha ma oa ho re d'ar c'hallaoued all.

Eskop Kemper a eaz da genta enep lezennou ann *Asamble*, enn eur lakaat eur person nevez e Kerfeunteun : mervel a eure pevar devez goude, enn dregont a viz Gwengolo. Ker-kent e oe lekeat ar ciel war diellou ann Eskopti, hag ann Dibaberien en em zastumaz evit henvel eunn Eskob all. Ar Chabist a c'houlennaz pedennou evit ann Eskob maro, hag ebarz he lizer a verkaz d'ann dud vad petra ho devoa da ober. Hogen difennet a oa lenn al lizer nag hel lezel da dremen. Chetu eta ann heskin enn Eskopti Kerne : hep dale e savo e leac'h all. Eul lezen a dorr Eskopti Leon, e peleac'h e oa Eskop ann Aotrou De La Marche, gwir vretien, mar boe biskoaz : beman gand he chalonied hag he veleien a zinac'h senti ouc'h al lezen-ze : war ho dinac'h ez eo kemennet lakaat ar siel war diellou ann Eskopti : pennou-kear Kastel ne fell ket d'ezho he lakaat. Kemer a rer ann Escop evit he gas dirag ann *Asamble*, mes hep dale en em denn a dre daouarn he wardou, hag e tremen da Vro-Zaoz, enn divez niz C'hoevrer.

Eskop Treger a zinac'h monet dirag ann *Asamble*. Evel



ma oa kavallet ha kunu'het ebarz enn he gear, ha zoken enn he balez, gant gwardou fall a oa e Landreger, e sonjaz tec'het evit mirout oue'h kement-ze. Ann Aotrou Lannay Duportal, maer e Landreger, en devoa bet eurz d'hen herzel, mes heman n'hen dalc'haz ket a daost, hag er giz-ze, ann Aotrou ar Mintier a hellaz tec'het : mont a eure e kuz, gant Taupin he baotr, da gastel Koatriou, e parrez ann Trevou. Ac'hano e tremenjout da Vro-Zaoz, enn deision kenta a viz Meurz.

Eskop Gwened, evel he vrendeour all Eskibien, a zinac'h ivez mont dirag ann *Asamble* : hen dastum a rer ha kaset eo da Bariz : rei a rer d'ezhan he di evit bac'h, ha ne d-eo rediet da netra, nemet d'en em ziskouez pa vije goulennet.

Eskop Sant-Briek a oe eat da Bariz, cur maread amzer kent ann Dispac'h, evit goulenn arc'hant da beur-sevel he balez : evel ma kreske bemdez ann heskin, ann Aotrou de Bellessize, a zonzaz choum eno, e gortoz da hellout beva dianaf d'ann heskinerien ; mes her paka a rejont hep dale, hag hel lekejout er bac'h, e leac'h ma choumaz bete maro Robespierre. E keit-se ann Eskop santel a c'hounezaz d'ar feiz, ann Aotrou De La Harp, he gen-brizoumier.

Chetu eta Breiz dioueret euz he Eskibien : unan a zo maro, eunn all a zo er bac'h, e Pariz, ha daou a zo tremenet da Vro-Zaoz.

Neuze ann *Asamble* a lekcaz re nevez enn ho leac'h. Eskopilly, person Sant-Martin, e Montroulez, a zo kemeret evit Eskob a Gemper, ha sakret er bevar war-n-ugent a C'hoer-yrer, 1791. Jakob, person Lannebert, enn Eskopti Sant-Briek, a zo kemeret evit Eskob a Sant-Briek, ha sakret enn deiz kenta a viz Mae, hag ar Masle, person Herbignak, enn Eskopti ann Naoned, evit Eskob a Wened, ha sakret enn eiz euz ann hevelep miz.

Ann Eskibien-man, evel ivez ar veleien kaset gant ann

*Asamble*, n'ho devoa galloud ebed war ann eneou. Ar ganaouen a zo ama goude, a oe savet evit hen deski d'ar Vretoned. Ar ganaouen-man a zo bet roet d'in gant tud ar Meurik, euz ha barrez Plufur.

○ ❧ ❧ ❧ II. ❧ ❧ ❧ ○

## ANN ILIZ KATOLIK

HAG HE FASTORED.

(IEZ LEON.)

WAR DON : *Kimiad ar Zoudarded.* — 73.

Ann Iliz katolik a zo  
 Eunn unvaniez hag eur stroll  
 Euz ar Gristenien a hep bro  
 A zo ebarz ar bed holl,  
 Dalc'het dre eunn hevel greden  
 Dindan ar gwir bastored  
 A bere ar Pap eo ar penn,  
 Gant Jezuz-Krist bet savet.

Ar Pab eo ar Pastor kenta,  
 Pastor ann holl bastored,  
 Ha pep Kristen a dle out-han  
 Senti gant hegaradded ;  
 E kador sant Per azeet,  
 Ar penn euz ann Ebestel,



Ar Pab en deveuz dre ar bed  
Galloud enn Iliz Santel.

Goude ar Pab en deuz savet  
Jezuz-Krist ann Eskibien  
'Vit ma vezo gant-ho renet  
Ar bobl hag ar veleien,  
Hogen n'ho deuz beli ebed  
Evit donet d'hon reni  
Nemet bet a vent digaset  
Gand ar Pab d'ho Eskopti.

D'indan-ho 'ma ar Bersounded  
A lakont er parresiou  
Evit reni mad ho derved  
Ebarz e hent ann Envou,  
Hogen holl int falz bastored  
Hep beli enn ho dalc'hio  
Mar ne d-int ket d'e-omp digaset  
Gant gwir Eskibien ar vro.

N'hellont beza a garg lamet  
Nemet gand ann Eskibien  
Pere ho deuz d'ez-ho roet  
Beli war ar Gristenien :  
Anez ho devezo ato  
Beli war ann Eneou  
Hag e vezint bete 'r maro,  
Pastored ho farresiou.

Pa fell da eur re dimizi  
Hervez Lezen ann Iliz,  
Hi hepken a hell eurenji  
Ho gwir farresianiz,  
Ann holl eurejou great hep-z-ho  
Hag hep ho aotreadur,  
'Zo saotrerez ha divalo  
Ha karget a wastadur.

Ar veleien all 'zo galvet  
'Vit kinniga 'r sakrifiz  
Evit skoazia ar Bastored,  
Da servicha ann Iliz;  
Hogen gwir eo ne hellont ket  
Euz ar pec'hed absolvi,  
Nemet bet a vent aotreet  
Gant Pastor ann Eskopti.

'Barz ar mare ma tilezit  
Ar re-ze, ma C'henvroiz,  
Dre eno en em likit  
Er meaz euz ar gwir Iliz,  
Bikenn er meaz euz anez-hi  
N'hellou den beza salvet :  
Likit 'ta, likit prederi  
Ne heulfac'h falz Bastored.

Ne d-int ket deut hi dre ann or,  
E giz ar gwir Bastored;



Evel n'hi e'havent ket digor  
Dre eunn hent all int pignet :  
Ann or eo anzañ ann Iliz,  
He aotre, he digemer :  
Dont dre eunn hent all zo iskiz  
Ha pignal evel eul laer.

Ann Iliz pell diouc'h rei d'ez-ho  
War-n-omp beli, Bretouned,  
E deuz difennet tenn out-ho  
Ober karg beleg e-bed :  
Fac a reont war ann Iliz  
Ha war hi holl rebechou,  
Hervez kustumm ann dud direiz  
Kalledet enn ho gwallou.

Ann absolvennou a roont  
N'int ket gwir absolvennou  
Hag ann eureujou a reont  
Ne d-int ket gwir eureujou :  
Na hellont rei beli ebed,  
Na hellont divec'hia den,  
N'ho deuz euz a wir Bastored  
Nemed ann doare hep ken.

Dougen a reont ar zurpliz,  
Ar stol hag ar soutanenn,  
Kana a reont ann ofiz  
A gane ar veleien,

Chetu aze ann holl zoare  
A douell ann holl abafed,  
Chetu ama ar c'hemm ive;  
N'ho deuz gwir beli ebed.

Enn ho ofiz, enn ho ofern,  
Ebarz ar Zakramanc'hou,  
'N ho c'hatekiz, 'n ho frezegen,  
Enn ho froseñionou,  
Enn eur ger, e kement tra 'zo  
Hag a sell ar Gristeniez  
E tifenn ann Iliz ato,  
Kaout gant-ho nep unvaniez.

Ha na ve nemet-ho er vro,  
Na it ket d'ho oferen,  
N'ho pet nep darempred gant-ho,  
Bezit stard enn ho Lezen :  
Gwech all ar Gristenien genta,  
Enn amzer ar mac'herien,  
N'hellent ket ive peurvuia  
Selaoui ann oferen.

D'ar gweliou braz ha d'ar zuliou,  
Diweret a veleien,  
Grit enn ho ti ar pedennou  
A rec'h kent, enn oferen :  
En em unvanit a spered  
Ebarz kement sakrifiz



Pere ginnig ar Bastored  
Choumet feal d'ann Iliz.

Grit ann oberiou mad hellfot,  
Pedit ha grit pinijen,  
Hag hervez ho kalloud roit lod  
Enz ho madou d'ar beorien,  
Grit el levriou mad leennou,  
Prediriit Lezen Doue  
Dre ho skourc, dre ho kentelliou  
Kelennit ho pugale.

Pedit Doue da rei ar peoc'h  
D'he Iliz zo heskinet,  
Pedit hen da zigas d'e-hoc'h  
Ho pelcien harluet :  
Ho pet koun bemdiz anez-ho,  
Pedit Doue, Kristenien  
Da gendere'hel ebarz hor bro  
Ar gwir Feiz, ar gwir Lezen.

Enn Iliz katolik hep ken  
E kaver ar vertuziou,  
Ar santelez, ar gwir Lezen,  
Ann distol d'ar pec'hejou,  
Eur rann a vadou spereduz,  
Boutin enn tre peb Kristen,  
Ann dazorc'hidigez euruz,  
Hag eur vuez da vikenn.

War ar mean stard ez eo savet  
Na hellfe ket dizeria,  
Gand ar spered glan eo bleniet,  
Na hellfe bikenn fazia :  
Kenderc'hel a raio bepred  
Da brezeg ar wirionez,  
Dre c'henou he gwir Bastored,  
Selaouit eta he mouez.

---

— SKLERIDIGEZ. —

Dre ar gentel-ma ez eo eaz gwelout penaoz nag ann Eskibien, nag ar veleien nevez digaset gand ann *Asamble*, n'ho devoa bell ebed war ann eneo. Enn Iliz, evel ebarz e pep Rouantelez, ez euz eur penn, hag hep he aotreadur ne hell den na beza lekeat e karg, na lamet ivez a garg. Ar Vretoned her gouie hag her c'hrede : evel-se e meur a barrez e tinachjont kemer beleien digant ann *Asamble*. — Eskoptiou Douj, Leon, Sant-Malo ha Treger a oe torret, ha dre eno n'ho devoe ket a Eskibien nevez.





# DALLEDIGEZ

AR

SITOIANED.

— 1791 —

Ann *Asamble* a grede gant-hi penaoz ee'h helle ober enn  
Iliz, ar pezh e devoa great ebarz ar Rouantelez. Evel-se e  
tiskaraz holl enn-hi, penn evit penn, hag e roaz d'ez-hi le-  
zennou nevez euz he giz : ar re-man a lekeaz eunn direiz  
ker braz, ma krede gand ann dud vad e oa arru amzer ann  
Ante-Krist. Eur wech, sionaz ! ma ve kuitaet hent ar wirio-  
nez, e kerzer enn dewalijen, hag e kouezer euz ann eil fazi  
enn egile. Ebarz ar ganaouen a heul, e weler ar stad reu-  
zendik e pehini e oe taolet hor bro gand ann *Asamble*. —  
Ar ganaouen-ma am euz bet skrivet e bourc'h Lanniliz, e tu  
Brest.

◊◊◊ III. ◊◊◊

# DALLEDIGEZ

AR SITOIANED.

WAR DON : *Gwerz ar Garnel*. — 51.

(IEZ LEON.)

Ha galluz ve, Kristenien,  
E vefac'h ken touellet,

— 21 —

Ma renkfac'h a virvikenn  
Kredi heretiked,  
Kent evit ann Aviel  
A zesk a bep amzer  
D'e-hoc'h ho Pastor santel,  
Euz a berz hor Salver !

Ha galluz eve deuet  
Amzer ann Ante-Krist,  
Ar gaouiad, ar falz profed,  
Enebour Jezuz-Krist,  
Enebour ar wirionez,  
Mab ann troidellou,  
Ha tad ar fallagriez  
Hag ar c'horvigellou !

Ha galluz eve deuet  
Ann amzer druezuz,  
Ann amzer-ze milliget,  
Ann amzer drubuilluz,  
E pehini e renko  
Kemend a zo Kristen,  
En em rei holl d'ar maro,  
Pe dinac'h al Lezen !!!

Ia, red eo hel lavaret,  
Chetu deut ann amzer  
Ma weler tud a spered,  
Skoliet gant Lusifer,



O rei d'comp-ni lezennou  
Enep da re Doue,  
Hac hevel ouc'h ho reizou,  
Karget a fallente.

Pell 'zo en deuz lavaret  
D'comp-ni ann Abostol  
E teuje tud war ar bed  
Da esaat hor c'holl,  
Tud iud, leun a rogentez,  
A galz a zrong-ioulou,  
Enehourien d'ar furnez,  
Douget d'ann holl wallou.

Brema ez eo red distrei  
Holl enn Iliz Doue,  
Kement zo roet da gredi  
Er bed d'he vugale,  
Rak gant ho gwir Vinistred  
Int dre reuz evit-ho  
A rumm-a-rumm bet touellet  
Beteg ann deiz-hirio.

Gourc'hemennou ann Iliz,  
Gourc'hemennou Doue,  
Ann holl gredennou a Feiz,  
Sakramanchou ive,  
A vezo holl distroet  
Gand Ebestel nevez,

Holl gant santan digaset  
Siouaz d'e-omp! enn hon touez.

Piou en divije kredet,  
Va Doue, va Zalver,  
E vije en em douellet  
Hoc'h Iliz, 'nep amzer,  
Hag a vije bet faziet  
Daoust d'ar gweslt ar c'haera  
Ho poa-hu d'ez-hi roet  
P'hi savjoc'h da genta.

Nann, nann, bikenn, war va feiz,  
Na hellfot dont a benn,  
C'houi prezegeerien direiz,  
Da zerc'hel ho lezen;  
Ann Iliz sklerijennet  
Gand he fried santel  
Holl ho kendrec'ho, bepred  
Hag a rei d'ec'h tevel.

Hag e vefac'h-hu harpet  
Gand ann holl ziaoulou,  
Gand ann holl heretiked,  
Holl nerz ann Iferniou,  
Ann Iliz a enebo  
Ouz hoc'h holl falz reiziou,  
Ha bepred a c'honeo  
Hep poan war ho faziou.



Kaer ho pezo lavaret  
 Oc'h denet dre wir gwirion  
 Da reiza d'e-omp, Bretoned,  
 Ar gwir Relijion,  
 Na gredo den ho komziou  
 Ma na ve ket skarzet  
 Er meaz euz ar c'halonou  
 Ar rebechou kuzet.

Bete vrema, va Jezuz,  
 Pep kristen 'n doa kredet,  
 Ne oa ket kaeroc'h vertuz  
 'Vit hini ar gwerc'hted,  
 E oa eur vertuz senti  
 Ouz ar re dilennet  
 Ha laket d'hor c'helenni  
 Gant Dasprener ar bed.

Vertuz oa ar beaurentez,  
 Vertuz ann aluzen,  
 Vertuz daskor ann danvez  
 D'ho mestr, d'ho gwir berc'hen,  
 Vertuz ober pedennou  
 'Vit nep enn ho maro  
 Ho deuz roet leveou  
 Da bedi evit-ho.

— SKLERIDIGEZ. —

Enn drizek a viz Ebrel e sav keflusk vraz e Sarzo : heman a oe ann hini kenta e Breiz : ar blouiziz euz ann dro da Wened, en em dol war ar gear-ze hag a goll eunn hanter kant den ebarz ann emgann. E Pluneret, taost da Alrae, en em saver ivez, ha dre holl dre Vreiz e oar dare d'hen ober : ar veleien nevez ha paotred ann Distrigou, a zo re c'haro hag a denn war-n-ezho drouk vraz ann holl : ar veleien nevez a ziskul ar re goz : ar Sitoianed ho heskin : ann *Nasion* a ra eur gwall dez-ho, evel ivez d'ann dudchentil, da veza gwell gant-ho tec'hel euz ar vro, eget mirout he lezennou; hag e keit-ze ho fourgaz enn eunn hevelep doare, ma laka ar vro da veza kasauz d'ez-ho : pebez mac'herez ! Enn eil a C'houere, eul lezen a zo douget enn Eskopti Kerne, ma vije serret ann holl ilizou ebarz peder heur war-n-ugent ; ma tenje ar veleien *didou* enn dalc'h da Vrest, ha ma vije diskuliet ann dud a zimac'hje lakaat badezi ho bugale gant beleien ann *Nasion*. Chetu aze eunn nebeudik euz ann direizou.

War gement-se ar Vretoned a welaz e oa mad d'ez-ho dispac'ha. Ilirio Bro-C'hall anaoudek, Bro-C'hall pehini a c'hoanta kement beva e frankiz, a dle menli ar blouiziz kalonek-ze euz ar pezh a rejont : ann dud keaz-ze na glaskjont evit gwir, na didrona na gwir roue, na gwir Impalaer, nag enebi ouc'h urz vad ebed : fallout a reaz d'ez-ho hep ken, sparla tud pere, gonde beza kemeret madou ar re all, a glaske c'hoaz ho rena diouc'h ho roll : gwelout a rent e oa ann niver brasa enn tu gant-ho : beza ho devoa ar gwir da ober ho fenn evel ar re all, pa eo gwir ar re-man a brezege a bouez penn, e oa denet ren ar bobl. Dinac'ha a rejont eta plega dindan lezennou great hep-z-ho, hag hep gout d'ez-ho : al lezennou-ze a dorre lezennou pere ho devoa karet ha heuliet



a viskoaz : sevel a rejont evit difenn ar re-man, ha pa ar-  
ruaz mare ann emgann, en em ganjont stard. Chetu aman  
ann Aotrounez ho rene : Paotred Gwenned a oa renet gant  
ar markiz De La Rouerie, De Silz, Roue Bignan ha De Trou-  
sier ; paotred Kerne ha Leon gant Dampherne ha Kerbala-  
nek, ha paotred Treger gant Dubreil De Pont-Briand ha  
Charlez Boishardy. Ar re-man a oa soudarded ar Feiz hag ar  
vro.

War gement-ma ec'h arruaz divez ann *Asamble Nasional*.  
E pad nao miz war-n-ugent ma renaz, e devoa dismantret ar  
vro a grenn, lekeat ar chism enn Iliz hag ann dizunvaniezh  
e tre ar c'hallaoued, gwerzet madou ann ilizou ha re ann  
dudhentil hag ann dud a Iliz, lusket ann tron, atizet ar  
reustl, torret ar gwirioù ar muia stard ha rediet ann dud  
enorusa da guitaat ar vro. — Beach vad d'ez-hi, mes chetu  
arru ann *Asamble Legislativ*, pe *Stroll Iezennourez*, enn  
deiz kenta a viz Here, 1791.



## KENTEL

DIWAR BENN

### KIMIAD AR VELEIEN.

#### Kenta Loden.



— 1791 —



Pa oa tec'het ann Eskibien euz ar vro, ar veleien a son-  
jaz ivez hen ober. Tremen a reont da Vro-Zaoz, da Spagn,  
d'ann Italia ha d'ar broioù all, evit diwall ouc'h ann heskin  
hag ar maro. Kent kuitaat ho derved, e teont, evel Pasto-  
red karget a drogarez hag a deneridigez, da ober d'ez-ho ho  
c'hiuniad ha da rei d'ez-ho kelennadurez evit ann amzer reu-  
zeudik dre behini ez eant da dremenout. Chetu aman war-  
lerc'h penaoz e komz unan euz ar veleien vad-ze.

Hervez lavar darn, ar ganaouen-man a zo bet savet gant  
ann Aotrou al Lae, person Perroz-Gwirek, mes hervez lavar  
darn all, hag ivez gant mui a wirionez, ar ganaouen-man,  
eo kimiad Dora Fransez ar C'hellek, o kuitaat parrez Plougiel.  
Ann Aotrou ar C'hellek a dremenaz da enezen Jerzea, e miz  
Ebrel, 1792 : eur pevar bloaz goude e tistroaz da Blougiel,  
hag e talc'haz eno bete divez ann *Dispac'h* : kuzet e vije  
peurvuia e ti Charlez Hamon. Ann den enoruz man, hag he  
hanter-diegezh, hir-hoallet, pep hini anez-ho a dremen pevar-



ugent vloaz, ho deuz c'hoaz sonj ho daou, euz ar ganaouen-  
man, disket d'ez-ho gant ho ferson.

Ann Aotrou ar C'hellek a oe da genta lekeat da berson e  
Plougiel, er bloaz 1782 : e 1801, e oe lekeat a nevez da ber-  
son enn hevelep parrez, hag euz ez eo marvet e 1827, d'ann  
oad a unnek vloaz ha pevar-ugent.

•••• IV. ••••

## HIRVOUDOU EUR PERSON

O KIMLADA HE BARROSIANIZ.

(IEZ TREGER.)

VAR DON : *Roit spered d'in Aotrou.* — 47.

PE : *En dra vinn en Arme (1)...*

He-man eo d'in ar bec'h, ar boan hag ann anken,  
Renkout dispartian digan-ec'h, kristenien,  
Mes ma c'halon a vo eunn nebeut dizammet  
P'am bo d'ec'h deuz ma foan eunn darn danvellet.

(1) Ann ton man a gaver e *Barzaz-Breiz*, kanaouennou  
ar Vretoned, dastumet gand ann Aotrou Th. DE LA VILLE-  
MARQUE : netra a gaeroc'h evit ar Leor-man. Evel-se ez eo  
ivez troet e kement iez a zo eun Europa. Enor d'hor brezo-  
nek kear ! !...

M'am miro eunn Doue d'en em glemm deuz ma stad,  
Ar pez e ra Doue bepred a zo gret mad,  
Goulenn e rann zoken gras da c'houzany ouz penn,  
Mar eo hon-nez he ioul, balamour d'he lezen.

Mes ma c'hoant, kristenien, a zo e tiskfac'h holl,  
Herve ann Aviel, penoz e tleer koll  
Kement hon euz er bed kentoc'h eged ar Fe,  
Hag ar vuc zoken kent eget koll Doue.

Selaouet holl eta, selaouet, ma denved,  
Ha kanet a vouez kre ma c'himiad, mar gellet,  
Evid-on-me breman a zo mouget ma mouez  
Na hellann mu gwelan, na diskoue levenez.

Douget a zo eul Le barz ar *Gonvansion*,  
Hag a zo noazuz braz d'ar gwir relijion,  
Ann holl veleien vad ho deuz euz rag out-han,  
Rag grevuz eo meurbed, selaouet anezhan.

- » Dinac'h ar gwir Eskob ha dont d'hen dilezel
- » Dianzavout a grenn beli ann Tad-Vikel,
- » Terrin ann holl westlo ha rein d'hon renerien
- » Peb gwir war ann Iliz d'he zrein ha d'he c'hempenn.

Chetu aze al Le a c'houlenner ouz-in,  
Na hellann hen ober anez en em zaonin :  
Dispriz a zo evit ar re ho deuz touet,  
Ha heskinan arer ar are n'ho deuz ket gret.



Kollet 'm euz ma farroz, ha kollet ma mado,  
Kollet ma levenez ha ma slijadurio,  
Peb gorto barz er bed 'zo evid-on kollet,  
Ar gwir Fe hec'h-unan gan-en a zo chomet.

Kazoni 'zo ouz-in, bezan onn dispriset,  
Kavaillet onn dre holl, hag e gaou-tamallet,  
Eur gonnar 'zo ouz-in hag a zo diboelluz,  
Ha ma goad o redeg a ve d'he dudiuz.

Harluet deuz ma bro, ez ann enn eur vro all,  
Evel ma arruann, 'renkann tec'hel raktal,  
A bep tu e klaskann ha diwall, ha skoazel,  
Ha ne gavann hini nag a dost, nag a bell.

Eur mignon mad bennak, dibot eo ann hini,  
Em digemer gant joa hag em c'huz enn he di,  
Mes buan e klever ar c'helo-ze e ker,  
Ha ne ve ket tri de ma teuer d'am c'hemer.

Neuze a greiz ann noz eur vanden soudarded  
Arruo armet kloz aberz ar Glubisted,  
D'am redeg a di Jann, da di Job hag Anna,  
Evel pe venn eul laer a ve red da baka.

Evit klask gwelloc'h kuz e tilamann raktal,  
Klasg e rann en em denn a rouantelez C'hall,  
Neuze ma c'horfa vo kerkent d'ar bac'h barnet,  
Ha kemend a zo d'in a vezo kemeret.

Tremen didreuz ar mor a zo ouz-in berzet,  
Ha da vevan e penc'h em bro n'em lezer ket,  
Kavet c'hoant da guitat zo 'vid-on eur gwall braz,  
Ha chom barz e Bro-C'hall a zo eur gwall all c'hoaz.

Ar veleien breman, zoken p'ho deuz touet  
'Zo ma enebourien, gant-he onn kasaet,  
'Vid ar skoazello mad a roenn d'he gwechall,  
Na roont d'in pelloc'h nemet shoazello fall.

Eur stad euz ar brasan a zalc'henn anez-he,  
Hag em c'halon em boa evit-he karante,  
Dudiuz braz e oa 'vid-on ho darempred|  
Ha bepred e peptra em euz ho mad klasket.

Me ho gwele o tont, bepred gant levenez,  
Ha pe n'em guitaemp 'm ije tristidigez,  
Ma zi oa ho hini e-keid ha ma kerent,  
Ho skoazellin a renn evel m'her c'hoantaent.

Breman 'vit ma fean e roont d'in, siouaz!  
Ha dizanaoudegez, krisder, drougiez ha noaz;  
Evid ar blijadur a renn d'he diagent  
E kemeront ma zi hag em leuskont enn hent.

Ar gwel euz ac'hanon 'zo eunn dra argaruz,  
Ma Lezen, ma c'homzo a zo holl kasauz,  
Ma selled a reont, hanval ouz ar vosen,  
A dleer harluan a douez ar gristenien.



Dirag ho daoulagad ma gouzav n'hellont ket,  
Ma skouer a rebec'h d'he ho buc tremenet,  
Ne vo pelloc'h ar vro e peuc'h, mar ho c'hreder,  
Nemet pe vinn laket enn tre peder moger.

N'em bije laret gir, ma vijenn bet gwanet  
'N eur giz ken disleal gant tud ne garenn ket.  
Hogen ma mignoned eo a deu d'am gwanan,  
Na hellann ket miret, renkout a rinn semplan.

Hogen, ma c'halon gez, kemer nerz, ha lavar  
P'hini eo ann abek deuz da vrasan glac'har,  
Ha mar na hellez ket aman lavarout man,  
Lez gan-e-me frankiz, me zisklerio da boan.

Ma brasan kolonad 'oe enn de ma weliz  
Ann *Intru* miliget o vont barz em Iliz,  
Ha darn deuz ma derved ouz her c'hemer gant joa  
Ouz en em dostaat zoken d'her briata.

Beteg ann oter vraz e pign dic'hek gant-he,  
Ha me 'reng evel gwir, souzan buan adre,  
Son a ra ar c'hleier d'ober enor d'ez-han :  
Ann Iliz katolik 'zo er c'hav ar brasan.

Ma Doue, me zo bet bete vremen touellet,  
Penz 'ta, ma zud ker, ma brasan mignoned,  
A welann da gentan a vonet d'ann Iliz,  
Da welout ann *Intru*, da glevout he ofiz !

Morc'hed dagoll, mechans, tamm pedamm deuz ho krad  
Allaz ! eo e ra d'ec'h kuitat al Lezen vad,  
Gouenn a ret hesan diskarg deuz a wirio,  
Mes touellet a viot, Doue hen aotreo.

Ma dilezel a ret eta, ma bugale,  
Dismegans a ret d'in, ha dizpriz da Zoue,  
Hag evel pa vec'h dal ez oc'h en em dolet  
Barz e geno ar blei p'hini 'neuz ho taget.

Mar sellet ann *Intru* evel ar gwir Bastor,  
Ez oc'h barz ar fazi; n'eo ket deut dre ann or,  
Nag enn touez ann derved digaset gant Doue :  
Ne d-eo ket hen ho tad, na c'houi he vugale.

War hoc'h Ine, m'hen tou, n'en deuz beli e-bed,  
Pa'z eo gwir eo deut d'ec'h aberz ar *Glubisted* ;  
Rein karg a ineo na hell ket ann dud lik  
Ebarz ar pez a sell ann Iliz katolik.

Reizant gant lealded ar bobl hag ho mado,  
Eo dlead ar Roue hag hini ar stado ;  
Dlead ann Ebestel eo digas Pastored,  
Da veran ann Iliz, da vezur ann derved.

Doue en deuz laket diou C'halloudez er bed,  
Hag ann eil war eben n'e deuz beli e-bed :  
Ar stol zo da unan, d'eben eo ar c'hleze :  
Pebez eur-vad ma ve unvaniez entre-z-he !!!



Mes allaz! ar stado o ren mado ar bed  
Ho deuz re ann Ine war eunn dro mac'homet ;  
Hag evit krevaat gwirio ann *Nasion*,  
Ho deuz tolet ann dorn war ar Relijion.

Dre eunn doare direiz deuz ho beli neve,  
Ho deuz lamet a garg holl vinistred Doue,  
Ha dilennet 'n ho lec'h Pastored deuz ho giz,  
Hep heul ar Zenedo, na kuzul ann Iliz.

El Lezen gatolig ar pezh zo neventi  
A heller pervuan da henvel heresi ;  
Aberz Doue a oamp 'barz he lec'h, Pastored,  
Perag aberz Doue, breman na vemp ni ket ?

Ar gwirio deuz ar bed, am oa evel Person,  
A hell bezan reizet gant tud ann *Nasion* :  
Hogen n'hellfent mirout nag ouzin, nag ouz den,  
Da rein Zakramancho d'am breuder Kristenien,

Her c'hredet, bugale, ar belek 'zo laket  
Evit kemer ma c'harg a zo eur falz profed,  
Eul laer eo, eunn trubard, lazer d'ann Ineo,  
A ziougan ar vue hag a ro ar maro.

Gaou ez eo he gelen, zaouzanuz he gomzo,  
Saotrez, m'hen argaz! eo he holl obero,  
Hag ar pezh a zo waz evid-hoc'h, Kristenien,  
Ne ro ket trugare, pe ro ann absolven.

Rein d'ec'h-hu na nouen, badisiant nag eured,  
Douaran, binnigen, na prezek na hell ket,  
Hep grad ar gwir Eskob, ha zoken a hent all  
Kement ra ann *Intru*, 'zo kel liez a wall.

Enn doare m'eo beleg e ra ar zakrifiz,  
Mes ne dle den ebed mont gant-han d'ann Iliz ;  
Ouz penn, mar na heller kavout beleg all ken  
Ebarz ann dremenyan e hell rein absolven.

Ar falz Eskeb ive, 'vel ar falz Personed  
N'hellont hep zaotrez ober netra e bed,  
Rak pe ne ro d'ez-he ann Iliz nep aotre,  
E maint holl, hep arvar, dindan ann anaoue.

Anavezout d'ez-he gwirio war ann Ine,  
'Zo kuitat ann Iliz ha dinac'han ar Fe,  
A zo, hag her gwezet er vad, bugale gez,  
En em lakat enn hent deuz a zaonedigez.

E man eta ar blei 'barz enn touez ma denved,  
Ho laz an e ra holl, kalz en deuz diskolpet ;  
Ma bugale gwellan a welann zo maro,  
Piou a hello breman stankan d'in ma daero ?

Gwelomp, ma daoulagad, ha gwelomp noz ha de,  
Nann hepken koll ar c'horf, mes hini ann Ine,  
Ha mar na hellet ket rein a-walc'h a zaero,  
Red vo d'ec'h kavout mad, ma c'halon a ranno.



Denvedigo kollet ha bugale maro,  
Chetu aze daon dra 'zo d'am c'halon garo,  
Daou dra hag a chomo em spered skrivet mad,  
Daou dra hag a welinn gant daero dru a voad.

Ne houlann ken bevan nemet 'vid hirvoudin,  
War stad ma denved ker distaget diouz-in;  
Ha n'am bo ken pelloc'h plijadur enn douar,  
Nemed ann hini 'mo da vervel gant glac'har?

Ann Turk, ann Hugonod, zoken ar Juzevien,  
A hell 'barz e Bro-C'hall ober ho falz lezen,  
Mes ar Gatoliked a zo dre holl ar rej  
A varner da devel, a rer fe anez-he.

Preizet eo ann templo, diskennet ar c'hleier,  
Goullo ar santual, diskaret ann oter,  
Ar gador a zo mud, ar vered 'zo saotret,  
Skoet eo ar Pastor, skignet eo ann denved.

Kimiad, denvedigo, kimiad kenvroidi!  
Ez oc'h a greiz ho lans 'barz e geno ar blei,  
Bezan vefot gant-han ha taget ha gwastet,  
Pe n'hoc'h euz teurveet selaou ho Pastored.

Eur feunteun a zaero a hellann da welan  
War stad ma denved kez barz er par m'ho gwelann;  
Penez ho dilezel! poanusan disparti!  
Rannan 'ra ma c'halon; ma foan 'deu d'am zrec'hi.

Envnedigo seder, c'koui pere chom er c'hoat,  
E lec'h ma onn dalc'het breman d'en em guzat,  
Reit d'in huanado, 'lec'h kan a levenez  
Da vagan ma glac'har ha ma zavedegez.

Ha c'houi dason skiltruz a zo barz ma distro,  
Pa n'her gra ket ann dud, mil gwec'h a adlaro  
Ma c'hlemo truezuz; rag ann abeg am dalc'h,  
Ne hellfe hirvikenn bezan gwelet awalc'h.

O ma bugale baour, o c'houi ma c'harante,  
P'en deuz d'in Jezuz-Krist roet karg hoc'h Ine,  
Distroet d'ho Pastor, selaouet c'hoaz he vouez,  
Ar pez a c'hoantaan eo ho silvidigez.

Ne vern pebez gwallo 'hellfec'h da vezan gret,  
Ne vern peger kabluz 'hellfec'h bezan deuet,  
Ne vern pe gunuc'hen 'hellfec'h ober d'ho tad,  
N'hell ket evit-ze donet d'ho kuitaat.

Seul vui ez eo enep ann danvad dianket,  
Seul vui e kemer poan he Bastor d'her c'havet,  
Seul vui e klaskefot pellaat diouz-in  
Seul vui a boan aze d'ho klask a gemerinn.

Mar kemeret ann tec'h, d'ho heul men a ielo,  
Ha ma en em guzet, dre holl me ho klasko,  
Evit trein ho kalon ha gonid hoc'h Ine,  
Me a roio gant joa ma goad ha ma bue.



Me gemero kant tu, kant tro ha kant distro,  
Hirie eur vouez tener, ha warc'hoaz kantiko,  
Ha mar kendalc'het c'hoaz da zistrein ho kein d'in,  
Ho tispriz n'hello quiet ober d'in arzaoin.

Deut eta, bugale, d'en em rein hep dale  
D'ann hini a hello savetein hoc'h Inc,  
Ha p'hini a zizec'h gant poan ha gand enkreuz  
Ouz ho kwelet enn hent a gaz da drouzivez.

Na mar gouzanvit poan enn hent o tistrein d'in,  
Me a redo d'ho klask evit ho kentraouin ;  
Distroit ouz-in hep ken, distroit a galon vad,  
Me raio ann arhent evit gallout ho kat.

N'eo ket 'vit ho tamall nag ho kruz ho klaskann,  
Ober d'ec'h rebec'ho, pe 'vit ho kastian,  
Ma eo gant pinijen pe boan oc'h enkreuzet,  
Me gemer evid-on ar c'hasti war he hed.

Mes c'hoant am euz da gat ar pezh am euz kollet  
Ha digas c'hoaz d'ar ger ma denved dianket ;  
Mar gellann ho c'havout m'ho c'hemero gant joa,  
Ha gant levez vraz m'ho dougo war ma skoa.

Pell braz deuz kemer drouk pe dont d'hoc'h egasin,  
Sec'han 'rinn ho taero, ha dont d'ho frealsin,  
Ha mar hoc'h euz gret gwall, n'hellinn ket her gwelet,  
Rag eur galon a gar ne wel fazi e-bed.

Me 'lakaio pedin ma holl amezeien  
D'eur banvez ar c'haeran hag a gano laouen :  
Kavet 'm euz enn divez ma danvad dianket,  
Ma bugale maro a zo holl dasore'het.

Mes mar renkann kikenn ober d'ec'h ma c'himiad  
Ho koll evit bepred, ho tilezel da vad,  
Kimiad peb joausted, peb frealzidigez !  
Pred eo en em aozan da ober ann tibeze.

Birvikenn n'a blegann gand ann Iliz neve,  
Na dre gaer na dre hag, gand ar c'hras a Doue ;  
Ha ma eo red mervel evel ar verzerien,  
Pignomp war ar chafod, me ia da rein ma fenn.

---

— SKLERIDIGEZ. —

Ar c'himiad-man a oe savet evit ann darn vuia, enn divez  
ar bloaz 1791 : evel ma tigoee bemdez lezennou nevez iski-  
soc'h ann eil eged eben, ann Aotron ar C'hellek, e mare he  
harlu e Bro-Zaoz, hen astennaz euz a veur a werz, evel ma  
heller hen gwelout, ha pa oa distro da Blougiel, e roaz ar  
gwerzou nevez evit ho lakaat gand ar re genta.

Ann *touet* a behini ez eo komzet, a oa hanvet Boulbin.  
Ar ganaouen a zo bet roet d'in gant Iann-Mari ar Gallou.





# KENTEL

DIWAR BENN

## KIMIAD AR VELEIEN.

Eil Loden.

— 1792 —

Bete-henn ar veleien choumet er vro, a veve kalz anez-ho e peoc'h, e touez ho zud hag ho mignoned. Ne oant heskinet ha redet nemed e leac'h ma oa *Sitoianed* vraz. Er c'houec'h war-n-ugent a viz Eost, 1792, e oe douget enl lezen dre behini a oant rediet da dec'hel kuit euz ho *departamant*, ebarz eiz dez, hag ebarz pemzek, euz ar Ronantelez, dindan boan da veza kaset d'ar Giana, evit ar re n'ho divije ket great ho diskleriadurez d'ho dalc'h, hag a zek vloaz a brizoun evit ar re ne vijent ket tec'het euz ar vro, gonde beza lavaret hen ober, pe a vije distroet goude beza tec'het : al lezen-man a oe sevenet gant kement a c'harventez, ma oe rediet ar veleien da dec'hel, pe d'en em guza mad : neuze pep hini a reaz he gimiad.

Ann hini a zo aman warlerc'h a zo bet roet d'in gant Fulup ar Merer, euz a barrez Lanvellek, maro da zek vloaz ha pevar-ugent.

— 11 —

◆◆◆ V. ◆◆◆

## KIMIAD ANN AOTROU AR GWILLOU

DA BARREZ LANVELLEK.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Bosen Eliant*. — 12.

Kalon, ma breudeur beleien,  
Arru 'zo 'glevan, eul lezen  
Garvoc'h eged ann holl varno  
'Zo bet c'hoaz douget barz er vro.

Dioueret 'oamp a dall bell zo  
Deuz a blijadur enn hon bro,  
Breman dre urz ann *Asamble*  
E vo red klask eur vro neve.

Pell amzer zo a oa rannet  
Ar bastored diouz ho denved,  
Mes lezet 'oamp ebarz er vro  
Enn touez hon tud hag hon mado.

Breman a vefomp diframmet  
Diouz a dre divrec'h hon denved,  
Ha diouz 'dre divrec'h hon c'herend,  
En em ozomp da vont eun hent.



Kenavo 'ta , denvedigo ,  
Kerent, mignoned deuz hon bro :  
Ne hell ken pelloc'h ho touar  
Hon miret holl ; pebez glac'har !!

Na petra 'ta hon euz-ni gret  
Ma vemp er giz-ze pelleet ?  
Evesaet mad ma c'homzo,  
Hag e klefet ann doareo.

Red a vo sentin ouz Doue ,  
Pe disentin ouz ar Roue :  
Hogen da Zoue dre furnez  
A dleomp ar sentidigez.

Ma ve gallet ober al Le ,  
Ha chom enn trugare Doue,  
Ha chom ebarz ar gwir Iliz  
Me hen mije gret, ma broiz.

Hogen stard eo 'vit chom er vro  
Dinac'h ar Pab, ha war eunn dro  
Dinac'h da vezan katolik  
Hag en em lakat chismalik

Dilennan bezan harluet  
Ha mont d'ar maro, mar he red,  
Hon-nez eo d'ec'h holl ma c'hentel  
Evit chom enn Iliz santel.

D'imp holl, ma breudeur beleien,  
Eo da gentan ar groaz dougen,  
D'imp eo d'he dougen da gentan,  
Ha d'ar bobl goude hon heulian.

Ho skouer omp bet er vertuio,  
Bezomp ho skouer barz ar gloazio,  
Diskomp d'ar bed holl dre hon Fe  
Dlead gwir yugale Doue.

Hogen demp buan d'ar beden,  
Arru zo war-n-omp eur walen,  
Dimes eur c'hiz<sup>o</sup> zo neve flamm  
Pedomp da hellout chom dinam.

Fallout a rer hon c'has er mez  
Breman deuz ar Rouantelez :  
Hennez ez eo ar gwellan roll  
D'ober d'ar Fe monet da goll.

Me a laka, otro Doue,  
Ma holl fisians 'n ho trugare ;  
Mar otreet d'in ma feden  
Me c'houzanvo hep kunac'hen.

C'hoaz e c'houlennann eur mennad,  
Diganech, o ma Doue mad,  
Ne dilezit ket ann denved,  
Diweret deuz ho fastored.



Kalz anez-he 'zo bet touellet ,  
Hag a zo, siouaz! dianket,  
Kalz all ive a c'hoanta kre  
Dont da vervel 'n ho karante.

Sellet a drue out-he holl ,  
N'ho lezet ket da vont da goll,  
Ha peurgedged ar re a zo  
Laouen da c'houzanvin poanio.

Ho pet koun, pobl muan'karet,  
Euz a c'hloasio ho Pastored;  
Gouzanvit 'velt-he, mar be red,  
Mar fell d'ec'h bezan kurunet.

Heuliet-he dre holl e spered,  
Bet a unan gant-he bepred:  
Nep a lam digan-ec'h anhe  
N'ho deuz nep beli war ho Fe.

Bet Fe, Fisians, karante,  
Bet bepred seal da Doue:  
Goulennet a greiz ho kalon  
Enn ezomm, ro ar c'heun gwirion.

Kri 'vo, vit gwir, chom diweret,  
Hed ar vue, a vinistred,  
Chom diweret a skoazello  
Ann ofern, ar Zakramancho.

P'hellimp pignal ouz ann oter  
Nin sonjo enn-hoc'h, hon pobl ker,  
Hag evit ar Zakramancho  
Dre c'hoant, c'houi ho digemero.

Mar bet galvet hugenoded  
Gant ar bed hag ann *Intrued*,  
Sonjet 'oe galvet hon Zalver,  
Eunn den trec'het gant Lusifer.

Dre galz a c'hizio, Kristenien,  
E c'houzanfet, pad ar walen,  
Hirie a skoazel diweret,  
Warc'hoaz gant ann holl kunuc'het.

True 'm euz ouz-hoc'h, bugale,  
Mes n'euz ken hent da vont d'ann ee,  
Kaout hep poan na heller ket  
Ar pezh gant goad zo bet prenet.

N'hon euz-han ket gwelloc'h marc'had  
Ni holl pere arenk kuitat  
Hon tud, hon bro hag hon danve,  
Goude marteze, hon bue.

Ar vue hirran 'zo c'hoaz ber  
Hag ar bec'h skanvan, c'hoaz ponner:  
Ann dalvoudegez deuz ar bed  
Zo hirie, warc'hoaz n'eman ket.



Pe diwerin deuz anhe holl  
Pe lezel hoc'h ine da goll  
Eo ar gwella deuz ho kreden?  
Kollet 'vo 'mez ar gwir Lezen.

Mar 'c'heuz eur boan bennag o trei  
War zu ann hent dre behini  
Hellet mont da Zoue, hon Tad,  
Kounet, ma breudeur, enn hir-bad.

Kounet ebarz ann eurusted  
Dre b'hini vefet dic'haouet,  
Mar teurvezet, 'vel hoc'h otro  
Gouzant breman ann holl boanio.

Enn enep, mar kollet kalon,  
Mar kizet 'vel tud digalon,  
Ze dall da c'hout ec'h otreet  
Mar arru poan, bezan kollet.

E lec'h rein eur seurt lavario,  
Selaouet, me ho kelenno,  
Ebarz ho poanio, grit peden  
Hag en eur c'houzant bet laouen.

Gret am euz d'ec'h, hirie ann de,  
Vel ma rez pe bignaz enn ee,  
Hon Mestr Jezuz d'he Ebestel,  
Komz d'ez-he a c'hloaz, a vrezel.

Me garje ive, 'vel Jezuz,  
Lezel gan-ec'h graso nerzuz,  
Hogen ar pezh na hellann ket,  
M'hen ped d'hen ober 'n hoc'h andret.

Me ho lez breman gant Doue,  
Pedemp ann eil 'vit egile;  
C'houi 'vo bepred barz ma spered  
Enn tro ha ma vinn barz er bed.

Mar distroann bikenn d'ar vro  
Ni veulo Doue war eunn dro,  
Da c'hortoz, pedomp peb hini,  
'Vit ar re 'deu d'hor fourgasi.

Me gimiad d'ec'h eta, bro c'hall,  
Ez ann breman enn eur vro all;  
C'houi 'zo evid-on eul lez-vamm,  
Me 'zo enn ho henver dinam.

N'euz fors e pe bro 'vinn tolet,  
C'houi a vezo ma bro bepred :  
'Vid-hoc'h da zont d'em zol er mez,  
Ouz-hoc'h bepred, 'mo levenez.

Pez a garenn muan er bed  
'Lezann 'n ho touar binniget,  
Na hellinn pelloc'h, siouaz d'in !  
War ve ma zud dont da bedin.



Glac'haret 'oc'h, penitanted,  
C'houi ma c'herent, ma mignoned,  
Euz ar c'himiad e rann hirie,  
Ni 'n em welo c'hoaz, marteze!

— SKLERIDIGEZ. —

Ann hini en devoa savet eur ganaouen ker kaer hag hini ann *Asamble Nasional*, a dlee ivez ober hep arvar, kimia-  
dou euz ar c'haera : hen ober a reaz evel ma weler dre ar re  
a zo aman diaraok : kalz a dud ho deuz c'hoaz sonj euz anez-  
ho e tu Gwerleskin, Lannvellek, Lannveur, Lannuon ha  
Plestin : meur a wech am euz gwelet tudou koz o wela ouc'h  
ho c'hana : ann hini a zo bet gwanet mad, a zo bepred gwi-  
ridik pa gomz euz ar poaniou en deuz bet gonzanvet.

Ann Aotrou ar Gwillou en deuz savet c'hoaz *Gwerz* ann  
Itroun Varia Sant Karre, pehini e deuz eur c'hapell e parrez  
Lannvellek, hag eur *Ganaouen* war c'hanedigez hor Zalver :  
kredi a rann ez eo dispar ar ganaouen diweza-man, ha ma  
n'en divije ket ann Aotrou Even, belek aluzuner e bac'h  
Roazon lekeat he moula a nevez, am bije he lekeat aman, pe-  
tra bennak ma eo distag a-grenn diouc'h ar pez a skrivann.



## KIMIAD

AR VELEIEN.

**Teirved Loden.**

— 1791 —

Dom Ollier ann Hermit a oa kure e Gwimaek, he vamm-  
vro, pa darzaz ann Dispac'h. Evel na deurvec ket ober al Le,  
ha ma prezege kre evit distrei tud he vro diouc'h ar falz le-  
zen, e oe, eur zulvez, paket enn eur ziskenn euz ar gador,  
ha kaset d'ar bac'h da Vontroulez : hep dale e kavaz tn da zi-  
lammont ac'hano, hag e teuaz da guza da Landreger. Eur  
maread amzer goude, ez eaz war du Kavan, Tonkedek ha  
Plouaret, e peleac'h e tremenaz meur a vloaz e touez mi-  
gnoned leal. Ervoan ar Gallou, euz Tonkedek, hen heulie  
peurvuia enn he ergersiou. E miz Gwere, 1799, o veza distro  
da Landreger, daou Wiraer her pakaz dindan ann aod, pa oa  
o vont da Blougiel, da welout he vignon, ann Aotrou Lan-  
nier, pehini d'ar mare-ze, en em zalc'he kuzet e ti he dud :  
kaset a oe kerkent d'ar bac'h da Sant-Briek. Hervez darn, e  
oe barnet eno d'ar maro ; mes kement-se ne d-eo ket anat.  
Enn divez here, eur vanden chouaned, renet gand ann Ao-  
trounez ar Mersier, Sant-Rejent, Kerigan, Kourson ha Kar-  
fort, a gemeraz Sant-Briek : ar re-man, a iez kerkent d'ar



hae'h e pelec'h e oa dastumet tri c'hant *aristokrat*, euz a  
he re kalz a dlle beza dibennet eunn devez goude: ho dieubi  
a rejont holl. Ann Aotrou ann Hermit en em gavaz pare er  
giz-ze, hag a zistroaz a nevez da Landreger.

E 1803, e oe lekeat da berson e parrez vraz Louargat,  
tost da vene Bre, hag eno eo maro e 1816, hoalet a na  
vloaz hag hanter-kant.

He gimiadou am euz bet digant Fanchon ar Person, euz a  
vourc'h Plouaret. Klevit-ho.

●●● VI. ●●●

KIMIAD ANN AOTROU ANN HERMIT

DA BARREZ GWIMAÆK.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Bosen Eliapt.* — 12.

Ann dro-man, siouaz ! ma Doue,  
A welann arru ar mare,  
Ma vinn hep galv dispartiet  
Diouz ma c'herent ma mignoned.

Ia ! ma frezegen divezan  
D'ec'h, Gwimaegiz, eo hou-man ;  
Dalc'het skrivet enn ho kalon  
Komzo divezan ho mignon.

Na pa venn d'ann Turki kaset  
Diouz ma spered na eot ket ;  
Pedin a rinn gant trugare  
Evid-hoc'h ann Otro Doue.

E pep lec'h hag e pep amzer  
Mar savann c'hoaz ouz ann oter,  
Me ho kinnigo da Zoue,  
A c'houlo d'ec'h graso neve.

Klevet 'c'h euz ma frezegenno,  
Enebet 'm euz ann direizo,  
Ha merket d'ec'h dre garante  
Ar gwir hent ho kaso d'ann ee.

Allaz ! breman 'vinn diweret  
D'ho kwelet 'barz ann templ strollet,  
N'hellinn ken komz er c'hadorio  
Nag ho glebian gant ma daero.

Mes lezel e ra war baper  
Gan-ec'h ma c'harante dener,  
Eunn daou c'hir kelennadurez  
Roet d'ez-he hoc'h holl evez.

Ministred Satan ho deuz gret  
Al Le p'hini zo goulennet,  
Ha chetu aze, ma breudeur,  
Ar penn kentan deuz ho tizeur.



Al Le-ze a zo chismatik,  
Disleal, direiz, heretik,  
A zigor ann or d'ar gwallo  
Hag a dorr ann holl lezenno.

Ober al Le eo dinac'h kren  
Ar Pab hag ann Iliz romen,  
Dinac'han bezan katolik,  
Hag en em lakat chismatik.

Al Le zifenn ober gwestlo  
Hag a zimantr klog ar c'hlaustro :  
Breman eta na hellfer ket  
Heul alio Salver ar bed.

Dre al Le-ze eo otreet  
'N'em zispartian euz pried,  
Ha mont da glask par all goude  
A enep Lezen eunn Doue.

Eur rumm bian a vinistred,  
Tud dic'houvez ha dirollet,  
Pere a re holl vez ar gloer  
A welann hep ken hen ober.

Allaz ! a viskoaz a zo bet  
Trubarded hag heretiked :  
Enn touez daouzeg en em gavaz,  
E skol Jezuz-Krist, eur Judaz.

Ministred feal eunn Doue  
Ne raint birvikenn al Le-ze,  
Gwell 've gant-he koll ho mado  
Ha gouzany, e red, ar maro.

Deuz ho lec'hio 'int diframmet,  
Mes ann hent mad ho deuz merket,  
Dre ho skouer ha dre ho c'homzo :  
D'ec'h eo d'ho heul er vertuo.

Na vo ket laouen tud ar bed  
Mar dinac'het dont da douet ;  
Hogen da Zoue-da gentan  
Ez eo dleet d'imp holl plegan.

Na heuliet ket war hoc'h Ine  
Hini al lezenno neve  
Pere a zo gret de zispriz,  
E-Bro-C'hall, enep ann Iliz.

Diou c'haloudegez 'zo laket  
Gand ann Otro Doue er bed,  
Ha deuz anhe ne deuz hini  
Ann eil war eben nep beli.

Unan a reiz ann Ineô,  
Hag eunn all a reiz ar mado :  
Pep hini e deuz he lezen,  
Ha pep hini he goure'hemenn.



D'ann Ebestel, d'ann Eskibien  
Eo, hep mar, ann Iliz da ren :  
Mado ann douar zo roet  
Evit ho meran, d'ar Briused.

Hogen ar stroll barz e Pariz,  
A vac'hom gwirio ann Iliz,  
E lec'h meran mado ar bed  
A heskin ar gwir Bastored.

Ar re zilennet enn dalc'ho  
A gas dre holl d'ar parrojo  
Enep ann Iliz *Intrued*,  
Da gemer lec'h ar Bersoned.

Et ez eo kuit ar Pastor-mad,  
Arru zo gan-ec'h eul lez-tad,  
Gwimaegiz, hag ho kwall-gaso  
A vo lazer d'hoc'h Ineo.

Petra 'larann-me, eul lez-tad !  
Eur blei eo a zuno ho koad,  
Denvedigo, mar hen heuliet  
E veot reuzcudik laket.

War ma daoulin ez ann breman  
'Vit ho pedin deuz ma gwellan,  
Na heuliet ket e giz e-bed  
Ann Iliz neve a zo gret.

Rak, siouaz ! na weler enn-hi  
Nemed ann droug, ann herezi,  
N'ez euz dalc'h na beli e-bed  
Enn tre daouarn he ministred.

Deuz Iliz Rom int distaget  
Ha bezan 'int anaouebet,  
Pa reont ar Zakramancho,  
Darn 'zo hep nerz ; holl pec'hejo.

Dre n'ho deuz ket ken a wirio,  
Ken a zalc'h war ann Ineo,  
Na hellont ket rein absolven  
E sakramant ar Binijen.

Dre eur zaotrez a zo braz,  
E lec'h absolven, e lec'h gras,  
E chadennont ar pec'hejo  
Krenvoc'h enn dro d'ann Ineo.

Hogen da bep rumm ministred,  
Chismatik, pe anaouebet  
E ra ann Iliz ar gwirio  
D'a absolvin war ar maro.

Ma vec'h e pare ar maro  
Ha na ve ket re vad er vro,  
Bet digant-he ann absolven  
Hep kommunion, na nouen.



Laret e rann da bep hini  
Penez, enn diouer a veli,  
Ne dal netra ho eureujo,  
Ne reont ket gwir briejo.

Mar oc'h gand *Intru* eureujet,  
Pe e giz all, belek touet,  
Em'oc'h o vevan er pec'hed,  
Ha n'euz ket entre-z-hoc'h eured.

Laret 'rann c'hoaz na hellont ket  
Zoken ober dour binniget,  
Na binnigan netra e-bed,  
Gand ann Iliz 'int distolet.

Binnigen ann dour a zo bet  
Gand ann Iliz romen savet,  
P'e deuz lamet holl digant-he  
E deuz-hi bet lamet ive.

Zakrifiz 'hellont da ober  
Rak bezan ho deuz *karakter*,  
Hogen a viskoaz eo berzet  
Mont d'oferen chismatiked.

Ann Iliz e ra gourc'hemenn  
Da vont da glevet ann ofern  
P'ho devo ar *Gatoliked*  
Beleien vad d'he lavaret.

Mes difeun e ra ann Iliz  
Bezan bezant e sakrifiz  
Beleien *toued*, *Intrued*,  
E deuz ouz he c'halon bannet.

Heuz vraz a viskoaz e deuz bet  
Ouz peden ar chismatiked  
Hag e kemenn d'he lugale  
En em rannan klok diout-he.

Ken nebeut na hellet kas d'he  
Da vadein, ho pugale,  
Rak bezan 'vec'h kiriegez  
D'ober ouz penn eur zaotrerez.

Pa vezint bet kristenet mad,  
Bevit dibreder war ho stad,  
E m'aint e gras gant ho Doue,  
Ha digor eo d'he dor ann ee.

Ho heul ebarz ann treo zantel  
'Ve ober eur pec'het marvel,  
En em rannan klok deuz Doue,  
Ha fazian kevret gant-he.

Na hentet nepred anzhe  
Nemed eunn abek mad ho pe,  
Gant doan ne deufent d'ho touellan,  
Ha skouer fall evoc'h d'ho nesan.



- » Ar veleien ho deuz *touet*,
- » N'ho deuz, eme-z-hoc'h, man troet,
- » Kovez 'ouzont 'vel ar re all;
- » Eurenjin, prezek 'vel gwechall.

Eunn noter deuz he garg toret  
E war ober teulio bepred;  
Hogen e-barn, ne dal netra  
Hep gwir, ann holl deulio e ra.

'Vel-ze, ar Bersoned neve  
E kement a zell ann Ine,  
Dirak Doue man ne dal ket  
Kement gant-he ave bet gret.

E-giz ministred ann Iliz  
A reont ive ann ofiz,  
Kinnigan zakrifiz 'vel-t-he,  
Chetu ann doareo aze.

Mez kement ofern a leront,  
Kement karg beleg a reont,  
E zo eur zaotrerez neve,  
Chetu skler mad ar c'hemm aze.

Pe reont ar Zakramancho,  
E heuliont c'hoaz ar c'hustummo,  
Lavaret ann hany a Doue,  
Chetu ann doareo aze.

Mez touelluz ez eo ho c'homzo,  
Rein a reont d'ann Ineo  
Ar maro el lec'h ar vue,  
Chetu skler mad ar c'hemm aze.

Bezet unvanet 'n ho peden  
D'a zul gand ann Iliz romen,  
Mennet ouz Doue war eunn dro  
Ann distol deuz ho pec'hejo.

Gant ho pugale, tud ar ger,  
Lavaret kevret ar Roser,  
Displeget d'he, ma ouzhoc'h lenn,  
Ar misterio deuz ann ofern.

Gret katekiz gant prederi  
D'ho pugale, d'a dud ho ti,  
Gant Doue oc'h karget ann-he  
Kretaat reet evit-he.

Pe dostai koulz ar gouspero,  
Deraouet arre pedenno,  
Ha tremenet dilerc'h ann de  
E servic'h ann Otro Doue.

Na glefet gwech ar c'hloc'h o son  
Ne skoio gloaz enn ho kalon,  
Pe na bellet mont d'ann Iliz  
Da bedin, e-pad ann ofiz.



Me em euz koulz ha c'houi anken,  
Bezomp stard ebarz hon Lezen,  
Deomp war ar chafod, mar be red,  
Kent bikenn heul belek touet.

C'houi c'houzanvo 'berz ann Touer ;  
Kalon, abaskded, ma breuder,  
Douget ho kroaz war ann douar,  
Na zo ken hent da vont d'ar c'hloar.

Ann Iliz, eur yamm a drue,  
A wel dourek d'he lugale,  
Pere zo out-hi dispac'het,  
Hag ho deuz-hi kren dilezet.

Kement ho denz prenet mado,  
Ha danve 'oa d'ann Ilizo,  
A zo deuz ann Iliz rannet,  
Hag a hent all anaouecet.

Na pe deufe eunn el em lec'h  
Da laret war ann tu gin d'ec'h,  
N'her c'hredit ket; aberz Satan  
A ve digaset d'ho touellan.

Pa hon bezo kuitaet Breiz  
Ho tistrein, hep mar, a vo reiz  
Diwar Lezen glan eunn Doue;  
Prezeget vo eunn all neve.

Mes gwaz d'ec'h-hu mar he heuliet  
Test kriz a venn enn hoc'h andret,  
Pa vezimp barnet gant Doue;  
Dalc'het koun mad a gement-se.

'Vel eur geder kaset a bell  
Da ober gward pad ar brezel,  
Em euz, herve ma oa dleet,  
D'ec'h ann enebour diskouezet.

Marteze n'en em wellomp ken  
Hag em boa c'hoant, kent ma varvjenn  
Da rein d'ec'h ar reolio-ze  
Evit en em veran dre-z-he.

Dre garante a c'houlennann  
Digan-ec'h eur c'hras divezan;  
Goude ma vinn et deuz ar vro  
M'em bo lod enn ho pedenno.

Ma Doue, dindan ho tiwall  
'Nn eunn tu e Breiz, pe e Bro-C'hall,  
Mar benn lezet war ann douar,  
Ez ann da vagan ma glac'har.

Allaz! na pebez eur c'helo,  
Petra, 'mez-hoc'h, 'vo gred er vro  
Enn diouer a vinistred vad  
D'hon c'helenn ha d'hon c'hovesat?



Bet Fe, Fisians, Karante,  
Ha bet eur wir c'hlae'har gant-he,  
Ar ioul vad d'ec'h holl a vasto  
Enn diouer a Zakramancho.

Kimiad, kerent ha mignoned!  
Pa na venn ken em bro lezet  
Me ia breman d'ar broio all  
Evit klask mignoned feal.

Ma dizalc'h ha ma faurente  
Marteze raio d'he true  
Hag e roint neuze eunn tam boed  
Da zibrin, d'ar paour harluet.

Kimiad, d'ec'h tado ha mamo!  
Damantit ha pugaligo,  
Kelennet, kastiit anhe  
Hag e kemerfet gopr goude.

Kimiad, ma bugale santel!  
Ez ann, siouaz! d'ho tilezel,  
Dalc'het, me ho ped, d'ar gwestlo  
A rec'h d'in gant kalz a zaero.

Koz ha iaouank, braz ha bian,  
Digant-ec'h holl e kimiadann;  
Allaz! n'en em welfomp bikenn  
Holl keyret barz er vro-man ken!

Ann heskin, hep mar, a bado,  
Ha kalz ho bue a gollo,  
Dre ann tan, ha dre ar c'hleze,  
Darn a varvo a glanv-gwele.

Servichomp ann Otro Doue  
Gant fealded, ha gant gwir Fe;  
Ha ni en em welo er c'hloar  
Mar n'hen greomp war ann douar.

— SKLERIDIGEZ. —

« Kement o deuz prenet madou pere a oa d'ann Iliz, a zo  
» dre eno rannet diout-hi, hag ivez anaouet a heint all. » —  
Ann hini a arvarfe war ar pezh a lavar aman ann Aotrou ann  
Hermit, n'en deuz nemet lenn ann unnekved *Pennad* euz  
ann *Dalc'h* eil war-n-ugent euz ar Sened a Drant, hag e  
welo n'en deuz ket lavaret re, na zoken awalc'h. — Ebarz  
er Gra, pe ar C'honkordadt a oe tremenet e 1801, e tre ann  
Impalaer Napoleon hag ar Pab Pius VII, he-man a reaz ann  
dilez euz a vadou ann Iliz, d'ar re ho devoa ho frenet, gant  
ma teuje ar Rouantelez da baea eul leve bloazick d'ar veleien,  
evit ho dic'haoui euz ar madou ho devoa kollet: chetu evit  
pe tra e paer bep bloaz, da bep persoun, eul leve a zaou  
c'hant c'houec'h skoed ha tringent hag eiz real. — Ne oe ger  
euz a vadou ann dudchentil, nañ euz ar madou all gwerzet e  
pad ann *Dispac'h*: ar re-ma ne oant ket d'ann Tad santel da  
rei, ha n'ho roaz ket.






# KIMIAD

## AR VELEIEN.

### Pederved Loden.



— 1792 —



Pa oe klevet ar veleien oc'h ober ho c'himiad er zul kenta a viz Gwengolo, ha pa oe gwelet enn eil zul ne oa ofiz ebed hogoz neblec'h, neuze ar Vretoned a oe karget a c'hlac'har hag a dristidigez. Bete neuze tud vad Goelou, Treger, Leon, Kerne ha Gwened a oa bet frealzet enn ho foaniou : ar veleien goz choumet enn ho zouez, ho sakramante enn ho ziez hag a lavare d'ez-ho ann oferen, a wechou zoken enn lizou e pere a oa beleien nevez : evel ne oa ket a walc'h euz ar reman da gas dre holl d'ar parresion, ar re goz a zalc'haz kalz anez-ho enn ho re, ha peurgedged er parresiou diwar ar meaz : rei a rent er giz-ze ar Zakramanchou d'ann dud feal. Mes e miz Gwengolo e oent rediet da dec'hel. Nag a zaerou c'hoero a oe skuliet neuze e kuz ! nag a hirvoudou ! Mes ivez nag a c'hrosmol enn enep d'ann heskinerien ! Eaz eo poella pegement a oe mantret gand ann doan hor bro geaz Breiz, pehini a zalc'he kement d'he beleien : ne oa ken hini evit kiniga ar zakrifiz, prezek komision Doue, distaol ar pec'hejon, badeza ar vugale, ober ann dimizion, skoazia ann dud klanv

ha pedi evit ar re varo. Enn *touer* bennak a oa, evit gwir, tu-hont tu-man dre ar vro ; mes ar re-man dre ho fazi, ho direisioù hag ho c'hasoni e kenver ar veleien goz, a oa deuet kasauz braz d'ar Vretoned pere a de'che diout-ho evel diouc'h bleizi dihengar, lammet enn ho zouez evit ho zaga. Kement-man a gargaz ar vro a c'hlac'har : ne glevjac'h dre holl nemet klemmou truezuz.

### ●■■■ VII. ■■■●

## KLEMMOU AR VRETONEC.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *E penn Krozon.* — 28.

Pebez rann galon eo d'imp ni  
Gwelet ar chism hag ar fazi  
O redek kement tro-war-dro  
Hag o kreskin kemend er vro.

O Kristenien, pegen nec'huz  
Eo gwelet beleien Jezuz  
Evel gwallerien distolet,  
Darn harluet, darn all bac'hiet.

Ebarz Bro-C'hall ne weler ken  
Nemet dre zarvoud, beleien :  
Dibod eo ann oferenno,  
Dibod eo ar Zakramancho.



Ne glever prezegen e bed,  
N'euz na mision, na retred;  
Allaz! petra a reomp-ni?  
Gant hon more'hed ne hellomp mui.

Kroasio skeduz a aour melen,  
Ha kroasio kaer a arc'hant gwenn,  
Kleuzeurio, ezansouero  
Holl ho c'haser d'ann *Distriego*.

Diweret deuz ann ofiso,  
C'hoaz 'vit kreskin hon ankenio,  
E zo deut enn touez ann deved  
Bleizi digar, falz bastored.

Ne d-int holl nemed *Intrued*,  
Heretiked, Chismatiked,  
Hag ouz penn kouezet c'hoaz ive  
Dindan bec'h vraz ann anaoue.

Mouez ann Iliz a zisprizont,  
Ho fenn ho-unan a heuliont;  
Bevan fell d'ez-ho enn ho roll,  
Ha kas ann Ineo da goll.

E lec'h prezeg ann Aviel  
E saotront ar gador santel,  
E saotront ann holl oterio  
Dre ho argarzigezo.

Ann ele, sent ha sentesed  
'Zo glac'haret ouz ho c'hlevet  
O tonet hemde enn ho ti,  
O ma Jezuz, d'ho plasfemi.

Pebez glac'har, o ma Doue,  
Gwelet ar seurt-ze koulskoude,  
E lec'h ar bastored gwirion;  
O na pebez eur rann galon!

E Babilon, pobl Israel,  
C'houi a wele d'ho templ santel,  
Pe na hellec'h mont d'ann templ-ze  
Da bidin ann Otro Doue.

Mes ni hon euz ive breman,  
Hag hep arvar, lec'h da welan  
Pe n'hellomp mont d'hon Ilizo  
Da gemer ar Sakramancho.

Allaz! breman omp, Bretoned,  
Euz a veleien diweret,  
Ha ni na heulimp e nep giz  
Tud distolet gand ann Iliz.

Krial e ra ann anaon  
Ha hirvoudin enn ho frison,  
O chom breman hep pedenno,  
Siouaz! ha hep oferenno.



Allaz! ma vije bet chomet  
Gand ar bobl ho gwir bastored,  
E vijac'h frealzet buan  
Ineo paour, ebarz ho poan.

Hogen n'hellfe den lavaret  
Ped dizeur e zo c'hoarvezet  
Dre zoare beleien nevez,  
Dre holl dre ar Rouantelez.

E peb bro, ha dre holl 'n hon touez  
N'ez euz nemed dizunvaniez  
Ha kasoni vraz ha ienien  
Enn tre kerent, amezeien.

Ar breuder hag ar c'hoarezed,  
Ar priejo dizunvanet,  
Ann tad, ar vamm, ar vugale  
Ann eil a enep e-gile.

Piou zo kiriek da gement-se?  
C'houi hep ken, Pastored neve :  
Mes ho pet sonj e rentfot kont,  
Dirak Doue, o pebez spont!

N'em habaskaet, ma Doue,  
Ha gret d'imp-ni holl trugare;  
Digaset ho Lezen 'n hon touez  
Hag ar peuc'h, hag ann unvaniez.

Digaset d'imp hon Eskibien,  
Hor Pastored, hor Beleien,  
D'hor hinchan holl d'ar baradoz  
Evit ho meulin de ha noz.

Erbedet, ni deu d'ho pidi  
Evit ho pobl, gwerc'hez Vari,  
Ha c'houi holl sent ha sentesed,  
Evit ma vefomp selaouet.

— SKLERIDIGEZ. —

Beza ez ounn bet e pad eunn nebeut bloaveziou, belek-aluzenner e prizoun braz Fontevrault (\*), enn tu all da Anjers. Eat a oamm di evit frealzi ha kelenna eunn tri c'hant breton keaz en em gave eno, ha gant-ho ouc'h penn seitek kant gall : galloud am oa war-n-ez-ho hag e tastumenn va c'henvroiz, eunn diou pe deir gwech ar zizun : goude ho beza kenteliet war ho dleadou a gristenien, ho lakaenn ivez da gana eur ganaouen bennak, ha ze evit ho divuza eunn nebeut, hag e skrivenn lod anez-ho. Biskoaz n'hoc'h euz gwelet ker braz levenez : netra ne ra plijadur d'eur breton evel kana, ha peur-godged kana eur ganaouen euz he vro : kana a rent holl eta laouen, ha hogoz ankounac'haat e pelec'h a oant : mes, hep dale, ar c'hloc'h a zeue da c'hervel d'al labour : neuze e tave

(\*) Fontevrault a zo eur c'hlaustr koz, savet e tro 1099, gant eur breton a zu Roazon, hag hanvet Robert Arbrissel. Ar c'hlaustr-ma a oa e 1790, unan euz ar c'haera hag ar brasa klaustrou a oa e Bro-C'hall. E 1814, e oe lekeat da brizoun.



ar c'han hag ec'h achue ar blijadur : pep-hini a zistroe d'he labouradek, enn eur rei mil bennoz d'ar *Freatzer*. Ann dud keaz-ze a oa dalc'het da devel noz-deiz : gwa vraz da nep a gomzje ; kastiz a zeue war-n-ezhan. Pa arruenn d'hogwelout, ho c'havenn aliez o wela. Diez meurbed ha zoken dic'halluz eo da eur breiziad en em rei d'al levenez, pa en em wel dalc'het eur pevar-ugent leo euz he vro : fazia a ra evel eunn all, mes daoust d'ann holl, ne voug nepred enn he galoun, ar garantez evit he vro, he dud hag he vignouned, ha pa en em wel pell diout-ho, en em ro d'ann dristidigez. Evit laouennaat eta ann dud paotr-man, e komzenn enn eur dremen, da unan euz pardoun santez Anna Wened, da eunn all, euz hini sant Servest ; da heman, euz hini ann Itron Varia Gwir-Zikour Gwengamp ; da hennez, euz hini ar Rumengol, Bulat pe ar Belek ; en eur ho alia goude da bedi ar Zent hag ar Zentezed-ze.

Kement-man ho lakae da zridal eunn nebeut : neuze ar bulzunon, ann nadoziou, ar c'hirri, ar morzoliou, enn eur ger, ann holl vinvijou a c'hoarie kalz skanvoe'h ha stankoe'h : lavaret ho pije zoken, e vije denet ar bean nebeutoe'h poumer.

E touez ar vreiziaded, en em gave eur miliner euz tu Lannveur, pe sant Iann ar Biz. Ann den-man holet war dro tri-ugent vloaz, a oa tallet euz ar c'haera hag he benn a oa moal, hogoz evel eunn irviaen : beget mad a oa ivez ar miliner-man, evel ma eo peurvuia ann dud diskuiz : gouzout a re lenn ha skritur moull hag ivez skritur dorn : lavaret a ret zoken en doa breon : piou a oar ? Eunn nozvez ez eaz da doulla dindan eur groaz en em gav war eur c'hroaz-hent, me gred e parrez Plouganou, evit tenna eur varriken arc'hant kuzet eno. Ar varriken a oa o tont er meaz, pa arruaz ne ouzounn piou da dremen, hag a lekeaz ar miliner da gomz : kercent ar varriken a gouezaz doum pe donnoe'h enn toul,

ha chetu eat ann taol da fall. Ar miliner ne zigalounekaaz ket evit kement-se : arc'hant a blije d'ez-han, hag evel ma oa dornet-mad, en em lekeaz goude da ober pesion ugent real : beza a oe siouaz ! evit he wall-eur : paket a oe war gement-man ha kaset da dremen pemp bloaz da Fontevrault. Eno e renkaz lezel he vieher a viliner evit kemer ann hini a wiader. Pa arruenn e kichen he stern, ar miliner koz a denne kercent he vulzun, hag en divije bepred eur ger bennak da lavarout. Eunn dervez dreist ar re all, e teuz gant-han :

- » hirio, eme-z-han, Aotrou keaz, e ma va spered a dreuz :
- » roet a zo d'in neud brein, ha na reont nemed terri : e tu-
- » hont, e berr e ma ivez ar prosiou hag ann tantad e sant
- » Iann : chetu ma vo brema hep dale, pemp bloaz hag han-
- » ter kant, ne oa ket arruet gan-en, mankout d'en em gavout
- » eno. Pebez dizeur evit ann den paour, beza distolet keit-
- » ma euz he vro, mes petra a fell d'e-hoc'h-hu : red eo ha-
- » baskaat ha paca ann amzer dremenet.
- » Ann den a die kemer ann amzer diouc'h ma arru gant-
- » han. — E tec'h ma ve staget ar c'havr e renk peuri :

- » Goude c'houarzin e teu gwella,
- » Goude c'hoari, huanada.
- » Biskoaz den na eure re
- » Ne raje nebeut goude.

» Ne c'houzanver ket ann dienez, ken a ve eat ar feunteun  
 » da hesk. — Me, Aotrou, me zo bet eur paotr, amzer a  
 » zo bet ; mes tremenet eo kement-se d'in, n'em'ounn ken  
 » eunn hevelep hini — ann hent hag ar zamm a zigaz ar  
 » marc'h ebarz. —

Kement-se a zo euz ar gwella, goaz koz, e respontiz, ha pa omp ho farsal e lavarinn ivez d'e-hoc'h : — Marc'h a reud ouc'h ar c'hentrou a ra gaou braz d'he gostou, pe e giz all :



marc'h a fell d'ez-han heja he zamm, ne ra nemed hen di-  
reiza, ha kaout mui a boan. — Gwell eo plega evit terri. —  
Evesait goude kement-man, hag evel ki skotet, ho pet doan  
rak dour bervet : diwallit da heulia al louarn,

He-man el lindag dale'het, a grie abouez penn ;  
Ma lezit da redek kuit, ne daginn ier bikenn.

A boan ma oa losket  
War iar ez eo lampet.  
Mes c'houi lezit 'vit bikenn,  
Hag arc'hant ha barriken,

rak evel m'hoc'h euz her gwelet, abred pe zivezad ez a an  
taol da fall. — Hag hep ken beteg ar wech diveza ez ea ar pod  
d'ar feunteun ; goude e ve keuz, mes re ziwezad e ten. —  
Ho trugarekaat, Aotrou, eme ar goaz koz, ha ker kent  
c'hoarie laouen he vuzun. Kaer a oa gwelout he zonzans, evel  
yvez hini ar Vreiziadet all : holl e c'houzanvent ho foan gant  
habaskded, hag esoc'h a oa ivez ho distrei d'ann hent mad,  
eged ann dud all a oa gant-ho.

Ar miliner-man en denz kanet d'in ar ganaouen a zo aman  
diarok : he gen-brizounerien ho deuz roet ivez meur a hini  
euz ar re all a zo el leor-man, evel am euz hel lavaret.

Nep en defe c'hoant da c'houzout hag hen e vez klevet  
mad, pe boellet ha kavet kaer gant eur re bennak brezonek  
ann Aotrou ar Gonidek, De La Villemarque, ann Aotrou  
Herry, Klee'h ha meur a hini all, a defe mouet da gavout  
eunn tri c'hant breizad evel ar re a bere a zo komzet, beget  
mad evel-t-ho, ha dastumet ivez euz a gement korn a zo e  
Breiz : pa en defe ho c'hlevet holl o komz, hag a displega ent  
lennadur great dira-z-ho er brezonek-ze, e trofe huan a gre-  
den. Meur a weach am euz troet ha distroet war ho brezo-

nek, ar Vretoned a oa e Fontevrault : pa ho lekeenn da  
gomz, e klevenn brezonek ar Gonidek, pa lennenn dira-z-ho  
ar brezonek-man e vije poellet gant-ho ; da c'houzout eo, ar  
ger ne lavare ket unan, a lavare eunn all, ar ger na vije ket  
klevet er vad gant heman, a vije klevet gant egile ; mes enn  
divez, na choume ger ebed hep beza klevet, ger ebed hep  
beza poellet.

Evel ma zo nebeut a dud hag ho deuz bet lec'h da welout  
ha da glevout war eunn dro kel liez a vreizad, am euz kredet  
e rafenn plijadur o rei da anaout ar pezh am euz disket. Ann  
holl a welo dre-ze penaoz ar geriou kemeret gant reizerien  
hor liez, n'int ket geriou nevez na dianaf d'ar Vretoned.

Mes pred eo distrei d'ann traou c'hoarvezet e pad ar *Re-  
volution*.

Tud a galoun en em ro eur penad d'ar c'hlae'har, mes  
hep dale e sonjont klask louzou ouc'h ho anken ha goulenn  
ouc'h ho gwannerien pe evit tra ho deuz ho gwasket. Evel-se  
goude kement-man holl, e savaz kessusk dre ar vro, ha  
dreist holl enn tu Treger.

Ann tenna a oa e Landreger enn dek a viz Gwengolo, hag  
a dfe beza great enn Iliz Itron Varia Koat Kolvezon, e lec'h  
e ma hirio ar c'hoc'hi. Pa oa arru heur ann tenna, Fransez  
Arzur, euz ar Vinié'hi, en em lekeaz da brezek ne dlie den  
hen ober, na mont da servicha tud pere a lame ar veleien  
euz ar vro, hag a zismantre kement ar Relijion. Kerkent e  
savaz dispac'h : prenestou ha doriou ann Iez a zo grillet ha  
diskaret a doliou mein, hag a oat o vont da vrevi mistri ann  
tenna, pa nevet ma kavjont eunn or guzet evit tec'het kuit.  
Neuze ann dud iaouank rok gant ho zol kaer hag enn eur  
grial : bevet ar Relijion ! bevet er Roue ! a iez, darn da  
Benvenan, evit mirout ivez ouc'h ann tenna, ha darn all d'ar  
Roc'h-Derrien, e pe lec'h e kavjont, e tre eunn heur goude  
kreizde, paotred parresiou Hengoat, Peuzit ar Roc'h, Ploe-



zal, Pouldouran, Trogeri ha Runan, deuet da emganna kear ha da generout ann armou hag ar *manisionou* a oa eno, evit mont gant-ho goude, da emganna ivez kear Pontreo : ha c'hemerout a reont ha mont kerkent war Bontreo : beza a oant e tro eur pevar pe bemp mil : Pontreviz a stourmaz out-ho, ha goude eunn emgann a zion pe deir heur, e pehini e oe lazet eunn dek pe eunn daouzek den, ann dud diwar ar meaza zistroaz d'ar gear, hep beza gallet devi Pontreo, herve ma oa kre enn ho c'hoant. — Eunn nebeut deisiou goude, e oe paket eunn daou-ugent bennak euz ar re tamallet da veza ar muia kabluz : Fransez Bothorel, euz a Bloezal, a oe barnet da dri bloaz prizoun : Ollier ar Gwillou, Fransez ar Barbu ha Tousest Lukaz, ivez euz a Bloezal ; Fransez ar Gwillou ha Jerom Jaffreo, euz a Drogeri ; Ervoan ar Brizot, Ervoaz ar Bronster ha Charlez Duret euz a Beurit ar Roc'h, a oe ho eb barnet d'ar maro.

D'ann hevelep deiz, tud Koataskorn, Kavan, Kaouennek, Prat, ha tud all, a zave ivez da vont da stourmi kear Lannuon : aman e tigoaz ann hevel tra evel e Pontreo. Beza a zo zoken hag a lavar penaoz d'ann hevelep deiz, ann holl blouiziz dre Vro-C'hall, a zavaz evit emganna ar c'heariou.

Ann emgannou-man a oe galvet gand ar Vretoned, *emgann ar vaz*, pe *bloavez ann taoliou buz*, abalamour ma oa nemet bisier gant-ho. Ar Vretoned a zispac'haz dre ma lamet digant-ho ho beleien hag ho Relijion, hag evit-se e stourmjont ar c'heariou euz a be leac'h e krede gant-ho, ha marteze gand eur gwir bennak, e teuc war-n-ez ho kement a reuziou.



## FURCH

AR VELEIEN CHOUMET ER VRO.



— 1792 —



Koulskoude evit lavarout ann traou evel ma oant, ma oa e touez ar Vretoned tud karantezuz awalc'h evit en em lakat enn daill da goll ho madou, ha zoken ho buez enn eur guza ar Veleien a oa choumet er vro, kalz all ivez, siouaz ! a oa ken digar enn ho c'henver, ma rent war-n-ezho hemolc'h e giz war loened gwez. Eaz eo her gwelout dre ann daou enklask a zo ama-war lerc'h, evel ivez dre veur a dra all a zo aman goude.

❖❖❖ VIII. ❖❖❖

### GWERZ SAVET DIWAR BENN

Eur Furch Eleien goz. great dre urz ar gwall vistr! euz a barroz  
Plouberr.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *C'houi hoc'heuz va Doue. — 46.*

Ma spered, lerit d'in eunn nebeud a werzo,  
Ma hellinn kentelien ann holl dud deuz ar vro  
War ar blenadur garv deuz a Robespier  
Hag he gefluskerien deuz a barroz Plouberr.



Eur zec'hed vraz ho deuz a voad ar Gristenien  
Ha kalz, ha kalz muoc'h a voad ar veleien  
N'ho deuz ket deurveet donet d'ober al *Le*  
Hag a zellit kasti aberz ann *Asamble*.

Disul, ebarz ar voure'h, ez eo en em strollet  
Ar c'horf *munisipal* hag en deuz bet mennet  
Ober eunn hemolc'h braz enn touez ann holl c'hedon  
Pere 'vije kavet e Plouberr-Lannuon.

Roet ez eo ann urz, gret zo peder banden  
Evit ober ar furc'h a enep al Lezen;  
Distrein 'reont d'ar ger gant pep a garg moged,  
E lec'h na oa netra, netra na oc kavet.

Boulc'homp horc'hanaouen, ha diskouezomp d'ann holl  
Ann drougiez diaoulek dimes eur seurt tud foll,  
C'houesa 'reont dre holl evel ar fureded,  
E gwaremmo al Lern, ha re ar gonikled.

Furc'hed eo ar precho, arc'hio hag armelio,  
Mar boa enn-he arc'hant pe *asinaligo*,  
Ar ialc'h, ann doug-paper a zo eno chomet,  
Mes evit ann arc'hant, oh! ze ne douann ket.

Pe hen zo et gant-he, pe hen ned-eo ket et  
Pe peget ouz ho dorn, n'am euz gir da laret :  
Drouk komz 'zo difennet, zoken e-gwirione,  
Hennez e'r gourc'hemenn deuz ar gwir garante.

Goad ar veleien goz, kement-se a douann  
A glaskont dre ar vro evit dont d'hen evan;  
Ebarz ar zec'hed-ze, evel ar gelienen  
E sunfent anez-han beteg eur veraden.

Pa oant enn ti Fraval, o furc'hal ar c'hrignel  
Ec'h arruaz eunn tol e renkann da henvel,  
Eur c'haz a oa ebarz, a oa skler he zello,  
Ha ma lerbont e oa eur belek koz eno.

Eno oa jolori enn tonez ar glianted,  
Dalc'h ervad, ma mignon, ma vezo ereet,  
Ni a vo peet kaer ebarz e Lannuon,  
Mar gellomp her pakan fete barz ar prison.

Ann dud diskiant-man gant ho drougiez dallet  
Ho devoa bet eunn den gand eur bibis kemmet,  
En em gavaz souezet ha goloet a vez  
Pa weljont oa eur c'haz a lampaz enn ho zouez.

Ma malloz, 'me ar c'haz, e kreiz ho pouzello  
C'houi ez eo ar fallan skraperien zo er vro,  
Gret hoc'h euz din eur c'holl a zo deuz ar brasan  
Spontan ma logoden pa oann vont d'he skilfan.

Enn ti gwil Bomaner, barz e melin ger-iel,  
Ne onn pe hel laret, pe ive hen tevel;  
Roet oc d'he da c'hout gant tud goapaerien,  
E oa e krao ar moc'h pevar a veleien.



Kemerout a rejont neuze ho seienno,  
 Digoret d'imp ann or, anez ni he zoro;  
 Aberz ann Nasion ni zo deut d'ho pakan,  
 Pe n'hoc'h euz teurveet dont ive da blegan.

Pa welaz ann Tad moc'h e oaint deut d'her stourmi  
 En em lakaz enn tu da zifenn he wizi,  
 List gan-en ma zaer gwis, a lavaraz raktal,  
 Rag ann dra man n'eo ket eur gra *munisipal*.

Ann dud displeber man hag hi holl konnaret  
 'Vel ma weljont ar moc'h a zo hogoz semplet;  
 Ar mene a grede genel eur peulvan braz  
 Ha n'en deuz bet ganet nemed eunn tammik raz.

Kat ho deuz kaouejo goulo deuz a evned,  
 Ar goulm ne fisi ket ebarz ar sparfeled,  
 Kemer era he nic'h hueloc'h evit-he,  
 Rak ma chomfe dindan a ve halfet gant-he.

Chomet eta, potred, chomet ebarz ar ger;  
 Na doret ket ho korf enn eur goll ann amzer,  
 O c'houezin, o ienan, e tapfac'h ann arwez  
 Pe ive ar zifern hag a zo treo diez.

Eur belek katolik a zo eunn evn gwen vad  
 Hirie man el lannek hag arc'hoaz 'barz ar c'hoad,  
 Disul enn eunn neiz pik, dilun enn eunn neiz bran  
 Hag el lec'h ma tijun ne zebr neptro he goan.

Me am euz c'hoant breman kent evit peurganan  
 Da rein d'ec'h eunn ali a zo deuz ar gwellan:  
 Taolet evez ho koug gand aon e ber-amser,  
 Ne ve d'ec'h diveret vel da Robespierre.

Me oar ma alio a zisplich d'ho kalon  
 Dallet ha kaledet evel hini Pharaon;  
 Mes pe droio ar rod e vefot divesad,  
 E kolfot ho peli, hag e kouefot a blat.

Ann hini hoc'h ali zo ive eunn evn koant,  
 Mar wefac'h he hano ho pe d'ez-han mil c'hoant;  
 Eur *sitoien* feal, ha nan eunn *terrorist*,  
 Ha ma eo skan ho freil, hen zo skanyoc'h he c'houist.

---

— SKLERIDIGEZ. —

Ann Aotrou Cwillerm ar C'herrek pehini en deuz savet ar  
 Ganaouen-man, a oa kent ar *Revolusion*, kure e Plouaret,  
 he vamm-vro: ne eure ket al Le ha ne gemeraz ket ken-  
 nebeud ann tee'h. Goude ar *Revolusion* ez eaz da berson da  
 Gemperven: eunn eiz vloaz goude, e tistroaz da Blouaret,  
 hag eno ez eo marvet, e 1816, hoalet a zriouec'h vloaz ha  
 tri-ugent.

Ann Aotrou ar C'herrek en deuz c'hoaz savet meur a ga-  
 naouen all evel: son ar Magerezed, ha Danevel ar merc'hed  
 hag ar Groagez. — Ar ganaouen man a zo bet roet d'in gant  
 Iann-Mari ar Gallou.



❖❖❖ IX. ❖❖❖

EUR FURCH ALL GREAT IVEZ E PLOUBERR

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Ar Gananeen.* — 74.

Apollon, tad ann holl skiancho  
Deut d'em skoazellan, me ho ped,  
Ma hellinn ober barz e gwerso,  
Eur ganaouen d'ar Vretoned,  
War zoare ar gwellan diskibien  
Euz ar gwasker Robespier, r  
Ho deuz lekeet enn ho c'hreden  
Tizout gedon 'barz e Plouberr.

Enn ho c'hreiz a zo het lekeet  
Eur galon ha kri ha digar,  
Evel en doa ho mestr konnaret  
Enn he amser war ann douar :  
Heskinan a reont gant drongiez  
Nep a zalc'h d'ar Relijion :  
Gortoz ouz penn a ve diotiez,  
Demeuz a yugale Neron.

Evel tud sod ho deveuz redet  
Ha distrempet gant ho c'houezen

Ann holl lec'hio ho deuz tremenet  
Evit kavout koz beleien ;  
Armet a oant euz a fuzillo  
Hag euz a glezeier lemnet ;  
Krenan a re ann holl galono,  
O welout tud ker konnaret.

N'ho deuz ket hep ken en em laket  
Da furchan ebarz ann tie  
Ann armellio ho deuz enklasket  
Da c'hout petra a oa enn-he :  
Da zisfeout a zo anez-he,  
Enn digare klask beleien  
E kasent ann holl arc'hant gant-he  
Evel me ra ar skraperien

Konstantin, impalaer kristen  
A ziskoe da holl dud ar bed,  
Ann douj a dleer d'ar veleien,  
Pa'z eo gwir en deuz lavaret,  
'Teuje gant he vantel da guzan  
Eur beleg en dije gwelet  
Ebarz enn he garg ho fazian,  
En em saotran dre ar pec'hed.

Pe ger braz kemm a zo, Bretoned,  
Enn tre heman ha Plouberriz ;  
Ar re-man e lec'h klask eurusted  
Ministred santel ann Ilis,



N'ed-int euruz nemet pa welont  
Goad ar veleien o skulan,  
Oh! neuze en em laouenaont  
Evel deuz eunn tol ar c'haeran.

Er skritur e kavann zo merket  
Penez Doue a selaouet  
Ar re ho devezo selaouet  
Holl zarnaouerien he c'hraso,  
Mes ar re a zeuje da faean  
He vinistred, he veleien,  
N'ho divije gobr all digant-han  
Nemed dispriz evit bikenn.

Me ho lez breman da arvesti  
Penez a sello eunn Doue  
Plouberriz, tud didrue ha kri  
Enn andred ar re a deue  
Euz he berz da rein d'he skoazello  
Ha magadurez d'ho Ine :  
Tennan a raint warn-he dizeurio  
Evit kasti deuz ar gwal-ze.

Charlez Kervenec'h *munisipal*,  
Den a skiant mar zo er vro,  
Pa zoug he seien *nasional*,  
Ne anav ket al lezenno  
Pere a otre d'ez-han furchan  
Ar lec'kio ho deuz diskleriet

Ar veleien goz en em dennan  
Ila nan 'barz e lec'h all e-bed.

Selaouet eunn nebeut, Bretoned,  
Ma komsinn breman deuz ann den,  
P'hini hep kavaillan den e-bed,  
A zellit bezan kabiten ;  
Da laerez avalo deuz ar gwe,  
Hep arvar, n'en deuz ket he bar,  
Da hemole'hin ministred Doue,  
Eo ar c'hentan war ann douar.

Eunn den a enor, mes eur pilpouz,  
Eo heman mar zo 'barz ar vro,  
Hep mar e kredann ez eo didrouz  
Ann niver deuz he vuzudo ;  
Dougen e ra herve ma welomp  
Doare eunn den santel meurbed,  
Mes enn he goustians mar lennomp  
Eo eur chismatik dirollet.

Ar zant neve-man en deuz kredet,  
E oa neisiet enn he ganton  
Kudoned hag a oa difennet  
Ho c'huzan, gand ann Nasion ;  
Prim en deuz han bet digemennet  
Tud armet da zont da furc'ha ;  
Enn he venoz ez eo bet toucellet,  
Rak n'ho devez kavet netra.



Ma mignon Charlez, list a goste  
Kefridi ann dud a Iliz,  
Diskennit don barz enn hoc'h Ine  
Evid ober eunn arvest striz,  
Euz ann holl gwallo hoc'h euz bet gret  
O kuitat ann Iliz romen,  
Ouz he c'huitat hoc'h euz dilezet  
Ho silvidigez penn da benn.

Enn ho sonj oa kavout beleien,  
Ho zamman deuz a chadenno,  
Hag ho c'has holl gant-he a vanden  
Da vreinan ebarz ar bac'hio,  
Hanval, me lar, ouz ar Juzevien  
Pe ambrougent Salver ar bed,  
Evel eunn torrer deuz al Lezen  
Hag enep Sezar dispac'het.

Gouzout a rann ez eo red senti  
Ouz ar veli deuz a Sezar,  
Mar be a-unan gand ann hini  
Euz a Jezuz, Roue ar c'hloar;  
Mes mar be a eneb, ez eo red  
Lezel holl beli ann douar,  
Ha plegan kren neuze, Bretoned,  
D'ann hini 'n euz krouet Sezar.

'Barz e Juvenal am euz lennet  
E krogaz c'hoant enn eunn azenn,

Evel eur marc'h kaer bezan dibret;  
Chetu eno diotiez ann den,  
A glask rein kentel d'ar re disket  
Hag hen dic'houvez e pep tra;  
Kement ma eo holl diskiantet  
Ann dud 'barz enn hor bro brema.

Na gredet ket eur seurt doktored,  
Ineo feal da Zoue,  
Mes d'ann Iliz katolik kredet,  
He c'helen a zeu deuz ann ee,  
Kelen ann dud-man a zo gevier,  
Tempset 'barz ann Ifern gwechall:  
Mibien da Galvin ha da Luther  
N'hellont rein d'ec'h nemet skoll fall.

Pebez joa 'zo, Ineo kristen,  
Enn ho touez ebarz e Plouberr,  
O welout ma eo kollet a grenn  
Mennosio tud Robespierre;  
Ar re-man n'ho deuz bet heul ebed  
Na n'ho devo gant gras Doue,  
Pehini a ziwallo bepred  
Ar re her c'har e gwirione.

List, Plouberriz, list ar veleien  
Da vianan barz ann distro  
Da gomza ouz Doue penn-ouzh-penn,  
Ne vorodont den barz ar vro;



Ho freder e vo deuz hoc'h ine,  
 Evel deuz ho silvidigez,  
 Terrin a raint ive noz ha de  
 A Zoue ar vuanegez,

Ken peur-lavaret, 'rinn eur beden  
 D'ar re a zo er fe faziet,  
 Da ober buan gwir binijen  
 Ha da zont arre da gavet  
 Ann Iliz santel, pried Jezuz,  
 Pehini ho deuz dilezet,  
 Enn-hi kavoint eur vamm druezuz  
 Hag e roi d'ez-he ar iec'hed.

— SKLERIDIGEZ. —

Dom Fransez ar C'horr pehini en denz savet ar ganaouen-  
 man, a oa ginidig euz ar C'hoz-Varc'had, e Plouaret, e pe  
 lec'h e oa kure pa darzaz ar *Revolusion*. Gonde beza dina-  
 c'het al Le, e choumaz kuzet enn he anaoudegez. Enn divez  
 ar *Revolusion*, en em dennaz da Vontroulez hag eno en em  
 guzaz enn eunn ti diindan al *Lans* : a c'hane e vije douget  
 aliez enn eur bahut, evit zakramanti ar re a vije enn ezoumm :  
 eno ivez ez eo marvet pa arruaz ar peoc'h.

Charlez..... a oa bet paket o laerez avalou frinkin. — Ar  
 ganaouen a zo het roet d'in gant Fanchon ar Person.

Dre ann troidellou a zo lavaret aman diaraok ha kalz a re  
 all, e vije baleet e Breiz, ar wenarien beleien goz. Paotred  
 c'hlaz Pennpoul-Goelo, a arruaz eunn nosvez e ti Thomaz,  
 e Logivi-Ploubazlanek, da glask ann Aotrou Richard, disku-

liet da veza kuzet eno. Thomaz a c'halv he vevel karrener da  
 skleria ann dud-ze, evit furcha he di : ar mevel a zeu er meaz  
 he wele hag ho c'haz dre holl : dre aman ha dre du-hont  
 a roent taol bek fuzil, pe daol kleze, hag evel ne grie Richard  
 e gwelc'h nag e bern foen ebed, e loskeat malloz war valloz  
 war-n-ezhan. Pa ho doa furchet dre holl, hag hep beza  
 kavet netra, ar mevel mad-man, evit ho digoll euz ho foan,  
 ho digasaz da eva pep a vanne, ha goude ho ambrougaz war  
 hent Pennpoul : mad e kavjont ann dra-man, ha kent kuitaat  
 e rojont, me gred, ho bennoz d'ar mevel keaz : heman a zis-  
 troaz laouen kaer d'ar gear, hag hep choum mechans, da  
 vare'hata gant netra, na da zellout re aliez war he lerc'h. —  
 Ann Aotrou Richard a oa ar mevel karrener-ze.

Eunn nebent deisiou goude, e oe diskuliet grek Thomaz  
 da zigemer beleien enn he zi, ha war-ze kaset d'ar bac'h da  
 Bontreo : barnet a oe d'ar maro hag evel ma oa Thomaz  
 Gwiraer d'ann *Nasion*, e oe barnet da zibenna he-unan he  
 c'hrek, ha ze evit diskoez he fealded d'ar *Republik*. War  
 gement-se e tenaz eul lezen nevez evel ma tene hemdez : dre  
 nerz hou-man grek Thomaz a oe lekeat e frankiz. — Ann  
 Aotrou Herri, mab bihan d'aun daou zen mad-man, hag  
 hirio kloarek e seminer Sant-Brick, en deuz, gant ken-gloer  
 breton all, savet eno eur skol vrezonck. Enor d'ann Aotrou-  
 nez iaouank-man ha da nep a reio evel-t-ho ! —





## BELEIEN BRETON

### MERZERIET E PARIZ.

— 1792 —

A-hed ann ugent deiz diveza euz a viz Eost, e oe paket e Pariz, hogoz ann holl veleien a oa kuzet eno : en em gavout a eure enn ho zouez meur a velek breton, euz a bere darn a oa eno a bell-zo, ha darn all a oa eat di, o c'hortoz beva dianaf, ha tec'het er giz-ze, esoc'h diouc'h ann heskin. Dastumet e oent, evit ann darn vuia, enn abatti karmelited ru-Vaujirad, enn abatti Sant-Jermen-ar-Pradou, e seminer Sant-Firmin hag e bac'h ar Forz. Evit ho frealzi e oe roet da c'houzout d'ezho penaoz e vijent, hep dale, kaset d'eur vro bell bennak, e pelec'h e kavjent eur peoc'h pehini na bellent ken kavout e Bro-C'hall. Dale'het a oe mad d'ar ger : hag evit gwir, merzeriet e oent hogoz holl, enn deisiou kenta a viz Gwengolo, hag evel-se kaset da eur vro, e pehini e piaouont ar brasa

— 89 —

peoc'h, ha pehini a oa diouc'h Pariz, war-dro ar pella ha helle beza : hirio e klevann kalz o lavarout int arruet eno.

Ann darn vuia euz ar veleien a oe merzeriet enn abatti karmez : iliz ann abatti-ma a zo c'hoaz enn he zao, hag ali a veenn da gement breton e ia da Bariz, da vont d'he gwelout : mad eo pidi ha prederia el leac'hiou hag a zo bet enoret. Mar ve bet eunn tamm dievezted, o welout ar burzudou a zo dre holl dre Bariz, her c'holler ebarz al leac'h-ma. Chetu eno da vihana ar pez a erruaz gan-en. Eat da vale da Bariz, e 1844, e c'houlenniz, goude beza redet holl gorniou kear, beza kaset da iliz Karmez : kaset a oenn di kerent gant eul liver iaouank euz a Sant-Briek, pehini em rene dre holl dre gear. Ne oamp ket eat tre mad enn Iliz, ma tec'haz euz va spered ar c'houn euz ann traou kaer am boa gwelet : enn ho leac'h e teuaz ar menosiou ann doaniusa, ha choumet e oann evel saouzanet pa zeuaz va *Liver* iaouank da lavarout d'in dont pelloc'h : tremen e rejomp e liorz-goz ann abatti, hag e penn eur vali til, e kavjomp eunn ilizik vihan e pehini, daou vloaz hag hanter-kant diaraok, menezec'h Karmez e zeue a wechou, da gana menleudi da Itroun Varia ann Eled. Ann tiik-ze a beden a zo eur gwir boestl relegou : gwad ar veleien a weler eno dre holl : ar gwad-ma a zo, dre azaouez, goloet gant eur gloueden-golo : pa arrujomp, ann evesiad he savaz hag e weljomp ar vein deuet gell euz a loued



e oant da genta. E troad ann aoter dreist-holl, weler muioc'h a roudou gwad ha chetu evit petra pa zeuaz al lazerien d'ar chapell, ar veleien en em dennaz d'ar santual, o c'hoantaat tostaat *ouz ann hin e greva ar re zister*, hag a ro kaloun da c'houzan ann holl boaniou. — Eno e tenaz em spered menosio doaniusoc'h eget biskoaz. — Goude beza prederie ann traou tremenet el leac'h-ze, en em likiiz da len eul leorik bihan en devoa roet d'in ann evesiad, hag pehini en em gawe hanoiou ann darn vuia euz ar veleien merzeriet enn abatti Karmez, enn hini Sant-Jermen-ar-Pradou, hag e seminer Sant-Firmin : kavout a riz war ar roll-ze, hanoiou pemp belek euz Vreiz-Izel : chetu-hi ama : Ann Aotrounez Laport, euz a eskopti Leon ha kure e Sant-Loeiz-Brest, merzeriet enn abatti Karmez ; — Koatjelin, euz a eskopti Sant-Briek hag abad enn abatti Mortemer, merzeriet e Sant-Jermen ; — Gwillou Keranrun, euz Lezardrev, enn eskopti Treger, ha Doktor-a-Navarr e Pariz, merzeriet e Sant-Firmin, ha kevret gant-ha Kervizik, euz a Blounez, enn eskopti Sant-Briek, ha belek e Sant-Jakez, e Pariz ; — al Livek a Drezerien, Jezuist, ginidig a Kemper. — Odet, merzeriet e prisoun ar Forz. — Hervez eul lizer skriyet gant Eskop Treger, d'ar re euz he veleien a oa en em dennet d'ar Spagn, Rene Urvoa, euz a Blonizi-Gwengamp, doktor a Sorbonn ha belek e Pariz, a oe ivez merzeriet e Sant-Firmin. — Ann Aotrou Graio-a-

Geravenant, euz a eskopti Gwenned, ha beleg e Sant-Sulpiz, e Pariz, a dec'haz diouc'h lazerez Karmez. Marvet eo, e 1831, persoun e Sant-Jermen-ar-Pradou, e Pariz.

Goude beza arvestet pep tra enn Ilizik Karmez, e riz ivez va feden kent kuitaat : he ober a riz, nann evit ann dud lazet eno, ha wardro ; mes enn-enev, evit pidi ar verzerien nevez-ze, ha dreist-holl re va bro, da bidi evid-oun hag evit tud Breiz-Izel : *Omnes Sancti Martyres, orate pro nobis*.

Niveri e rear pennaos, e pad ann deisiou kenta a viz Gwengolo, e oe lazet e Pariz, taost da unnek kant den : eunn tri-c'hant belek a oa enn ho zouez.

Etro hanter miz Genver, 1794, ann Aotrou Kormeau, persoun Plaintel, e tu Sant-Briek, a oe paket e Pariz, e peleac'h e oa en em dennet, ha gillotinet eno ker kent. Eunn daou viz goude, ann Aotrou hag ann Itroun a Zant-Luk hag eur verc'h d'ezho, pehini a oa leanez, a oe paket e Kemper ha kaset da Bariz e peleac'h e oent barnet d'ar maro, ha gillotinet enn naotek a viz Gouere : ar verc'h a c'houlennaz beza gillotinet da genta ; aotreet a oe d'ezhi he goulenn. Ean eur bignat war ar chafod e tistroaz ouc'h he zud hag e lavaraz d'ez-ho : — « Disket hoc'h euz d'in beva, me a ia, gant gras Doue, » da ziski d'e-hoc'h mervel. » — Ann Aotrou a Zant-Luk a oa breur da Eskop koz Kemper. Kevret gant ann dud-ma e oe c'hoaz gillotinet tri all euz a Gem-



per , diou zimezel Larok hag eur marc'hadour , han-  
vet Anenot. — Fransez Bidan, mear e parrez Pledran,  
tost da Zant-Briek, a oe paket gant ar re c'hlaz er  
gear-ma, ha kaset ivez dirak breujou Pariz, pere hen  
barnaz d'ar maro, enn deiz kenta a viz Here euz ann  
hevelep bloaz.



## ALIOU AR VELEIEN

KUZET D'HO FARROSIANIZ.

— 4792 —

KENTEL.

Ar veleien choumet er vro, a oa, evel ma zo bet gwelet,  
rediet d'en em guza evit tec'hel rak ar prizoun hag ar maro;  
mes evit-se, ne ankounac'haent ket ho denved nag ann dud  
choumet feal d'ar feiz, nag ivez ho breudeur beleien, hag  
ann dud all pere ho devoa troet kein d'ezhi. Euz a weled ar  
c'hoajou, ar c'hevion, ar grignoliou, e pedent evit-ho hag  
ho c'hentellient holl ann eil goude egile.

Evel ma hon euz lavaret kent, ennn ugent belek a reaz al  
*Le* enn eskopti Gwened, seitek enn hini Leon, eur c'hant  
hanter enn hini Treger, muioc'h enn hini Kerne, ha neben-  
toc'h enn hini Sant-Briek. Ar re-man a rea ennn drook vraz  
d'ar Relijion; evel-se, ar veleien goz en em lekeaz da zisla-  
vareout ho frezegennou, evit diskouez d'ezho e oa ar fazi  
gant-ho, hag evit mirout out-ho da zalla mui-oc'h-mui ann  
dud. Kredi a reant, ha gant gwir, penaoz goude beza goneet  
ha distroet ar bastored, e vije ivez ezetoc'h gounid ha dis-



trei ann denved dianket : prezegi e rejont eta d'ez-ho , hag ho c'hentelliou a zougaz frouez : meur a velek *touet* a zislavarez he *Le* : meur a zen faziet a zistroaz ivez d'ar gwir Lezen.

❦❦❦ X. ❦❦❦

DISLAVAR D'AR VELEIEN DOUET

*Fere a brezek n'ez euz c'henchet netra gant-ho ebarz ar Reljion.*

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Peur eta, o va Doue!* — 63.

Ouz hoc'h, beleien douet, am euz c'hoant da strivan,  
Rak c'houi dre ho lavario a fell d'ec'h hon dallan,  
Hag onn skuiz ouz ho klevet, c'houi hag ho mignoned  
O klask rein d'imp da gridin n'euz neventi e-bed.

Dislavaret a vefot breman war ho kentel;  
Pell amser 'zo e klasket ober d'imp-ni tevel,  
Gand aon ne ve diskouezet eman ganec'h ar gao  
E c'hoariet d'ober d'imp-ni serra kloz hor geno.

Mes diez eo digerin d'ann dud ho daoulagad,  
Gwelomp eta e pez tu en em gav ar gwir mad :  
Preseg a ret ne droer netra holl el Lezen,  
Gwelomp ha c'houi a hello difenn ho prezegen.

Ha n'eo ket gwir da gentan e tleomp holl kredi,  
D'hor mamm santel ann Iliz, rak 'nep tro ne fazi,  
Renet dre ar sklerijen deuz ar Spered Santel,  
He c'homzo a zo ker gwir ha re ann Aviel.

Pe c'houi 'ta, pe ann Iliz a zo hirie faziet?  
Ann Iliz d'he bugale e deuz bet diskleriet  
E tismantrer he c'helen, e rer neventio,  
Hag e Lezenno Doue, hag enn he Lezenno.

Er c'hatekismo zoken ha n'ho poa ket disket  
Eo ar Pab penn ann Iliz, ha penn ar Bastored,  
He wir deut digant Doue da netra 'zo kaset;  
Hag e fellfe d'ec'h prezek n'euz neventi ebed!

Ar Pab laket ken izel hag ar re distera,  
Eskeb, pobl ha beleien, holl int eunn hevel dra :  
Mes dre ann *Egalite* ar Fe a zo kollet;  
Hag e fellfe d'ec'h prezek n'euz neventi ebed?

Roet en doa hor Zalver ar gwir d'he Eskibien  
Da renan an Ineo, da aotren beleien;  
Gand ar *C'htub* hag ann *Distrik* 'int breman aotreet  
Hag e fellfe...

E lec'h Eskeb, beleien laket gand ann Iliz,  
Ann *Nasion* a laka re neve enn e giz :  
Mes sionaz! gand ann Iliz ez int holl tamallet,  
Hag e fellfe...



Ann Eskeb d'ar parrojo a gase beleien,  
D'ho harluan deuz eno e teu ann *Douerien*,  
Evel Mahomet, dre ners, gand eur rumm zoudarded,  
Hag e fellfe...

Ann eureujo 'vo breman gret holl gand eunn den lik,  
Pehini a vo hanvet ann *Ofiser publik* :  
Pelloc'h n'eo ket ar beleg eo a ra ann eured  
Hag e fellfe...

Ann eured gret er giz-ze a heller da derrin,  
Goude da nep a gerot, a hellfot dimezin :  
Ar Briedelez n'eo ken 'vel Zakramant sellet,  
Hag e fellfe...

Hon-nez eo a bep amzer Lezen ar Iuzevien,  
Hon renan a fell d'ez-he e lec'h ann Eskibien,  
Ha c'hoaz war eunn dro gant-he pep seurt heretiked,  
Hag e fellfe...

Lakat sent ann *Nasion* e lec'h sent ann Iliz  
Ober enn templo santel pep seurd treo iskiz  
Ha sellet ann Ilizo evel templo turked,  
Hag e fellfe...

Iliz Jezuz heskinet gand eur rumm tud diroll  
A wel breman gand anken he mado gwanet holl,  
Kollet gant-hi he beli, hag e leve gwerzet,  
Hag e fellfe...

He gwisko ar re gaeran, kroasio aour hag arc'hant,  
Kleuzeurio ha kaliro, knstod ha Zakramant,  
Et int holl gand ann *Distrik*, hag holl e voint teuzet,  
Hag e fellfe...

Ar mado a oa gwestlet, Doue, d'ho servieha  
A welomp e berr amzer a vont holl da netra :  
Encbourien ann Iliz eo ho deuz ho gwastet,  
Hag e fellfe...

E Bro-C'hall ne vo miret manac'h, na Leanez,  
Ho c'hlostro hag ho mado a vo gwerzet touez-touez,  
Hag ar gwestl kaer a werc'hded 'zo ive difennet.  
Hag e fellfe...

Ar gristenien gatolik e pare ar maro  
E renk mont dirak Doue, hep beleg war ho zro,  
Gwelet ann dud o vervel evel anevaled  
Hag e fellfe...

Ann Eskibien 'zo kaset deuz ho eskoptio,  
Ar veleien 'zo kaset holl deuz ho farrojo :  
Ho zol a rer er bac'hio, bezan int harluet  
Hag e fellfe...

Bezan ho doa kouskoude kalz a zeskadurez,  
Ha kalz a zonzans Doue, ha kalz a santelez,  
Tud gwiek, tud a skiant, a furnez, a spered,  
Hag e fellfe...



Piou a dle gwell evit-he gout al Lezen gristen,  
Ha piou en deuz gouzanvet mu a boan, a anken?  
Ouz al lezenno neve ho deuz kre enebet,  
Hag e fellfe...

Kaer en deuz bed ar *C'hlubo* n'int ket bet gallouduz  
Da vezan trec'h d'ho c'halon, na d'ho fe estlammuz  
Mil gwech kentoc'h ar maro ho dije gouzanvet,  
Hag e fellfe...

Klask e zo gret ho gonit dre ar c'haeran gwestlo,  
Gwelet 'c'heuz mennan d'ez-he arc'hant ha parrojo,  
Gant holl vado ar bed-man ne vijent ket temptet,  
Hag e fellfe...

Pa ne hellet er giz-ze dont anez-he a benn  
Ha pa 'zo gwelet e oant re stard enn ho lezen  
Ez int-hi bet e pep giz, gwall ozet, gwall gaset,  
Hag e fellfe...

Harluet 'oent da gentan er mez ar parrojo;  
Renkout kuitat ho denved, renkout koll ho lec'hio  
Azo bet, ma broiz ker, derou ho holl dihet  
Hag e fellfe...

Kaset 'zo bet war-n-ezhe archerien d'o c'hemer,  
Evit petore abek? Netra ne lavarer  
Balamour ma oa gant-he ar gwir fe difennet,  
Hag e fellfe...

Bet int evel hor Zalver, stlejet dre ar ruo  
Gand ar iuzevien neve, karget a salmenno,  
Ar gristenien a skuille daero ouz ho gwelet,  
Hag e fellfe...

Kalon ! c'hoaz 'zo eunn emgann, kalon beteg ar penn ;  
E kastel Brest a zo bet niver a veleien  
Hag a zo bet gand enor e Spagn digemeret ;  
Hag e fellfe...

Holl Eskeb Spagn ha Bro-C'ball, evel ann Tad santel  
A gleofac'h o prezegin dre holl a vouez huel,  
Enep lezenno neve 'zo aman embannet,  
Hag e fellfe...

A-unan eman gant-he ann holl gatoliked,  
Dialluz ez eo a grenn e vent holl faziet,  
Ann Iliz santel drei-z-he a deu d'hor c'helenni ;  
Hag e fellfe d'ec'h prezek n'euz ket a neventi.

Kalz all euz ar veleien ho devoa *sermantet*,  
Ho deuz gant vuelled vraz anzavet ho sec'hed  
Distroet int ouz Doue, diskanet ho fazi  
Hag e fellfe...

C'houi, *Intrued* miliget, a dlefe krenn heulian  
Ar skouer ho deuz bet roet o tont da ziskanen,  
Bet keuziek da vezan deut kement da bennadi,  
Hag anzavet gant kalon 'zo kalz a neventi.



Ar Skritur sakr a gemenn enorin ar Roue,  
Rag ann holl c'halloud en deuz a zo digant Doue,  
Loiz C'houezek d'ar chafod gant he bobl 'zo stejet,  
Hag e fellfe...

Pep seurt enor a zouger d'a eur blanten dero,  
Hag ar groaz e pehini ez eo Jezuz maro  
A zo dre holl war ann hent diskaret ha toret,  
Hag e fellfe...

Lezel hep sentin ouz den, ha p'en em zispac'her,  
A zo, herve al Lezen, ar gwellan da ober,  
Kent ar *Revolusion*, ze a oa tamallet,  
Hag e fellfe...

Daskor he dra da Sesar a oa kent al Lezen,  
Ha breman o skoazellan 'zo et kalz da beorien;  
Pemp kant skoed gle 'zo peet gand eur palevarz ed,  
Hag e fellfe...

Enn amzer-man, ma Doue, gwastan, laerez mado  
Ha pep seurt fallagriez 'zo herve ar reizio :  
Ar Barner a c'houlo kont, eunn de, digan-imp-ni,  
Hag e c'hanzafor neuze 'oe kalz a neventi.

Iliz Jezuz ma Zalver, ne fazio birvikenn,  
Pe lavar 'zo neventi n'euz ezomm netra ken,  
Kouskoude tud dic'houvez, hep studi, hep spered  
A fell d'ez-he c'hoaz prezek n'euz neventi e bed.

Digorit ho daoulagad, ma Doue, d'ar re zall  
Hag enn abeg d'ar re vad distolit ar re fall,  
Gret eur zel a drugare war hoc'h holl vugale  
Pere a c'houzanv kement evit difenn ar Fe.

Gret d'imp ar c'bras da vezan feal e peb amzer,  
D'ann Iliz, pried Jezuz, hag ive hor mamm ger,  
Eur vamm eo deuz ar gwellan, sentomp ouz he c'homzo  
Hag e vefomp evuruz da vikenn enn envo.

---

— SKLERIDIGEZ. —

E miz Mezeven, 1792, e oe sanket eur blanten derv, e kreiz pep kear hag e kreiz pep bourc'h : war he beg e vije eur boned ruz. Enn dro d'ar blanten-ze, galvet *Gwezen al Liberte*, en em zastume ar *sitoianed* vad, evit ebatal ha kana sonion ann *Nasion*, evel ivez evit toui difenn *al Liberte* beteg ar maro. Kalz euz ar plantennou-ze a c'hrisiennaz, ha petra bennak ma vijent diveget evit ho c'huruni gand ar *boned ruz*, e weler c'hoaz meur a hini krog ha stard mad enn ho zao. Gallout a raenn henvel kalz a barresion e pere am euz gwelet euz anezho : dre holl ez int *teillet* euz ar gwella.

O *Gwezen al Liberte!*

Aboue ma out bet plantet e bro ar C'hallaoued,  
Eo deraouet ho dizeur hag ez int chadennet.

— Ar ganaouen a zo bet roet d'in, e 1841, gand ann  
Aotrou Kaer, persoun e Plouvorn, tost da Castel-Paol.



o III XI. III o

## PREZEGEN

E TRE EUR BUGEL HAG EUNN DOKTOR NASIONAL

(IEZ KERNE.)

*Ann Doktor.* Petra ez eo ann *Nasion*?

*Ar Bugel.* Eur ger braz hep na lost na penn.

*D.* Petra 'ar *Constitution*?

*B.* Eur bern lezennou digempenn.

*D.* Blasfemi a rez, va bugel!

*B.* O! ne rann ket, Doktor santel.

*D.* Hogen va selaou eunn nebeut.

*B.* Komzit, mar kirit, ouc'h va skeud.

*D.* Ar skiant vad a ren ann den;

*B.* Ia barz enn amzer n'ema ken.

*D.* Hag enn amzer breman ive,

*B.* Ia, paneved ann *Asamble*.

*D.* Ann *Asamble* 'zo gwiziek;

*B.* Ma ne renkfe nemet prezek.

*D.* Gwelout 'ri dre al lezennou.

*B.* Ne d-int holl nemet zotoniou.

*D.* Disk-ho abarz ho gogea,

*B.* Reuz ar hobl hen disk a vrema.

*D.* Ar hobl 'vo euruz hep dale.

*B.* Pell 'zo a lerer kement-se.

*D.* Red eo gortoz gand habaskded :

*B.* Me wel n'euz louzou all e bed.

*D.* Al *Liberte* a zo douget,

*B.* Hag ann dud vad 'zo chadennet.

*D.* Mar karjent beza great ho Le,

*B.* Ho dije diroget Doue.

*D.* Al Le ne d-eo ket eur pec'hed,

*B.* P'a ve gant reiz gourc'hemennet.

*D.* Ann *Nasion* her gourc'hemenn :

*B.* Hag ann Iliz 'eo hen difenn.

*D.* Kalz belcien ho deuz touet,

*B.* Re, siouaz! a zo bet touellet.

*D.* Ar re all a douo ive;

*B.* Ne raint bikenn gant gras Doue.

*D.* Ar Pab na zifenn ket al Le.

*B.* Pell 'zo 'c'houzoc'h-hu kement-se?

*D.* Klevet am boa hel lavaret,

*B.* Me doufe n'hoc'h euz ket kredet.

*D.* Ar Pab a hell beza faziet,

*B.* Hogen ar gwir Iliz n'hell ket.

*D.* Kas da wir ar pecz 't'euz laret.

*B.* Anad a rinn d'ec'h, da welet,

Ha ma lennet ann *Aviel*

E kefet enn-ha va c'hentel :

Ar Pab a zo e leac'h sant Per,

Enn douar, vikel hor Zalver,



Ar penn euz ann Iliz gwirion  
Ha war eunn dro, Eskob a Rom ;  
Sant Per oa Prins ann Ebestel  
Ar Pab Prins ann Eskeb santel :  
Ann enor d'ez-han a zouger  
Evel ma touget da sant Per.  
Beli 'n deuz war ann dud reizet,  
War Bastored, kouls war zenved.  
D'ez-han eo basta ann Iliz  
Euz a Bastored, enn he c'hiz,  
Ar re n'en deuz ket digaset  
A zo hep mar falz Bastored,  
Distaget int euz ar wezen,  
Sec'hi 'raint enn dewalijen,  
Hag hevel ouc'h brankou troc'het  
Ne zougint pelloc'h frouez e bed :  
D'ar Pab eo c'hoaz da ziskoueza  
Petra dleomp-ni da heulia :  
Ann holl draou euz a galz a bouez  
'Zo galvet d'he varnidigez :  
Pa gomz enn hano ann Iliz  
E tleomp plega, ma broiz,  
Heul ar pez en deuz di kleriet  
Hep kaout doan da veza touellet.  
N'hell ket ann Iliz katolik  
Aotrea eur Pab chismatik,  
Rag ann Iliz, a ro bepred  
D'imp ar wirionez da welet.

P'en deuz aotreet hor Zalver  
He skoazella e pep amzer.  
Na da biou, her gwelit brema  
Ez eo bet great ar gwestl kaer-ma?  
-Ne d-eo ket great d'ar Rouaned,  
Na gwir, d'ar veleien douet ;  
Hogen hep ken d'ann Eskibien  
A zo barz ann Iliz Romen,  
Da bere eo reiza ar Feiz  
Hag holl vugale ann Iliz :  
Unan bennag eveuz ho zouez  
A hell fazia d'ar wirionez,  
Evel ive m'en em gavaz  
E skol Jezuz-Krist eur Judaz.  
Hogen ar rumm brasa bikenn  
Ne droint na feiz na Lezen :  
Chetu eno holl ar reiziou  
Ho deuz disket d'imp hon tadou,  
Pere, e gwir, n'int ket daonet  
D'ho beza penn-da-benn heuliet.  
Dishevel ez int e pep giz  
Euz reiziou nevez hoc'h Iliz.  
Digant piou, leverit d'in  
Ekspilly, Person Sant-Martin  
En deuz-han bet beli gwirion  
War Dreger, Kemper ha Leon?  
Dibabet eo dre *win-ardant*,  
Pell e pado, mar be arc'hant :



Sakret ez eo bet, na gant piou?  
Gand Eskeb hep Eskoptiou,  
Ha dre n'ho doa beli e-bed  
D'Ekspilly n'ho deuz ket roet :  
Rag eur wirionez anad eo  
Hag ann Nasion hen anzaos ;  
Euz ar sac'h na heller tenna  
Nemed ar pezh a ve enn-ha :  
Skler e rann d'e-hoc'h da welet  
N'euz Ekspilly ha kenseurted,  
Hep arvar, nep beli gwirion  
Nemet digand ann *Nasion* :  
Pa n'euz ket beli Ekspilly  
D'he bersoned na hell ket rei.  
Holl int *Intru*, falz bastored  
Hag euz ann Iliz distaget.

- D.* Hogen piou 'renker da gredi  
Ar Pab, pe gentoc'h Ekspilly?  
*B.* Renkout a ra ar gristenien  
Kredi d'ar Pab, d'ann Ezkibien  
D'ann Doktored, d'ar Bersoned  
Ha d'ann holl dud reiz euz ar bed.  
*D.* Me well e t'euz c'hoant da gredi  
Eo ann Nasion a fazi :  
Strivomp c'hoaz hep fistill e bed  
War ar pezh e t'euz lavaret  
Ann Eskibien, 'vel ma welann  
A zo holl gan-e-omp a-unan.

- B.* Kant pemp ha tregont int jedet :  
Pevar hep ken ho deuz touet.  
*D.* Ann niver braz 'hell kaout fazi  
*B.* Ezomm braz hoc'h euz d'her c'hredi.  
*D.* Me gred ar pezh a gavann mad.  
*B.* Kredi ar Pab 'zo dereat.  
*D.* Gwell eo kredi d'ann *Nasion*,  
*B.* Ha gwelloc'h d'ar Relijion.  
*D.* Penaoz, n'eo ket bet distroet !  
*B.* Nan 'vid ar re n'ho devoa ket.  
*D.* Flemma a rez va c'houstians :  
*B.* Morc'heduz braz ez eo michans.  
*D.* Bep sul ez ann d'ann oferen :  
*B.* Me n'hellann ket mont d'ez-hi ken.  
*D.* Ma teufez d'ann Iliz parrouz ?  
*B.* Eno ann dud a zo galouz.  
*D.* Ann ofern 'zo hevelep tra :  
*B.* N'eo ket : Ann *Nasion* hi gra.  
*D.* Perak tremen hep mont d'ez-hi  
*B.* Enn abek n'houllann ket pec'hi.  
*D.* Na levezet man vad e bed.  
*B.* Ann Iliz deuz hen diskleriet.  
*D.* Petra 'deuz ann Iliz disket ?  
*B.* Tec'hel euz ar Chismatiked.  
*D.* Piou 'zo chismatik ; m'her gouleunn ?  
*B.* Kemend a zilez he c'hreden.  
*D.* N'ez euz hep ezomm a aotre.  
*B.* Houn-nez eo seiz ann dud hiric :



- D.* Hag ivez gwir feiz ann Iliz,  
*B.* Ia, mar hon euz daou gatekiz.  
*D.* Pennadet ez out, va bugel;  
*B.* Va c'hredenn a zeu a huel.  
*D.* M'az pije gwelet ar stadou?  
*B.* Em bije gwelet burzudou.  
*D.* Anavout rez hon Doktored.  
*B.* Evel Kartouch (1), ez int brudet.  
*D.* Gout a rez buez Mirabo?  
*B.* Karget ez eo a draon brao.  
*D.* Komz d'in eunn nebeud anez-ha :  
*B.* Ho lakat 'ra fenn da grenna.  
Beza ez oa eur Provansal,  
Ne oe den falloc'h e Bro-C'hall,  
Na biskoaz ne zo bet ganet  
Den ker gadal e bro ebed.  
*D.* M'a ve kredet da lavarou  
Hor lezennou 'zo holl gwallou,  
Hag a fellfe d'ann Nasion  
Lakat ac'hanomp da Saozon.  
*B.* Kaer, Aotrou, deut eo gan-e-hoc'h,  
Ha me ia d'hen rei da wir d'hoc'h :  
E mil pemp kant tregont ha tri,  
Roue Bro-Zaoz, henvet Herri,  
A zilezaz ar Pab a grenn

(1) Kartouch a oa eur laer brudet e Bro-C'hall, dre he  
laeronsiou braz.

- 'N em lakaz Pab neuze-souden,  
A roaz urz d'ann Eskibien  
Kerkouls ha d'ann holl veleien  
D'her sellout vel Pab 'n he garter.  
Kement zinac'haz hen ober,  
A oe hep dale heskinet  
Hag euz ho lec'hio harluet.  
Kemeret 'oe enn ho goude  
Touerien direiz, dizoue  
Pere na rejont van ebed  
Evit beza anaouet.  
Chetu aze ar wirionez  
Euz pez 'zo c'hoarvezet 'n ho touez.  
Dall-pik ez-oc'h ma na welet  
Kement am euz d'ec'h lavaret :  
Ar veleien 'c'h euz harluet  
Ha goude ze c'hoaz heskinet ;  
Dalchet 'oant da c'houm er parkou,  
A wechou all er grignoliou ;  
Ped a zo bet kavet kuzet,  
O vervel gant naon ha sec'hed?  
Kant pemp e kastel Brest paket  
Kant ha kant gwec'h 'zo bet semplet,  
Pa glevent 'krial war ho zro  
Kristenien 'vel bleizi garo :  
Ar c'hlub en devoa lavaret  
Ho dibri p'a vijent rostet.  
*D.* Tao d'in gand ar Relijion



Ha heul brema ann Nasion :  
 Ped euz da rumm 'zo frealzet  
 Dre 'r lezennou e deuz douget ?

B. Ha pa rafe c'hoaz mil lezen  
 Ne vinn ket aze gwell bikenn,  
 Rak *Asignalou* glaz ha du,  
 'Zo mouneiz fall, m'hel lar d'e-hoc'h-hu.

— SKLERIDIGEZ. —

Ann Aotron Ekspilly, persoun Sant-Martin, e Montroulez, a oe, enn divez miz Here, 1790, dibabet evit Eskob a Gemper; gant pennou ar vro. Eunn nebeut blavesiou goude e kemeraz, gant nao war-n-ugent all, bleuadur *departamant ar Finister*: oveza ma tremenent holl evit dispac'herien *re vad*, Breujou Brest a varnaz c'houe'h war-n-ugent anezho d'ar maro: Ekspilly en em gavaz euz ann niver-ze; dibennet a oent e Brest, war Leur *Gounid-ar-Bobl*, enn daou war-n-ugen a viz Mae, 1794. — War hed al Leur-ze, an euz ivez bet skrivet ar brezege-ma: roet ez eo bet d'in gant tud Kastel ha re ar Madek: an dud vad-ze ho deuz c'hoaz desket d'in meur a dra, tremenet war Leur *Gounid-ar-Bobl* hag ebarz Kastel Brest.

*Dirktoer ar Finister* a eure, enn deiz kenta a viz Even, 1794, dastumi e Manati Karmez-Brest, dek belek ha tri-ugent, euz a Eskoptiou Kemper, Leon ha Treger: enn ho zonez a oa ann Tad Elise, manac'h Karmez, hag ann Aotrounez Skoazen, persoun Sant-Per-Kilbignon; — Koroller, persoun Sant-Vaze-Kemper, ha Jakez, unan euz he gureed. Eul lizer skrivet gant Eskob Leon d'ann *Asamble Nasional*, a reaz ho

lakaat e frankiz, er bevar war-n-ugent a viz Gwengolo. — A benn daou viz goude, e oe dastumet c'hoaz e Kastel Brest, ouc'h-penn hanter kant belek, e touez pere en em gave ann Aotrounez Bihan, persoun Braspartz hag ar Paj, he gure; — ar Ru, persoun Sant-Salver Brest, ha pemp belek all, ivez euz a Vrest; — ann Noanez, persoun Sant-Melan, hag ar Bretón, kure e Sant-Martin, ho daou euz a Vontroulez; — Boissier; — ann Tad Lannurien, *Jesuit*; — Autret, *Eudist*; — Larmor, *Recolet*, ha Liart, kentelie e seminer Leon.

Ann niver euz ar brizoumerien-ma a icia bemdez wargresk: evel-se, ebarz divez miz Coucre, 1792, en em gave e Kastel Brest, pemp belek ha kant; darn a lavar zoken e oa eno tri c'hant nao ha tri-ugent. — Euz ar pemp ha kant eo e komz ar *Brezege*.





## BELEIEN

### DASTUMET ER BAC'HIOU.

Eunn nebeut goude ma oa bet dastumet e Kastel Brest, ar veleien a bere e zo komzet, e oe c'hoaz dastumet eno c'houec'h belek all euz a Vontroulez : ann Aotrounez ar Mevel, al Lagadek, Laviék, Nedelek, Saillard ha Ballai : ar pevar diveza-ma a oa menec'h : kalz all a veleien a oe ivez dastumet e Kemper; enn ho zouez e oa ann Aotrounez Dularentz ha Gwesdon, vikeled vraz a Iliz-veur Kemper.

Departamant ar Morbihan a reaz evel hini ar Finister : e tro hanter ar bloaz 1791, e tastumaz kalz a veleien *goz*, e kre Port-Loeiz : eur bloaz goude, e tougaz eul lezen ma vije dastumet eno, ann holl veleien a zinac'he al Le : great a oe evel hu war-ñezho ha kalz a oe paket : euz ann niver-ze en em gavaz ann Aotrounez Grinn, rener skol-vraz Gwened, hag ar Gwennek, persoun ann Iliz-veur.

Departamant kostez-ann-Nord ne fellaz ket d'ezhan chom warlerc'h ann daou all : e miz C'houevrer, 1792, e c'hourc'hemennaz ma vije paket e Kastel Dinan ann holl veleien a vije kemeret enn he zalc'h :

eur seiz miz goude e lestraz eiz ha tregont euz anezho evit ho c'has da Jerzea.

Bete-henn ar veleien a oa kaset ha digaset euz ann eil ti d'egile : ne oa ket a brizounion dileuret evit-ho : e tro divez 1792, pep departamant en devoe he brizoun evit dastum he veleien : hini Kostez-ann-Nord a lekeaz he re el leandi Mont-Bareil, e Sant-Briek, ha nebeut goude, enn abatti Karmez, e Gwengamp : hini ar Finister a lekeaz he re enn abatti Kapusined-Audiern, hag hini rr Morbihan a lekeaz he re e ti ar retred hag enn hini ar Minic'hi, pe a-zigemer evit ar merc'hed, e Gwened, ha goude, e Kastel Josselin.

E miz Gwengolo, 1792, kalz a veleien euz a gostez-ann-Nord, en em lestraz e Lege-Sant-Briek, evit monet da Vro-Zaoz : pa oant o tec'het, ann Aotrou Mase, persoun Sant-Stefan, e Plumieu, a oe skoet maro mik gant drouk-ar-moug : ar re all a verdeaz e treze Jerzea; ha chetu ma oent harzet gand eur fourgaden c'hall : houman, evel pan e divije ket gwezet evit petra e kuitaent ar vro, ho rediaz da zistrei da Sant-Briek. Eno e oent dastumet el leandi Mont-Bareil ha kaset goude da Wengamp. Ann niver euz ar veleien dastumet ebarz ar bac'h-ma, a zavaz bete kant pemzek : chetu ar pezh am euz disquet gant ann Aotrou Lannier, bet ivez dastumet eno. Da hanter Meurz, 1794, c'houec'h-war-n-ugent euz ar veleien-ma, a oe ambrouget d'ann Naoned, evit ho c'has da Rochefort.



Kalz a veleien a varvaz er bac'hion a bere a zo komzet. Evel-se e 1792, ann Aotrounez Korgu, belek a Verdriknak, a varvaz e Dinan; — Riou, persoun Sant-Hernin hag ar Riouzik, belek enn Ilizeur Kemper, a varvaz e ti-kear Kemper; — Robien, vikel-vraz e Sant-Briek, a varvaz e Mont-Barreil; — Lannurien, Jezuist; — Briche Keramek, chaloni a Lezneven; — Jakobin, belek e Brest; — Leon, kure e Gwinevez, a varvaz ho fevar e Audiern; — Jezekel, belek euz a Wiklan, ha Gallou euz a Sant-Fregan a varvaz enn ho bac'h ho-unan. E 1793, Joli, persoun Gwisseni, ha tri belek all euz a Leon, a varvaz e Audiern. E 1797, ann tad Robert, persoun Stol, e tu Sant-Brick, a varvaz e Gwengamp.

De Lanlai, persoun Ploujan, a varvaz e prizonn Sant-Lo, enn Normandi: De Juvigne, arriagon a Wened, a varvaz e Spa, e tu Licj, e 1793.



## ALI

DA EUR PERSOUN TOUER HA KRIZ MEURBED.

— 1792 —

KENTEL.

Kalz euz ar bersouned nevez a rea evel gwechall ann Donatisted: harlua'a reant ar veleien goz, ha kemer dre nerz ho ziez hag ho ilizou. Paotred vad Distrik Lesneven a icaz da gas ar Gall, da bersoun da barrez Plongerue; kement-ma a oa eur zulvez vintin, da hanter miz Mae, 1791: diskenn a rejont enn eunn hostaleri, savet mad e oa er voure'h. Pa oa arru heur ann Oferen-Bred, ann *Intru* a zavaz evit mont d'be lavarout: aozet a oa pep tra evit ar zakrifiz, mes ne oa kristen enn iliz: ar *memprou municipal* a oa zoken kollet. Ar paour-keaz Gall, divare'het dre ann dilez-ze, a lezaz he oferen war he c'hement all, hag en em dennaz gant he dud. Eunn nebent goude, e teuaz da gemer he garg, ha gant-han c'houec'h kant soudard, ha pevar c'hanol. Meur a *Intru* all a reaz evel-d-han.

Ar bersouned nevez a gemere ivez pep seurt troiou fall evit redia ann dud vad da zont d'ho ofisou: a-wec'hou e kaseñt tud armet d'ho c'here'hat; a-wec'hon all e reant ho di-



gas war azened, ha ze a-enep, ha lost ann azen enn ho dourn, e giz d'a eur c'habestr : rei a reant c'hoaz ar Zakramanchou dre redi. E parrez Plankoet, enn eskopti Sant-Briek, ar persoun nevez a ieaz tre, gant pemp soudard, e kampr ar persoun koz pehini a oa enn he dremenvan : eret a oe ann dud a oa oc'h hen prederia, hag ann *Intru* en em aoz da rei d'ez-han ar Zakramanchou diveza. Ann Aotrou Chenee (hema a oa hano ar persoun koz), a sav he zourn, skournet gand ar maro, evit pellaat eolierez ann Nounen : krosvola a ra ez eo kement-se eur zaotrerez ; mes evit-se ar persoun nevez a zalc'h d'hen noui. — Dre holl, e welet euz ann oberiou fall ze, ha dre holl, personned ann *Nasion*, a lekee ar c'heflusk hag ann dizunvaniez, Ar gerent a zeue evel ermezidi ann eil evit egile : ar vignouned a save glazentez e tre-z-ho ; tud a bell-zo gant ho mistri, a oa rediet d'ho c'huitaat : beza a oe zoken bugale hag a oe rediet da dec'het euz ar gear evit mirout ho c'houstians e peoc'h : devezou-rien a golle ho labour, ha labourerien ho gragez, abalamour d'ho dinac'h da vont da gavout ar bersonned nevez : ar re ma ho diskulic d'ar *Batrioted*, hag a lake ho heskina, ho bac'hia hag aliez ho c'has d'ar maro. — Evit mirout ouc'h kement-man holl, ar veleien goz a bede evit ann *Intrued* keaz-ze, evit ho c'hentelia hag ho lakaat da zistrei d'ar gwir hent. Chetu aman eur beden great da unan anezho.



❖❖❖ XII. ❖❖❖

## EUR PERSOUN KOZ

DA EUR PERSOUN NEVÉZ.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Lokrist ann izelved*. — 35.

Poelet-hu, Gassel (1), mar gellet  
Ann droug a ret e Plougaret,  
Saotran ann holl Sakramancho,  
Ha glac'harin ann Ineo.

Ouzpenn m'hoc'h euz kalz diskuliet,  
Darn anezhe 'zo bet gwanet  
Dre ar bac'h, ha dre ann armo,  
Pe ne gredent d'ho kentelio.

Mado darn ho'ch euz kemeret,  
Hep konsians na lealded,  
N'ez euz men ebarz enn ho ti  
Ne ra d'ec'h bemde kri war gri.

(1) Gassel a zo eur falz hano roet ama d'ann *Intru*.



Harluet hoc'h euz, ma mignon,  
Ar veleien hag ar Person,  
Hep gwir, a barroz Plouaret,  
Ar bobl-ze a zo ho denved.

Na hellet gouzav beleien  
A zo katolik ha romen,  
Pe na deuont da c'hrataat  
Ho Le hag ho fazi, timad.

Hoc'h Eskob hoc'h euz dilezet  
A zo gand ar Pab bet savet,  
Nemed *Intru* n'hellfac'h bezan  
Pe n'emoc'h ket laket gant-han.

Ar Pab hoc'h euz ive nac'het  
Pa hoc'h euz-han bet dilezet  
'Barz ann treo a Relijion  
'Vit heul Lezen ann *Nasion*.

Jezuz-Krist, e nac'het ouzpenn,  
En deuz laket ar Pab da benn  
Euz ann Iliz ar penn gweluz  
Enn he lec'h-hen, penn diweluz.

Leret pedenno, mar keret,  
'Vid ar Pab n'ho anzavo ket,  
Doue a damall penn-da-bean  
Ho pedenno hag ho Lezen.

Eur beleg er mez ann Iliz,  
Evel ma oc'h, n'eo ked iskiz,  
E kouefe enn dewalijen  
Pa bella deuz ar sklerijen.

Pe n'hoc'h euz na gwir, na doare  
Da wellaat klenved ann Ine,  
Tavet de goll ann Ineo,  
Tavet hoc'h holl saotrerezo.

Eunn toullad tud hoc'h euz dallet,  
Hag ho zouellan a ret bepred,  
Komzo Doue a aloubet  
'Vel ma ra ar falz profeded.

C'houi 'dlefe goulenn trugare,  
Ouz ann dud hoc'h euz, hep true,  
Er mez ann Iliz dibenchet  
'Vel me ra ar blei d'ann denved.

C'houi a nevea ar gloasio  
A Jezuz-Krist dre ho fazio,  
Kel liez ma zakramantet,  
Ha ma ret karg beleg e bed.

Krenit gand ann aon, ma mignon,  
Euz ar galeder a galon,  
Hag ho pet spont, evel Judaz  
Ne gwefac'h enn eunn diskred vraz.



Kaer 'zo ober, red 'vo mervel,  
Pe garo Doue hor gervel,  
Pebez anken war ho maro,  
Pa welfot skler hoc'h holl wallo.

Doue hoc'h euz krenn dilezet  
Ha Doue c'hoaz n'ho tilez ket,  
Seul vu eo braz he vadelez  
Seul vraz eo ho fallagriez.

Pred eo d'ec'h selao mouez Doue,  
Kaout true ouz hoc'h Ine,  
Hoc'h El mad ne dav d'ho kelen,  
Da gemer hent ar binijen.

Hogen da gentan e ve red  
Dilezel Iliz Plouaret,  
Goude dislavaret ho Le,  
Hag ouz ann holl goul trugare.

Red eo anaout, ma mignon,  
Augustin hoc'h Eskob gwirion,  
Augustin Eskob a Dreger,  
Bremant koulz ha pa oa er ger.

Hen-nez eo ho mestr hag ho tad,  
Hen-nez ho kelenno er-fad,  
Neuze a leverfot gant joa,  
*Jakob intru*, n'oc'h d'in netra,

Ar Pab a Rom, ho kemero  
Dre Augustin, ho kwir otro,  
Chetu aze ann hent hep ken  
D'ec'h da zeraou ho pinijen.

Galvit ar c'hras, hag ho po-hi,  
Jezuz-Krist ne zinac'h hini,  
Pa ve trugare goulennet  
Gand eur galon peur-c'hlaç'haret.

Doue a vo 'vel-ze meulet  
O kat ann danvad dianket;  
Ann Iliz a zigemero  
Ho pinijen hag ho taero.

---

— SKLERIDIGEZ. —

Ar Persoun *Intru* a behini a zo komzet, ne dennaz tal-  
voudegez ebet euz ar gentel roet ama d'ezhan. Heskina a  
a enre evel kent, ar re euz he vreurdeur beleien a joumaz  
e Plouaret, goude beza dinac'het al Le, evel ivez ann dud  
vad pere ho digemere enn ho ziez. Chetu eta ma teuz ar  
Chouaned, cunn nebeut blavesiou goude, da rei ivez d'ez-  
han kentel, mes kentel euz eur giz all.

Parrez Plouaret a oa gwechall unan euz ar c'haera parre-  
siou a Eskopti Treger, evel ma'z eo ivez hirio, unan euz ar re  
genta, pe zoken ar genta a Eskopti Sant-Briek. Er barrez-ze  
evel ebarz ar re all, en em gave ivez cunn nebeut *Sitoianed*



vad pere ne zal'hent da lezen ebed; ar Persoun dreist ull a oa kriz braz. War ze e teuaz, eunn nozvez, eur vanden Chouaned da skolia ar baotred-man : arruout a rejont er vourc'h, eunn nebeut goude ma oa skoet ann hanter-noz, hag hi didrouz braz : mont a reont da gerc'hat ar sagrist da zont gant-ho da c'houlenn digor da di ar Persoun, ha ze war zigare her gervel da eunn den klan. Ar sagrist a grene he zorn ha ne skoaz ket gwall gre war ann or : he galoun a grene ivez enn he greiz, ha ne hellaz ket gervel kaer : ar Persoun her c'hlevaz koulskoude, hag a welaz dre he vouez e oa arru kas : ne choumaz ket da varc'hata hag e lammaz enn he roched er meaz ann ti, dre eur prenestr a-ziadre : goude en em dennaz sioulik enn eur c'hraou moc'h a oa er porz-vez.

Ar Chouaned o welout ne zigoret ket d'ezho, a c'hrounnaz ann ti, hag a loskaz enn-han, dre ar prenestrou, eunn nebeut tennou, a here e weler c'hoaz hirio bollodou ebarz treustou ar gampr kreiz : goude e tivarc'hont ann doriou, hag o veza eat tre enn ti, e furchout dre holl : pa weljont e oa tec'het ar Persoun, en em lekejont, evit en em zie'bla-c'hari, da eva eur banné gwin d'he iec'hed. — E keit-ze ar paour-keaz Persoun, pehini a gleve ann tennou, hag ann trouz a oa enn he di, a oa berr braz war-n-ezhan enn he graou-moc'h; ha ker berr ken na wie da be sant en em westla : biskoaz, hep mar, ne oe berroc'h war ann dud vad en devao lekeat heskina : evit barr a zizeur, ar moc'h enn touez pere e oa en em dennet, a doc'he, a sore'he hag a hoc'he kement, ma teuaz doan d'ezhan ne vije er giz-ze dizoloet : chetu eta ma kredaz e oa mad tec'hel ac'hano, hag e tec'haz. Treuzi a eure eunn nebeut garzadou lann ha drez, hag hep choum da glask enn ho ann toullou skleara : me hel lavar d'ehoc'h n'en divije den ho zrenzet ker buan. Hen he-unan ne vije ket zoken eat buanoc'h dre-z-ho, hag e vije bet o redek ann Aotrounez Ferkok, ar lann, ar C'herrek, pe eunn

all bennak euz ar veleien goz a oa kuzet e Plouaret. En em guza a eure neuze, dindan bolz eur pountik mean azo e traon ar vourc'h, war hent ar C'hoz-Varc'had : eno e tremenaz ar pez a joume euz ann noz, enn eur c'hoezen ar vrasa ; mes koulskoude hep krena gant ann *dersien domm* : chetu aze da viana ar pez a zo bet lavaret d'in. Pa dostaaz ann deiz, e tech'az a c'hano, hag hen evel eunn hanter dall ; ne wie pelec'h lammet. Eunn artisan pleg, o vonet d'he zevez, a arnuaz gant-han, hag evel ma oa c'hoaz *e tre hi ha blei*, pe *gad ha konikl*, e kredaz o welout ann den gwen-ze, gwelout eunn den maro : m'en em lekeaz eta d'her c'hroaza ha d'en em groaza he-unan. Evel ma tostae bepred ann Teuz, e loskaz ar c'hemenec eur griaden, hag e savaz, evit her skei eur pen-nad baz a zouge enn he zourn, evel ma 'z eo ar c'hiz d'ann dud-ma dougen, pa 'z eont d'ho labour. Chetu ar persoun keaz da redek a nevez a dreuz d'ar gersier : ama, evit gwir ne oa ket a Chouaned ; mes ar c'hemenec-ma a oa bet heskinet dre he urz, ha ma en divije hen anavezet, en divije, divorc'hed braz, great d'ez haneunn tamm larda. Enn divez, goude beza treuzet meur a c'barzad lann, penn-boellet diwar ann eil kleuz enn eil douvez d'eben, mes koulskoude hep terri he zivisker, ar paour den a zavaz e grignol eur vilin, hag evel ma oa arru ann deiz e oe neuze anavezet. Tnd ar vilin ho devoa anaoudegez mad euz he grideri e kenver ar veleien goz hag ann dud feal euz ar barrez, mes evit-se ne c'houlennjont ket rei drouk evit drouk, hag e rojont d'ezhan dillad d'en em c'holoi. Pa oa great gant-han eunn tomm, tremenet he gren, ha klevet ivez ne oa ken a Chouaned er vourc'h, e tistroaz da welout petra a oa bet a nevez enn he di. Kavont a eure ann doriou divarc'het, hag eunn nebeut boutailadou gwin skarzet. — Kuit a oe gant kement-ze ; ne arnuaz gant-han, evel ma zogwélet, nemed eunn tamm berr-alan, eur rog bennak o treuzi al lann hag ann drez, hag eur c'hoezen pe-



hini a oe a beb-cil, ha tomm ha ien : hervez darn, e oe ive koulskoude raouiet e pad eunn nebeut sizunioù, hag ann dra, evit gwir, a hell beza arruet ; mes enn divez, chetu ann holl. — Mear Plouaret hag eur c'here kamm pe dort, pelhini a choume enn eur penn euz a di ar persoun, ne oent ket kuit gant ker koulz mare'had : ar re-ma a oe, enn noz-se, fuzillet ho daou gant ar Chouaned. — Goude ann tamm kentel-ma, ann aotrou persoun hag ar *Sitoianed* vad all euz a Blouaret, a *lekeaz katz a zour enn ho gwin*.



## ALIOU AR ZALVER.

— 1792 —

### KENTEL.

Ann Abostol sant Paol, o komz euz ar garantez kristen, a lavar anezhi : *Hegarad eo, habask eo* ; hag evit gwir, digemer a ra gant madelez ar re ho denz he c'holllet, ho gouzant a ra gant habaskded, ho c'helenni a ra, pidi a ra evit ho, ha n'euz na tu na tro ha ne gemer evit ho gonnid a nevez. Ama diar aokhe denz roet he c'hentel, brema e laka he Mestr mad da rei ivez he hini.

Eur c'hrac'h a zri bloaz ha pevar-ugent, hanvet Mari-Jann ar Gwenn, euz a Blouaret, hag eur vere'h d'ezhi, hoalet ivez a dri-ugent vloaz, ho deuz enn eur neza, roet d'in ann diviz a zo ama goude. Eur blijadur a oa klevout ann diou hini gozma o kana ; boud ho c'hirri mesket gant fringol ho mouesioù a rea eur muzik ar c'haera : ar vamm a gentelie evel ar Zalver, hag ar vere'h a rea goulennoù digant-hi evel ar c'hristen.





❖❖❖ XIII. ❖❖❖

JEZUZ HAG EUR C'HRISTEN DIFAZIET.

(IEZ KERNE.)

WAR DON : *Chetu me digouet ma mignon.* — 11.

AR C'HRISTEN.

Ma c'halon a zo glac'haret  
Ha war cunn dro gwall ankeniet,  
Ma stad 'zo meurbed truezuz :  
Deut d'am frealzi, ma Jezuz.

JEZUZ.

Deut da zilezel ho trougiez,  
Ha da bedi ma madelez ;  
Grit pinijen euz ho pec'hed,  
Hag en em gefet frealzet.

AR C'HRISTEN.

Allaz ! n'hellann ket anavout  
Ann abeg evez ma hirvoud ;  
Reit d'in, me ho ped, sklerijen  
Ha me heulio ho kourc'hemenn.

JEZUZ.

Ho torfed a zo braz meurbed ;  
Goude beza ma disprizet,  
Pa ez oc'h deut da guitaat  
Ma Iliz, ha goude ho tad.

AR C'HRISTEN.

E petra 'm euz ho tisprizet ?  
Penez 'm euz-me ho kuitaet ?  
Me am euz bet pleget ato  
Da holl gredennou ar *Gredo*.

JEZUZ.

Disprizet hoc'h euz ma Lezen,  
Dilezet ma gwir veleien,  
Evit fisiout hoc'h Ine  
Da dud dizanzavet gan-e.

AR C'HRISTEN.

Herve al Lezen neve-c'hret  
Hep kaout tamm beli ebed  
E kreder gellout absolvi  
Hag anavout ho komzou c'houi.

JEZUZ.

Gwa ha gwa ! d'ann holl veleien  
A deuio ebarz ar winien



Hep beza euz ma ferz kaset  
Ha gand ann Iliz otreet.

AR C'HRISTEN.

Mes da vihana, ma Doue,  
N'hellint ket daoni ma Ine  
Evit-he 'vezo ar pec'hed  
Rak-ze me n'am euz aon ebed.

JEZUZ.

Ann *Intrued*, o ma bugel,  
'Vel ma welet enn Aviel,  
Pell da ziwall mad ann denved,  
Allaz ! ho gwerz d'ann drouk-spered.

AR C'HRISTEN.

Ha n'ho deuz-hi ket ar veli  
Da ober trugare d'imp-ni  
Pa govesaimp hor pec'hed  
Gand eur galon holl e'hlac'haret.

JEZUZ.

Ne dall netra ho *absolven*  
Nemed enn heur ar marv hep ken,  
Ha c'hoaz pa ne ve ket gallet  
Kovesat d'am gwir vinistred.

AR C'HRISTEN.

Petra 'raio 'ta ar pec'her  
Er peur zilerc'h euz he amzer?  
Hag hen 'chomo hep kovesat  
Ma ne gaf ket eur belek mad ?

JEZUZ.

Ia, red eo : hogen, bugale,  
Fisiet e madelez Doue :  
Ne lezinn ket 'barz ann dilez  
Nep a fisio 'em madelez.

AR C'HRISTEN.

Ha red eo 'vid eunn amzer all  
Lezel ann dleadou paskal,  
Ma ne hell ho kwir vinistred  
Enn amzer ar Pask, hor c'hlevet ?

JEZUZ.

Dindan hoan a bec'hed marvel  
Ez-oc'h endalc'het d'ho lezel,  
N'hellit ober ho tleado  
Hep dont d'am lakat d'ar maro.

AR C'HRISTEN.

Leverit d'in, Salver ar bed,  
Hag hen ez eo ive berzet



Mont d'ho ofern, d'ho gousperou  
Ha kemer lod 'n ho fedennou ?

JEZUZ.

Me 'ro evit mad ma malloz  
D'ez-he, hag ive d'ho bennoz,  
Ha d'ar re pere ho hento,  
Rak-ze n'it ket d'ho ofiso.

AR C'HRISTEN.

Ann Iliz santel kouskoude  
A c'hourc'hemenn d'he bugale,  
Klevout deol ha penn-da-benn  
Bep sul, beh goel ann oferen.

JEZUZ.

Ar gourc'hemenn-ze n'endalc'h ket  
Dont d'ofern ar falz Pastored,  
Rak nep a deu d'ho zakrifiz  
En em zistag deuz ann Iliz.

AR C'HRISTEN.

'Keit ha ma rene ho Lezen,  
E klevenn gant ho peleien  
Penez e renket holl monet  
A bep tri sul, d'ann ofern bred.

JEZUZ.

Gwir eo ; mes neuze e klevet  
Ar Bastored am euz kaset ;  
Ne welet ket ouz ann oter,  
Eul laer, cur bourreo, eunn toueller.

AR C'HRISTEN.

Ar re pere a oa gwechall  
E mesk ar Gristenien skouer fall  
A zeu breman gant douj Doue,  
Da ofiz ar Person neve.

JEZUZ.

Ne vezit ket souezet rak-ze,  
N'ez euz distro ebed enn-he :  
Ho c'halon 'zo dalc'het bepred  
Dindan lasou ann drouk-spered.

AR C'HRISTEN.

Fallout a rer hon dere'hel-ni  
Da vonet gant-he da bedi ;  
Petra a livirimp neuze  
Pen em welimp dalc'het gant-he ?

JEZUZ.

Heulit kentell ma mignoned,  
Ann Ebestel, ar verzered,



Bet gwell gant-he koll ho bue,  
Evit dont da zinac'h ar Fe.

AR C'HRISTEN.

Bemde e lar ann *Douerien*  
Penez e heuliont ho Lezen,  
Hag e sellont ar Pab santel  
Evel ho fenn hag ho vikel.

JEZUZ.

Gant-he holl ez eo disprizet  
Ar veli da sant Per roct,  
D'ar Pabed, ha d'ann Eskibien,  
Er bed war ann oll Gristenien.

AR C'HRISTEN.

Lavaret 'ra ann *Douerien*,  
Eskibien foz ha beleien  
Penez a enep d'ho beli  
Ez int gwir vinistred d'imp-ni.

JEZUZ.

Ze a zo enep d'am c'hentel,  
D'am Iliz, d'ar Skritur santel,  
Ar gredenn-ze 'zo chismatik,  
Direiz, dievez, heretik.

AR C'HRISTEN.

Er giz-ze eta hon toueller,  
Hag a enep d'imp hol laker  
Dilezerien eveuz ar Fe,  
Tud miliget, tud dizoue.

JEZUZ.

M'ho dije ar falz Bastored,  
D'ar Pab euz a Rom, bet pleget  
Ho dije holl, a bell a zo,  
Lezet ar bed, hag ho gwallo.

AR C'HRISTEN.

Kaer ho devo dont d'am zamall  
Ha da brezek ho Lezen fall  
A zaleg ann heur a vremen  
Bikenn d'ez-he me na blegann.

JEZUZ.

N'int ket deut 'nn ho tonez dre ann or  
Evel ma teu ar gwir bastor,  
Rak-ze mar d-oc'h euz ma denved,  
Ne selaoufet ho mouez nepred.

AR C'HRISTEN.

Goude m'am euz bet dilezet  
C'houi hag ann Iliz ho pried,



Penoz, penoz a hellian-me  
Kavet digan-hoc'h trugare?

JEZUZ.

E lec'h gwenvi, paour kez pec'her,  
Deut da heulia pinijen Berr,  
Deut evel-t-han da skuil daero  
Ha me westl, me ho selaouo.

AR C'HRISTEN:

Ma daero ha ma finijen  
A ziskouezo d'ar bec'herien  
Penoz hoc'h euz bet teurveet  
Kerc'hat ann danvad dianket.

JEZUZ.

E tro ma vefet er bed-ma,  
Bebet er vuelded vrasa,  
Rak eur galoun a zo keuziet  
Ne vezo bikenn disprizet.

— SKLERIDIGEZ. —

Petra a gaeroe'h eged ann Diviz-ma ? Oc'h he lenn e kre-  
der klevout e gwirionez, ar Zalver o kentelia eur c'hristen

kouezet er greden fall, pe dare d'hen ober. Na pebez karan-  
tez ! Na peger doun e llic komziou ker c'honek mont er c'ha-  
loun ! Evel-se ar gentel gaer-ma, ar re a zo ama diaraok, ha  
kant ha kant all roet dre holl dre Vreiz, a zigoraz ho daou-  
lagad da veur a zen faziet, hag a viraz ivez ouz kalz a re all  
da fazia.





# DISLAVARIOU

## BELEIEN *TOUET*.

— 4792 —

### KENTEL.

Ann niver euz ar veleien a reaz al Le, e Breiz, ne oe ket hervez ann niver euz ar veleien a oa e pep Eskopti : muioc'h, pe nebeutoc'h her greaz e pep tu euz ar vro. Mes eunn dra hag a oe a skouer vad, eo ne oe gwelet o *touet* hogoz hini euz ar veleien huel-savet. Evel-se ann holl Vikeled-vraz, chalonied ann Ilizou-veur, nemed unan euz a Wened hag eunn all a Landreger, a zinac'haz hen ober. Ann niver brasa euz ar bersouned a heuliaz ivez ar Vistri. Ne oe eta o *touet* nemed ar Gureed, ar veleien hep karg hag ar Venec'h, hag enn touez ar re-ma holl, ann darn vuia her greaz dre aoun ha dre ziswiegez. Kenteliet a oent hep dale gant ho breudeur-beleien, hag evel ma oant tud vad a hent all, ne zalejont ket d'en em ziskarga euz ar beac'h pouner ho devoa kemeret. Meur a hini eta a zislavaraz ho Le, hag a zalc'haz goude feal d'ar Feiz. — Evit ar veleien a reaz al Le dre eunn drouk-c'hoant bennak, ar re-ze her miraz hogoz holl.

Chetu ama dislavar eur belek euz a Eskopti Leon, hag hini eunn all euz a Eskopti Treger.

## ❖❖❖ XIV. ❖❖❖

### DISLAVAR EUR BELEK EUZ A LEON.

(IEZ LEON.)

WAR DON : *Gwerz ann Ifern*. — 52.

Malloz d'ar skanvadurez  
E deuz ma distroet  
Divar hent ar gwir furnez  
?Vit heul hent ar pec'hed :  
Ia, mil malloz d'ann deiz-ze  
Ma savaz barz em c'hreiz  
Eur gen amzent karante,  
Mestrez evez va reiz.

Ouc'h ar Map trezer henvel  
E tileziz gwech all,  
Ann Iliz, va mamm santel,  
Sionaz ! dre ali fall,  
O c'hoanta kaout *Liberte*,  
Am euz hep mez roct  
Va enor ha va ene ;  
Kevret ez int gwerzet.



O! *Asamble* didruez,  
O! feunten a wallou,  
O! ster a fallagriez,  
O bez ar vertuziou,  
Dre da lavarou tonelluz  
Atizet gant Satan,  
Ec'h euz mouget ar vertuz  
Hag enaouet ann tan.

Ma unan gand ar c'henta  
Ez ounn bet shezet,  
Ha dre eur gwall ar brasa,  
Ounn bet, siouaz! douget  
Ebarz e gaou da gemer  
Ann hano a Zoue,  
Ha goude c'hoaz da ober  
Enn he enep eul Le.

Pebez enkreuz, va Broiz,  
Heuz ez eo her c'hlevout,  
Kuitaat ar gwir Iliz  
A dlienn da garout;  
Ha kavout gwell lezennou  
Leun a fallagriez  
Pouezet holl e krok-pouezou  
Euz al likaouerez.

Selaouit holl, Bretoned  
Selaouit gant glac'har;

Hep mar, 'vefot souezet,  
Ha gand abek, m'hel lar;  
Rak chetu, e berr gomziou,  
Euz al Le goulennet  
Skler ar brasa darvoudou  
D'e-hoc'h-hu holl da welet.

Kuitat ar Relijion  
Ha dilezel Doue,  
Aotrea d'ann *Nasion*  
Holl wiriou ar Roue,  
Diviska ann Tad santel  
Euz he vestroniez  
Ha dizanaout he gentel;  
Na peger braz drougiez!

Ann Ilizou holl saotret,  
Ha gwastet ho madou,  
Ho fastored holl bac'hiet,  
Gwerzet ann Encou,  
Sevel giton d'ar gwallou  
E pep leac'h enn hon touez,  
Ha rei nerz d'ann diswiriou,  
Pebez dalledigez!

Na petra 'm euz-me touet?  
Den sod ha den hep penn;  
Rak bepred e vinn galvet  
Eur spered balafen,



Hag hep galloud da stourmi  
P'am euz nac'het ar Feiz,  
Ha great koeza er fazi  
Eur c'hanton euz a Vreiz.

Enklaskit eta brema  
Ann holl hereziou,  
A hader dre ar bed-ma  
O tont d'ober Leon,  
Hag e leac'h ann eurved.  
Kel liez d'e-omp gweslet,  
Ped den, ha ped den kollet  
Na vezo ket gwelet!

Kovez a rann, va Doue,  
Va gwall ha va fec'hed,  
Eur pec'her evel d-oun-me  
A dle mont da guzet  
'Barz ar c'heviou dileuret  
D'al loened fleriuz  
Ha beza prim chadennet  
'Vel eunn den bosennuz.

Trei penn d'ar Sakramanchou,  
Hag ho c'has holl da get,  
Disprizout ar senedou,  
Ha goude c'hoaz touet  
N'ez euz na gwall na fazi  
El Lezennou nevez,

Hogen int hep falloni,  
O pebez touellerez!

M'am bije c'hoaz espernet  
Ma zad ha va c'herent,  
Ne vijenn ket enkrezet,  
Enn eunn doare kement,  
Hogen holl 'm euz ho beuzet  
Er fazi, enn drougiez,  
Hag evid-oun ho roet  
D'ann Argarzidigez.

Tec'hit, tec'hit, Bretoned,  
Ma dianzavit krenn,  
Tec'hit, tec'hit, me ho ped,  
Evel ouc'h ar vosen,  
Rak va c'helennadurez,  
A zo lemm, kontammuz,  
Karget a bilpouzerez,  
Hag oc'hpenn-ze gwalluz.

Va fec'hed a zo grevuz,  
Ha va gwall-skouer anat,  
Hogen ouz-hoc'h, va Jezuz,  
Gant keuz hag enkrez vad,  
E c'houlennann trugarez  
Euz a greiz va ene,  
Hag ouz-hoc'h, tnd va farrez,  
Her goulennann ive.



Gwestla 'rann, o va Doue,  
Gant skoazel ho kraz vad,  
Lezel va droug-ioulou-me,  
Hag enn ho leac'h lakat  
Eur binijen 'vo skoueriuz,  
Arrez ann eurusted;  
Ha daskori da Jezuz  
Ar pez en deuz kollet.

— SKLERIDIGEZ. —

Hervez ma zo bet lavaret, ne oe nemet seitek belec'oc'h ober al Le enn Eskopti Leon. Pevar fersoun hep ken, her greaz, ha tri euz ar re-ma, persoun Forest, hini Plougar hag eunn all, en em zislavaraz hep dale: ann dislavar a zo ama diaraok, a zo hep mar, dislavar unan euz ann tri Aotrou-mar. Kredi e rann ez eo hini Persoun Plougar: bet ez eo skrivete Montroulez.



❖❖❖❖ XV. ❖❖❖❖

## DISLAVAR ANN AOTROU LOIER,

Persoun touer e parrez Plunet (Eskopti Treger.)

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Theophiluz.* — 42.

C'honi pere a zo bet testo, ma breudeur ker,  
Eveuz ma holl fazio hag eveuz ma gwall skouer,  
Tostaet da glevet breman ann dislavar,  
A rann gand eur galon mantret a wir c'hlac'har.

E pad pemp miz, pe c'houec'h siouaz d'in! ez onn bet  
Er mez deuz ann Iliz e p'hini oann ganet,  
Distrein e rann d'ez hi a galon, mar teurve  
Ma c'hemer c'hoaz eur wech, enn touez he bugale.

Ia, ma zud reuzeudik, ha nann, nann, ma denved,  
Bezan 'c'heuz eur Pastor, mez evit me n'onn ket,  
E lec'h ho skoazellan, mezur hoc'h ineo,  
Falloc'h eget Judaz, me re d'ec'h ar maro.

Abaoue m'am euz gret al Le-ze milliget,  
Biskoaz na noz na de sioulded n'am euz bet,  
'Barz em c'halon bepred ennn dra a lere d'in,  
'Vit petra, reuzeudik, e teuz d'en em daonin?



C'hoaz n'eo ket awalc'h d'id dont da goll da ine,  
Koll, ha koll evit mad holl levez ann Ee,  
Ma ne deuz da dennan ebarz da reuz kevret,  
Ineo a zo bet gand hor Zalver prenet.

Te a zo mu trubard eged ann diaoulo,  
Brasoc'h eo da zrongiez ha da droidello,  
'Vit poblann ann Ifern! te gemer dre c'hoge  
Ann holl Zakramancho, zoken komzo Doue.

Da fazi gwelvanuz, deuz d'hen dinac'h a grenn,  
'Keit ha ma hellez c'hoaz, gra prim gwir binijen,  
Selaou mouez eunn Doue p'hini deu d'az gervel,  
Ha kren 'barz ar stad-ze ne deufez da vervel.

Ouz ar vouez-ze pell braz me am euz bet strivet,  
Distrein 'rann d'ann hent mad, anzav 'rann mafec'hed;  
Gwenvidik! mar gellann donet dre ma daero  
Da gavet kent mervel, distol euz ma gwallo.

Ouz-hoc'h-hu, ma Zalver, me c'houlenn trugare,  
Dre zellid ho maro hag ho koad sakr ive,  
Distolet eur pec'her 'zo mantret he galon,  
Gant gwir keuzedigez ha gant glac'har gwirion.

Gret hoc'h euz trugare da Vari-Madalen,  
Da sant Per, d'al laer deo, ha d'ar Gananeen,  
Diskouezet em andret brasoc'h ho madelez  
Rak brasoc'h 'eo ma gwall ha ma fallagriez.

Ne virent ket bepret hoc'h holl gourc'hemennno,  
Hogen na zeuent ket da brezegin fazio,  
Ho tirogan 'rejont, mes evit-ze biskoaz,  
Na zihenchont ar bobl 'vel m'am euz gret, siousaz!

Rouanez a drue, skoazel ar Gristenien,  
Gwerc'hez, otreet d'in va gras ha va goulen; ;  
Pedet evid-on-me ho Mab muan karet,  
Ha deut d'hen difacha em c'henver, me ho ped.

Enn hoc'h goude ho Map, e teuann da fian,  
Enn hoc'h ma holl gortoz gant joa a lakaann,  
Mar pedet evidon, na vezinn ket kollet,  
Mar pezh true ouz-in, me vezo distolet.

Pedet evit ar bobl p'hini 'm euz dihenchet,  
Allaz! dic'houvez eo, n'anav ket he bec'hed,  
Mu a ze e tellez deuz ho perz pep true,  
Gret 'ta ma tistrou he galon a neve.

Ha c'houi, tud dianket, deut, distroet d'ann hent,  
Heuliet 'vel diarok ar Person ha poa kent,  
Hen eo ho kwir Veleg, ho Pastor hag ho Tad,  
Hen anzav 'rann, reiz onn d'her sinan gant ma goad.

Pebez displijadur hoc'h euz d'ez-han roet!  
Pegemend a zaero oc'h kiriek 'n deuz skuliet!  
O trein d'ez-han ho kein, o tont d'hen huernin,  
Da damall he gomzo, zoken d'ber fourgasin.



Allaz! me em euz-han diroget ma-unan  
Gret d'ez-han hirvoudin, gounzanvin kalz a boan,  
O tonet d'ho tistrein diouz ar gwir lezen,  
D'ho tistagan a grenn deuz ann Iliz romen.

En em 'strinkomp eta holl kevret d'ann daoulin,  
Pedomp-han d'hor c'hemer, ha da zont d'hor gwalc'hin,  
Pedomp-han dre zellid Jezuz, hag he c'hloazio,  
Ne deui ket d'hon dinac'h p'her pedfomp dre eno.

Ebarz em holl fazio hag ebarz ma fec'hed,  
Ebarz ma c'hreden fall, siouaz! 'c'heuz ma heuliet;  
Heuliet ma finijen ha ma glac'har gwirion,  
Ha distroomp kevret d'ar gwir relijion.

Evid-on-me breman, a ia enn eunn distro  
Ne zellezann pelloc'h chom enn touez tud ar vro,  
Ebarz eur c'hoad bennag enn touez al loened gwe  
E tleann hirvoudin, enn dilerc'h ma bue.

Kimiad d'ec'h, pinsin sakr, war b'hini e touiz  
Em hije bet bepred sentet ouz ann Iliz,  
Bet onn ganaz d'am Le, tec'hel e rann breman  
Pell diouz-hoc'h gant hast, da bedin, da welan.

Kimiad d'ec'h e larann, kador ar wirione  
E-p'hini 'm euz, siouaz! komzet enep d'ar Fe,  
Na houllann ken bevan enn touez ar Gristenien,  
Goude bezan touellet ken aliez a zen.

Kimiad, kovesion, pehini 'm euz saotret,  
Kimiad, d'ec'h, e larann, n'hellann ken ho kwelet,  
Goude bezan bet gret kemend a zizeurio,  
Ez ann enn eur vro all da welan ma gwallo.

Kimiad d'ec'h, Kristenien, reuzeudik kouls ha me,  
Ho pet sonj ac'hanon ha grit d'in trugare  
Pedomp beteg ar penn ann eil 'vid egile,  
Ha gortoomp bepred hor gwelc'h digant Doue.

Eur ger c'hoaz kent kuitat am euz da lavaret,  
Chetu aman eur reiz, n'he ankounaet ket,  
Mar hi miret er fad, ne vefet ket touellet,  
Gand ann Heretiged, nag ar falz Personed.

- Ann Tad santel ar Pab a zigas Eskibien,
- Ar re-ze a zo mad, hag ar re-ze hep ken,
- Ar veleien kaset gand ann Eskibien-ze
- Eo ar gwir Bastored, ha n'ez euz nemet-he.

Deut da heul ar c'homzo euz anezhe bepred,  
Ha gret ar pez a vo gant-he goure'hemennet:  
Neuze gortoomp mad dre vadelez Doue,  
E m'omp holl ann eur-vad d'en em welet enn Ee.

Evel-se ann Iliz a wele aliez o tistrei d'he c'havout unan  
bennag euz he ministred hag euz e bugale dianket. E touez ar



veleien en em zislavaraz e Treger, a heller c'hoaz henvel ann Aotrounez ann Nayrod, maro persoun-kanton e Plestin; Betout, maro kure et Langoat; Gwezou, maro persoun e Rannan.

Mes mar gounee ann Iliz euz eunn tu, e kolle ivez euz eunn tu all : evit gwir, kement-man a oa evit he enor. Ann *Nasio* na esperne nag ar veleien, nag ann dud a zalc'he feal d'ar Feiz, ha pa ho fake, e renkent plega d'he lezennou, pe beakaset d'ar maro; aliez zoken kuit a brosez. Evel-se oe merzeriet eunn niver braz a dud hag a veleien; e Breiz-izel koude, nebeutoc'h eged e leac'h all.

An dislavar a zo aman diaraok a zo bet roet d'in gant Kela Jayre, euz a yourc'h Plouaret: bet ez eo bet savet gant ann Aotrou Perennez euz a behini e komzinn goude.



## LOEIZ C'HOUEZEK.

— 1792 —

D'ar mare ha ma hevele ar Relijiou mont knit euz a Vro-C'hall, gant he ministred feal, ar Rouelez a goueze ivez dindan taolion he enebourien. Abaoue ann dek a viz Eost, ar reuzeudik Loeiz c'houezek, a hirvoude gant he dud, e prizoun ann Templ, e Pariz. Ar *Gonvansion* a gemeraz leac'h ann *Asamble Lejislativ*, enn dregont a viz Gwengolo, 1792. Antronoz e torraz ar Rouelez hag ec'h embannaz ar *Republik*, da c'houzout eo, ann amzer-ze e pehini e oe kement dismantret hor bro geaz.

Chetu kenta ober ar *Gonvansion* : he brasa hag hegwasa a oe lakaat ar Roue e barn. Douget a oe e vije great ann tri goulenn-man diwar he benn. — 1° Loeiz XVI, ha kabluze ef-hen? — 2° Ar varn ha ne vezo-hi ket douget nemet goude ma vezo bet klevet ali ar bobl? — 3° Pe boan a vezo douget?

Ar boan a varo a oe douget er seitek a viz Genver,



1793, hag enn ugent, da eur peder heur euz ar beure, e oe mennet e vije gillotinet ar Roue antronoz.

E tro goel ann Nedelek, Loeiz a zavaz er prizoun, ann *Testamant* a zo aman warlerc'h, ha pehini a zo galvet *Aviel ar Rouanez* gand eunn den gwiziek braz : skrivet am euz bet ar Ganaouen, e Bannalek, e tu Kemperle.

❦❦❦ XVI. ❦❦❦

## TESTAMANT LOEIZ XVI.

(IEZ KERNE.)

Hor bet sonj da vikenn euz eur Roue ken mad  
A deu evit he bobl da skulia he holl wad.

WAR DON : *Kelven.* — 59.

Bretoned a Vreiz-Izel ouz hoc'h-hu e komzann,  
Ma lavar a zo gwirion, selaouit anezhan :  
Ann dud kabluz em c'hlevo a vo mezekaet  
Hag ar re feal gan-en a welo holl kevret.

Ann dro-man 'eo diskarret ann tron hag ann Oter,  
N'hellomp kaout nep arvar, her gwelout a rer skler,  
Gwaller ez eo ann hini 'zo feal da Zoue,  
Ha gwaller c'hoaz ann hini 'zo feal d'ar Roue.

Kent evit monet pelloc'h eo red d'in diskleria  
Ar gwall aoz, ann dismegans, ar reuziou ar brasa,  
En deuz gouzanvet Loeiz ebarz enn he brizon ;  
Nep ne ve ket tenerreet, e ve kri he galon.

E pad eur c'houls a bemp miz er prizoun dastumet,  
Ne wele enn dro d'ez-han nemed ar zoudarded,  
Pere deu d'hen c'havaille 'vel eul laer didalvez :  
Bourbon a c'houzanv pep tra, ha gant sentidigez.

Eunn heuz braz a oe gwelout sujidi ar Roue,  
Bemde ouz he gavailla, hep damant na true :  
Henvel ouz hon Dasprener, dirak Herod galvet,  
Loeiz 'c'houzanv dismegans hep laret ger ebed.

Goulenn a eure zoken kaout eunn tri devez,  
Evit 'n em rei d'ann ober euz he zilvidigez,  
Hogen n'eo ket selaouet : warc'hoaz abenn kreizte,  
E renkomp, a lavarjont, gwelout penn da vue.

Acetrete a oe d'ezhan ar frealzidigez  
D'hellout, mar her c'hoantae, d'hellout mont da govez,  
Gand eur beleg katolik, hanvet Abad Firmon,  
P'hini en devoa fisians hon Roue mad Bourbon.

D'ann Doue trugarezuz, neuze 'n em erbedaz  
En eul lavarout d'ezhan gand eur galon 'oa braz :  
Me c'houlennu, o ma Jezuz, ouz hoc'hgant keungwirion  
Distoll ma holl bec'hejou, euz a greiz ma c'halon.



Pa caz er mez euz ar bac'h evit mont d'ar chafod  
E lakaz eunn tamm paper e dorn Kleri, he bod,  
War behini 'oa skrivet he gomziou diveza :  
Diez 'eo renkout ho lenn, ha miroud da wela.

» Enn hano ann Tad, ar Mab hag ar Spered meulet,  
» Tri ferson euz ann Drinded, pere reno bepred,  
» Hirio ar bemp war-n-ugent a viz Kerzu hanvet  
» E skrivann ma zestamant, e bac'h ann Templ paket

» Me Loeiz c'houczek hanvet, Roue ar c'hallaoued,  
» Ebarz ann dewalijen, pevar miz 'zo dalc'het,  
» N'em euz test nemed Doue eveuz ma holl boaniou,  
» Dira-z-han e tiskleriann net ma holl mennosiou.

» Mervel 'rann enn unvaniez ann Iliz, ma mamm ger,  
» A gemer hec'h holl gwiriou euz a gador sant Per,  
» Da l'hini oant aotreet gand Jezuz, he fried,  
» Hag er mez euz anezhi, n'euz baradoz ebed.

» Kredi 'rann a greiz kalon hag anzavout ive  
» Sembol vraz ann Ebestel, hag ar seiz sakr goude,  
» A Zoue hag ann Iliz ann holl goure'hemennou,  
» Hag euz ar Fei gatolig, ouzpenn ar misteriou.

» Glac'har am euz o welout kalz a dud er fazi,  
» Ne vo ket me ho barno, hor breudeur ez int-hi :  
» Ar garante c'houre'hemenn d'imp pedi evit-he,  
» Evit ma hellint beza distolet gand Doue.

» Me a c'houlenn trugare euz a greiz ma c'halon,  
» Mar am euz sinet skridou ar *Gonstitution*,  
» Noazuz d'ar Relijion ha noazuz d'ar gwir Fe;  
» Ma plijo gant ma Doue, gwalc'hi net ma ene.

» Gwir eo n'am euz ket sinet nemed a c'nepe d'in,  
» Hogen ma brasa dlead a oa krenn dinac'hin,  
» Rak p'en em lakomp e gwall da beur werza hor Fe,  
» E ve gwell d'imp 'n em lakat kentoc'h war hor bue.

» Digant nep 'm euz diroget, trugare me c'houlenn,  
» Ne gredann ket koulskoude am be diroget d'en,  
» Hogen ma am euz hen gret, ez eo hep gouzout d'in  
» Ha beza am euz fisians e teufint d'am gwalc'hin.

» Eveuz a greiz ma c'halon trugare me a ro  
» D'ar re a zeu hep abek da c'houlenn ma maro,  
» Ouz-penn da gement hini ho deuz ma diroget  
» Hep am be roet d'ezho biskoaz abeg ebed.

» Pedi a rann ma fried, enn hanv hor c'harante,  
» Da gemer kalz a breder eveuz hor bugale,  
» D'ho zewel 'barz ann doujanz, ha karante Doue,  
» Da vezan gwir gristenien e pad hed ho bue.

» Ha c'houi, ma bugaligon, mar ho pe ar c'hlae'har,  
» Da goll ho mamm, 'vel ho tad, me hoc'h erbed  
[ d'am c'hoar :

» Eunn eil vamm 'vo evid-hoc'h, abalamour d'in-me,  
» A bep amzer evid-hoc'h, 'oe braz he c'harante.



- » Ma mah, te a oa ganet evit beza Roue,  
» Mar 'z ez bikenn war ann tron, n'eo ket eunn eur-  
[ vad se.  
» Ne deu ket d'en em venji euz a varo da dad,  
» Klaskbepred eur-vad da bobl, ha gra d'ezhan pep mad  
» Az pez sonj, ma c'hrouadur, euz ma zervicherien,  
» Diwall mad ne ankouefez ma madoberourien,  
» Evit rei eur gopr d'ezho, mar 'z pez galloud eunnde,  
» Da ze ez oud endalc'het, te a beo ma dle.

- » Kleri 'n deuz bet roet d'in, a bep seurt skoazel vad,  
» D'ezhan e testamantann ma montr ha ma dillad,  
» Ma gwalen d'am Rouanez, had'am Mab ma c'hached,  
» Hag eur guchen euz ma bleod'am c'herent glac'hareb

Chetu aze, Gallaoued, testamant ho Roue,  
Kent peur lavarout, e tou, ha dirag he Zoue,  
Penez n'en d-eo ket kabluzeveuz a wall cbed,  
Euz ar re a zo d'ezhan gant ar bobl tamallet.

Kent pignat war ar chafod e oe d'ezhan staget,  
He zaouarn adre hegein 'vel d'ar re 'deuz drouk c'hret;  
Hag e lavaraz neuze : « Gant Doue ra blijo  
» E talvefe ma maro da rei ar peoc'h d'ar vro :

» C'houi, ma fobl ker, eme-z-han, a doueller a bell-zo,  
» Me garje c'hoaz ho kwelout abarz taol ar maro.....  
War-ze ann taboulinou a c'holoaz he vouez,  
Ar bourreo a droc'h he benn; kenavo d'ar paour kez!!!

Soudarded ann Nasion, euzuz 'eo kement-ma,  
A voutaz c'hoaz ho sikou enn he wad da drempa.  
Beza 'zo bet eunn amzer, na 'm ije ket kredet  
'Vije, gwaz eget tud gwec, bet kavet gallaoued.

Neuze e oe dastumet hag he gorf hag he benn,  
Ha kaset da zouara da vered Madalen.  
He ene a zo breman et da gana bennoz  
Da Zoue gant ann Eled e gloar ar Baradoz.

— SKLERIDIGEZ. —

Pa oe barnet Loeiz XVI d'ar maro en em gave enn  
*Asamble*, pe ar *Gonvansion*, seiz kant unan warn-ugent  
kannad. Daou a c'houlennaz er galeou evit Loeiz, daou-c'hant  
c'houec'h ha pevar-ugent, ann dalc'h hag ann harlu diouch-  
tu; unan ar bac'h; c'houec'h ha daou-ugent ar maro gant  
gourzez, pe dale; tri c'hant unan ha tri-ugent ar maro;  
c'houec'h war-n-ugent ar maro enn eur sellet hag hen a oa  
mad dibenna diouc'h-tu Loeiz, pe c'hortoz eur pennad. Evel-  
se, evit ar maro hep gourzez, tri c'hant pevar ha tregont.

Petra bennak ma oa kannaded Breiz-izel, paotred kalet a  
walc'h, ann niver brasa anezho na c'houlennaz ket koul-  
koude maro Loeiz : seiz hep ken her goulennaz : Loncl, euz  
a Goste-ann-Nord, Ginio hag Audrein, euz ar Morbihan, ha  
Gwermeur, Gwezno, Boham ha Blad, euz ar Finister.

— Kentel d'ann Dispac'herien. — Euz ar re a c'houlennaz  
maro ar Roue, tri ha pevar-ugent a varvaz abarz nemeur  
goude; pevarzek, dre ho dorn ho-unan, evel Kondorset,  
Pethion.... c'houec'h, dre ann dienez ebarz ann harlu, evel



Kollot d'Herbois, Billaud a Varenn.... c'houec'h dre al lazerez evel Marat.... seitek, dre varvou all ker kalet ha ken iskit, ha seiz ha tregont, dre ar c'hillotin, evel Fransez hag Augustin Robespier, Danthon, Verniaud, Desmoulins, Kouthon, Karrier.....

Den fall, gand ar mend a venti,  
Ha netra ken, mentet evi;  
Da zen eta ne ra nepred  
Ar pez gouzanv ne garfez ket.

Pa zo deut komz euz a Garrier, ec'h heller ivez lavarout penaoz epad ma oa o c'hoari he Aotrou hag he baotr mad enn Naoned, e lekeaz eno d'ar maro, war dro pemzek mil den. Ne oa barn ebed evit ar brizounerien, ha kement-se evit mont buanoc'h gant-ho. E miz Du, 1793, e oe karget pevarzek ha pevar-ugent belek enn eur vag hag a zigore dre zindan : lavaret a oe e oa evit ho c'has da leac'h all; mes e pad ann noz e oe digoret ar vag e kreiz ar ster. Meur a vil den a oe beuet er giz-ze : Karrier a c'halve kement-se, *Korronkennou a-darz*. — Ar brisounerien a oa dastumet hogoz holl enn eunn ti braz, hanvet ann *Entrepot*. Eno e oant mesk-e-mesk a villerou : kemeret a vijent enn noz evit ho c'has d'ar bagou, hag evel na oa ket a amzer awalc'h d'ober bagou toul, e vijent ereet daou ha daou, paotr ha plac'h kevret, ha taolet er ster. Mar felle d'ez-ho kregi er bagou, e troc'het hag e friket ho daouarn hag ho fennou a daoliou klenze. Ar beuzadennou-ma a oa

galvet, *dimiziou republikan*. Ster al Loer a oa ker karget a gorfou maro, ken a flerie gant-ho. — Ann dud a lazet dre ann tennou, a fuzillet e mengleuziou Gigan : bete pemp kant den, a oe fuzillet, deiz a oe. — Ne ankounainn bikenn ar baleadennou am euz great er mengleuziou-ze, evel ivez e kastel ar Bouffay, enn Entrepot hag hed ster al Loer, a zalek kastel koz Duked Breiz, bete Indred. — El leac'hio-ze eo bet gwelet bete pegeit ez a drougiez ann den, pa en deveuz hema dilezet Doue ha kollet pep kumvelez : nag a zo eno da brederia! Va spered leun a vil dra doaniuz, ec'h azeziz, eunn deiz, e penn pella ar c'hae, war eur c'hoz kanol sanket enn douar evit derc'hel al listri. Ann dra-ma a oa e tro ann abardaez. Sellout a renn ac'hano war ar ster vraz, ha sonjal a ree d'in gwelout ar *c'horronkennou a-darz*, hag ann *dimiziou republikan*, great a hed ann noz, ouc'h sklader eur c'hleuzer glaz bennak; klevout a renn ar c'hri-forz euz a gel liez a zen o veuzi e kreiz ar ster, hag ann taoliou roenv hag ann taoliou kleze roet d'ezho, evit gweledi enn dour ar re na weledent ket buan awalc'h; hag ann drouk pedennou losket awar-n-ezho, mes a vouez izel; ne oa trouz all ken nemed gand eur vor-bran bennak pere a grie hag a grake enn ear, mechans, gant hast d'ar banvez. Eunn nebent bagou a arrue goude ouc'h ar c'hae hag a ziskarge diaoulou, ha nann tud, pere a rede sioul d'ho mougeou, gant aoun na zeuje eur c'bristen bennak



d'ho c'hroasia..... Envori a reann war gement-ze holl, pa gleviz kanoliou o teraoui kroza; ha chetu me o lezel ar beuzadennou, evit sonjal e lazerezou Gigan : da bep bordead e krene va c'halon em c'hreiz, ha mennet am bije e koueze dre bep hini, eunn hanter-kant merzer d'ann douar, paneved e teuaz sonj d'in, e oa ann tennou-ze evit digeri goel ar Roue a lidet antronoz, edonn e 1843. Ma saviz koulskoude diwar va c'hanol, hag evel kounnaret out-ha, o sonjal en doa ivez marteze, losket er bloaz 93, meur a denn e mengleuziou Gigan.

E keit ha ma oann o vuanekaot ouc'h va skabel, e tostaaz ouz-in eur contr am euz enn Naoned, ha pehini em ambrouge, hag ho skei war va skoaz, em zennaz euz va skeudennou spountuz : ann den-ma a zo hanvet Padel.

Eunn triouec'h miz bennak goude e valeenn e Pariz, war al Leur-ger war behini a oe dibennet Karrier ha Robespier; ha chetu me a nevez da drei va spered war amzer ann *Dispac'h*; mes ar wech ma e leziz ar *re lazet*, evit sonjal el *Lazerien*. Menna a rea d'in beza war al leur-ger-ze, pa oa Robespier o vonet d'he dro d'ar c'hillotin : her gwelout a reann, he zaoulagad er meaz he benn, hag he javed dihompret ha torret gant ann tenn pistolen en devoa derc'hent, roet d'ezha he-unan evit hasta he varo. Klevout a reann tud en devoa lekeat da grenna, tudc'hentil, boure'hisien, mecherourien da bere en devoa ke-

meret eunn tad, eur vamm, eur pried, eur c'hrek, eur bugel, pe ann eil hag egile, evit ho c'has holl d'ar maro, klevout a reann, me lavar, ann dud ma holl, oc'h he garga a gunuc'hennou hag a zrouk-pedennou. — Unan a grie d'ezhan, oc'h he gemer dre he vrec'h : — Robespier, Robespier, ha klevout a rez-te? — la, eme ann den kriz, petra ec'h euz-te da lavarout d'in-me? — Beza am euz da lavarout d'id, ez euz eunn Doue. — Darn all a grie : Robespier, maro ar c'hillotin a zo re c'houek evid-out ! Mont a rear da glask d'id eur c'hastiz nevez... — Lavar eta d'az Toue ann *Huella*, dont d'az savetei. — Evit Karrier ne gleviz ket kement a zrouk pedennou war he lerc'h, rak re bell a oann euz ann Naoned : ma vije bet dibennet war gae ar gear-ma, ha me bet eno, am bije hep mar, klevet kement all, pe zoken muioc'h a drouz : va unan n'em bije ket gallet mirout da lavarout va ger.

Robespier a oe dibennet enn nao war-n-ugent a viz Gouere, ha Karrier, er c'houezek a viz Kerzu, 1794 : heman a gerzaz d'ar maro gant kaloun, hag enn eul lavarout e oa *didamall*. Mechans hel lavaraz re gre ha ne fellaz da zen he gredi. — Dibennet a oent war al leur-ger ma oe dibennet ar Roue, ar Rouanez hag ouc'hpenn tri mil Gall. Hirio e weler eno *peul braz al Luksor*, deuet euz ann Ejipt, hag eur feunteun gaer pehini a zeu dre he dour, da walc'hi al leac'h-ze, unan euz ar re gaera a zo e Paris, mes bet gwechall saotret dre gement a wad.



## AR VELEIEN

### HARLUET.

— 1793 —

### KENTEL.

Lennet hon euz meur a gelennadurez roet e gwerz gant ar Bastored d'ho denved, ha roet holl euz ar vro hag ebarz ar vro. Lennomp ivez brema kelennadurezoù all skrivet enn tu all d'ar mor : unan a zo e gwerz hag eben a zo war blean : houman a zo bet roet gant ann Aotrou ar C'halvez. — Dom Fransez ar C'halvez a oa Kure e parrez Iviaz, enn Eskopti Sant-Briek ; ac'hano e oa ivez ginidik. Enn dizez 1792, e tremenaz da Enezen Jerzea gant ann Aotrounez Kere ha Derrien, Kureed ivez ebarz ann hevelep parrez. Eur maread amzer goude, e skrivaz al lizer a zo aman warlerc'h : ober a eure c'hoaz meur a skrid all, evel : *Ar bobl d'ann dizez difaziet*, etc.... Ar re-man a zo bet kavet re hir da veza le-keat el leor-ma.

Ann Aotrou ar C'halvez a zistroaz, da vare ar peoc'h, da Iviaz, hag eno e varvaz e 1802, d'ann oad a c'houec'h vloaz ha daou-ugent : sellet ez eo er vro, evel eur Sant.

(IEZ GOELOU.)

*Enezen Jerzea, de gouel ar Goulaouennou, pe ann eil a viz C'hoec'her, 1793.*

DA ANNA DEUZ AR BOURG.

Onz 'n eur skrivan d'ac'h, ma merc'h kez, dimez ar vro bell enn pehini e plij gand ann Otro-Doue kendarc'hel d'am miret rannet diouzoc'h, a kemerrann ar frankiz da rein d'ac'h eunn nebeut kelennadurezoù. Petra bennak ne sellont ket ac'hanoc'h hoc'h-unan, evel ma sellont eunn niver braz deuz a reou pere n'hou deuz ket bet ann eur vad da gad eunn diskadurez evel-doc'h, e kredan koulskoude e kemerfet anhe gand ar joa ma kemerec'h ar re pere am euz bet a wejou, ar blijadur da rein d'ac'h, enn keit ha ma oann ebarz enn hou pro. Sel vrasoc'h eou ar reuziou dirak pere en em gefet, sel vu a kleet akelin da c'hanavet ar gwir arvez d'ober hou silvidigez ebarz ann darvoudou besant, pere a zou ken iskiz. Chetu aman enn berr c'hiriou ann arvez-ze : pedin e rann ac'hanoc'h da diskulian anchi d'ar Gristenien feal dimez ar barrouz, evel ma kefet ar gwellan, hep koulskoude n'em laket ebarz enn gwall d'ann heskin : pedin e rann ac'hanoc'h holl d'hi sevenin gant kalz a breder.

Evel na hellomp ket n'em viret da damall ann di-



zeuriou hep niver, pere a c'hlac'har hon rouantelez paour, dre eur c'hasti anat a deu d'imp abeurz Doue, abalamour d'ar gwall voaz hon deuz groet dimez he Relijion santel, a kleomp ha c'houi ha me, aketin da habaskaat ann Otro-Doue, ha da dougen ar boan a zou gleet da gen liez a bec'hed. Unanet evit-ze hou pedennou gant ma re; mez ne droet ket hep ken enn trezeg ar beden, diwallet gand ar brasan preder da goll ar fe, ouz 'n eur goec'han barz ar chism. Arriet e rafe ganac'h ann drouk-ze, ma teufac'h da heuil ar falz Pastored pere a zou fallet d'he komer lec'h hou kwir re. Diwallet a faian. Evel ne d-cou ket ar se era ar manac'h, ne d-cou ket ive ar garg e ra ann Eskob, ar Person, ar C'hure: ne d-cou mad evit komer ar c'hargou-ze nemed ar re pere hou deuz bet hou chefridi diant ann Iliz; hag evel ma eou tamallet gand ar Vamm santel-ze, arre pere a zou bet roct d'ac'h gand ann *Asamble*, pehini ne doa nep gwir evit-ze, tec'het diout-he evel diouz bleizi, pere ne hellont nemet diskolpan hoc'h ineou. Diweret, siwoaz! dimez hou kuir Bastored, leket hoc'h hol fians enn hon Zalver Jezuz-Krist, pehini a zou ar Pastor kentan hag ar penn diweluz dimez ann Iliz. Pedet-han da rein d'ac'h ann eur-vad da vezan stard ebarz ar fe, ha d'he c'hanzav hep aon, enn gwall da goll hoc'h holl vadou ha zoken hou pue. Rak petra eou ar madou bresk dimez ar bed-man, evit bean hevelebekaet ouz ar madou peur baduz? Petra eou ar vue dister

pehini ne heller piaouan nemet eunn nebeudik amzer war ann douar, evit dellez beza laket dreist ann hini pehini e gle pad bepred ebarz ann Env? Henez a zo eunn dra pehini n'en deou ket diez da verkan. Dleet a red evel-se, arriet e arriou, laket hou fians ebarz enn madelez ann Otro-Doue, ha bean ebarz ar ratoz mad da c'houzany ann heskin, ha zoken ar maro, kent evit heuil tu ar chism, na hini ar greden fall. Aliez a wez hon euz lidet goeliou ar verzerien: ar goeliou-ze, eme sant Augustin, a zou ken aliez a beden, evit hon c'hentraouin da c'houzany ar verzerenti. Jezuz-Krist en deuz roet he vue evidomp: ni a gle ive bezan reiz da rein hon hini evit-han. Ann inor hon euz da vean he ziskibien, hag evel-se a kleomp sonjal penoz ne m'omp ket dimez a welloc'h stad evit-han. Ar gristenien gentan hou deuz roet d'imp ar skouer dimez ar galon lark-ze. Eunn niver braz a villerou tud a bep noad, a bep reiz hag a bep stad hou deuz skuilet hou goad evit difenn ar Fe, a dalek ar penn kentan dimez ann Iliz. Ann hevelep skoueriou a zou bet gwelet ac'houdevez ebarz ken liez a darvoud pere a lenner enn histor ann Iliz, hag enn bue ar Zent. Gwelet int bet zoken a neve zou ebarz enn meur a lec'h dimez hon rouantelez, ha pergen enn derou miz Gwengolo, er bla 1792. Enn deiou-ze a zou bet lazet enn Pariz, war dro tric'hant belek, tri Eskob hag eunn Arc'heskop, pere eou bet gwell gant-he koll ar vue berr-baduz,



evit dinac'h ar fe ouz en eur gomer lod ebarz ar chism. Epad ann hevelep miz, eou bet gwell gant ann darn vuian deuz ar veleien gatolik, kuitaet hou c'herent, hou mignonned, hou madou, ha zoken hou bro evit kemer ar madou hag al lec'hioù avennet d'he. Roet hou deuz holl evit savetaet hou ine. Arre dimez anhe pere a zou chomet enn hou mesk, a zou kuzet dindan ar brasan gwall, pe da vianan ec'h int serret kevret ebarz ar prizoniou da bere a zou roet ann hanv a *dier kommun*. Kentelliou ken fresk ha ken glac'haruz a gle kentraouin ac'hanoc'h da ober gant kalon, eunn hevelep sakrifiz, ha pa eou gwir hoc'h euz ann eur da vean dimez eunn hevelep tu, ha c'hedet kemer eunn hevelep gopr pehini a c'hedont. Heuliet evit-se ann aliou-man pere a sel ar Sakramanchou hag ar Santelidigez dimez ar suliou ha dimez ar goeliou.

Chetu aman petra a gle ann dud feal da ober evit ar pez a sel ar Sakramanchou.

Hon c'hatechiz a disk d'imp penoz a hell ann holl badein, mar deou red a grenn. Evit badein, evel m'hen gouzoc'h ervad, e renk ann hevelep den skuil ann dour war benn noaz ar bugel, ha lavaret war eunn dro ha ma skuil ann dour : Bugel, me ez bade, enn hanv ann Tad, hag ar Map, hag ar Speret-Santel : evel-se bezet groet. N'eu ket otreet na d'ann tad na d'ar vamm ober ar vadiant, mar be war al lec'h tud all gwiziek awalc'h evit rein ar Zakra-

mant-ze, ha mar be da dibab, a kle eunn den bean kemeret kentoc'h evit eur famelen. Bezan eou deread komer daou dest ha rein eunn hanv d'ar bugel, evit hel laket dindan diwal eur Zant pe eur Zantez bennak. Ann testou a gle mont gand ann tad dirak ann *ofiser publik*, evit ober d'han hou diskleriadurez dimez ar pez a zo tremenet er ger, hag evit ober hen skrivan war diellou ar *munisipalite*. Mes na eou nepret otreet mont da gad ann *Intru*, nemet n'em gad e rafe da vezan kemeret ann diellou; neuze a heller mont d'hen kavet, nann evel belek, (n'en deuz ezomm ebed ar bugel a gement-ze evit bezan salvet), mes evit hen pedin d'ober he garg enn he genver, da-laret-cou, evit ober ar pez a raje eunn all pehini ne vije ket belek.

Pa n'eu ket otreet mont da gad ar falz Pastored evit zakramant ar Vadiant, n'eu ket, dre vrasoc'h gwir, otreet mont da gad Eskop ann departamant, evit digemer hini ar Gouzoumen. Piu bennak koulskoude a vefe bet gouzoumenet gant-han, en defe evit gwir pec'het marvellamant, mes ne oufe ket eunn eil gwech digemer ar Zakramant-ze diant eur gwir Eskob, ha ze abalamour d'ann arwez a zo bet puket ar wech kentan, hep digemer, evit-ze, ar c'hras dimez ar Zakramant.

Tremen e rann breman d'ar pez a sell ar govision. Chetu aman petra a dle ann dud iac'h da ober. Ar re dimez anhe hou deuz ann dizeur da vezan enn stad



a bec'hed marvel, na gleont na gwenvin na digalounne-  
kaat. Ann Otro-Doue a zou eunn tad trugareuz pehini  
a c'hoanta silvidigez he holl vugale : ne c'houlenn  
evel-se diant-he, netra agement a ve dialluz, hag evel  
ma eou breman dialluz d'ann darn vuan dimez anhe,  
mont da gad eur c'hovesour katolik evit digemer ann  
absolven, e ro de eunn doare all evit en em unanin  
gant-han. Ann doare-ze eou ar c'heun gwirion, pehini  
evel m'hen gouzoc'h, a zou eur wir c'hlae'bar a galon,  
hag eur ratoz stard da diwall, enn amzer da dont, ouz ar  
pec'het, abalamour ma tisplij da eunn Doue mad braz  
ha dellezek braz da vezan karet. Ar c'hlae'bar-ze a  
dle bezan heuliet dimez eur c'hoant gwirion da vonet  
da govesaat, adalek ma vou kad eur belek katolik. Na  
hellomp ket dimez ac'hanomp hon-unan kavet ar  
c'heun-ze : bean eou eur ro diant Doue : red eou eta  
hen goulenn diant-han dre ar iun, ar beden hag ann  
aluzon. Ouz n'eur gemer erfad ann doareou-ze, ne  
fallo ket da rein d'he wir servijerien ar c'heun a be-  
hini ho deuz ezomm evit bezan distolet. Re a vadelez  
enn deuz enn kenver he grouadurien evit ho lezen  
da vervel enn hou fec'hed, mar greont, herve ho  
galloud, evit en em unanin gant-han. E lec'h eta  
mont da govesaat, a kle ann dud kez-ze bemde, dreist  
holl bep sul ha bep goel, arvestin hou c'houstians gand  
ar brasan preder. Goude bezan anaveet ann niver,  
ar rumm hag ann darvoudou dimez hou fec'hejou, a  
kleont anzav anhe dirak ar grusifi, vel me rajent di-

rak hou c'hovesour. Lakat e raint piz hou mennoz  
enn aliou e gemerjent, ma vijent enn gwirione ebarz  
enn kador ar binijen. Kemer e raint ar ratoz da ober  
eur binijen kevatal ouz grisiested hou fec'hejou, ha  
na c'huitouint ket d'he c'hober. Sonj hou dou, dreist  
da bep tra, da ginnigan d'ann Otro-Doue hou labour,  
hou foaniou, ha peurgedged ar re a c'houzanvont  
ouz n'em welet diweret dimez a skoazellou ar Reli-  
jion. O kredin goude-ze ec'h eont da gad ann distol  
dimez hou fec'hejou, en em atizouint d'ar c'heun da  
vezan diroget Doue, hag e raint eunn ak a geun, di-  
mez a greiz hou c'halon. Ar glanvourien a dle, evit  
laret, ober evel ann dud iae'h. Bezan a zou kouls-  
koude eunn dishevelidigez, abalamour d'ann darvoud  
reuzedik enn pehini en em gefont. Gwir eou pe-  
noz ebarz enn gwall a varo, e ra ann Iliz pep gwir  
d'ann holl veleien, zoken heretik ha chismatik, ha  
dre-ze n'hen dinac'h ket d'ann *Intrued*. Otreet eou  
eta d'eunn den pehini en em wel war dare, pe enn  
gwal da vervel, kovesaat d'ar sort beleien-ze, betek  
ne vezou ket a lec'h da gad aon da vezan goneet gant-  
he. Rak ma fellfe d'ann *Intru* dougen ar c'hlanvour  
da ober d'ehan eur gwestl bennak chismatik, evel a  
digouette goulenn ann darempred dimez he ofisou,  
mar deufe enn iec'hed, e vefe gwell mervel diweret  
dimez ann dizoan da gad ann absolven, evit na vefe  
he c'had dindan ar gwestl pehini na hellfe ket da se-  
venin hep kemer lod ebarz ar chism, ka dre-ze hep



pec'hin marvellamant. Ann Otro-Doue ne fallo ket da c'hopra eur fe ken mad, dre eur c'heun braz awalc'h evit kad ann distol dimez ar pec'hejou, hep digemer sakramant ar Binijen.

Dimez ar pezh am euz laret d'ac'h bete henn, ec'h hellet eset gwelet penoz n'ed-cou ket otreet digemer diant falz Pastored nag ar Gommunion; zoken e par ar maro, nag ann Nouen. Rak evel ne d-cou ket ann daou Sakramant-ze red a grenn evit bezan salvet, ann diouer dimez anhe ne vou ket noazuz d'ar glanvourien. Ho sentidigez da lezennou ann Iliz (pehini a difenn out-he pep darempred gand ann Intrued, nemed enn digwe a behini e komzenn breman zouden) ne fallo ket davezan hetuz d'ann Otro-Doue, pehini a die'haouou anhe dimez ann diouer-ze, dre c'hrasou all pere ne vaint ket nebeutoc'h talvoudek evit hou silvidigez. — Ne gomzinn ket d'ac'h dimez a sakramant ann Urz pehini ne sell nag ac'hanoc'h na hini dimez ar barrouz.

Evit sakramant ar Briedelez, chetu aman ar pezh a zou bet gourc'hemennet gand ann Tad santel ar Pap. Nep hou deuz ann eur-vad da gad ebarz enn hou c'hanton eur belek katolik bennak, a zou endalc'het da vont da gad ar belek-ze, mar eou ze galluz d'he; hep hel lakat pe en em lakat hi ho-unan enn gwall da reuziou re vraz. Evel ma eou, siouaz! kement-se ho-goz dialluz ebarz ann darvoudou besant, a kle ann dud feal pere hou deuz c'hoant da digemer sakramant

ar Briedelez, pedin dimez a greiz hou c'halon, ann Otro-Doue da skuil he vennoz war ar gevredigez dre behini ec'h eont d'en em westlan. Dleet a reont diwall na en em gafe enntrez-he, hini dimez ann harzou pere e lakefe didalve hou friedelez. Dleet a reont arvestin hou c'honsians, hag en em gentraouin d'eur wir c'hlac'har, er giz m'am euz hen displeget. Neuze e lec'h mont da gad ho Pastor *touer*, mar ho deuz unan, e lec'h mont dirak ar munisipalite, pe ann *ofiser public*, pehini en deuz gret le da harpan ar chism, e lec'h, dre vrasoc'h gwir, mont da gad ann *Intrued*, e kleont eureujin dirak pevar zest katolik ouz 'n em gemer ann eil e-gile evit gwir briejou. Gand aon koulskoude na vefent evit den ebed eunn abeg a wall skouer, ha na vefe sellet evel bastard ar yugale a oufent da gad, a eou mad, ha zoken red d'he, mont da ober hou diskleriadur dirak ann hini a zou karget dimez a diellou ar barrouz. Mes ne dleont plegan neuze da vennoz beleg ebed, na kat nep ioul da gre-taat ar briedelez, pehini hou deuz kemeret diarok, ha pehini a zou gwirion, mar ne zou enntre-he harz all ebed.

Tremen e rann breman d'ar santelidigez dimez ar zuliou hag ar goeliou. Penoz bennak ma eou difennet dindan boan a bec'hed marvel mont da ofisou ar chismatiked, ne d-cou ket evit-ze, kuit ann dud feal a santelidigez ann deiou-ze. Ann difenn pehini e ra breman ann Iliz out-he da gemer lod ebarz ar chism,



ma teufent da heuil ar falz Pastored, ne divec'h ket anhe, na da chom hep labourat, na da ober ann oberou mad pere a zou dishevel dimez ann ofisou hollek. Chetu aman unan bennak talvouduz evid'hoc'h, hag evit ar re dirak pere a kefet mad lenn al lizer-man.

Adalek ar beure, goude bezan bet laret hou pedennou evel bopred, ha zoken ma eou galluz, muoc'h hir evit enn deiou pemdiek, troet ho mennoz evit en em unanin a galon ebarz ar zakrifisou kinniget gand ar veleien gatolik, hag evit kommunion a spered ebarz ann oferniou-ze, da vianan eur wech ar miz, ha de ar goeliou brasan. Mar ne sonjet ket a vefe mad d'ac'h mont d'eunn Iliz, pe d'eur chapell evit ober ho teoliez, en em dennet enn eul lec'h all bennak a du, evit ober ar peza rec'h dre gustumm, pa hou poa ann eur-vad da vezan a gorf ebarz ar zakrifiz-ze. Gallet a refet heul a spered, holl oberiou ar belek, evel pe hen gweljac'h, ha kat sonj penoz eou bet savet ann ofern evit azeulin Doue, hen trugarekat, goulenn diant-han ann distol deuz ar pec'hejou hag evit goulenn ann holl ezommou ken deuz ar c'horf, ken deuz ann Ine. Ar gommunion a spered, pehini am euz aliet d'ac'h, a zou eur c'hoant hirvidik da dibrin ar bara envuz pehini en deuz lezet Jezuz-Krist ebarz ar Zakramant sakr ha santel dimez ann Oter, ha da dennan talvoudegez ar gommunion gwirion dre ar fe hag ar garante. En em ozet da gommunion, er giz am euz hel laret, ou komz deuz a sakramant a Binijen. Evel

ma hoc'h euz ann eur da c'hout lenn, aketet enn kement ha ma helfet d'a ober lennaduriou mad, hag a du ha dirak piou bennak a kefet mad hou ober. Nep ne ouzont ket lenn, enn tuont da laret gant deoliez hou chapelet, a gle laket ho freder gant marv ha gloasiou hon Zalver : sonjal aliez er maro, er varn, enn ifern hag er barradouez, 'etc.... Dleet a reont c'hoaz sonjal ebarz ann tu a gleont da gemer evit dellezet ar vertuiou abere hou deuz ezomm, hag evit diskarz ar gwallou da bere int techet. Ne fallouint ket ive da c'houl gwellan ha ma hellouint, pere eou ar goueliou hag ar iunion pere a halfe d'en em gad e-pad ar zun. Nep an deuz diskadurez awalc'h, a gle ober ar c'hatekiz d'ar yugale. Ann tadou hag ar mam-mou ne gleont ket ankoæt, penoz e taskorouint d'ann Otro-Doue eur gont tenn, mar fallont da gentellian hi ho-unan, pe da vianan da ober kentellian ho re. Ouz 'n eur gomz d'ac'h deuz santelidigez ar goueliou hag ar zuliou, ne gleann ket ankoæt ar preder dimez ann dud klavy. Ar Gristenien feal a dle hou gwelet, hou frealzin, hou dougen da doujan a galon vad da ioul ann Otro-Doue, hag enn eur gir rein d'he ann holl skoazellou pere a zo ebarz enn hou galloud. Ann treou-ze a heller da ober kenkoulz diouz ann abarde, evel diouz ar beure. Bezan a zoti c'hoaz re all pere a ve re hir da laret aman holl, evel ma eou ar c'henlavar dimez ar Roseran, ann enklag a gonsians, ober gwelladen d'ar Sakramant, mar eou



ze galluz hep gwall-zarvoud, etc..... Enn eur gir, pep hini a gle tremen ann deiou santel er giz ar gwellan, evit trein da c'hloar ann Otro-Doue ha da silvidigez he ine.

Ac'hane eou ezet mennan pegement en em laka kabluz piou bennak a drouk rafe gant-he, evel ifan, danzal, drouk komz, hag ober dirollou all hanval, pe a vefe eur gwall skouer evit ar chismatiked zoken, ha pere a dennfe hep mar, buanegez ann Otro-Doue war nep a deufe kabluz dimez anhe. Mes chetu aze eunn dra pehini ne sell marteze hini dimez ar re da bere hou pou ar vadelez da lenn al lizer-man. Kredin e rann penoz en em virfet gand ar brasan preder, dimez ann doareou direiz-ze, evel ive ar re dimez ar gatoliked pere hou deuz bet ann eur-vad bete henn d'en em viret diouz ar chism. Alian e rann ac'hano'h holl da genderc'hel ha da diwall da goll kalon. Na souezet ket evit gwelet ann enebicrou hep niver a gefet oc'h ober hou holl dleadou a gristen. Goapaet a vefet hep mar, disprizet ha marteze zoken heskinet : da vianan lec'h hoc'h euz d'en em c'hortoz da gement-ze ; mes n'en em c'hlaç'haret ket evit-se. Enn enep, bezet laouen da gad eunn tu bennak da c'houzany evit Jezuz-Krist. Hen en deuz gouzanvet evid-omp holl, daoust d'he holl dianteged. Ni a gle ive gouzany evit he vrasan gloar, abalamour d'hon sec'hejou. Ne reomp evit-ze, nemet heuil ar Zent hag ar Zentezed pere ne int arriet ebarz ann Env, nimet

dre hent ar poaniou. Ar groaz eou lod gwir diskiben Jezuz-Krist. Kalounekaet eta da dougen houe'h hini warlerc'h hini ar Zalver keeluz-ze. Ar poaniou dimez ar vue reuzeudik-man a dremen fonuz : mez gopr ar re pere hou dou gouzanvet anhe gand habazked, ne dremenou bikenn. Evuruz, eme hon Mestr, ar re a c'houzany heskin abalamour d'ar gwir, d'he ez eou Rouantelez ann Env. — Sonjet aliez ebarz ar Rouantelez evuruz-ze, ha tennet talvoudigez dimez ann darvoudou reuzeudik enn pere en em gefet, evit he dellezout. N'ankoet ket penoz ar gurunen heurbaduz ne d-eou gwestlet nemet d'ar c'hendalc'h. Goulet eta diant ann Otro-Doue, ar ro talvouduz-ze. Kresket hou pedennou hag houe'h oberiou mad evit esaet hen habaskaat. Sel vu a plij gant-han arnodin ho fealded, seul vu a kleet azeulin he lezennou, ha poket a galon vad d'ann dorn pehini a gastu ann denved, kenkoulz ha ma kasti ar Bastored. Marteze e eou tostoc'h d'imp evit na sonjomp, ann amzer dimez he drugare. Mes daoust pegen pell a ouffe bezan, ne gollet ket evit-se fians. Ar hobl dimez a Israel, diweret dimez ar frealzidigez da ganan meulodiu ann Otro-Doue, ebarz ann templ dimez a Jeruzalem, dalc'het enn sklaverez hag heskinet ebarz ar ger a Vabylon, ne gollaz biskoaz ar gortoz da welet sevel aneve he relijion zantel, pehini a oa bet lamet dre urz ar Roue direiz Nabukodonozor : mes da c'hortoz a oa gwell gand ar hobl-ze gouzany ar bra-



san gloasion, ken evit dirogan ann Otro-Donc, ouz 'n eur gemer lod ebarz ar falz relijion dimez ann dud, enn mesk pere a vevent. Groet eunn hevel dra, ha da c'hortoz ma plijou gand hon Mestr braz sellet a drue ouz he Iliz, heuliet giz d'ober ar bobl glac'haret-ze, dre houc'h habaskded, hou tousder, hou hegaradded, hag ann dilez krenn ac'hanoc'h hou-unan da lezenou ann Otro-Donc.

Ann nebeut a lec'h pec'hini a chom gane ne lez ket ac'hanon da gomz ganac'h ouzpenn, war eunn dra ken talvoudek.....

Groet, mar plij ganac'h, ma gourc'hemennou d'hou tad, d'hou mamm, d'hou preuder, d'hou c'hoarezed, da Vari Boizel hag he zud, da Renean ann Touten hag he re, d'am C'harit Dauphin ha d'he re, da Louisan, da Fanchon ha d'he c'hoar, da Ervoan Logivy ha d'he niz Fransez, da Vari ar Barz ha d'he zud; da dud Kerdangy (Derrien), Keramon (Richard), Kervulgen (Durand), Kaztelpik (Peron), d'ann daou Jillez (ann Trevo), enn eur gir d'ar re dimez ma c'herent ha ma mignoned dirak pere a kefet mad lenn ar pezh a skrivann aman. Ne gomzann d'ac'h na dimez a Gerojel na dimez a Gergonan (eno a oa he vreuder hag he c'hoarezed), skrivan a rann d'he dre ann hevelep tro. Pedet ma C'harit (he c'hoar) da diskon d'ac'h ar skrid pehini a gasann d'ehi. Leret da Izabell Gere penoz eou iac'h he breur: ma gourc'hemennou d'ehi, evel d'he zud, Katek Thomaz,

Katek ar Meur, Mari Durand, etc.... Leret da dud dom Jann (Derrien), penoz ne man ken ho breur aman: tremenet eou ebarz enn Spagn, war dro dek zun zou. Pe hou pou tu da welet ann hini deuz ma mignoned a zou distroet enn hou mesk (ann Aotrou Richard), saludet anban dimez ma feurz. Erbedin e rann ac'hanoc'h holl d'ban. Pa gefinn eunn darvoud otreuz bennak, ne fallim ket da ober ar pezh en deuz groet. Da c'hortoz ann de everuz-ze, en em erbedann d'hou pedennou ha da re ann holl dud feal dimez ar barrouz: kredet penoz ne oc'h ket ankoact ebarz ma re: ne onn pell diouz-hoc'h nemet a gorf: aliez ho kwelann holl a spered, houc'h erbedin e rann bemde d'ann Otro-Donc, dreist-holl, ebarz ar Zakrifiz santel dimez ann Ofern. Da zul ha da vouel hen kinnigann dreist pep tra, evid-hoc'h holl: unanet, me hou ped, hou mennoz gant ma hini; ne hellann ket lakat d'ac'h d'ar gwir, ann amzer enn pehini am euz ann eur-vad d'he laret; a voejou a ve kent, a voejou a ve divoezatoc'h, dre ma omp kalz ouc'h ober gand ann hevelep gwisk-sakr; mes ann eur a peurliesan, eou enntre seiz hag eiz. Ann anaoudegez-ze goude holl, a zou dimez a nebeut a dalvoudegez evid-hoc'h, pa eou gwir ann holl veleien all gatolik a lavar, kenkoulz ha me, ann Ofern evit ar gristenien feal pere a zou heskinet. Ouz 'n eur drein eta hou mennoz a zalek ar beure, evel m'am euz han hel laret diarok d'ac'h, a hellet n'euz forz enn pe heur



bete kreiz-de, bezan kevrennek ebarz enn eunn Ofern bennak enn pehini oc'h euz eul lod d'ac'h houc'h-unan.

Ma faper ne lez ket ac'hanon da gomz d'ac'h na dimez ma iec'hed, na dimez ma stad ebarz er vroman; market am euz ze d'am C'harit (he c'hoar), gant pehini hen diskefet. Kenavou, ma merc'h kez, gras d'imp holl da vezan krenv ebarz ar Fe, ha da c'houzanv gant kalon ha doujans, abalamour d'ehi.

— SKLERIDIGEZ. —

Piou na gredfe ket goude kement-ma, beza lennet unan euz lizerou sant Paol? ha piou ne zonzfe ket klevout ann Abostol braz-ze, enn divez he lizer d'ar Romaned, oc'h ober he c'hourc'hemennou da Vari; da Ampliaz; da Appell; da dud ti Aristobul; da Herodion he genderv; da dud ti Narsiz; da Dryphen ha da Dryphoz; da Bersid; da Rufuz ha d'he vamm, ha da veur a zen mad all pere a oa e Rom?

Ar garantez gristen a zo leun a deneridigez evit kement a gar Doue e gwirionez, ha n'ho ankoua ket, daoust peger pell en em gav diout-ho. Ann Aotrou ar C'halvez, entanet euz ar garantez-ze, a zal'e he em he galoun, evel sant Paol, ar sonj euz a dud vad he barrez, hag en deuz ive evel-t-han, desket hou hanoiou dre he lizer.

Eunn nebeut goude ma oa arruet al lizer-man enn Iviaz, ann hini en divije klevet lenn anezhan d'eur bagad tud en em zastumet dindan eur wezen, enn eur loch, pe enn eul leac'h distro bennak, ha kement-ze a hed ann noz, ha peurvuia

oc'h sklerijen eur c'houlouen rousin, en divije kredet beza ebarz ar c'heviou hag al leac'hion kuzet-ze e pere, ar gristenien genta heskinet, a oa ive rediet d'en em denn, pa fello d'ezho en em zastumi evit pedi, lida ar misteriou, ha lenn etrez-ho skridou ann Ebestel. — Nag a weach ez eo bet lennet lizer ann Aotrou ar C'halvez, dindan eur gistinen vraz a oa e liorz Kervulgen, hag enn eur brouskoat a zo e kichen, ha donr tro-war-dro d'ezhan! Eno enn nosvesiou hanv, tud koz ar skrivagner a zastume ann dud vad a dro-war-dro, ha pa ne vije klevet ken trouz nemet kan ann Eostik-noz er c'hoat, pe rak-rak ar raned el lagennou, e lennet d'ann dud keaz-ze al lizer-man, pe eur skrid all bennak, evit ho c'hentelia hag ho frealzi enn ho foaniou. Nag a weach ive a zo bet oferennet dindan skeud ar wezen vraz-ze, war eunn aoter savet buan ha buan!

Pebez plijadur am euz-me bet em bugalerez, azeet e harz ar gistinen-ze, o klevout va zad koz, o tanevella d'in ann traou tremenet dindan hi!! « Aman a reaz da dad he bask » kentan : aman e oe eurenjel Pipi vraz; badeet eur hugel » da Iako..... Ann Otrou Richard (*marvet viket vraz a » Zant-Briek*); ann Otrou Auffret (*marvet person enn » Plegian*); ann Otrou Toullik (*marvet person enn Ploe- » zal*), tremenet ho zri, da gentan da Jerzea, mes distroet » hep dale d'ar vro, a zeue aman aliez, hag e keit ha ma » veent, e vije great kement-ze holl. Mil bennoz d'ezho, rak » hi hon frealzaz e pad ann *Dispac'h*, pehini a dremenaz » brao awal'h evid-omp. Biscoaz ne deuz den d'hon hes- » kina: gwir eo, e renkiz evel ar re all, mont gant ma » c'harr, da gas ed da Zant-Briek ha da Dinan, hag ober » meur a dra hag a dra all, mes kement-ze holl a sellann » evel man, en skoaz ar gwastadur, ar prison, ar maro..... » pere a zo bet gouzanvet gant meur a hini: Doue hag ann » Itrou Varia Cerfot hon diwalle, mes ive bemdez en em » erbedemp d'ezho. »



Re hir a ve lavarout ama, holl werseennou va zad koz Alan, maro brema a zo dek vloaz, d'ann oad a c'houec'h vloaz ha pevar-ugent. — O tudou koz, mont a rit kuit digant ho pugale vihan! N'ho kleofomp ken, siouaz! azeit e korn ann tan, enn nosvesion goan, pe dindan skeud eur wezen bennak, enn nosvesion hany, o tanevella ar burzudou great gan-e-hoc'h ha tremenet enn hoc'h amzer, evel ivez ar poaniou hag ann heskin ho poe da c'houzany e pad ann Dispac'h! Ann divez euz ho puez a dosta, lia bemdez ec'h arru evit unan bennak: Doue ho kalv d'ho kopra evit ho vertusiou hag ho poaniou: Ah! tudou koz, pa renkomp ho koll, renit, renit eta gant Doue, ha galvit daved-hoc'h, ho pugale!

Ar skrid-dorn euz al lizer-ma a zo bet kavet enn touez paperou Anna ann Eskob, euz a vourc'h Iviaz: d'ezhi eo e teuz ivez eunn-hag-eunn, euz a Vro-Zaoz: hirio ema ar skrid gand ann Aotrou ar Rolland, Kure enn Iviaz. Hen eo en devoa he gavet, hag hen en deuz bet he roet d'in. — Anna ann Eskob a zo maro, eur maread-amzer-zo, enn tro ann oad a bevar-ugent vloaz, ha marvet eo evel ma vary ar re a ve bet bepred feal d'ar feiz hag ho deuz bevet e gwir garantez Doue. Ne gomzeur anezhi, nemed evel euz a eur Zantez.



## ANN AOTROU

NOURRI.

KENTEL.

E touez ar veleien breton pere a dremenaz enn 1791, pe 1792, d'ar Spagn, d'ar Portugal pe da Vro-Zaoz, en em gave ann Aotrou Nourri, persoun parrez Bignan, enn Eskopti Gwenned. He-man, evel ann Aotrou ar C'halvez, ha kalz a veleien all, a boaniaz euz he harlu, da gentelia he barresianiz: chetu aman goude, ar werz hirvouduz a zigasaz d'ezho.

❖❖❖ XVII. ❖❖❖

KANAOUEN DA DUD PARREZ BIGNAN.

(IEZ GWENNED.)

*War eunn ton anavezet.*

Cheleneu ur Person a Eskopti Gwenned,  
Pell doc'h er roanteleac'h eit ar Fe forbannet:  
Pell eu a gorf doc'h hoc'h, mez he impinion  
A zou perpet gen-hoc'h kerkouls 'el he galon:



Aoude enn amzer kri ha diskonfortuz  
Ma onn pellet doh hoc'h dre urzeu truehuz,  
Dirak men deu leged perpet holl hou kwelann,  
Hag ar hou poenieu noz ha de e wilann.

O de lan a c'hilac'har, ha de lan a driste!  
En de me distaget doh hoc'h, me bugale:  
O kimiad glac'haruz! keit ha ma veveinn  
M'em hou sonj ann e-oud; biken ned ankoueinn!

Aval doh Jeremi pe doh er geh Juived,  
Er ger a Vablon pell amzer sklavehet,  
Pamde, enn ur sonjal e holl hou poenieu,  
Get houlenneu er mor e kajann men dareu.

A ur roc'h azciet, me unon, tal enn od,  
E wilann get glac'har, ha glubann men deu-chod,  
Ha glubann men deu-chod, siouah, get men dareu,  
Enn eur zonz ann e-hoc'h em oc'h trez er morieu.

O tud vad benniget! men ema oet arze  
Enn amzer euruz hont me havec'h bamde,  
Eit kleuet konz Doue, ha diskarg hou kalon,  
Hag eit hou konfortein dre er gomunion!

Ha mem bugale geh! e pe stad e hoc'h-hui?  
Hui em goulenn bamde ha n'em c'havet ket-mui;  
M'hou koulann a me zu; mes, o peh hun drue!  
Ne c'houez ket mui a dad, na me a vugale!

O keh devedigeu! petra vou a hanhoc'h?  
Piue hou konforto, piue rei sikour d'hoc'h?  
O Jezus? bugul mad, hou pet sonj anehe,  
Hag astennet ho torn e bep amzer d'e-he.

Isprideu euruz, o Sent ha Sentezed,  
Ha hui Rouanez enn ean, chomet get he berpet!  
Reit-hu d'e-he sikour enn hou oberieu,  
Ha reit konfort d-e-he e holl hou zrebileu.

O deuar a Vreich-Izel, o va bro glac'haret!  
E pe mor a gloe e oud-de bet tolet?  
Gwech-arall e ouez brao, joeuz, ha leuen;  
Bremen e ez mantret, siouach! ged enn anken!

Ur vanden treitourien hemp fe hag hemp lezen,  
En dez da ziorblet ha laket peb-eil-benn;  
Lammet hou dez gen-id holl joieu de galon;  
Forbannet Eskobed, menec'h ha beleion.

Eskobed, beleion ha menec'h, forbannet;  
Ged el leanezed er vro holl dilezet;  
Tamm oferen bet mui, ha tamm sakramanteu,  
Hag enn drein e kreskein enn hun ilizieu?

Licherieu enn oter, kroez ha kaliz sotret,  
Ha get-he ar c'hleier e pep parrez leret;  
Enn Iliz e begin, a he madeu forhet;  
Hag enn armel santel keh Jezus forbannet.



Sotret eu enn Iliz; leket d'ur marchosi,  
Kouls hag enn oter-vraz de un dol a zibri;  
Er gwir krechenion, enn dud vad e welein,  
Hag ar re fall bep le, bep le oc'h ho goanein!

O men Doue, fachtet oc'h a-c'hoz d'hun pec'hedeu!  
Ni unan zo kiriek de holl hun poenieu;  
Pa vemp fidel d'e-hoc'h, e vec'h fidel d'e-omp,  
Pelleit omp-ni doh hoc'h ha hui bella doh omp,

Enn hou gourdrouz, neoah, leun oc'h a vadeleach,  
Hag e-kreih hon anken, hui genik d'imp er peah.  
True! men Doue! True, ni zou hou pugale,  
Deuz ann droug hun ez groet distolet d'omp arze!

D'er rouanteleah holl, d'enn Iliz glaharet,  
Daskoret, men Doue, hou madeleah, abred.  
Hou pet truhe doh omp, o Doue a garante,  
Daskoret d'imp er peah, daskoret d'imp er Fe.

Pe gourz e vehemp-ni, bugulion ha denved,  
Eit hou melein, men Doue, el a-gent. dastumet?  
Pe gourz e tei enn de de sehein hun daereu,  
Ha de ganein gloer d'hoc'h enn hun ilizieu?

O de a eurusted! o de lan a zouster!  
Me sonj a zou gen-id peb heur ha pep amzer.  
O Doue a vadeleah hastet ann termen-ze,  
Eit ma hellinn-me hoah gwelet mem bugale!

Ke, kanen hirvouduz, konfort a me spired,  
Ke, ha lar de me fobl, holl me glac'har kalet.  
Douget-hi, eled mad, ha leret mad d'e-he,  
E ma ha de ha noz holl me sonjeu get-he.

Turhuel, estik-noz, get enn amzer neuc,  
E iechet de ganein doh dor mem bugale;  
Ha perak ne hallann neinjale eue gen-hoc'h,  
Eit monet, dreist er mor, bed hon bro, avel hoc'h?

Ah! groeit aoel em lec'h, kanet a bouiz hou penn :  
— Dalc'het mad doh er Fe, dalc'het doh hou lezen!  
Ha groeit d'e-he reskont : — Ni zalc'ho doh er Fe!  
Kentoc'h meruel milgwech eid ankoueat hun Doue!—

---

— SKLERIDIGEZ. —

Eunn tad hag a gomze ker kaer ouc'h he vugale, a diebeza  
karet gant-ho : evel-se, da vare ar peoc'h, pa zistroaz ann  
Aotrou Nourri da barrez Bignan, tud ar barrez-ma a oe holl  
karget a levenez : diredek a rent evit her gwelout : holl ho  
devoa c'hoant da zournata he zae : holl en em strinkent d'he  
dreit evit beza benniget gant-han. Kavout a reant a nevez  
ho zad hag ho frealzer : he-man a gave he vro hag he vugale.



# AL LIBERTE,

ANN EGALITE HAG AR FRATERNITE,

PE

AR FRANKIZ, AR C'HEID-MA-KEID, HAG AR VREUDEURIEZ.

— 1793 —

KENTEL.

Ann *Asamble Nasional* a zougaz eul lezen dre behini e tisklerie e oa *frank*, *kevatal* ha *breudeur* ann holl C'hallaoued. Evel-se evit keida ha kompeza Bro-C'hall, e torraz holl wiriou ar veleien, re ar vened'h, re al leanezed ha re ann dudchentil : goude e kemeraz hag e werzaz ho madou. Ne oa ger da lavarout, ha nep a felle d'ez-han enebi tamm, a vije harluet euz ar vro, ha ma ne dec'he ket raktal, pe mar distroec goude beza tec'het, e vije lekeat d'ar maro, mar hellet her paka.

Ar *Gouvansion* a gavaz al lezennou-ma euz ar gwella, hag ho sevenaz c'hoaz gant mui a c'harventez, evit n'e doa great ann *Asamble*, mes en eur brezegi bepred a dorr-penn, e oa *frank*, *kevatal* ha *breudeur* ann holl C'hallaoued, Chetu ar vez a zo goapeet ama goude.

●■■■ XVIII. ■■■●

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Aotrou-Doue* holl c'hallouduz. — 78.

Mar plij ganec'h e selaoufet  
Eur ganaouen a neve c'hret,  
Diwar benn ar madobero  
Rouanez vraz ann holl boblio :  
Kriomp holl a greiz hon c'halon :  
Bebet, bebet ann Nasion !

Gwechall n'hon devoa, ma zud kez,  
Nemet Kernez ha Sklaverez ;  
Ha gwechall mac'herien digar  
A re d'imp-ni kalz a c'hlac'har :  
Dibennet ez eo bet Louiz,  
Goneet hon euz ar frankiz.

O frankiz, d'imp ken dudiuз,  
C'houi a zo eur ro estlammuz !  
Bremen ez eo mestr pep hini  
Pe vad, pe fall d'en em reni,  
Da lazantado ha mammo ;  
Ar gwallo 'zo deut vertuio.

Gallout a ret kuitat Bro-C'hall,  
Ha mont da glask ho mad lec'h all ;



Mes war roll ar re 'zo tec'het  
Raktal hoc'h hano 'vo douget ;  
Koll a refet hoc'h holl danve ,  
Ha mar distroet , ho pue.

Gallout a ret bevan e peuc'h  
Gand ann holl vado 'zo d'e-hoc'h ,  
Bete ma vezo enklasket  
Ar pez ho pezo dastumet ,  
Ha mar karet al *Liberte* ,  
N'ho po keu ebed d'ho tanve.

Gant grad vad ann holl C'hallaoued  
E ve al Lezenno douget ;  
Mes mar c'hoantaet chom er vro ,  
'Vefot kaset war ann harzo  
Evit rein eno ho puez ,  
Da ziwalloud ar fallantez.

Frank ann holl relijiono  
Herve ma lar all lezenno ;  
Mes mar dalc'het mad d'ho Toue  
E ver 'nn ho kenver didrue ,  
Ha mar taper ho peleien  
E vezo troc'het d'he ho fenn.

Ne d-eo ket difennet redek  
Da glevout dom Iann o prezek ;  
Diouz ar brezeg en deuz gret  
E renkomp dreist pep tra karet

Ar *Republik* , ha goude ze  
Mar plij gan-emp-ni , hon Doue.

A neve ar *Sitoianed* ,  
Doueo all ho deuz kavet ,  
*Liberte* hag *Egalite*  
Hag ouc'h-penn , ar *Fraternite*  
Nep dira-z-ho ne stouo ket  
A vo hep dale pell barnet.

Ma Doue , 'vel ar Verzerien ,  
Grit d'imp chom feal d'ho Lezen :  
Jerret eo ann holl ilizo  
Pe dismantret gant diaoulo :  
O *Liberte* ken dudiu ,  
C'houi a zo eur ro estlammuz !

Me ra d'ec'h stou , *Egalite* ,  
Hag her gra a greiz ma Ine ;  
Ken enoret , ker pinvidik ,  
Ker galloudek , ker gwenvidik  
'Vezo ann eil hag egile  
Breman dre ann *Egalite*.

Evit ma vo plen azeet  
'Eo ann dudchentil diskaret ;  
Hag ar markiz a Lann-Askol  
'Zo het kaset da blantann kol :  
E lec'h ar markiz diskaret  
Markizien neve 'zo savet.



Perag ann holl geraouegez  
Demeuz a saon Marseillez?  
Enn eun nozvez diwar ann teil  
E zo diwanet tudchentil.  
Ar zaon koz ne d-eo netra  
Evit gallout ho difanka.

Oh! ia ma halfent divesian  
Hon tado da zont er bed-man,  
En em gafent gwall souezet  
Pe deufent neuze da welet  
Merc'hedigo ar pitrouliez  
Goloet holl gant dantelez.

Gwechall gourc'hemanno Doue  
A lake ar zul bep eiz de;  
Ann dudhentil breman 'gav mad  
Berzan hep man ken ann Dekad;  
N'ho devoa ket a rochedo  
Da hellout kemm d'ann holl zulio.

Trohet ho deuz ho bleo e-giz  
Ma oa gwechall tud a Iliz;  
Ho diskoarn 'zo disoloet  
Da ziskuez ez int azened:  
Koulz ho bleo, ho arc'hant 'zo berr,  
Na hellont mu kaout barver.

Ann dimezelled kerkoulz all  
Lindaget gant ar spered fall,

Ho c'broc'hen enn noaz 'zo fardet  
Evel, er c'hoc'hu, kik loened;  
Da guzan al lao enn ho fem  
'Renkont kaout eur berruken.

E lec'h arc'hant 'zo bet paper  
Distolet avern, e pep ker;  
Ar paper 'zo kaset da goll  
Evit pinvidikat ann holl:  
Dre c'halloud ann *Egalite*,  
Ker paour e 'nn eil hag egile.

Ar *Fraternite* a lavar  
Ec'h oc'h ma breur, ec'h oc'h ma c'hoar,  
Hag e tleomp poket gant joa  
Zoken d'hor bourrevien grisa:  
Na gand hevelep prezegen  
Perak dismantran hol Lezen?

Homan, dre wir, a bresege  
Gwelloc'h evit *Fraternite*,  
P'hini e lec'h ann unvaniez  
A zismantr ar Rouantelez;  
Ar garante 'zo harluet  
Euz a douez ar *Sitoianed*.

War ho penno, ho touaro,  
E zo breman laket gwirio,  
War butun poultr hag andoulien  
Ha war bep bleven deuz ho penn,



War breneſto, chiminalo  
Evel ive war dorajo.

Pelec'h 'ta man ann eurusted  
A zo bet d'imp holl diouganet ?  
Enn *Asamble Nasionall*  
N'euz nemet tud direiz, tud fall :  
Ken a vo tud leal eno  
A veor reuzeudik 'barz ar vro.

— SKLERIDIGEZ. —

Enn divez miz Gwengolo, 1792, ar re a oa e karg, pe ho devoa pae digant ann *Nasion*, a oe rediet d'ober al Le da genderc'hel al *Liberte* hag ann *Egalite*, pe da vont d'ar maro evit ho difenn. — Dre c'halloud al Lezen-ma, ar veleien hag ann dudchentil a oe *kaset da blanta kaol*.

Ar ganaouen a zo aman diaraok, a zo bet roet d'in, gand ann Aotrou Ledan, Moular e Montroulez.



## AR REKIZISION,

PE AR GOULENN BRAZ

A DUD A OE GREAT E 1793.

### KENTEL.

Eul lezen euz ar bevar war-n-ugent a viz C'hoevrer, 1793, a zouge ma vije savet tri c'hant mil den. Evel ma oa ann dud dimezet er meaz euz al lezen-ze, e timezaz kalz evit tec'hout diout-hi; mes renkout a rejont mont d'ar brezel evel ar re all, ha ze ebarz ann deiz kenta a viz Ebrel, 1794. Diboblet a oe, evit lavarout mad, ar vro euz a dud iaouank. Euz a barrez Plouaret e tec'haz, enn eunn hevelep deiz, daouzek a nao ugent den. Kement a dud o kuitaat a bep tu, hag hep gortoz ebet da zistrei d'ar gear, a lekeaz ann holl e tristidigez hag e kaoun : kement-ze ivez a roaz leac'h da sevel ar ganaouen a heul. —

❦❦❦ XIX. ❦❦❦

### KANAOUEN AR REKIZISION.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Peur eta o va Douc.* — 63.

Kantren e rann ma spered a bep tu dre ar vro,  
Gwelet e rann ar ploue, ha baie er c'herio,  
Hag enn pep lec'h e kavann ann dud 'barz ann enkrez  
N'ez euz ken nemet glac'har dre ar Rouantelez.



Ar penn-grisien gontammet deuz kement a boanio  
A zo ebarz enn Pariz enn zall ar c'hannado ;  
Ac'hane 'eo diridet ar venjans, ann drougiez  
Ha kement displealded a c'hlac'har hon bro gez.

Ah ! tro Doue, ma breuder, c'houi a zo bet touellet  
Gant al lezenno neve 'harz ar stado savet,  
Ma karjac'h bezan sentet ha heuliet hon c'homzo,  
Ho pijs bet pareet kalz anken ha kollo.

Everusted ha trok vad a oa d'ec'h diouganet,  
Laret a re ar stado a vijac'h diskarget,  
Da bean deok, preveudi, na gwirio all e bed,  
Mes dre otre eunn Doue, ar gin 'zo c'hoarvezet.

Douget a zo eul Lezen, hag embannet er vro  
Ez oc'h holl d'ann *Nasion*, c'houi, hag hoc'h holl vado,  
Stoup, ed, arc'hantha loened, n'euz ken d'ec'h man ebet  
Renket 'refet ho digas, pa vezoint goulennet.

Evel ann den zo hanvet el Levr misteriu  
'Oc'h laket gant ar stado paour-du ha dizeuruz,  
Gant frankiz, evit bevan e rojoc'h hoc'h Ine,  
Ha breman hoc'h euz roet ann eil hag egile.

Mez klevout komz ac'hanhoc'h, ha mez eo ho kwelout,  
Ouzpenn mez 'eo hoc'h ansav, ha mez eo ho klevout :  
Pa reet brezel d'ann ene, c'houi a diskoueze da,  
Pa reer brezel d'ar mado ne ret nemet gwela.

Re diwezad a welet, n'ez euz ken a louzo,  
Abeg oc'h bet d'ho tizeur o tifenn ar stado :  
Eunn acr hoc'h euz bet maget war boul ho kalono  
A deu breman d'ho flemman, da rein d'ec'h ar maro.

Diskleriet 'eo ar brezel, goude rein ho mado,  
Erenkefet rein ho korf, hen kas d'ann emganno,  
Hag evit ho kwanerez e kollfot ar vue  
Ebarz ann tan estlamuz a venjans eunn Doue.

Klevout a rann ann toksin o son er parrojo,  
Hastet buan, a grier, mont dindan ann armo :  
Kimiad ! eta priejo, red 'eo mont d'ar brezel ;  
Nep a garemp ar muan e renkomp dilezel.

Nag a bried o welann ouz en em enkrezin,  
Na reont nemet gwelan ha dinae'h da zibrin :  
Hanval ouz ann durzunel pa ve kollet he far,  
Eve mantret he c'halon, rannan 'ra gant glac'har.

Ann tado hag ar mammo a hirvoud hag a wel  
Braz 'eo ar c'haon a reont peb hini d'he vugel :  
Ann douar hag ho dillad, ho gwele hag ho boed  
Gant ann daero a skuliont, a zo noz-de gblehiet

Hanval ouz tad ann Trezer e rafent eur banvez  
Ma wellfent c'hoaz ho bugel, distroet enn ho zouez ;  
Mes ar zonz ez eo maro pe lazet enn emgann  
E ra d'he gwall galonad, e ra d'he kalz a boan.



Ar vamm-ze dreist d'ar re all en em ra d'hec'h anken.  
O sonjal enn he c'halon na welo bikenn ken,  
Ar bugel e deuz ganet ha gand he lez maget,  
Hag enn tre he daou goste, e pad nao-miz douget.

Ah! ma bugel, eme-z-hi, c'houi a re ma gorto,  
Piou em frealzo breman, na piou em skoazello!  
Hag hen a ve nep anken ker braz war ann douar?  
Red a ve bezan bet mamm, kent poellan he glac'har.

Abeg hoc'h euz, mamm dener, gwirion eo ho klac'har  
Eur bugel mad a gollet, na geffot ket he bar :  
Hep mar ho pije kavet eunn den d'ho frealzi,  
Hag en dije roet d'ec'h skoazel enn ho kosni.

Ne d-eo ket c'houi hoc'h-unan a hirvoud hag a wel,  
Kevret gance'h a c'houzanv kalz deuz a dud santel  
Pere 'doler da vreinan dre holl 'barz ar bac'hio  
Ha n'ho deuz evit holl gwall nemed ho vertuo.

He-man 'zo c'hoaz eunn dizurz, hag ar bed distroet,  
Frankiz vraz d'ann dud kabluz, d'ar re vad grad ebed,  
Kavallet hag heskinet 'int dre holl dre ar vro  
Kalz 'zo o c'hortoz ho barn da vonet d'ar maro.

Chetu aman ann termen da laret ho klac'har :  
Ne vo pelloc'h gwerz ebed war vor na war zouar :  
Kimiad da bep plijadur, ha d'ar binvidigez !  
Avein 'rer da Vro-C'hall ha reuz vraz ha Kernez.

Kouezet 'eo eta war-n-omp ar walen a enkreuz,  
Karget ez omp a groazio, a ganv, a wanerez.  
Gouzanvomp gant habaskded, pokomp d'an dorn hon  
Chetu aze al louzo a wellai hon poanio. [sko :

— SKLERIDIGEZ. —

Beteg ann tenna braz-ma, ann dud diwar ar meaz a oa bet  
eunn tamm espernet, rak ar geariz a roe soudarded d'ann  
*Nasion* : mes evel ma fellaz neuze d'ann dispac'herien kemer  
holl ar blouiziz, ar re-ma a zavaz enn ho enep, enn eul lava-  
rout penaoz e oa d'ar re ho devoa kemeret ar madou a oa  
mont d'ann emgann, ha pa ne oa ken a Roue, ne oa ivez ken  
a lezen. Evel-se, er bevarzek a viz Meurz, deiz ann tenna e  
Gwenned, kear a oe emgannet gand ann dud iaouank. Pa oe  
great d'ezho goulenn diwar benn kement-ma, e lavarjont :  
Kaset hoc'h euz kuit hor beleien, ha lazet hon Roue : fellout a  
ra d'imp kounta gant ann *Nasion*, ha gouzout dre be wir e  
fell ivez d'ezhi hor c'has brema d'he servicha. — Enn deiz-ze e  
tesket e Gwenned, penaoz *Distrigou* ar Faouet, Pontivi,  
Alrea, Hennebon ha Ploermel ho doa ivez kemeret ann ar-  
mon, hag e oa e Plourai, e Ploumeliau hag e Langouelan,  
roet ar c'has da vistri ann tenna. Antronoz ar Roc'h-Bernard  
hag Ambon a zo emgannet gant ar re Wenn : Dubernard a  
frik goude gward-nasional Pontivi, hag a oa o vont da gemer  
ar gear-ma, pa arruaz re c'hlaz Josselin, Loudeak ha Gemene  
d'he sikour.

Tud iaouank Plabennek, Lanniliz, Lesneven ha Lanterne,  
a gaz ive araok mistri ann tenna. Korbet euz a Lambezellek,  
a oe zoken lazet. Ar jeneral Kanklau, o klevout kement ma,  
a ia euz a Vrest da Gastel-Paol, gant eunn niver braz a zou-  
darded : kannet ez eo gant ar blouiziz : tud Plouzevede hag



ar re a ziwardro a deu da sikour ho breudeur, renet gant ann daou Kerbalanek : en em ganna a reont e Pont-Kergidu, ouc'h Kanklau hag he re, enn niver a c'houec'h mil, ha koll hep koll : seiz deiz goude e kemeront Roskoff, pehini a oe kemeret a nevez gant Kanklau. War-ze, he-man a lekeaz he soudarded da veza maget ha paet e parresiou Kerlouan, Kleder, Guisseni, Plougerneau, Plougouln, Plouneventer, Ploudaniel ha Sibiril ; mes ar re-ma a baeaz eur gwir, hag a oe lezet sioul. Ar peoc'h great aman, ne redie ket ar re wenn all da blega, ha ne blekjont ket.

— Ar re c'hlaz a askemer ar Roc'h-Bernard lia goude ez eont da stourmi ouc'h ar re wenn da Sant-Perreu, d'ar mare ha ma oa ar rema o vont da gemer Redon. — Neuze e oe lezet ann tenna hag e teuz eunn tammik peoc'h.

Ar ganaouen a zo aman diaraok a zo bet savet gant ann Aotrou ann Hermit : roet ez eo bet d'in gant Mari-Iann ar Garz, euz a Grec'h-Mouded, e Plouaret.

---

## AR GOMPODERIEN

NEVEZ.

---

— 1795 —

---

KENTEL.

Donedigez hon Zalver Jezuz-Krist, pe hini evit laret mad, a roaz eunn eil gwech ar vuez d'ar bed ma, ne oa dirak Lezennourien 1793, nemed eunn dister dra e kichen *Republik*

Bro-C'hall. Evel-se eul lezen euz ann daou war-n-ugent a viz Gwengolo, a gemennaz ne vije ken, evel diagent, niveret ar blavesiou, euz a c'hanedigez hon Zalver, mes euz krouidigez ar *Republik*. Hou-ma a oe savet, enn eil war-n-ugent a viz Gwengolo, 1792. Enn deiz-ze ivez, da hanter noz, e teraouaz ar bloaz kenta euz *Republik Gall*, evit padout beteg ann hanter noz, euz ann eil war-n-ugent a Wengolo, 1793.

Ann hevelep lezen a rannaz ivez ar bloaz enn daouzek miz a dregont deiz pep hini. Mes evel daouzek gwech tregont, na reont nemet tri c'hant triugent, ar pemp deiz a choume a oe galvet deision *Sans-Kulot*, pe deision *Divragez* : ann hano-ma a zeuz d'ezho, euz ar *Sans-Kuloted*, da c'houzout eo, ann dud divragez ha fall-ze pere a wastaz hag a gollaz Bro-C'hall. Pep hini euz ann deision-ze a oa eur goel braz. Er bloaz biseost, ar c'houec'hved devez a vije galvet, de an *Dispac'h* : enn deiz-ze ar bobl a rea a nevez al le a lealded d'ar Republik.

---

MISIOU ANN DISKAR-AMZER.

Vendemiair, miz ar vendem, a zalc'he ann nao deiz diveza a Wengolo hag ann unan war-n-ugent kenta a Here.

Brumair, miz ar brumennou, a zalc'he ann dek deiz diveza a Here hag ann ugent kenta a viz Du.

Frimair, miz ar frimm, a zalc'he ann dek deiz diveza a viz Du hag ann ugent kenta a viz Kerzu.

MISIOU AR GOAN.

Nivoz, miz ann erc'h, a zalc'he ann unnek deiz diveza a Gerzu hag ann naontek kenta a C'henver.



Pluvioz, miz ar glaoiou, a zalc'he ann daouzek deiz diveza a C'henver, hag ann triouec'h deiz kenta a C'hoevrer.

Ventoz, miz ann avelou, a zalc'he ann dek deiz diveza a C'hoevrer hag ann ugent kenta a Veurz.

MISIOU ANN NEVEZ AMZER.

Jerminall, miz ar c'hellid, a zalc'he ann unnek deiz diveza a Veurz hag ann naontek kenta a Ebrel.

Floreal, miz ar bleun, a zalc'he ann unnek deiz diveza a Ebrel hag ann naontek kenta a Vae.

Prairial, miz ar prajou, a zalc'he ann daouzek deiz diveza a Vae hag ann triouec'h kenta a Vezeven.

MISIOU ANN HAN.

Missidor, miz ar mederez, a zalc'he ann daouzek deiz diveza a Vezeven, hag ann triouec'h kenta a C'houelen, pe a C'houere.

Thermidor, miz ann domder, a zalc'he ann trizek deiz diveza a C'houere hag ar seitek kenta a Eost.

Fruktidor, miz ar frouez, a zalc'he ar pevarzek deiz kenta a Eost hag ar c'houezek kenta a Wengolo.

Ar zizunioù, kaset da zek devez, a oe hanvet *Dekad*. Ann deisiou a hanvet Pridi, Duodi, Tridi, Kwartidi, Kintidi, Sextidi, Septidi, Oktodi, Nonodi ha Dekadi. Pe deiz kenta, deiz eil.....

Ann de dekvet, pe *Dekadi*, a oa deiz ann arzaou,

deiz hep peden nag ofiz, enn eur ger, sul ann dud dizoue. Gwa ha mil gwa da nep a labourje enn deizze : war lavar ar c'henta, e vije paket er bac'h : ann hevelep tra a c'hoarveze ive gant ann hini a dremene hep labourat ann deiz m'en em gave sul ar Gristenien vad.

En em gavout a re ebarz ar bloaz, c'houec'h Dekadi, pe c'houec'h sul nevez ha tregont. Chetu da betra a oa gwestlet pep hini anezho.

- 1 D'ann Hini-Huella ha d'ann natur.
- 2 D'ar bediz.
- 3 D'ar bobl gall.
- 4 Da vadoberourien enn dud.
- 5 D'ar re maro evit ar Frankiz.
- 6 D'ar Frankiz ha d'ar C'heid.
- 7 D'ar Republik.
- 8 Da Frankiz ar bed holl.
- 9 Da garantez ar vamm-vro.
- 10 Da gasoni ar Vac'herien.
- 11 D'ar wirionez.
- 12 D'ar gwir.
- 13 D'ann dinamded.
- 14 D'ar c'hloar ha d'ann hir-bad.
- 15 D'ar vignounac'h.
- 16 D'ann dilontegez, pe d'ar furnez enn dibri hag enn eva.
- 17 D'ar galoun.



- 18 D'ann eeunder.
- 19 D'ar galouniez.
- 20 D'ann distag e kenver he vad he-unan.
- 21 D'ar stoisism.
- 22 D'ar garantez.
- 23 D'ar fealded er briadelez.
- 24 D'ar garantez a dad.
- 25 D'ann deneridigez a vamm.
- 26 D'ann doujans a vab.
- 27 D'ar vugaleach.
- 28 D'ar iaouankiz.
- 29 Da varr ann oad.
- 30 D'ar gosni.
- 31 D'ann dizeur.
- 32 D'al labouradur.
- 33 D'ann ijin.
- 34 D'non tadou koz.
- 35 D'ar re a deuiou enn hor goude.
- 36 D'ann eurusted.

Hanoiou ar zent a oe lamet ive euz ar c'hompod hag enn ho leac'h e oe lekeat hanoiou loened, listri, binviou, hag hanoiou traou hag a denn ho magadurez hag ho c'hreskadurez euz a zruzoni ann douar. Pep pemved deiz euz ann Dekad, a oa skeudennet dre eul loen don; pep dekved deiz, dre eur benvek pe eul lestr bennak, hag ann deisiou e tre-z-ho, dre wez, louzou, mein a traou all a zo enn douar, pe a sav euz ann

douar. Evit loened e oe kemeret ar marc'h, ann azen, ann ejen, ar wazien, ar ponsin-indez, ar c'hi, ar c'haz, ar wenanen, ann danvad, etc..... Evit benviou ha listri, e oe kemeret ar veal, ar waskel, ar varikenn, ann alar, ann oged, ar bigel, ar ball, ar vann, ar c'hreur, etc..... Evit ann traou all e oe kemeret ar rezin, ar zafron, ann avalou douar, ann ed-du, ar c'hanab, ann eiz, ar glaou-douar, ar soufr, ar raz, ann holen, ann houarn..... Pep frouez ha pep louzou a oe lekeat da genver ann amzer ma vent dastumet; pep lestr ha pep benvek da genver ann hini ma ve labourer gant-ho, ha pep loen da genver ann hini ma vije mad. — Rezin, zafron, kistin, kolchik, marc'h, balsamin, pastounadez, pasvoulouz, panez, beal, a oe lekeat enn dek deiz kenta euz ar bloaz.

Ar c'heariou a oe *divadezet* evel ann traou all. Kastelin, a deuz Kear-war-Auln; Kemper, Mene-war-Odet; Sant-Malo; Porz-Malo; Sant-Servan, Porz-Solidor; Sant-Briek, Pont-Briek; Pont'nn Abat, Pont Marat; Pont-Kroaz, Pont-Frank, etc.....

Goude ma oe troet ar c'hompod, e oe troet ivez hanoiou ann dud: evel-se ne hanvet den Iann, Fransez, Pierez..... mes Brutuz, Sevola, Fabrisiuz, etc....

Chetu ama ann azeulidigez nevez savet gand Fabr d'Eglantinn, ha gourc'hemennet gant Robespierre. Petra a iskisoc'h! Sant-Just, Kouthon, Fouquier, etc... a oe ann ebestel karget d'he frezeg ha d'he bruda. Beza evezou eur goel evit ar Frankiz, hag ar bac'hiou



a oa karget a dud leal : eur goel evit ar gunvez, hag ar vourrevien n'ho doa deiz da ziskuiza ; eur goel evit ar beorien, hag ar re a rea vad d'ezho, a zo harluet, pe zoken dibennet ; eur goel evit ar glanded, ha merc'hed gadal a vije dibabet evit en em ziskouez war ann aoteriou ; eur goel evit al labourerien, hag ann holl a gemeret da soudarded, ha ne leset den er vro evit labourat ann douar !..... Na pebez goap, na pebez gevier e kement-ma holl ! ha pegen argazuz a oa arvest Robespier, savet war eur menez a gorfou maro, evit komz a Zoue d'ar C'hallaoued, ha deski d'ezho penaoz e felle da Zoue beza azeulet !

Ar goeliou hag ar c'hompod nevez-ma a oe lezet hep dale : ar goeliou ne oent lidet nemet eunn nebeut gweachou. Ar c'hompod ne oa mad nemet da luia, rag oc'hpenn ma oa enep d'ann hini a heuliet e pep leac'h dre ann Europa, e oa ivez gaouiad ha didalvez evit ar broiou pell, e pere ann hanv, ar goan hag ann amzeriou all, ne arruont ket d'ar c'houlz ha ma arruont e Bro-C'hall. Evel-se e oe lezet a grenn, enn deiz diweza a viz Kerzu, 1805, deiz e pehini e oe kemeret anevz kompod Sant-Gregor. Mar choum hirio eur sonj bennak anezha, ne d-eo nemed evit diskouez satoni ann amzeriou-ze ker mezuz, ker spountuz ha ker gwelvanuz. Ma vije heuliet c'hoaz enn hon touez, e vijemp hirio, enn deiz kenta a C'henver 1847, ebarz ann unnek a Nivoz, euz ar bloaz pemp hag hanter kant.

Kement-ma holl a reaz sevel ar Ganaouen a heul.

### KENTEL D'AR GOMPODERIEN NEVEZ.

(IEZ TREGER.)

War DON : *Klevit koz ha iaouank.* — 45

Enn touez ann holl draou lu gret gand ann *Asamble*  
E niverer gant gwir, ann *Armanak* neve;  
Biskoaz ne oe gwelet netra ker sod er bed  
Nag a ziskoueje gwell dallante ar spered.

Ann treo-koz ne oant mu mad 'vit hon renerien  
Hag a oa re zister de lakat komz a zen;  
'Vel-se ho deuz mennet reizan krenn ho mestro;  
Mes ho reisio, siouaz ! na boeller e nep bro.

Penoz e vesent-hi, gand ar re all poellet ?  
Ho-unan enn tre-z-he na en em glevont ket,  
Pe lavar darn *wit-sou*; darn all a gri, *aman*,  
Gant-ze a rouestlont holl, beteg ann treo skleran.

'N han Doue, penvien gez, diskuisit, deut d'ar ger,  
List ho lec'h gant tud fur, pa n'ouzoc'h ken micher,  
Nemet sotad ann dud, nemet pennboellan holl,  
Micherourien 'vel d'ec'h, a vo kavet dre holl.

Mar laket enn ho penn, ober *armanago*,  
Ne labourit nemet war ar steredenno,  
Ha deuz ar re man c'hoaz n'anavet hini 'bed  
Gwelloc'h eged al loar, p'hini a chench bepred.



Deuz on-nez 'ouzoc'h mad ar c'houlz hag ar mare,  
 Rag evel-t-hi e tro ho sperejou bemde,  
 Hirie enn neoneio, hag arc'hoaz enn diskar;  
 War ann douar tro-dro na weler ket ho par.

Chetu aze kreden eunn den dimez ho pro,  
 'Zo 'vel kalz a re all skuiz deuz ho tirollo;  
 Plijet gand eunn Doue, n'ho kwelfe mu bikenn,  
 Koulez 'eogant-han gwelet war-n-han ann taer gwalen.

— SKLERIDIGEZ. —

Ar gentel vras-ma, mes re verr, a zo bet savet gand ann Aotrou ar Iann : roet eo bet d'in gant ann Aotrou ar Iann. iaouank, Persoun-kanton e Perroz-Girek.

Ann Aotrou ar Iann, koz, a oa ginidig euz a barrez Plouaret : eno e oa ivez Kure pa arnuaz ann Dispac'h. E 1790 e tinac'haz al Lé hag en em dennaz enn touez he gerent hag he vignoned, mes evel ma oa e gwall da veza kemeret eno, ez eaz da guza da Vontroulez : tremen a eure eunn triouec'h miz er gear-ze ha goude e tistroaz da Blouaret e pelae'h e talc'haz neuze beteg ar peoc'h. He blijadur ar vrasa a oa frealzi ann dud feal, ho zakramanti hag ho c'hentelia, hag evel ma oa ivez eunn den euz ann hetusa, e rea d'ez-ho meur a weach dre he gomziou laouen hag he zoarcou mad, ankouna'haat ho foaniou hag ho enkrez.


E 1803, e oe lekeat da Bersoun e Penvenan, tost da Landreger, hag eno ez eo marvet, e 1836, d'ann oad a zaou vloaz ha pevar-ugent. Eunn daou vloaz goude, he vez a oe digoret hag he relegou divesiet, evit ho besia ebarz ann Iliz nevez, savet aboue he varo, gand ann Aotrou Perro, deuet enn he c'houde Persoun da Benvenan.

## AR PEDENNOU

NEVEZ.



— 1795 —



KENTEL.

Ann Dispac'herien ho doa goapaet ann holl Lezennou hag ann holl gredeimou koz : mez hervez al lavar : *Ar voapacrien a zo ivez goapaet d'ho zro.* — Evel-se al Lezennourien nevez a oe hep dale goapaet ha da vad ha kaer. Hen gwelet hon euz dre ganaouen ann *Asamble Nasional* dre ann hini ziveza, ha meur a hini all ama diarok. Hen gwelet a rer skleroc'h c'hoaz dre ar pedennoù hag ar brezegen a zo ama war lerc'h.



## AR BATER VEURE.

DA ROBESPIERR.

Hon tad pehini zo enn Ifern, — hoc'h hano bezet enoret, — ho rouantelez azsavet, — ho lezennou bezent sevenet e Pariz evel er broiou all. — Roit d'imp hirio hon goad pemdeziek, — ha n'hol lezit



ket da goueza dindan ar *Sanskuloted*, — mes hon dieubit euz ar *Pemp-Kant*. — Evel-se bezet great!

DA VARAT.

Me stou dira-z-hoc'h, Marat, leun a voad; Robespier a zo gan-e-hoc'h : binniget oc'h enn touez ann *Theophilantroped*, hag ar *Jakobined*, frouez euz ho pouzellou a zo binniget. — Doue, Marat, hon skoa-zellit brema ha d'ann heur euz ar gillotinn, pehini a e'hortozomp sevel mad a nevez. — Evel-se bezet great!

— KREDO. —

Me gred e Sieyez, ann tad holl c'halloudek, — Krouer ar *C'hlubou* hag ann *Theophilantroped*, — hag e Robespier, he vab mua karet, hon mestr koz, a zo bet engehentet euz ann drouk spered, a zo bet ganet gand ar gounnar, en deuz gouzanvet enn nao Thermidor (seiz war-n-ugent a C'houere), a zo bet gillotinet, a zo maro ha douaret, a zo dizkennet d'ann Ifern, a zo dazore'het a varo da veo, enn drizek a Vendemiair (pemp a Here), a zo pignet d'al Luksambourg, e pe leac'h e ma azeet enn tu deou, pe enn tu kleiz da Varraz, a beleac'h e fell d'ezhan barn ar *Pemp-Kant* hag ho lakaat da goueza e Rouantelez ar re varo. Evel-se bezet great!

Me gred er *Jakobined*, er Strollou *konstitutionel*, er Mene, da dazore'hidigez ann eur vraz, ha d'he fadelez peurbaduz. Evel-se bezet great!

— SKLERIDIGEZ. —

Ar Sanskuloted, ar Jakobined, Sieyez, Barraz, Marat, Robespier, a oa holl Dispac'herien vraz. Ar Mene a oa eul leac'h e pehini en em strollet. — Ar *Gonvansion* a oe torret er seiz war-n-ugent a Here, 1793, ha goude e teuz ar re goz hag ar *Pemp-Kant*: ar re-man holl a hanvaz ann *Direktoar*, great a bemp den: Barraz, Karnot, Lepaux, Le Tourneur ha Rewbel. — Bonapart eo michans Robespier dazore'het ha pignet d'al Luksambourg. — E tro miz Eost, 1796, e savaz eur relijion nevez: ar re he heulie a oe galvet *Theophilantroped*: kredi a rent, ha netra ken, d'ar gwir Doue ha da beur-badelez ann ene.

Chetu aze azeulidigez nevez ha pedennou ar C'hallaoued: ar re-ma am euz bet troet e brezonek: n'emaint ket ama enn ho renk; mes ne ket bet falvezet d'in ho dispartia diouc'h re ar Vretoned, pere a zo ama goude, ha pere a oe great pell dia-raok. — Ne gredann ket ho deve bet ar Vretoned a *Bater*, mes, enn eskemm, bez'ho deuz *Gourc'hennou* hag eur *brezegen* euz ar re gaera.

❦❦❦❦ XXI. ❦❦❦❦

KREDO NASIONAL.

(IEZ TREGER.)

Me gred enn *Asamble Nasional*, hag er *Gonstitution*, he merc'h; pehini a zo bet ganet hep bezan bet engehentet; — E deuz gouzanvet dindan ar c'hlubo, a zo bet kemennet, grateet, embannet, dinac'het ha

*organiza a greec flabanic*



grateet a neve a enep d'ar Roue, e deuz torret al Lezio  
 huel, harluet ann Eskibien hag ar Veleien, gwall vru-  
 det ann dudchentil, lakeet tanan ar c'hestel, gwerzet  
 ar c'hlaustro, distrujet ar parrojo, serret ann Ilizo,  
 troet ann arc'hant e paper; — a zo bet engehentet  
 enn Hernio hag e deuz stourmet zoken ouz ann Envo;  
 — a zo diazeet war al leodouet, al lazerezo, ar mal-  
 lozo; — hag ac'hane e tenio da goll ar re veo, ha da  
 harzan ar pedenno diouz ar re varo. — Me gred er  
 spered a fouge, pehini en deuz troet ha sodet ann Na-  
 sion. — Ann Iliz neve, gadal, pervez ha dic'houvez;  
 — unvaniez ann dud diwez a enep ann dud leal hag  
 ceun; — Dazorc'hidigez ar Baganed, el lec'h hini ar  
 Gristenien, — hag eur vue leun a drubuil, el lec'h ar  
 peuc'h hag ar Zantelez. — Evel-se a vo gret.

⊙ ❧❧❧ XXII. ❧❧❧ ⊙

GOURC'HEMENNOU NASIONAL.

(IEZ TREGER.)

Azeul ann Doue a geri  
 Ha mar kerez ne ra hini :  
 N'ez pe nep doan evit touet  
 Lezenno ha ne boellez ket.  
 Ne viri mu na zul na gouel;  
 Lez ar Bersoned d'ez gervel.

Tad na mamm, grek na bugale  
 Ne vlenio ann eil egile.

Laz tudchentil ha beleien,  
 Ha ne ro netra d'ar beorien.

E pep tra klask da blijadur  
 Hon-nez eo lezen pep den fur.

Mar deuz da wallan den ebed,  
 Lar ec'h int *Aristokratet*.

Lavar gevier ken a foulstro,  
 Mar t'euz c'hoant da gaet moesio :

Mir da vrek keit ha ma ker,  
 Mes pa vi skuiz gant-hi, trok-hi.

Ne ro arc'hant da zen ebed  
 Hep eur c'hampi anat ha net.

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ NEVEZ.

Ke da ofern ar re douet  
 Pe anez e vi dibennet.

Ne verzi pelloc'h ar gouelio  
 Torret int holl gand ar stado.

Ke da govez, pe n'ea ket;  
 Petra 'ra ze da zen ebed?

Ne sonj mu digemer Doue  
 Ne vefez tamm gwell euz a ze.

Gra bemde pevar pe bemp pred  
 Ha ne vir kamet da sec'hed :



Ann Nasion ne breder ket  
Pe te zebro kik pe besked,  
Er Choaraiz, enn daouzek deio,  
Guener, sadorn pe vijelio.

Chetu aze ar gwir Lezen,  
Ha nep he miro penn da benn,  
A vo er bed man enoret ;  
*Mes er bed all e vo souezet.*


— SKLERIDIGEZ. —

Ar *Gredo* ha dek euz ar gourc'hemennou a zo ama dia-raok, a zo bet savet gant ann Aotrou Perennez : ar c'houezek gourc'hemen a oa bet savet gant-han war ho hed, mes n'am euz kavet nemet dek, hag am euz savet re all evit lakaat e leac'h ar c'houec'h a oa kollet. — Gwelit ar skleridigez a zo ama goude ar Brezegen.



## PREZEGEN

NASIONAL.



— 1792 —



KENTEL.

Pa guitaer hent ar wirionez ha pa zinac'her ar Feiz, ne veer ken dalc'het gant netra hag e kouezer e mil fazi : chetu ar pezh a arruaz gant kalz euz ar veleien ho doa great al Le. Ar brezegen a heul hen diskoez. Ann darn vuia euz ann traou a zo ebarz, a oe prezeget gant eunn *Touer* iaouank : lekeat e oent e gwerz, gant eunn den pehini a oa ouc'h ho c'hlevout.

o\*\*\* XXIII. \*\*\*o

(IEZ TREGER.)

Enn de kentan a Ve, dre ma oa eur gouel braz  
Prezegen eunn Intru, dre zarvoud me glevaz :  
Evel ma riz d'ezhi eunn evez ar brasan  
E onn c'hoaz penn da benn ar brezegen gaer-man.  
Chetu-hi aman holl 'vel ma 'm euz hi c'hlevet  
Mar na deut da welan ez oc'h gwall galedet ;



Karget ez eo dre holl deuz a wirioneo  
A zo mad, hep arvar, da zistrein kalono.

---

Enn hanv ann *Asamble* p'hini hor gra bezand,  
Enn hano ann *Distrik*, hag ann *departamand*,  
Enn ho hano ive, mempro *munisipal*,  
Ha c'houi, penn ar c'hanton, Barner mad ha leal.

---

*Lanternetur omnis non habens kokardam.*  
Lanternet a vezo nep 'zo hep kokarden.

---

Ar c'homzo-man 'lennomp enn Aviel neve,  
Ha nann 'barz e sant Iann, na 'barz e sant Vaze :  
Ann Aviel koz-ze a oa arru melget  
Ha gand ann Nasion 'zo bet neve reizet :  
Ar c'homzo-man 'lennomp ebarz al lezenno  
Pe barz unan bennag a levrio Mirabo.  
De braz, de kaer meurbed 'vid ar *Sitoianed*,  
Mes de trubuilluz braz d'ann *Aristokraded* :  
Nep a glevo hirie ofern ha prezegen  
A bigno, hep arvar, er Baradoz a-benn.  
Rak-se, iaouankiso, goude eur gousper berr,  
C'houi a hello dansal hed ann dilerc'h amzer,  
Eur violans am euz hag a zo stignet mad,  
Me iel evit son d'ec'h da gentan, d'ann ebad.

Mes gwa, ha mil gwech gwa! da nep a labouro,  
Mont a rei beo buek e korf ann diaoulo ;  
Neuze e karsent holl deuz a greiz ho c'halon  
Bout heuliet war he hed ar *Constitution*.  
Mes evit lakat urz 'barz ar brezegen man  
Kemeromp eur penn mad, ha heuliomp anezhan :  
Ann Aristokraded a dle bout *lanternet* :  
Chetu ma c'hentan rann, selaouit, me ho ped.  
Enn touez ar Zent a dle bout laket Mirabo,  
Selaouit ma eil rann, rak splan m'hen displego.

---

Enoruz Mirabo, roet d'in sklerijen,  
Dont e rann d'ho pedin, bezan onn Sitoien :  
Otreet d'in breman darn deuz ann displeg-ze  
Gant p'hini e Bro-C'hall, ann holl a zoueze ;  
Grit d'in atizan mad kalon ar bezanded  
Ma teuint holl d'argarsin ann Aristokraded ;  
Ma vezint roet holl d'ar *Constitution*  
Ha beteg ar maro feal d'ann Nasion :  
Plijet gan-ec'h eta donet d'hor skoazella  
Ni a deu gant fe vraz da ganan *Sa ira*.....

---

KENTAN RANN.

Ann Aristokraded 'zo tud hep reiz e-bed,  
Ar gwir Relijion a leront 'zo troet :  
Ez omp, em'he, er mez dimeuz ar gwir Lezen,  
Ne oar ken 'barz e Gall, katolik, na romen :



Evel-se e komzont, breudeur sitoianed,  
Mes ann dra a zo gaou, m'ho ped, n'ho c'hredit ket :  
Ar butun, ann dour-kre, ar gwin 'zo marc'had-mad,  
N'eo ket eta troet ar relijion vad.  
Ar c'hustum, ann taillo a welann 'zo lamet,  
Hag ann dijuj milin a zo ive douget,  
Lamet eo ann deogo ha lamet ar primiz,  
Emaomp eta, hep mar, ebarz ar gwir Iliz.  
Prennan 'reomp ar gamps gant hevelep spillo,  
Hevelep kloc'h bian a zon d'ann ofernio  
Ann ofiz a reomp evel her gret gwechall  
C'houi a wel kement-se, pe hep mar ez oc'h dall.  
Gwir eo na selaouomp Pab nag Eskob e-bed,  
Kement-se 've enep al lezen neve c'hret,  
Heul a reomp hep ken ar *Constitution*,  
Ha n'on euz mestr e-bed, nemed ann *Nasion*.  
Evit bevan e peuc'h ebarz ar gwir Lezen  
Ne d-eo ket ret bezan katolik na romen :  
Ober dizaoun al Le, bezan sitoien mad  
Chetu eno dlead eur gwir gristen breiziad.  
Ar re na heulint ket dont da ober al Le  
A zo tud diskiant, hep fe, hep karante,  
A zo heretiged, tud hep relijion,  
Tud sod, tud mibiliuz, ganaz d'ann *Nasion*.  
Gwell eo gant-he selaou ar Pab, ann Eskibien  
Evit na eo donet da guitat ho Lezen :  
Deuz a donez ar re all hi 'dle bout harluet,  
Merket gant houarn ru, ha zo-ken lanternet.

Rag-ze 'ta, ma breudeur, e lec'h ho gouzanvin,  
Bezit out-he garo, ha deut d'o fourgasin.  
Grit d'he dont da c'houzanv pep seurt dismeganso  
Hennez e'r santelan dimeuz ho tleado.  
Koulskoude darn anhoc'h, me her gwell gant preder,  
A ro d'ezhe skoazel, enn ho zi ho c'hemer :  
Kement-se a zo fall, hag enep al Lezen,  
Pehin rit, tamall 'po digand ar renerien.  
Allaz! me ma-unan n'am euz ket bet bepred  
Out-he ann holl gonnar a dlefoann bezan bet.  
Hep dont d'her fourgasin, eur wech 'barz em Iliz  
Em euz lezet unan da lidan sakrifiz.  
C'hoaz e teu d'in-me sonj, enn eunn dro enn hent braz  
Eur belek dizentuz, disul me dremenaz,  
Lec'h skopan ouz he zrem ha dont d'hen huernin,  
Siouaz! ne lariz gir, pe ne lare ket d'in.  
En em ziskul e rann, anzao 'rann ma fec'hed  
Ha fisians vraz am euz a vo d'in distolet.  
'Vit-ze a c'houlennan skoazel ouz Mirabo  
P'hini 'zo eur zant braz; breman c'houi her gwelo.

---

EIL BANN.

Evit ober d'ec'h holl anavet Mirabo  
Me rai he veuleudi ebarz e berr gomzo :  
Hen-nez eo tad kentan ar *Constitution*,  
Hen en deuz deraouet ar *Revolusion*.  
O peger braz skoazel en deuz d'ann holl roet



Drei-z-han ar gwir Lezen hon euz anavezet ;  
Drei-z-han hon euz-ni holl kavet ar wirione  
Goude bout bet ker pell ebarz ann dallante.  
Ped gwall woaz, ma Broiz, en deuz diarbennet ?  
Ha ped tra gwall ziez en deuz ezetaet ?  
Hen en deuz troc'het krenn barv ar Gabusined :  
Hen en deuz diwisket se ar Rekolesed.  
Hen en deuz harluet dre holl deuz ar c'hlaustro  
Ann holl venec'h hep kemm, gwerzet ann Hiso,  
Ha d'al Leanezed en deuz bet otreet  
Donet da zimezin pe gavjent-hi gwazed.  
Kalz a dud dimezet en em gafe diez  
Breman ne vezoint ket mar keront tol evez :  
Mar keront kat preder d'ober eur marc'had berr  
Hi a hello trekin hep gortoz pell amzer.  
Enn amzer dremenet, herve ar goz lezen,  
N'ho poa ket da c'hedan monet e karg bikenn :  
Breman hep gout skrivan, breudeur *demokraded*,  
Ez oc'h kuzulerien, maerien pe *notabled* :  
Gwir eo ar c'hargo-ze a zo holl 'vit netra  
Ha goude ann honor, ne zo man da skraba :  
Ha c'houi 'briz evit man, skoazian ann *Nasion*,  
Ha donet da harpan ar *Constitution* ?  
Gwech all a leret d'imp e renkemp holl karet  
Doue hag ann oll dud, evit bezan salvet :  
Berret eo al Lezen : herve ann *Nasion*  
N'hon euz nemet karet ar *Constitution*.  
Gwech all ho peleien a oa ken amparval

M'evjac'h d'he boutaliad, ho tinac'hent raktal ?  
Breman 'barz ann evlec'h ni ia hep mez ebed,  
Hag a ef frank hol lod, mennet d'imp da welet.  
Enn daoust da gement-se, darn a zo souezet  
Hag a lar a dleomp bezan muoc'h reizet :  
Mar evomp kals a win, ha c'houi oar 'vit petra ?  
'Vit n'ho do ar re goz nemet dour da eva.  
Paveved Mirabo, bikenn n'hor bije bet  
Ann holl gouuido-ze ker kaer, 'vel m'her gwelet.  
O Mirabo ma mestr, leun a vadelezo,  
Pe larann ez oc'h sant, n'hel larann ket e gao.  
Gwir eo, herve lerer, en deuz bet likaouet  
Kalz deuz a C'hallaoued, zo-ken sitoianed :  
D'he dad kouls ha d'he vamm, en deuz gret prosezo  
Ha tregont gwech ar miz, a re regorfado.  
Mes kement-se a zo kel liez a fazi  
Hag e ra mu-ouz-mu d'he spered lugerni :  
'Vel ma welet aman, ebarz enn eunn dolen  
Koulz evel de eo red kaet tevalijen.  
Na daoust da ze holl, vel sant a vo sellet  
Gand ann *demokraded* hag ar sitoianed :  
Na gant piou ne vo ket goude'r madelezo  
Em euz diskouezet d'ec'h ebarz e-berr-gomzo.

---

DIYEZ.

Tud balc'h ha tud huel, deut da ober ho Le,  
Mar oc'h tud avelek, Mirabo 'oa ive,



'Vit-han da vezan marv, ar balc'hder 'zo bepred  
 Ebarz ann *Asamble*, er gador azeet.  
 Tud skarz, ha tud dalc'huz, d'ec'h e teuann goude,  
 C'hoantaat e rann stard ho tistrein ouz Doue ;  
 Ar c'hampi ar brasan 'zo breman otreet,  
 Petra ar foeltr eta ve d'ec'h ne doufac'h ket?  
 C'houi ive, tud gadal, bezet sitoianed,  
 'Vit terrin ho kwall bleg n'en em ziezit ket,  
 Gant dimez, hep dimez, gwalc'het dre holl ho c'hoant,  
 Mirabo 're ive ha koulskoude zo sant.  
 Ha c'houi, tud erezuz, ann erez 'oa gwechall,  
 Eur gwall deuz ar gwasan, hag ive eunn tech fall,  
 Deut da ober ho Le, ha miret-han ato,  
 Aman 'eo otreet koulz ha 'barz ar stado.  
 Arru onn gan-ec'h-hu, c'houi pere 'gar ar gwin,  
 Eunn ali e rann d'ec'h, deut da sentin ouz-in,  
 Bezit sitoianed, deut da ober ho Le,  
 Hag evit gwin bepred, mes reit lod d'ho kure.  
 Deut da ober ho Le, c'houi oll tud buanek,  
 Kement 'zo sitoien a dle bezan broezek,  
 A dle bezan diboell, ha kri 'vel eul leon  
 Evit difenn hardiz ar *Gonstitution*.  
 Bezet sitoianed, m'ho ped, tud dieguz  
 Na vezo ket red d'ec'h bezan gwell boelladuz :  
 N'ho po nemet dougen eur fuzil 'barz e ker  
 Ha ker'hat a wecho eur belek *refrakter*.  
 Deut holl eta kevret, da vout sitoianed,  
 Tout eur wech ha diou, ha teir gwech mar be red,

Touomp bete mervel, ha goude ar maro,  
 Peuz dost da Virabo, hep mar, ni 'n em welo.

BLEUNIO.

Hep mar ec'h oc'h aman 'n em zastumet hirie  
 Gant c'hoant da gad bleunio deuz a zorn ho kure :  
 Evel ma oc'h daou rumm am euz ive klazket  
 Bleunio dihenvel holl 'vit ma vefot gwalc'het.  
 Ar voden a rinn d'ec'h, breudeur sitoianed,  
 Nemed euz eur vleunen hep ken na vezo gret,  
 Plijit bezan bepred feal d'ann *Nasion*,  
 C'houi 'po evit boden ar *Gonstitution*,  
 Ar *Gonstitution* 'zo deut digant Doue  
 A vo aman hor joa, hag hor gopr goude-ze  
 Bezomp feal d'ezhi ha goude ar maro,  
 Kevret eunn tu bennak, hep mar, ni 'n em welo.  
 Breman gant hoc'h otre, breuder sitoianed,  
 Rinn ive eur voden d'ann aristokraded,  
 Eur voden a vezo deuz a bemp kant bleunen,  
 Me het d'ezhe brezel, ha kernez ha bosen,  
 Al langiz, ann drouk kein, ar pourmon hag ar pas,  
 Kement tersien 'zo holl, ar zifern, droug ar chas ;  
 Al lornez, ann droug-moug, hag ive ann urlo,  
 Ann droug dend, ar zeizi, ha goude ar c'hrin-beo ;  
 Me het c'hoaz me vezoint gand ann holl disprizet,  
 Goapeet, kavaillet, dornet ha labeet,  
 Ouzpenn 'vid anavet ar sitoianed fall  
 E karjenn ho gwelet mud, tort, kam, born pe dall.



Me garje ho gwelet a bep bro harluet,  
E vent 'vel Boudedeo e pep lec'h heskinet,  
Me garje 'vent kaset pell d'ann Inizio  
Pe laket 'barz ar bac'h, ha karget a gefio.  
Peur leromp en eur gir : da baotred ar roue  
Ar bleunnenno kaer-ze e roann holl hirie :  
Kastiz 'barz er bed-man, ha gloazio er bed-all,  
Ar voden-ze ho po, c'houi, sitoianed fall.

---

'Vel ma oa ann *Intru* da brezegin tavet  
N'em euz ket, m'hel lavar, he vennoz gortoet.  
Kemer a riz ma hent, 'n eur douet penn da benn  
Bikenn ken na glevjenn prezeg eur sitoien.

---

— SKLERIDIGEZ. —

Lamet eo ar *c'hustum*, ann *taillo*, ann *dijuj-milin*, ann *deogo*, ar *primiz*.... Ar *c'hustum* a oa eur gwir pehini a zavet er marc'hajou, evel hirio *gwennek ar zuc'h*. — Ann *taillo*, a oa gwirioù pere a zavet diwar bep seurt traou, evel ma rear hirio diwar ann tiez, ar prenestrou... — Ar *juj-milin*, a oa eur gwir hag a redie da vont bepred da vala d'ann hevelep milin. — Ann *deogou*, a oa eur gwir da gemer ann dekved, ann daouzekved, ann driouec'hved euz a frouez ann douar, pe muioc'h, pe nebeutoc'h, hervez kustum pep parrez. — Ar *primiz*, pe ar *preveudi*, a oa eur gwir da gemer ar frouez kenta euz ann douar. — Ar re-ma holl, ha kalz a re all evel-t-ho, a oa gwirioù a baet d'ann ilizou,

d'ann dud a Iliz, d'ar venec'h ha d'ann dudhentil : torret a oent holl dre eul lezen euz ar bevar a viz Eost, 1789. Enn ho leac'h e teuz ar gwirioù braz, pere a baer hirio enn ar-c'hant. D'enn daou viz d'ar goude, madou ann ilizou ha re ar veleien hag ar venec'h, a oe diskleriet ivez beza holl d'ann *Nasion*. Evel-se e oe laeret ann iliz, leveou pere a oa enn he c'hers abaoue meur a gant vloaz, hag euz a bere kalz a oa zoken d'ezhi, kent evit ne oa Rouaned ebarz ar vro. Kement-ma a dorre c'hoaz menosiou ann dud ho devoa roet al leveou-ze d'ann ilizou, hag a ziouere ann dud vad-ze, euz ar pedennou ho devoa c'hoant e vije great evit-ho goude ho maro. — Evit gwenna kement-ma holl, e oe lavaret penaoz ar veleien hag ar venec'h a rea *preder fall* ha *tinell re vad* gant ho danvez. — Unan bennak her grea, red eo hel lavarout, mes ne oa ket ann niver brasa. Ha goude holl, hag ho divije ann holl veleien hag ann holl venec'h great *preder fall* ha *tinell re vad* gant ho leveou, ha rei e rea ann dra-ze gwir ebed d'ho lemel digant-ho? Evidoun, kaer am euz trei ha distrei ann holl lezennou, ne gavann hini hag a rose gwir d'ober ennn hevel dra. Mar zo bet koulskoude douget eul lezen bennak hag a aotre, pe a lavar kemer danvez nep a ra *preder fall* ha *tinell vad* gant he vadou, e venn ali d'hon Rennerien d'ober brema ar pez a oe great neuze, da lavarout eo, da gemer madou kel liez a zen pere a weleur, e gwirionez, oc'h ober *falloc'h preder* ha *guelloc'h tinell*, evit na eure biskoaz belek na manac'h, ha d'ho lakaat ivez da baea gle ar Rouantelez : beza ho defe bennoz meur a vilion a labouerien hag a vecherourien reuzendik, pere a c'houez bemdez ann dour hag ar gwad, evit paea ar gwirioù braz a wash hirio war hor bro. Mar boa mad hen ober neuze, perak ne ve ket mad hen ober brema? — *Hevelep kloc'h bihan a son d'ann oferniou*, mes hevelep kleier braz na sonent ket d'ezho : ar c'hleier a oa kemeret holl euz ar parresioù : ne oe



miret nemed unan e pep tour. Evel-se, e miz Mae, 1792, e oe kaset euz a gear Landreger, ugent-kloc'h da Lege-Sant-Brick : unan anezho, hini Sant-Tual, a oa unan euz ar re vrasa a oa e Breiz : eur c'houec'h pe seiz a gezek vad a oe krevet oc'h her sleja d'ann aod.

— *Hen en deuz troc'hel barv ar Gabusined, harluet ar venec'h euz ar c'hlostrou, hag aotreet d'al Leanezed kemer gwazed.* — Eul Lezen euz ann drizek a viz C'hoer-*vrer*, 1791, a dorraz gwestlou ar venec'h hag al leanezed, hag a lamaz ann holl Urzou : lezet a oe koulskoude gant ar re euz ann dud-ma, pere a c'hoantae choum enn ho ziez, ar galloud d'hen ober ha da heulia ho reol ; mes eul lezen all euz ar bevar a viz Eost, 1792, ho rediaz da guitaat hag a lekeaz ho ziez e gwerz. Evel-se, enn eur predik, dre al lezen grizze, e tro hanter kant mil den (en eur gomz pep ken nemed euz ar merc'hed) en em gave taolet e kreiz ar bed pehini ho devoa dilezet. Ann darn vuia euz al leanezed a oe harluet euz ho ziez, e miz Here, 1792 : ne oe lezet e peoc'h nemed ar re a brederie ann dud klan ha c'hoaz e oent ivez harluet abarznemour. Goude kement-ma e oa brao d'ar re-ma holl donet da zimezi.

— *Kalz a dud dimeet en em gave diez,*

*Brema ne vezoint ket mar keront tol evez,* hag evit gwir, eul lezen euz ann ugent a viz Gwengolo, 1792, a zouge ann diforc'hidigez a zimizi, hag ann *Nasion* a lavaraz da bep *Sitoien*

Mir da vrek keit ha ma kerl,  
Mes pa vi skuiz gant-hi, trok-hi.

Ober a eure c'hoaz kaeroc'h : gwestla a eure eur gopr a hanter-kant livr da gement plac'h fall e divije eur bugel. Michans abaoe m'ez eo ar bed bed, ne oe biskoaz douget lezen evel hou-man.

Ar Brezegen gaer a zo ama diaraok, a zo bet gwerseet gant ann Aotron Ervdan Perennez, euz a barrez Pleudaniel, e tu Landreger. Klevout a enre, ennn deiz, ennn *touer* iaouank o prezegi, hag o veza kavet he brezegen ker kaer, e vennaz he lakaat e gwers, evit ma helje ar Vretoned he deski eazetoc'h ha donet da zispizout ar Relijion e pehini e prezeget traou kel lu.

Ann den enoruz-ma a zo c'hoaz beo, ha dre eno, ne lavarinn anezhan netra ken, nemet m'ez eo, e tu Lagnou ha Landreger, kalz brudet dre he furnez hag he wiziegez vraz. Ann Aotrounez Perennez, hanaveet ivez dre ho gwiziegez, a zo bugale d'ezhan.

Ar brezegen a zo bet roet d'in gant ann Aotrou Perennez he-unan : ar c'hanaouennou all savet gant-han, ha pere a zo el leor-ma, a zo bet roet d'in gant tud all. Ann Aotron Perennez en devoa c'hoaz savet meur a ganaouen ; mes ar re-ma a zo bet kollet. —



## HEVELEBEDIGEZ

E TRE GOURC'HEMENNOU DOUE A RE ANN NASION.



— 1792 —



### KENTEL.

Ebarz ar gwerzou a zo aman diaraok, ez eo goapaet pedennou ha gourc'hemennou ann *Nasion*, evel ivez prezegenou he beleien. Aliez e rear kentoc'h dre voaperez, koeza



eur greden fall, evit ne vefe great dre gomziou dic'hoarz. Chetu ar pezh a glaske ann Aotrounez euz a bere hon euz lennet ar gwerzou. Mes koulskoude evel ne zere ket ouc'h Kristenien beza ato o c'hogeal, chetu ama ivez eur ganaouen e pehini ez eo diskouezet hep c'hoarz, ar pezh a oa a fall ebarz al lezennou nevez.

o-XXXX XXIV. XXXX-o

GOURC'HEMENNOU

DOUE HA RE ANN NASION.

(IEZ KERNE.)

WAR DON : *Ar varn a zo bet douget.* — 62.

'Barz e Bro-C'hall e kavann 'zo eunn neventi vraz  
Ne gomzer mui a Jezuz, ken nebeut euz he groaz,  
War behini eo maro evit hon dasprena;  
Ne gomzer pelloc'h a ze, gant ann dud 'zo brema.

Gwela 'ra ma daoulagad, gwada 'ra ma c'halon  
Ar Fei 'ta hion euz kollet, siouaz ! ar Fei gwirion  
Dre behini e c'horto ar gwir gatoliked  
Goude heul lezen Jezuz, beza holl gopreet.

Torret eo ann diou daolen war bere oa skrivet  
Ann dek gourc'hemenn pere gwechall a oe roet  
Gant Doue da Voizez war mene Sinaï :  
Ar c'henta euz anezho, 'oa dont d'hen azeuli

— *Eunn Doue hep ken a azeuli.....*

Ah ! sell eta, sitoien, hag hen zo eul lezen  
Hag a zeufe da ziwall er vro, ar gristenien :  
E pep lec'h ho heskina a rer, hag a zo gret :  
Azeulomp bepred Jezuz : n'euz Doue all ebed.

— *Doue enn-aner ne doui ket.....*

Touet ec'h euz, den direiz, mirout holl penn-da-benn  
Lezennou ann *Nasion*, ha dilezel a grenn  
Ann holl gwestlou az poa gret enn de da vadiant,  
Dinac'h ar bed, he fouge evel ann Aerouant.

Ha te, belek miliget, az poa ivez gwestlet  
Beza feal d'az Eskop, pa oez gant-han sakret ;  
Beza feal da Jezuz, ha difenn he Lezen,  
En em ganna evit-haa, evel eur gwir gristen.

Te dou war bouez da vue e teui da zifenn  
Ann holl lezennou direiz, deut aberz ann Ifern,  
Kement 'ra ann *Nasion*, ha kement e deuz gret :  
Goude donet d'ho difenn, te a vo glac'haret.

— *Ar zulioù santel a viri.....*

Ar gourc'hemenn ann drivet hon euz digant Doue,  
En deuz euz a seiz devez miret unan anhe  
D'her pedi, d'hen enori, da chom hep labourat :  
Ha sell eta, sitoien, ha te 'zo dinamm mad.



Ha c'houi holl, sitoianed, ha c'houi, Dibaberien,  
Ar zuliou hag ar goueliou, m'ho kwel enn eur vanden,  
Strollet ebarz ann iliz, 'n ho parroz, 'n ho kanton,  
Mes hervez al lezennou eveuz ann Nasion.

Chetu c'houi 'ta o saotra ann templ euz a Zoue,  
Ar zuliou hag ar goueliou ebarz ann *Asamble*,  
Enn ho sa war ann oter o krial a bouez penn,  
Heman 'zo *Aristokrad*, ha me 'zo *Sitoien*.

— *Da dad, da mamm a enori.....*

Doue en deuz kemennet dre ar gourc'hemenn-ma  
Enori ha tad, ha mamm, mar fell d'imp pell beva;  
Te, sitoien kounnaret, n'ec'h euz na mamm, na tad,  
Mar deu ebarz da spered ez int *Aristokrad*.

Ma n'ema ket da dud holl 'barz enn da greden-te,  
N'ec'h euz na breur, na c'hoar, na grek, na bugale:  
Ar c'hentan ho diskuliez da dud ann Nasion,  
Hag ar c'hentan e pedez ho dastum er prizon.

— *Lazer ne vi e giz ebed.....*

Dre ar pemped gourc'hemenn ez eo ouz-imp berzet  
Laza na goulia den ebarz e giz ebed;  
Mes a boue al lezennou eveuz al *Liberte*,  
Eo kavet mad al lasiou; kenteliou 'zo a ze.

Ar gloer hag ann dudhentil chomet ebarz ar vro,  
A zo bemde lezennou d'ho lakat d'ar maro  
Aotreet eo ho zenna, paect 'oar evit-ze;  
Ne ket hen-nez, sitoien, eo gourc'hemenn Doue.

— *Dirall ouz al Likaouerez.....*

Al likauouerez a zo ar mezusa pec'hed,  
Difennet ez eo ouz-imp a gorf hag a spered,  
Aotreet 't'euz-hen ive, te, sitoien diroll,  
Gra, ah! gra da zireiziou, eunn de ho faei holl.

— *Gaou ebed d'az hentez na ri.....*

Dre ar seizved gourc'hemenn ez eo ouz-imp berzet  
Dismantra tra hon nesa ebarz e giz ebed;  
Koulskoude bemde, siouaz! te a ra gaou out-ha,  
Pegoulz eta, disleal, e teui da baea?

Aotreet eo d'id brema, mar oud sitoien mad,  
Kemer ar pezh a giri, pa deui d'her c'hoantat;  
N'en defo den d'en em glemm, gra evel a giri,  
Mestr oud enn ti da nesan, evel enn da hini!

— *Geier na nep falz testeni.....*

Geier ha falz testeni a zo ouz-imp berzet,  
Hag ann eil hag egile a zo d'id aotreet,  
Pa damalez d'az vreudeur da zont da repui  
Eur paour belek harluet, enn eur c'hraou pe 'n ho zi.

— *Oberiou ar c'hik ne c'hoanta ket.....*

Ah! selaou c'hoaz, sitoien, ann naved gourc'hemenn,  
Te hello trok da bried, pa droio enn da benn;  
Ha terri ar sakramant az poa digemeret,  
Eann iliz dirak Doue, euz dorn he vinistred.



Ar c'hrek ez poa eureujed enn iliz , da genta,  
 A zo da bried gwirion, Doue hel lar ama ,  
 Evit kaout bugale, da zervicha Doue ,  
 D'en em garout da vikenn ann cil hag egile.

— *Madou ar re all ne c'hoanta ket.....*

Madou ann dudchentiled , ec'h euz bet heskinet ,  
 Ha madou ar veleien ec'h euz bet harluet ,  
 Holl ec'h euz ho c'hemeret , sitoien disleal ,  
 Hen-nez 'zo eur gwall ali a berz ar spered fall.

Holl vadou ann holl glaustrou 'teuz ive mac'homet ,  
 Harluet a di Doue ar re a oa gwestlet  
 D'her servicha noz ha de, da gana melodi  
 D'horgwir Vestr, had'hon Roue, had'ar Werc'hez Vari

Ann templou 'zo dibourc'het euz ho arc'hanteri,  
 Petra en devo Doue evit kempenn he di?  
 Al listri ann disteran a gavez a zo mad  
 Da zastum he gorf santel, da zigemer he wad.

Chetu aze al labour eveuz al *Liberte* ,  
 Chetu aze al lezen euz ann *Egalite* ;  
 Ne gafot ket er skritur euz al Lezen gristen  
*Liberte* , *Egalite* aotreet da nep den.

Bugale omp da Zoue , hag hen a zo hon Tad ,  
 Hen a vezo hor barner euz hon droug hag hor mad ,  
 Devez ar varn ziveza evit ann holl vikenn ,  
 Eno , pec'her reuzeudik , 'vo kevatal pep den.

Diwall eta, sitoien, ne vefez tamallet,  
 Enn devez-ze euz ar varn, pa e vezo douget  
 Eveus a c'henou Jezuz, al Lezen ziveza :  
 Herve m'az po distolet, 'vi distolet gant-ha.

— SKLERIDIGEZ. —

Ar ganaouen-ma am euz bet kavet e touez paperou Fransez  
 Prijant, mear e parrez Tonkedek, e tu Lannuon. 1841.  
 Evit ar skleridigez, e tleer sellout ar pezh a zo lavaret ama  
 diaraok, goude ar Brezegen.



## AR BREZONEK.

— 1793 —

Ann Dispac'herien a felle d'ezho diskarr ha trei pep  
 tra. — E Breiz, evel er broiou all pere a zalc'h kre  
 d'ho buezegez ha d'ho gizioù koz, a zo eur iez pehini  
 ne d-eo poellet nemet gand ar re a choum eno. Ar  
 iez-ma a zispiljaz da baotred ar *Gonvansion* : evel-se  
 Barer a c'houlennaz ma vije torret : — ann heul fall  
 euz ar iez-ze, eme-z-han, miret re bell ha komzet e  
*departamanchoù* ar c'hus-heol, a zo ken anat, ma teu



ar blouiziz, hervez lavar tud bet war al leac'h, da gemer ar ger *Lezen*, evit ann hini *Relijion*, ha ze bete goulenn, pa gomzeur d'ezho euz a lezennou nevez ar *Republik*, hag hen a zo c'hoant d'ober d'ezho trei a Relijion. — War gement-ze e oe douget ma vije torret ar *Brezonek*. Mes pebez fallentez! — He-man, evel m'hel lavar ann Aotrou ar Brouster, en deuz enebet epad pevar c'hant vloaz, ouc'h iez ar Romaned, hep mont da goll e touez ar Vretoned. Ar Franked pe ar C'hallaoued, pere a zeuaz goude, hen enebaz ivez d'ho zro, mes hep gounid muioc'h war-n-ezhan. Eur Stroll, dalc'het e kear Reims, e 813, a ziskleriaz ne hellje ober karg ebed er vro, ar re a zalc'hje da gomz ar iez-ze; mes ar Vreizaded, pere ne oant ket ken eaz da spounta, ne zalc'hjont stad ebed euz ann troiou disleal-ze, ha dre drugarez ho c'hendalc'h hag ho *fennou kalet*, ho iez, pehini en deuz gwelet o sevel hag o koueza ar *Grekim* kag al *Latin*, a zo komzet c'hoaz hirio enn Europa, ha ze gant *daouzek kant mil den*.

Paotred vad ar *Gonvansion* a oe ivez enebet gant hon tudou ha ne helljont netra enep ar *Brezonek*: ar baotred keaz-ze a zo diskarret a bell-ze, ha he-ma a zalc'h da veza komzet e Breiz-izel hag a zalc'ho, mechans, kaer a vezo ober. Beza en deuz evit-ban ann amzer dremenet hag ann hini a vrema; beza en de-vezo ann hini da zont. Biskoaz ne oe marteze heuliet gant mui a dud gwiziek eget hirio. Ne rofenn ket ali da

zen da vont da gomz enep d'ezhan, dirak ann Aotrou-  
nez Th. De La Villemarqué, Troud, Goesbriand, Tro-  
briand ha Guizouarn, pehini hen gwersfe e gallek  
kouls hag e brezonek.



## SAOTREREZIOU

PE

SAKRILACHOU

DIVEZ 1793, HA DEROU 1794.

—  
KENTEL.

Ann dud ho devoa lavaret *ne vezo ken a Roue!* ho devoa lavaret ivez, *ne vezo ken a Zoue!*

Evel-se, enn dek a viz Du, 1793, ar *Gonvansion* a zou-gaz enl lezen ma vije lezet a gostez ar *Relijion gristen*, arru re goz, hag enoret ann Doueez *Reson*. Kerkent ann Doue azeulet gant Kloviz, Charlemagn, sant Loeiz, Loeiz XIV hag hon holl dudou, a oe great d'ezha diskenn diwar he aoteriou hag enn he leac'h e oe lekeat eur *varrez* bennak, pe er c'hiz all, eur gomedianez hogoz enn noaz, da behini e oe roet ann hano a *Itroun Reson*. Chetu Doueez nevez ar C'hallaoued: he gouel a oe great gant kalz a lid e Pariz, enn drizek a viz Du. Nebent goude, ar gouel direiz-ze a oe ivez lidet er c'hea-rion all hag er parresiou euz ar Rouantelez. Ann holl ilizou a oe gwestlet d'ann *Doueez Reson*, hag ann aoteriou a oa enn-



ho, d'eunn dispac'her bennak evel Marat. Furlukined gadal a bigne e kador ar wirionez, hag a rea goab oc'h Doue. Ac'hano eo e kredaz unan euz ar brezegerien nevez-ze, lavarout ar c'homziou spountuz-ma : — O Doue, ma out e gwirionez Doue, frik ac'hanomp gant da dan-foultr. — Neuze o trei oc'h ar re a oa o selaou, e teuz c'hoaz gant-han, gant eur c'hoarz a ziaoul : — her gwelout a rit, n'euz Done ebed : ma vije unau, en divije en em venjet. — O den rok ha di-boell, kounnari a rez balamour da habaskded Doue ! Ne wiete ket eta *penaoz mar eo habask ann Aotrou, ne d-eo nemed abalamour ma eo peurbaduz*. Buez ann dud a zo berr, hag evit-se e hastont rei he wir da bep hini : mes Roue ann Env en deuz ann hir-bad evit gopraat ha kastiza.

E pep korn a Vro-C'hall, evel ivez euz a Vreiz, e oe gwelet saotrezioù euz ar re argarzusa. — Enn Eskopti Sant-Briek, e parrez Plaintel, e peleac'h ne oa ket a veleien nevez, ar re goz ho devoa, evit frealzidigez ann dud feal, lezet ar Zakramant ebarz ann Armel santel. Eur barner, karget da zastum al listri sakr, enn devoe ann herder da rei ar Zakramant d'he gi da lipat : e parrez Sant-Gweno, *dispac'herien* a gavaz dereat dibri hag eva d'ho dejuni, ebarz ar c'halirioù : o veza klevet e oa ebarz ar voure'h, eur plac'h santel, hanvet Anna Pless, ez ejont d'he c'herc'hat evit he lakaat d'ober evel-d-ho : evel ma tinac'haz hen ober, he c'hasjont gant-ho d'ar bac'h, da Loudeak. — Enn Eskopti Kerne, e Kemper-Korentin, eur Reuer hanvet Dagorn, a gemeraz dirak eunn niver braz a dud, deuet da welout al Lid, kalirioù ann liz-veur, hag a reaz enn-ho kerkent, ar pezh ne gredfe den da lavarout. — Enn Eskopti Gwenned, skeuden Santez-Anna, ken enoret e Breiz, a oe kaset da Alrea ha devet eno. — Enn Eskopti Leon, e Lezneven, en em gavaz *Patrioted* mad awale'h, evit mont da zismantra holl eunn iliz ar Folgat, pehini a oa hep he far ebarz ar vro : eur weac'h all, goude

beza dibourc'het eunn iliz diwar ar meaz, e tistrojont da Lezneven, hanter vezo, hag unan anezho war vare'h, a zalc'he hag a heje ar Zakramant enn he zorn : ann holl dud vad a zaoulinaz enn ho ziez gant spount ha gant glac'har. E Montroulez e oe c'hoantaet diskarr iliz Itroun-Varia ar Vur, mes renerien-kear a harzaz oc'h ann dra ze, gant aoun da denna drouk-vennoz Montrouleziz. — Enn Eskopti Treger, e Gwengamp, eul lezorek alekeaz eur gorden e kerc'hen ann Itroun-Varia Cwir-Sikour, hag he stlejaz dre ar ruiou. De eur-vad ne oe ket torret ar skeuden. E Landreger, soudarded, e gward e kear, a lekeaz ho striv evit dispenn holl eunn liz-veur : ar re-ma deuet euz a Etampey, e tu Pariz, a arruaz e Landreger, e miz Genver, 1794 : kerkent e piljont ar c'halvar savet e kichen iliz Sant-Mikel : goude en em daoljont war ann iliz vraz : diskarr a rejont da genta bez sant Ezvoan, savet gant Iann V, duk a Vreiz. Iann a oe paket e 1420, dre drubarderez paotred Penthierv, ha dastumet e kastel Chantoseau, savet war ribl kleiz ster al Loer, eunn nebeut leoiou hueloc'h evit kear ann Naoned. Eno e reaz gwestl da rei he bouez a aour da Itroun-Varia Karnez ann Naoned, hag he bouez a arc'hant da sant Ezvoan-Landreger, ma hellje mont er meaz ac'hano ; poeza a rea e tro daou c'hant livr. He dud a gemeraz hag a bilaz Chantoseau, pehini ne d-eo ket bet ad-savet abaoe. O verdei war al Loer e tremeneur e harz treid ar roc'h huel war benn pehini e weleur c'hoaz, he ardourioù hag he arvogerioù iliavek holl : meur a weach am euz pignet war-n-ezho, ha ne dremenenn gwech ebed dre eno hep ober d'ar beachourien a vije gan-en war ar vag a-dan, evesaat taol kaer ar Vretoned o kemer ar c'hastel kre-ze ; eunn tamm e ve fouge eunn eunn den pa hell komz gant enor euz a dud he vro. — Ann duk a sevennaz he westl kerkent ha ma oe dispaket euz a Chantoseau. Savet a oa eur bez da sant Ezvoan, war al leac'h ma oa bet douaret, e tre *kazel ann*



*duk* (1) hag ar c'horf iliz. War ziazeziou ar bez, great gant mein Kersanton, e oa kizellet darn euz a c'honidou Iann IV, tad Iann V. Netra a ger brao hag ar bez dantelezet-ze. Kent ma oe pilet gant paotred Etampez, ar relegou, euz a bere ar gevren vrasa eo ar penn, pehini a zo enn he bez, a oe miret dre breder ann Aotrounez Kreiou ha Iann Gwillou, *ofiserien munisipal*. Hirio ez int serret enn eur boestl kaer, roet gant ann Aotrou De Kelen, marvet Arc'heskop a Bariz, e 1839. Ann Aotrou Trevaux, chaloni e Pariz, en deuz savet, e 1846, eur bez nevez war leac'h ann hini koz. — Pa ho devoa ar Stourmerien-ma torret ha pilet holl ebarz ann iliz vraz, en em lekejont d'ober dre neuz eur besiad, pe eunn enteramant. Unan a reaz ar maro, hag a oe goloet gant al lienenn darn a gemeraz ar gwiskamanchou iliz evit ambroug ar c'horf d'ar vered; darn all a choumaz da ganvaoui: ober a rejont tro kear e prosesion, evel pa vijent e gwirionez o tongen eur c'horf maro d'ann douar, ha goude e tistrojont d'ann iliz. Euz ar gwella ho devoa great deski ober besiadou: abarz ann de warlerc'h e kavjont maro mik, ha deuet duz evel eur c'hoz, ann hini enn devoa great he varo, e pad ar prosesion, hag abarz eur c'houec'h miz goude, a oa reudet gant ann dersienn domm, e tu-hont d'ann diou drederen anezh holl. Doue a fallaz d'ezhan en em venji war ann diboure' herien-ze.

Iliz-veur Landreger, gwestlet da zant Tual ha da zant Ezvoan, a zo bet savet e tro hanter ar pevarzekved kantved. Ann Eskop Richard du Poirier, a ziazeaz ar mean kenta anezhi, er bloaz 1339: beza eo unan euz ar c'haera ilizou a

(1) Iann V a zavaz ar gazel-ma, evit beza besiet enn-hi e kichen sant Ezvoan, mes mervel a eure e tu ann Naoned, hag e oe besiet eno, e kichen he dad. Eunn nebeut blavesiou goude, chabistr Landreger e rediaz hini ann Naoned da zaskor d'ezha relegou ann duk, hag e oent neuze besiet enn he gazel.

Veiz-lzel : ann tour, huel a zaou c'hant daou-ugent troatad, a zo ar c'henta goude hini Kastel-Paol : he vir a oa gwechall e plom ha dantelezet euz ar brava : aoun a zavaz e oa dare da goueza, hag e oe diskennet e tro 1780. Unan mein a oe savet kerkent hag he-man a zo ivez soneuz braz da welout. Ar chlostr, savet gant ar Chaloned e 1461, ha stag-ouc'h-stag ouc'h ann iliz, a zo hogoz hep he bar e Breiz.

Abaoue 1843, ec'h aozer ann iliz, evit ann diaveaz, war mizou ar Rouantelez, hag hep dale e vo ker kaer ha biskoaz. Ann dra a zo deuet dre breder Landregeriz, ha peurgedged dre hini ann Aotrou Durand, ho fersoun : ar re-man holl a ra ivez euz ho gwella evit kempenni ann diabarz.

Evit rei d'ar Vretoned ann holl heuz a dileent da gavout euz ann dirollou hag ar zaotrereziou a bere a zo komzet, ann Aotrou ann Hermit a zavaz ar ganaouen a zo aman goude. Hoa-man a redaz enn ho zouez, dindan ann hano : *Kanaouen savet gant eul lez-hanvet Pelluken* (belek) : roet eo bet d'in gant eul Leanez goz euz a Vont-Bareil Goengamp, hanvet : Ar C'hoar St-Michel, pe Sant-Mikel.

❖❖❖ XXV. ❖❖❖

SAOTREREZIOU.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Roil spered d'in, Aotrou.* — 47.

Tud feal deuz ar bed, bet karget a druc,  
 Ha mesket ho taero touez-e-touez gant ma re;  
 Gret deuz ho taoulagad diou ster vraz da welan  
 Ann droug a rer dre holl, er Rouantelez-man.



Ha c'houi, envnedigo, kemeret lod em poan,  
Troet breman a don, lezet buan ho kan ;  
Roet d'in hirvoudo el lec'h meuleudigez  
Da vagan ma glac'har ha ma zavedigez.

Selaouet ann abeg a ra ma holl enkreuz  
Gwelet ha me a wel hep gwir girrieger,  
Nann bikenn hir a-walc'h na vezo ma bue  
Da welan hon dizeur hag a welfenn noz-de.

Ez ann em danevel dre al Le milliget  
Pehini 'zo kavet dre wall ann drouk-spered :  
Al Le-ze 'zo enep da Lezenno Doue,  
N'hellfe den hen ober anez dinac'h ar Fe.

Touet ober pep droug ha pep seurt fallente,  
Ober brezel d'ann Env, daonin skler ann Ine,  
Chetu aze al Le ha petra a douer :  
Pelec'h 'man ar c'hristen a hellfe hen ober?

Drei-z-han eo kemennet terrin ann holl westlo,  
Dilezel Iliz Rom, digerin ar c'hlaustro,  
Pellaat priejo ann eil deuz egile  
Hag eureujin re all a enep urz Doue.

Pe 'm euz bet dinac'het fealded d'ar stado  
Em euz kollet kerkent er bed ma holl wirio,  
Plijadur, levenez, holl ez int tremenet  
'Vel ma ra eunn hunvre, enn noz dre ma spered.

Biskoaz na brezegiz nemet komzio Doue :  
Ar peuc'h, ann unvaniez a garenn enn Ine,  
Koulskoude a laret em bro a vouez huel  
Em boa eur gelell fall, ha lakenn ar brezel.

Seul vu kreske ann drouk, seul vu e prezegenn  
Evit distrein ann dud diwar ar falz Lezen.  
Mes evit ma gopra a oenn e berr flatret  
Hag ambrouget d'ar bac'h dre urz ar *Glubisted*.

Euz a boanio ar c'horf ne gomzinn ket aman,  
War zizeur ann Ine eo gwelloc'h d'in gwelan :  
Ar pezh e ra muan a verk 'barz ma c'halon  
'Eo ann dismeganso 'rer d'ar Relijion.

Biskoaz na oe konnar evel ma zo er vro,  
Me gred eo 'n em strollet ann holl drouk-sperejo  
Evit dont da stourmin ouz gwirio eunn Doue  
Ha lakat ann drougiez enn touez he vugale.

Hon holl fisians, kroaz sakr, ho boamp enn hoc'h laket  
D'ah-hu holl azaouez deuz hor perz 'zo dleet,  
Mes dre drugare fall, evel ar Juzevien,  
Ho pugale, siouaz ! eo hoc'h enebourien.

Petra a welann-me ! eur strollad soudarded,  
Samet a vinvio, gwaz eged paganed,  
Gand hacho o redek da ziskarr ar c'hroajo :  
Pelec'h, o ma Doue, eman ho kuruno !



Safarin a reont, touet ha foultradin,  
E kichen ar c'hroajo; mennan mad e ra d'in  
Klevet ar zoudarded o strakal ho foueto  
Pe deujont da lakat Mab Doue d'ar maro.

Re nebeut 'm euz laret, lakat e rann ouz penn,  
Ez-oc'h, sitoianed, gwaz eged Juzevien;  
Ne wient ket dre vad e flemment Mab Doue,  
Mes c'houi a war her gret, hag her gra koulskoude.

Ar groaz a zisprizet, a wall-gaset breman,  
A rañ ho prasan poan enn hoc'h heur zivezan:  
Kaer 'po sellet out-hi, ne roi ken trugarez  
Hag a lenfot enn-hi splann ho parnidigez.

Ar Profed Jeremi 'skuile gwechall daero  
War ger Jeruzalem pennadet er gwallo,  
Kement a lec'h hon euz da welan, mignoned,  
War eur mor a reuzio 'zo war Bro-C'hall koueet.

'Na heller darrempret ken al lec'hio santel,  
Ar geod, ann drez a zo savet enn-he huel;  
Darn 'zo karget a focn, a ed hag a loened,  
Enn darn all 'zo armo, pe dier-soudarded.

Goadan 'ra ma c'halon, pe sonjann e zo bet  
Danset enn ilizo gand ar sitoianed:  
Ar sonio gadalan a ve kanet enn-he  
Hag a bep seurt bale'nder a ve c'hoaz gret goude.

Ann Iliz a oa kent eunn ti 'vid ar boden,  
Hogen breman eo ti d'ann dud fall 'zo o ren;  
E lec'h ma taskoret kent azeulidigez,  
E rer breman ar gwall hag ar fallagriez.

E barz e Breiz-izel n'ez euz iliz e-bed,  
Ker preizet a gredann, nag ive ker gwastet,  
Evel ann Iliz-veur er ger a Landreger;  
Ann dud kabluz 'zo beo, ho anavout a rer.

Pilet eo ar c'hleier, trompillo deuz ann ee,  
Gret da c'hervel ann dud da glevout komz Doue:  
Ann holl gwiskado sakr gant pere e lidet  
Ar zulio, ar gwelio, 'zo laeret, 'zo saotret.

Ar zent a zo lamet deuz a galz ilizo,  
Torret, tolet enn tan, stlejet dre ar ruo;  
Ann *Itron* lik *Reson* enn ho lec'h 'zo laket  
Hag hi azeulin 'zo d'ann holl gourc'hemennet.

Al Listri sakr zoken 'zo breman disprizet,  
Gant daouarn 'zo dic'hlan, a ve enn-he kroget,  
Ar c'hustod, ar c'halir rusiet gand goad Doue  
A doler, distoler, 'z er gand ann treid warn-he.

Glac'har 'zo e Bro-C'hall: n'ez euz ken a lido;  
Ne vo ken sakrifiz, saotret eo ann templo:  
Ar zulio, ar gwelio ne int pelloc'h miret;  
Ken a Zakramancho, pedin 'za difennet.



Ann oter 'zo freuzet, ar gador diskaret,  
War ar mene a vo ar gwallo prezeget :  
Park ar penn-tiegezh a zo karget a zreok,  
Ar gwir servicherien a zo kaset a-rok.

Ar vinistred feal 'zo difennet out-he,  
Gant Mac'herien Bro-C'hall, prezek komzio Doue,  
Mes ar falz vinistred a zo d'he otreet  
Hadan ann herezi, al *Liberte* hanvet

Evel d'amzer ar varn, ne gafann mu a fe;  
Kimiad d'ar blijadur, kimiad d'ar garante !  
Eman ann Ante-Krist ouz hor gwall heskinan,  
Ha kalz 'ia d'ann daoulin evit he geelan.

Kimiad Relijion, nijet oc'h dreist ar mor,  
Hag et enn eur vro all da glask mu a enor !  
Mes bikenn ma c'halon ne raio joasted,  
Ma oc'h-hu evit mad ebarz hor bro kollet !

Ez ann 'ta da welan ma fazio tremenet  
Pere 'zo kiriek d'ec'h d'hor bezan kuitaet ;  
Ne arzaio ma c'heuz, ma glac'har, ma daero  
Ken am bo ann eur-vad d'ho kwelet a zistro.

Stourmet-hu evid-omp, Doue ann armeo,  
Digaset d'imp ar peuc'h, troet ar c'halono,  
Ma vo ar sperejo unvanet holl kevret  
Da veulin hoc'h hano e bro ar C'hallaoued.

Chet' aze ar beden e ra gant vuelled  
Ho paour kez servicher, dira-z-hoc'h daoulinet :  
Kerent 'barz ar c'hlaç'har, tud deol a bep stad  
'Deu ive d'ho pedin, roet d'he ho mennad,

Skoazel, Gwerc'hez Vari, diskouezet oc'h hor mamm,  
Gret eur sell war hor bro eman 'n hi zremenvan :  
Dizec'het hon daero, kaset-kuit hon enkrezh  
Ha laket ar gwir Fe hag ar peuc'h enn hon touez.

— SKLERIDIGEZH. —

Na helle kristen sellet neuze ouc'h ann ilizou hep kanyaouiñ  
ebarz ar re ne oent ket pilet, e oa mouget ar c'hleuzeur ha  
goullo ar Santual : ar c'hleier a oa diskennet ha kaset da  
denza evit ober moneiz ha kanoliou; unan hep ken a oe  
miret evit seni ann toksin. Al listri hag ar gwiskou sakr a oa  
kemeret evit kaout ann aour hag ann arc'hant a oa enn-ho ;  
skeudennou ar Zent hag al levriou oviz taolet enn tann, leur  
ann ilizou dibaveet evit tenna *salpetr* da ober poultr-kanol  
da zifenn al *Liberte*; enn eur ger dre holl a welfet ar mer-  
kou enz ar preizerezh hag ar zaotrierezh. Al labouriou ar re  
gaera ne oent netra dirag ann *torrerien nevez-ze a skeu-*  
*dennou* : ho filat a rejont holl, ha dre holl e oa ar vez, ann  
dismant, ann alter, ar maro hag ann daerou.



vije klevet mad gand ann holl. Chetu ama evel m'am enz he elhavet, troet e Brezonek : he rei a rann egiz ma 'ma ; gwal ziez e ve lemel ar faziou anezhi, rak mar zo enn-hi traou euz ar re gaera, ez euz ivez brezonek hag e zo kaeroc'h c'hoaz. Moulet eo bet e Brest, e ty Audran, imprim. euz ar Repesantantet.

o\*\*\* XXVI. \*\*\*o

# PLAN, PE DEÇZIN,

EUZ AR GOUEL

DA ZOUE OLL GALLOUDUS,

*Pehini a dle beza celebret an 20 prairial, preposet gant DAVID, ha decredet gant ar Gouvançion nacional.*

A veac'h querquent a goulou deiz, ha dija son ur musicq breselleqaer a ra en em glevet eus a pep leac'h, hac a reont sucedi da chalm ar c'hoandt cousquet un dihungaer ha laouenn.

A vell-dremm eus an heaul mad-oberus pehini a deu da bara, da ober beva ha da liva an natur, mignounet, breudeur, pryedou, bugale, tud coz ha mammou en em breçz guell-pe-vell da orni ha da celebri gouell an eçzanç eus a Zouë, pe an divinitez.

Guelet a rear querquent-all ar banderolennou tri-liou o nigeat dianveaz an tiez ; ar porchou a so decoret gant festonou glasvez ; ar bried chast a deu da trecza gant hocquedou ar pennad caer a vléau eus e merc'h muya caret, epad ma ten ar buguel da rei stardaigou da zivronn e vam, eus a pe-

# GOEL

ANN HINI HUELLA.

— 1794 —

KENTEL.

E kreiz ann direisiou, ar fallantez hag ar zaotreresiou a bere e zo komzet, eunn den, neuze holl-c'halloudek e Bro-C'hall, ha pehini he goloe a wad, a lekeaz enn he benn, rei eunn Doue d'ar C'hallaoued. Robespierre a embannaz *ar beza euz ann Hini-Huella, hag ar peurbadelez euz ann ene.* Kerkent ann holl ilizou, pere a oa bet, eur bloaz diaraok, gwestlet d'ann *Itroun Reson*, a oe gwestlet d'ann *Hini-Huella* : war ho zalbenn e oe lekeat ar skrid-ma : — *Ar bobl gall a anzav ann Hini-Huella hag ar peurbadelez euz ann ene.* —

E meur a leac'h e oe lezet ann ilizou, ha kemeret chapelou evit ann templou nevez-ma : ne oe ket great fall, rak nebeud a dud en em zastume enn-ho : den na iea d'al lidou nemed ar renerien, eur *sitoien* mad bennak hag ar re euz ann dud feal pere a vije, dre wir *ar frankiz*, rediet da zont ivez d'ezho.

Douget a oe eul lezen, ma vije, e miz Mezeven, lidet eur goel enn enor d'ann *Hini-Huella*. Ann urz evit he lida, a oe kaset dre holl dre ar vro, ha troet enn holl iezou evit ma



hini ez eo ar c'haëra quempenadurez, ar map, d'ar vreaç'h vigourus, en em grog eus e armon : ne fell deza receo ar bodryel nemet eus a zaouarn e dad; an den coz en eur moushoarzin dre blijadur, e zaoulagad glibied gant daëlon ar joa a deu da santout yaouaneqaat e ene hac e gouraich en eur bresanti ar c'hleze da zifemeuryen al liberte.

Couscoude trous ar c'hanol a seblant beza cudurunou : en un instant an tyès a so dileset : chomm a reont dindan proteccion al lesonnou hac eus ar vertuzyou republican; leun eo ar ruyon hac ar plaçou-publiq a bobl; ar joa hac ar garantez-a-vreur a deu d'o tan-flammi an eil ouc'h eguile. An hevelep-niver tud-se, decoret eus ar bocquedou han, a so ur parler enaouët, eus a pehini ar c'hoeyou vad a zispos an eneou d'un dra touichus-se.

An taboulinou a ruill; quement tra a guemer ur form nevez. Ar bugale bras, armet a fusuillon, a form eur batailloua quarre en dro d'ar baniell eus o seccionou quen-entrezou. Ar mammon a guittaa o miyben hac o phryedou; dougen a reont en o dourn bocquedou ros; o merc'hed, pe re ne dleont jamès o abandouni nemet evit tremen e divreac'h o goazet, a ra compagneuz dezo, hac a zoug pancrou leun a vocquedou. An tadou a gundu o miyben, armet eus a ur c'hleze : an eil hac eguile e touguont en o dourn ur scourr dero. Tout a zo prest evit an dispart; pep hini a so birvidiq d'en em renta d'al leac'h e pehini e tle commanz ar cerimony a so o vont da rapari ar gaou bras great gant ar beleyen nevez eus ar c'hrim hac eus royaute.

Ur salud artillery a zigas mœnce eus ar moumend desirèt; ar bobl en em reunis er jardin nacional : eno en em renq en dro da un amphiteatr destinet evit ar Gonvancion. Ar porzou an tausta deza a so dicoret gant garlantezon glasvez ha bleunvez lacqueat mesq-e-mesq e touez rubanou tri-lyou.

Ar seccionou arrüet, an autoriteou constituet, ar bobl a

guemenn d'ar representacion national penaus ez eo peptra-oll aprestet evit celebri gouël Douë oll galloudous.

Ar Gonvancion national, diarauguet eus a ur musicq sqil-trus, en em zisqueuz d'ar bobl : ar présidant a veleur en tribunen savet e creiz an amphiteatr; ober ara santout pebez résoun e deus resolvet ar gouël solanel-se; couvia a ra ar bobl da enori an autor eus an natur.

E en lavar : ar bobl a ra gant e gryadennon joayus meurbet daçoni ha laouënaat an ear.

Evel se yvez e ra en em glevet trous ar mor bras en e c'haçz-digacç, pa deu an avel sqiltrus eus ar c'hreiz-deiz d'e sevel ha d'e hiraat en traçuyennouigou hac er forestou aziabell.

En traou d'an amphiteatr en em sao ur monumant e pehini ez int oll reunisset an adversouryen eus an cürvad-publiq; ar mounstr du-pod ha disolant eus an atheism a so en e varr; harpet eo dre an Ambicion, an Egoïsm, dre an Dissaccord hac ar simplicité faus, pehini a dreuz truillon ar reu-zeudignez, a les hanter-velet an ornamanchou eus a pe re en em visquent an esclavet eus ar royaute.

Var an tal eus ar speçzou-se e lenneur ar gueryou-mâ :

*Quen esperanz eus an estranjour.*

Ema o vont da veza ravisset deza. Ar présidant en em daustaa, en eur derc'hel ur flambezenn entre e zaouarn : an tan a grog er groupat monumant haillounaich-se; rantren ara doën en ueant gant ar memès buhander evel ar gonspiratouryen a zo bet squët gant countell-lemm eus al leonn.

Eus a greiz ar c'hoz-marteryou-se en em sao ar Furnez gant un tal calm ha selear; quentre ma e gueleur, daëlon a joa hac a reconnessanç a ziruil eus ann oll daoulagad; consoli a ra an den honest meurbet pehini a felle d'an atheism da boulsa an disesper. Merc'h an eé a seblant lavaret : Pobl, rent hommaich d'ar penn-caus eus an natur; resped e de-



crejou hep ceinhamand. Ra goueze e poultr an den audacius pehini a gredte douguen an distera taul dizey ! Pobl generus ha calounecq, istim eus da vrasder dre ar moyennoù a impligeur evit da fazya. Da adversouryen impocrid a anavez da garantez francq evit lezennoù ar Resoun ; hac ez eo dre an hent-se se fellent da goll : mæs ne vezi muy eaz da droumpl dre o affrounterez ; te a vrusuno da-unan an idol nevez pehini a felle d'ar magicyanet-nevez-se, sevel adarre dre ar gruelded.

Goude ar c'henta cerimony-se, pehini a so terminet dre ur c'han simpl hæ joyaus, trous an taboulinou a ra en em entent, ar son sçlent eus an drompill a deu da straqila en ear. Ar Bobl en em dispos : em a en urz : diblassa ha partial a ra.... Diou golonnen en em avanç : ar goaset en ur c'hostez, hac ar graguez en ur c'hostez-all, a vale var diou roudenn queyd-ha-queyd. Ar batailloum quarre eus ar hautret yaouaneq a vale atau er memès urz. Reaq ar seccionou a so merquet dioue'h reiz al lizerennou. E creiz ar Bobl e velen e representantet ; bez ez int ep dro dezo *ar bugalæerts*, ornet gant vyoletès ; *an eil oad*, eus ar mytra ; *an oad furn*, eus a dero ; *hac an discarr-oad* gant e vlean guen, eus a delyou guini hac eus a olives : pep representant a zoug en e zourn ur bocqued a bennou-ed, blûnvez ha frouez sin curar mission a so bet fiziet enna ; mission pehini a bourlenint an desped d'an ampeichamanchou a deu da c'henel dindan e c'hamejou.

E creiz ar representacion nacional, pevar taro vigourus, goloët a festounon hac ar c'harlantezou, a drayn ur c'har pompus var pehini e luguern ar stalyat composet eus an ostilloù an oll ardon ha micherou, hac eus an oll produccionon eus a terroüer Franç.

« C'hui pe re a vef el lux, er cher vad hac er goader ;  
» c'hui eus a be re ar beza ne deo nemet ur c'housquet poa-

nus, marteze e cretdeoc'h teuler un taul lagad disprisuz  
» var ar benvyou util-se : ah ! tec'hit, tec'hit pell diouzomp ;  
» oc'h eneoù brein-tuf ne hellent quet tanvâ ar jouissançoù  
» simpl eus an natur ! Ha te, pobl labourus ha sansibl, deus  
» da jouissa eus da driompl hac eus da c'hloar ; gra faë eus  
» an tensorsyou vil eus da adversouryen millignet ; na an-  
» coünac'ha quet dreist-oll penaus an dud vaillant meurbet  
» hac ar mad-obereuryen eus an humenidiguez a gundue an  
» alar eus ar memès dourn pehini en devoa treac'het ar  
» ronëet hac o lacquepaudet. »

Goude beza bet, epad an hend goloët a offrançoù, hac a roquedou ar statu eus al Liberte, ar pompad dreist-ordinal a arru e parq ar reunion. « Encou pur, calounou vertuzus,  
» amâ eo e c'hortos abanoc'h un taul lagad ravissus, ama  
» eo e deus al Liberte espernet deoc'h e jouissançoù ar re  
» douça. »

Ur menez immens a deuz an Auter eus ar vam-brô ; var barr ar menez-se en em sao ar vezen eus al Liberte ; ar representantet, en em string dindan e scourrou protectour ; an tadou gant o mibyen en em laqaa var an andret eus ar menez a so merquet dezo ; ar mammou gant o plac'het en em renq er c'hostez all ; o frouëz benniguet ha vertuzyou o goased a so an fitrou hep quen o dens-hy cunduet : ar silanç doün a ren eus a bep leac'h ; an accordou touichus eus a ur musicq melodyus a reout en em glevet ; an tadou compaignnequet gant o mibyen, a gan ur c'henta coublad gouërzou : toui a reont assembles da na guitaat mui an armou, nemet goude beza destruiguet an adversouryen eus ar Republiq : ar bobl oll a lavar adarre ar guërz divez ; ar plac'het gant o mammou, an daonlagad assur var an oabl stereded, a gan un eil coublad : ar re-ma a bromet da na eureugi james nemet da dud o devezo servichet ar vam-brô ; ar mammou o deveus



ourgouill rag maz int..... (1) Hñn bulage, emezo, goude beza purget an douar euz an tyranded alyet en hon enep a zistroi d'en em acqyta eus a un dever qer d'o c'haloun; ciosa a raint croc'henn al lagad d'an nep eus a bere o dens recevet an deiz. Ar bobl a lavar c'hoaz an exprimidiguez eus ar santimanchou uhel-se inspiret dre ar garantez saer eus ar vertuzyou.

Un teirved ha diveza coublad a so canet gant ar bobl en oll-d'an oll. Tout pep tra a so touichet e galoun, tout mellet ha divellet, en em guessufquont var har menez: goased, graguez, merc'hed, tud-coz, bugale, oll e reont straqta an ear eus o mouzyou. Amá, ar mammou a c'hoasq o bugale var o bronnou; tu-hont, en eur zesiza ar yaouanqa eus o bugale mal; ar re n'o deuz quet avoalc'h a nerz evit ober cumpagnunez d'o zadou, hac en eur sevel anezo a bouëz o divreac'h e presantont anezo en hommaich da autor an natur; ar plac'het yaouanq a sclap entreze an eë ar bocquedou o deveus dougnet: o phropriete hep muy quen en un oad quen tener. Er memès instant ha dre un accord souëzus ar mi-byen dre un ardor birvidiq ha bresselleq, a den a c'hlezeyer, hac o depos e daouarn o zadou-coz; toui a reont le da ober trioumphla an ingalite hac al liberte a enep greverez an tyranded. En eur bartagi an tanigenn naturel eus o mi-byen, ann dud-coz ravisset o bryataa hac a squill varnezo o benediccion paternel.

Un discarg terruyl a artilliry, a ro da entent ar vengeancez nacional, enflammi a ra ar gouraich eus hon republicanet; rei a ra da anaout dezo ez eo arrüet an deiz a c'hloar. Ur c'han cre ha bresselleq, diarauq quemennat eus ar victor, a respount oud trous ar c'hanol. An oll Francisyeon a gounfoundt o santimanchou en ur vryata-clos fraternel ha c'hueg:

(1) Ama a oa eur ger re vezuz da lavarout.

n'o devez muy nemet ur voëz, eus a pehini ar c'hri general, *ra vezo ar Republik*, a bign entreze Douë.

— SKLERIDIGEZ. —

Ar gouel-ma a oe lidet dre holl gant mui pe nebentoc'h a lid, hervez galloud pep parrez, ha diouc'h m'en em gavaz ivez er c'heariou hag er parresiou, *Sitoianed* mui pe nebeutec'h birvidik. — Savet a oe eunn tammik menez evit ar gouel; hac evit skeudenna ar pevar oad enz ar vuez, e oe kemeret bugale, tud iaouank, tud e barr ann oad ha tud koz gwazed ha merc'hed. Eunn den koz, eunn tronsad segal glaz enn he zourn, ha savet war lein ar menez, a skeudenne *ann Tad-Eternel*, pe *ann Hini-Huella*: prezek a rea a bouez penn penaoz, er bloaz-ze, ann ed e roje kant evid unan; mes hervez m'am euz klevet gant kalz a dud koz, ar segal hag ann holl edou a eaz da fall, ha ne oe dastumet nemed *unan evit kant*.

Galloud a raenn lavarout penaoz e oe lidet ar gouel-ma e meur a leac'h euz a Vreiz, hag henvel a helfennivez meur a *Dad-Eternel*; mes lezel a rann gand eunn all da lavarout ann dra-ma. Eunn *Tad-Eternel*, c'hoaz beo, mes michans dare da vont da welout ann hini en devoa skeudennet, en deuz lavaret d'in meur a histor war c'houel *ann Hini-Huella*.

Robespierre en devoa lavaret enn eur brezegeñ e reaz ebarz ar gouel-ma: — En em roump holl hirio d'ar peoc'h ha d'ann eurusted: war-c'hoaz enn eur gregi a-nevez enn hol labourion, e skofomp gand eur veoder nevez, war enebourien ar *Republik*. —

Evel-se ar maro ne dlie ket arzaoi pell-amzer, ha gouel Doue ar *Revolusion* ne dlie beza nemed ur paouez da skuila ar gwad, hag eur paouez euz eunn deiz hep ken. Al lazerez e



gendalc'haz antronoz : Robespierre a oe he-unan gillotinet nao-deiz war-n-ugent goude , ha kevret gant-han kalz euz he gen-gwallerien. —

Pa emaomp gant goueliou ann dispac'herien , e livirinn eunn dra gaer c'hoarvezet e Brest hervez ma lavar lod , hac hervez lod all , e Lesneven. Edoat neuze e penn kenta ar *Revolusion* , hag eur gouel a reat enn enor da Virabeau. Eunn ingroez a dud a oa en em zastumet war dachen kear , eunn aoter a oa savet e kreiz ann dachen , ha war ann aoter e oa le-keat skeuden pe *portret* Mirabeau. Hervez ma c'hour-c'hemene al lid , ann holl a dlle en em deurel war ann daoulin dirak ann idol-ze pa vije kanet eur zon hanvet ar *Marseillaiz*. Pennou kear , ar re a dlle rei skouer vad d'ar bobl , ha mirout na vije great eunn dra ker sod , a gouezaz d'ann daoulin evel ar re all. Unan hep ken a joumaz enn he zao ; ann Aotrou Feburier a oa. Evel den a garg , eil d'ar Barnour-a beoc'h , en em gave dalc'het da vont d'ar gouel ; hep mar , ne wic ket penn-da-benn ar pezh a vije great eno. Pa welaz ann holl war ho daoulin , o kana meuleudiou da Virabeau , hen , soun ha digeflusk , a griaz a vouez huel : *Idolatriach , idolatriach eo kement-ma ?* He vignoned a dosta out-han , a zach war he zillad evit ober d'ezhan plega d'ann douar , n'her greaz morse. Ar bobl munud hag ar zoudarded a gri : « D'ann daou- » lin ! d'ann daoulin , Feburier ! » — « Nann , nann , » eme-z-han gant herder ! Ne azeulann nemet da

» eunn Doue. Idolatriach a zo ama , Aotrounez , ido- » latriach. » He c'hreg , euz a brenestr he zi , a wele ann traou-ma , ha na denne morse he daoulagad di- » var-n-ezhan. Enn eul lizer skrivet gant-hid'ann Aotrou » Floc'h he fersoun , neuze e Bro-Zaoz , e komz evel- » henn : « Kel lies-gweac'h , eme-z-hi , ma her c'hlevenn » oc'h anzañ he feiz , e kave d'in e neuze va c'haloun » eun eur mor a zudi , hac em oa c'hoant e vijenn » bet enn he leac'h gant va holl vugale. Pa weliz e » kemere ann traou eunn dro fall , e likiiz va diou » verc'h ha va daou baotrik war ho daoulin , evit pedi » Doue da rei d'ho zad kaloun beteg ann divez. Ar » c'hlezcier a luc'he a us d'he benn ; eunn troc'had » soudarded a gouezaz ho fuzillou war-n-ezhan ; » kredi e reann e oant o vont d'he zrailla , ha va c'ha- » loun a zaouhantere etre ar spount hag al levenez. » Klask a reann kavout he zaoulagad , evit lavarout » d'ezhan dre zin , e kavenn mad ar pezh a rea , ha » n'en doa nemet kenderc'hel. Lavaret en deuz d'in » goudevez n'en devoa sellet ouz-in nemet diou » weach , gant aoun , eme-z-han , na vije deuet ar » gwel ec'hanoun da voukaat he galoun , d'he zi- » nerza , pe d'hel lakaat da ober eunn dra bennak a » re , dre garantez evit ar Relijion. »

Ar gouel a ehanaz e kreiz ann hu , hag ar mallo- » sion a laoske mignoned ar Republik war ar c'hristen » kalounek-ma. Ann Aotrou Feburier a oa karet » hag enoret enn he gear ; evel-se , pa bare ar zoudar-



dea no c'blezeier hag ho fuzillou war-n-ezhan, ar ward-nasionnal a lavare grons e divije tennet ivez, ma vije great droug ebed d'ez-han. Eunn troc'had anezhi zoken a ieaz d'he gas d'ar gear, hag a joumaz da ziuall he di enep livastred kear hag ann dispa-c'herien kounnaret. Antronoz ar re a ioa bet ho-unan war ho daoulin, a reaz kant meuleudi d'ann Aotrou Feburier. « Ia, eme-z-ho, n'euz nemet Feburier enn » hor c'hear hag a ve gwir gristen, ha gwestl da zi- » fenn he greden. »

Klevet am euz e Lesneven ann demezell Franseza Feburier, merc'h d'ar c'hristen kalounek-ma, o tanevelli he-unan ar pezh am euz skrivet, hag e kav d'in e deuz lavaret e oe c'hoarvezet ann taol e Lesneven. Lavarout a helleur ouz ann demezell Feburier : henvelep tad, henvelep merc'h. Ann holl a oar ar vad e deuz gret e Lesneven epad he buez. He zi, gant kement a zalc'he out-han, e deuz roet d'ann iliz evit presbital; eunn dalvoudegez a c'houec'h mil skoet a zo eno, a lakaann.



## RENERIEN

ESKOPTIOU BREIZ-IZEL.


Peger kriz bennak ma oa ann heskin, ar veleien choumet er vro, a zalc'he, evel ma zo bet gwelet, da

gentelia ann dud feal ha da vasta da ezommou ho ene : bale a reant dre holl dre ar parresiou e leac'h ma vijent goulenmet. Ann Eskoptiou zoken ne baouez-jont ket da gaout ho Evesidi pere ho rene enn hano ann Eskibien, gant pere en em glevent. Euz a weled ar prisonniou e pere e vijent dalc'het, e rea aliez ann Aotrounez ma ho c'harg a vikeled-vraz. Eskopti Kemper, a oe, e pad ar bloaveziou gwall-reuzeudik-ze, renet gant ann Aotrounez Dulaurents ha Tiberj; hini Gwenned, gant ann Aotrou Kokerel; hini Sant-Briek, gant ann Aotrounez Robien ha Manoir; hini Treger, gant ann Aotrou Sant-Priest, hag hini Leon, gant ann Aotrounez Perron, rener skol-vraz Sant-Paol, hag Herri, chaloni.




## BANNIEL

AR VRETONED.



— 1795 —



KENTEL.

Kalz a dudchentil evel ivez a dud bilen euz a Vro-Chall, a oa tremenet da Vro-Zaoz evit tec'hout diouc'h



ann heskin. E tro divez 1793, e oent galvet holl da Londrez hag engwestlet evit mont da ober eunn diskenn e Breiz-izel : ann duk a Rohan a dlie ho ren. Roet a oe d'ar Vretoned kement-ma da anaout, hag evit ho atiza da skoazia ann diskenn, e oe ivez kaset d'ez-ho ar ganaouen a zo ama goude : hou-man a oe kanet dre holl, ha dre holl e save ar *pennou-baz*, pa arruaz ar c'helou ne vije ket a ziskenn.

Ann dud a oa evit ann diskenn-ma, a oe, evit ann darn vuia, ar re en em lestraz evit hini Kiberon, da eunn ugent miz goude.

Ar ganaouen a zo het savet gant eunn ofiser euz a Yontroulez, hanvet Huon a Germadek : he-man a oa eunn den drant hag a galz a spered. Lavarout e rea a weachou : « Diwar iun ez ounn pounner a benn ; mes » p'am be eur banne dindan va fri, ne raenn van rak » ar godiser Voltair. » Goude emgann Kiberon, ann Aotrou Kermadek a zisroaz da Londrez hag ac'hant ez eaz d'ann Inizi : a-c'houdevez n'euz ket bet klevet komz anezhan. — Kement-ma a zeu digant ar c'hou-ronal Du Brieu, he gen-stourmer.

Ar ganaouen a zo het roet d'in, gant ann Aotrou J. a Benngwern, euz a Lannuon.

## BANNIEL AR VRETONED.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Klevit, koz ha iaouank.* — 45.

Mar plijfe gant Doue e hallfemp c'hoaz gwelet,  
Hon Re-vraz ha gant-he Banniel ar Vretoned,  
Ni a iaje d'hen heul hag a diskouefe c'hoaz  
Petra ez eo tud Breiz, hag int bet a viskoaz.

Meur a Roue 'zo bet, zoken ar Roue Zaoz,  
O klaskout hel lemel a zaouarn hon tud koz ;  
Didalve eo bet d'he, hini n'hen deuz gallet ;  
Ha breman gant tud fall chetu-han diskarret.

Mes arru 'zo skoazel, redomp d'ann od buan,  
Ni her gwelo savet gant ar Prins a Rohan ;  
Trezet gant-han ar mor, evit dont da difenn  
Ar bobl hag ar Roue hag ar Lezen gristen.

Ouz heul 'zo beleien, tudchentil ha tud all  
'Zo douget holl evit ar Roue a Vro-C'hall ;  
Dindan ho banniel gwenn heuliomp-he d'ar brezel :  
Ni a vo gant harp mad, ne oufemp kaet gwell ;

Arru barz ann arme, renket d'en em ganna  
Ni heulio e pep lec'h niz ann Dukez Anna :  
Ar gonid a vo d'imp : Doue hon skoazello  
Ha pep tol a skofomp, a vo tol ar maro.



Pe a vo gwastet holl lazerien ar Roue,  
 Laeron ann ilisou ha nac'herien Doue,  
 Ni zavo war he dron Loeiz ar seitekved.  
 Ha ni 'n em ganno c'hoaz mar n'hen enorer ket.

Renket pep kefridi, paouezet ar brezel,  
 Hag ambrouget ar Prins gant enor d'he gastel;  
 Mar deu bec'h d'ar Roue 'kavo c'hoaz enn eunn tenn  
 Rohan ha tud he vro, gwir hanvet *torr-he-benn*.

— SKLERIDIGEZ. —

Ann Dukez Anna, a oa Dukez a Vreiz : beteg hou-man, hor bro e devoa bet he Rouaned hag he Duked, hag en em rene he-unan. Anna a zimezaz e 1594, d'ar Roue Gall Charlez VIII, ha goude e 1599, da Loeiz XII, deut enn he leac'h. Kas a eure gant-hi Breiz evit argourou da Vro-C'hall, hag abaoue omp choumet stag ouc'h Bro-C'hall. Evel-se e oe unanet ann diou vro-ma, hag ann unvaniez-ze pehini ne hellaz da gaout na bouc'hal Kloviz, na kleze Charlemagn, nag armeou hanter kant Roue, na nao c'hant vloaz emgannou euz ar c'hrisa, ann unvaniez-ze pehini, ugent vloaz diaraok, a vije bet ene-bet gant al loden vrasa euz ar Vretoned, beteg ann diveza berad euz ho goad, a oe great gand aotre vad kalz euz anezho, hag evel hervez ar reiz, hag hep dispac'h. — Koulskoude ar marc'had-dimizi-ze na zouge nemet eunn dra poanuz d'ar Vretoned, da lavarout eo n'ho divije ann diou vro nemed ann hevelep Roue; rak Breiz a viraz he lezennou hag he gwiriou koz, ha beza e deuz dalc'het d'ho fiaoua beteg 1790. Evit ar pez a zell ouz he feiz, he iez hag he gisiou, n'e

deuz ket c'hoaz ho dilezet, hag hep mar e talc'ho d'ezho ken na vezo troet he *henchou mean* enn *henchou houarn*, ha ken na vezo disket d'ann diveza euz he mesaerien denved, lenn ha heulia mad ar *skrijou-pemdeziek* a gouez bemdez war-n-omp euz a Bariz, ker stank ha ma kouez ar c'hazarc'h e deisiou ar goan braz.

Anna a varvaz e kastel Blois, enn nao a viz Genver, 1614. Enn eur vervel e roaz he c'haloun d'he *Bretoned ker*. He c'haloun a oe dastumet enn eur glosen arc'hant ha digaset da iliz Karmez, d'ann Naoned : he c'horf a oe kaset da iliz Sant-Denis, gant re ar Rouaned hag ar Rouanezed Gall, hag eno e oe savet d'ezhan eur bez euz ar c'haera. Michans n'ez a breton ebed da du Sant-Denis, hep monet da welout ar bez-ma; evidoun-me o veza en em gavet war dro, na helliz ket mirout da vonet, ha pa weliz e oa unan euz ar besiou kaera a zo eno, am boe evel eunn tammik fouge o welout eur *Vretonez* muioc'h enoret evit ann darn vuia euz a Rouaned hag a Rouanezed Bro-C'hall. Gwelet am euz ivez ar gampr e pehini e varvaz, d'ann oad a zeiz vloaz ha tregont; ar zal e pehini e oe eureujet da genta da Charlez VIII, e kastel Lanjeais, tost da Dour, hag ar chapell e pehini e oe eureujet goude da Loeiz XII, e kastel braz ann Naoned. E ti-kear ar gear-ma am euz c'hoaz gwelet ar glosen arc'hant e pehini e oa dastumet he c'haloun. Pebez plijadur evit eur breton gwelout traou hag a zong da veuleudi he vro, ha dreist holl pa ho c'hav e touez ar C'hallaoued : neuze a sav eunn tamm he benn hag a lavar he c'her.

— Sesar, Impalaer romen, o veza deut brema ez euz e tro eunn naontek kant vloaz, da glask plega ar Vretoned dindan he c'halloud, a lavaraz goude euz anezho, a ze hervez kalz a werseerien : *Quam terribiles sunt Britonnes, quando dicunt, TORR-HE-BENN!* da c'houzout eo : pegement ez eo ar Vretoned da zouja pa leveront *torr-he-benn!*



Ar ger ma a oa ho ger a lazerez enn emgannou : evel-se, enn eur zistrei euz ann emgann a reaz ann Duk Iann V, d'ar Zaozon e tu Brest, e tro 1405, ar Vretoned a lavare d'ho zud :

Ar Zaozon a dec'he souden  
Pa lavaremp—ni : *Torr-he-benn* (1).



## BELEIEN

### HA TUD FEAL

BARNET D'AR MARO HA MERZERIET E BREIZ-IZEL,  
E-PAD AR *REVOLUTION* (2).

### BELEIEN HA TUD ALL

BARNET D'AR MARO GANT BREUJOU SANT-BRIEK.


Breujou Sant-Briek en em ziskouezaz kriz braz e kenver ar veleien goz, hag ann dud vad ho digemere enn ho ziez. Ann hini kenta e varnjont d'ar maro a oe Gabriel Kerambrum, kloarek iaouank euz a Landreger : heman a dremenaz, e 1792, da enezen Jerzea, mes hep dale e tistroaz d'ar vro : paket a oe enn divez miz Du, 1793, ha gillotinet e Sant-

(1) Ann Aotrou ar Brouster, belek. — (Histor Breiz.)

(2) Ama eo lekeat dlouc'h-tu, hanoiou ann darn vuia euz ar veleien hag ann dud feal a oe barnet d'ar maro, pe merzeriet e Breiz, e-pad ar *Revolution*.

Briek, enn nao a viz Kerzu. — E miz Kenver, 1794, e oe gillotinet ann Aotrounez ar Mest, belek euz a Eskopti Sant-Malo; — Boulanjer, belek euz a Eskopti Sant-Briek; — Dujardin, chaloni eus a iliz ar Vur, e Montroulez, ha Janetta Richekoeur, evit her beza kuzet. — E miz C'hoevrer, e oe dibennet ann Aotrounez Avril, belek euz a Bleslin, hag Hillion, manac'h Sant-Beneat.

Al lazeresou-ma a reaz d'ar veleien, kuzet enn Eskopti Sant-Briek, beza muioc'h war ho evez : evel-se, ne oe paket hini ken na oe miz Mae : neuze e oe paket e Landreger, ann Aotrounez Lajat hag ar Gall, ha kevret gant-ho, ann Itroun Taupin, e ti pehini e oant kuzet. Chetu ama kanaouen ho merzerenti.



## MERZERENTI

ANN AOTROUNEZ LAJAT HAG AR GALL.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Gwerz santez Anna*. — 57.

Tostait holl da glevet, me ho ped, Bretoned, Eunn danevel diverruz pehini 'zo bet gret War varv daou zen a Iliz, paket e Landreger, Gant soudarded didrue, n'ez euz ket pell amzer.



Kend evit monet pelloc'h me a zeu d'ho henvel :  
Ar c'hentan : Andrev ar Gall deuz a Bleudaniel,  
Kure 'oa 'barz e Kavan : ann eil, Fransez Lajat,  
Kure 'barz e Pleuvian, ha ganet e Langoat.

Ebarz ar bla mil eizkant, nemet c'houec'h da lemel,  
'Oe gwall-gaset a-neve ar Vinistred santel :  
Darn anezhe e Bro-Zaoz a ie rok ar maro,  
Darn all ive a chome kuzet ebarz ar vro.

Ouz penn ann daou Otro-man, al Lajat hag ar Gall,  
Landreger a guze c'hoaz kalz a veleien all ;  
Ar ger Eskopti Treger 'oe a viskoaz brudet  
Dre he c'harante dener 'vit ar gwir Vinistred.

Enn ti ann Itron Taupin 'oa kuzet ann daou-man ;  
Eno, ma c'henvroiz paour, gant keun hen diskit-han ;  
Eno ho deuz deraouet da veza bourreviet  
Evit monet d'ann nevo da veza kurunet.

Eunn eiz kant soudard direiz, kri evel leoned,  
Kevret 'barz e Landreger, a zo bet diskennet :  
Furchan a rent ann tier, 'barz e pevar c'horn ker,  
Ha gedan a rent dre holl kavet eur *refrakter*.

Aliez c'hoaz arok-ze a oe heskinerien  
Ebarz ann daou di nesan, oc'h enklask beleien,  
Ha biskoaz bete neuze den n'ho devoa kavet,  
Rak peb beleg, hep mont pell, a ve saveteet.

Dre eunn digor dianaf, grinolio ann daou di,  
Buan ebarz enn ezomm, hellet darempredi ;  
Keit ma vije ar gwardo o klask barz eunn unan  
Ar veleien enn ti all a dremene hep poan.

Mes, siouaz ! er mare-ze, eunn alc'houez dianket  
Ebarz enn ezomm vrasan n'en deo ket bet kavet :  
Dre eunn hevelep digwez, kerkent ann daou otro  
En em gavaz kemeret evit mont d'ar maro.

Chetu-hi 'ta ereet ha kaset d'ar prizon,  
'Vel daou laer, pe daou lazer, d'ar ger a Lannuon.  
Ne vo ket hir ho frosez : nep 'zo feal d'ar Fe  
Gand ar varnerien neve, 've barnet hep dale.

'Vit gwir, eunn tri de goude, 'oe ann daou velek-man,  
Barnet 'vel torfedourien, ha re deuz ar gwasan :  
Da leur-ger ar marc'hallac'h ez int ho daou kaset,  
Evit dre zorn ar bourreo bezan merzeriet.

Ann daou verzer o vonet, war eunn ton truezuz  
Ho deuz kanet dre ar ru, Litanio Jezuz :  
Pa zavjont d'ar marc'hallac'h, dre ar *Misere*,  
Ho deuz goulennet neuze ouz Doue trugare.

Ann otro Andrev ar Gall da gentan 'zo kaset  
Da sevel war ar chafod, da vezan dibennet :  
'Keit-ze ann otro Lajat a bede hor Zalver  
Da gemer enn he balez, Ineo daou verzer.



Pa welaz he vreur beleg ebarz ar c'har tolet  
Gant eur galon ar vrasan er skeul ez eo pignet ;  
Savet krenn war ar chafod 'teurveaz prezegin ,  
Hogen ann taboulino kerkent a zeu da skein.

'Barz cunn hevelep darvoud evel Loeiz c'houezek  
Pa wel ar beleg santel na helle ket prezek ,  
War ann dud a oa enn dro he zorn en deuz savet ,  
Ha gant kalz a garante he vennoz d'he roet.

Evit-he heskinerien e westl he zakrifiz ,  
Goul e ra goude skoazel evit ar gwir Iliz ,  
Goul e ra ma tistroio evit ann holl vikenn  
Ar Vretoned d'al Lezen gatolig ha romen.

Tolet ez eo bet he gorf gand egile er c'har  
Evit bezan kareet e trezeg ann douar :  
Roet 'zo d'he evit he , bered sant Nikolaz ,  
Eno 'int bet douaret hep peden na son glaz.

Rec'hed ez oc'h , Kristenien , o klevet ar maro  
P'hini 'zo bet gouzanvet na gant hon daou otro :  
Pare ez int-hi breman ; mes ni war ann douar  
'Zoc'hoaz roet d'ar pec'hed , d'ar boan had'ar c'hlaç'har

## MERZERENTI ANN ITRON TAUPIN.

Daou ze goude kement-man , penn ann Itron Taupin,  
A deu ive da goezan dindan ar gillotin :  
Hou-man a varv hep keinan ha gant kalz a galon ,  
Laouen da rein he bue 'vit ar Relijion.

En em wiskan a eure enn he c'haeran gwisk gwen ,  
'Vel pe 'z aje d'hec'h eured , e lakaz pemp bleunen :  
Kerzed e ra d'ar breudo gand eunn dremm 'oa joauz ;  
Kement-man n'euz evit-hi netra a ve euzuz.

Pa oa dirag ar barner , hen poaniet he galon ,  
E laraz d'ezhi krial : *Bebet ann Nasion !*  
Diskouezit keun , eme-z-han , dilezit ho Roue ,  
Ha c'houi a vezo kerkent losket kuit da vale.

— Karet e rann ma Roue ha ma Relijion ;  
Birkenn me na griinn : *Bebet ann Nasion !*  
D'am Doue , ha d'am Roue , eme ar vrek santel ,  
E vezinn bepred feal : me 'zo reiz da vervel. —

Goul a rez hen digant-hi , hag hi na wie ket  
E oa enep d'al lezen ar pez he devoa gret ;  
O ligemer trubarded , tud karged a wallo ,  
Barnet gant ann Nasion da vont kuit deuz ar vro.



— Doue, eme ar vrek man, ma mestr hag hoc'h hini  
Dre eur gourc'hemenn santel en deuz kemennet din,  
Kat true ouz ar beorien a zo hep ti ebed,  
Ha rein d'he 'barz em hini eur gwele da gousket. —

Sonjet, eme ar barner, enn ho pugaligo,  
Pere a chom hep skoazel pa'z it c'houi d'ar maro :

— Doue, eme ar vamm-man p'hini n'euz ho c'hrouet,  
Pa varvann 'vit he Lezen, ho evesai bepred.

— Ma bugale, eme-z-hi, selaouit eur gentel  
A ro d'ez-hoc'h ho mamm ger, diarok 'vit mervel :  
Choumit bete ar maro, feal d'ar gwir Doue,  
Ha ni 'n em welo goude kurunet 'barz ann ee.

Gwec'h all Doue a wele 'barz enn he ilizo  
Gant he vugale meulet, azeulet he hano :  
Bremen 'eo he Vinistred holl d'ar maro barnet :  
Pelec'h eman, ma broiz, ann den ne welfe ket !

Pedomp eta, ma breuder, trugare ann Aotro  
Da zistrein diwar-n-omp-ni, eur walen ker garo,  
Da lakat penn hep dale, d'ann heskin, d'ann drougiciz  
Ha da zigaz a neve he Lezen enn hon touez.

— SKLERIDIGEZ. —

Ann Aotrounez Lajat hag ar Gall a dremenaz da Jerzea, e  
tro divez 1792. Ann daou Aotrou-ma a oa leun a veoder evit

silvidigez ann encon ha ne reant bemdez, enn ho harlu, ne-  
med hirvoudi war ar stad a zilez e behini e oa tud vad ar vro  
enn dro da Landreger : en em guzulia a rejont eta evit dont  
d'ho frealzi, ha distrei e rejont da Vreiz, e tro hanter 1793.  
O veza denet da Landreger e oent digemeret e ti Ursula  
Terrier, euz a behini ar pried, galvet Taupin, paotr a gampr  
ann Aotrou ar Mintier, Eskoh euz ar gear-ze, a oa eat gant  
he vestr da Vro-Zaoz. Euz ann ti-ma ez eant enn noz, ha zo-  
ken enn deiz, dic'hizet e Plouiziz, hag ivez a-wechou e stou-  
paerien, evel paotred ar Roc'h-Derrien (1), da welout ha  
da frealzi ann dud vad euz ar parresiou diwardro, ha ze war  
zigare gwerza pe brena eunn dra bennak e leac'h ma tre-  
ment. Ann Aotrou Lajat dreist holl, a rea ar *Roc'hard*  
euz ar gwella : meur a veach enn eur c'houlenn stoap, koz  
podou-houarn, koz had lin pe goz traou all da brena, e reaz  
*marc'hajou* pere n'en divije ket great anez kement-ma.  
Evel-se, da vare ann here, ec'h arruaz enn eunn ti, pa oa  
ar baleerien ouc'h taol o leina. Goude beza lavaret eur ger  
mad bennak d'ar baotred-ma, e c'houlennaz ouc'h mestr ann  
ti ha beza e oa koz had lin da werza : ann den ma a lavaraz  
kerkent d'ar *Roc'hard*, pignal d'ann nec'h gant-han : eur  
predik goude, e oe galvet ivez d'ann nec'h, ar vatez vraz hag  
eunn daou pe dri baotr da skoazia ouc'h ann had lin. Pa  
oant arru, ar *marc'hadour* a eure *marc'had* e tre ar vatez  
hag unan euz ar baotred-ze : pep tra a oa bet aozet eno dia-  
rok gant ar vistri, evit ann dimezi, ha great a oe ann eured  
hep na glevaz ar baleerien c'houes ebed euz anezhan. Ar ba-  
leerien ne weljont enn Aotrou Lajat nemed eur gwir *Ro-  
c'hard*, evel ma oant kustumm da welout aliez o vale dre ar

(1) Tud ar gear-ma e ra holl gwerz pe werz, pep hini hervez  
he c'halloud ; hanaveet int e Treger evit tud seven ha mad da  
varc'hata.



vro. — Ar vaouez a oe eureujet eno, a zo c'hoaz beo, hag e deuz lavaret d'in ann dra. — Ne oe ket ken euruz ann Aotrounez-ma, evid eunn dimezi all a reaz unan anezho, e miz Ebrel, 1794: ann dimezi-ma a oe kiriek ma oent paket ha c'hetu penaoz. Gwillerm Salann, euz a barrez Brelevenez, tost da Lannuon, ha pehini a zo c'hoaz beo, hervez ma leverer, a glevaz dre droidel gaud ar gwaz-nevez, peleaç'h e oa kuzet ann daou Aotrou. Laouen braz euz he zizolo, Salann az eaz buhan d'hen deski da vistri distrik Lannuon: ar re-ma, kel laouen euz ar c'helou, a gasaz kercent tud da baka ann daou velek. Kavet e oent evit gwir, e ti ann Itroun Taupin, ha dalc'het ho daou hag ann Itroun kevret gant-ho. Kaset a oent ho zri dirak *Munisipalite* kear pehini, goude beza great goulennoù digant-ho, ho c'hasaz da Lannuon: eno e teuz Breujoù Sant-Briek d'ho barna; ar varn a oe douget buhan ha buhan. Ann daou velek a oe barnet da veza gillotinet e Lannuon, hag ann Itroun Taupin, e Landreger; ha ze holl ebarz ar peder heur war-n-ugent. Evel-se ann Aotrounez Lajat hag ar Gall a oe gillotinet war leur-ger ar marc'hallaç'h, enn dri a viz Mae, deiz euz ho barn: ann hini kenta a oa hoalet euz eur bloaz ha tregont, hag ann eil, euz a bemp bloaz ha tregont.

Tremevan ann Itroun Taupin a oe hirroc'h eget hini ann daou velek. Goude ma oe dibennet ann daou Aotrou-ma, e oe erret ann Itroun war eur marc'h evit he c'has da Landreger, hag ar marc'h a oe staget ouc'h ar c'harr e pehini e oa ar c'hillotin. Tad ann Aotrou Lajat a zalc'he eunn hostaleri e kearik Lokrist, a hed ann hent braz euz a Lannuon da Landreger. Ar soudarded a ambronge ann Itroun Taupin a reaz eunn arzao dirag ann hostaleri-ma: kerç'hat a rejont ann Najat koz da zont da welout ar c'hillotin, c'hoaz ruz-tomm a wad he vab, ha goude hen redijont da rei da eva d'ar bourreo. Eva a rejont ho-unan, enn eur gana ar zoun c'hallek

*Sa ira, sa ira...* Ann dra-ma, ker glac'haruz evit tud ann Najat, a badaz eunn heur, hag a skoaz kement eur breur d'ar belek, ma kollaz ann den iaonank-ze raktal he spered. E pad ann obaden, ann Itroun Taupin a oe lezet war he marc'h e kreiz ann hent braz, da sellout gant ponez ouc'h ar c'hillotin. Pa ho devoa ar baotred c'hlaz evet ho gwalc'h, ha peur-c'hlac'haret ivez tud ann Najat, ez ejont e treze Landreger. Enn eur arruout e pakjont ann Itroun er prizoun, evit ma choumje eno sioul epad ann noz. Enn deiz warlerc'h he dibennjont war al leur-ger, rag-enep d'he zi. He maro a lekeaz Landreger hag ar vro a-grenn e kanv hag e tristidigez; hirio zoken ne gomz ann dud koz euz he merzcrenti, nemet gant kalz a c'hlac'har.

Ann Aotrounez Lallier, rener seminer Landreger, ha Gwillomm, belek euz ar Roc'h-Derrien, a oa ivez kuzet e ti ann Itroun Taupin, d'ar mare ha ma oe paket ann daou Aotrou all, mes ar re-ma a oe euruz awalc'h evit tec'het dirak ar *Wenaerien beleien goz*.

Ann Aotrounez Lajat hag ar Gall a oe paket enn deiz diweza a viz Ebrel, 1794. Eur bloaz krenn diaraok, ann Aotrou Lannier a oe ivez paket e Landreger. Ann Aotrou-ma en devoa, evel ann daou a bere e zo komzet, tremenet da Jerzea, e tro divez miz Gwengolo, 1792. Goude beza bet eno eur seiz miz, e tistroaz da Vreiz hag en em guzaz e klaustr klandi Landreger, e peleaç'h e oa ivez neuze, kuzet ann Aotrou ann Hermit. Eur c'halvez pehini a laboure enn ti, a glevaz, eunn deiz, c'houes euz ar *gudoned-ma*, hag ho diskuliaz d'ar *Munisipalite*. Kaset a oe kercent *sparfelled* d'ho dineiza. Kavout a rejont ann Aotrou Lannier war goadach iliz ar Vadalen; laouen euz ho dalc'h, ne sounjont ket enn Aotrou ann Hermit pehini a oa dounoc'h war ar c'hoadach, hag e tiskennjont da ziskouez ho *c'hudon* d'eur bagad tud a oa en em strollet e barz ar ru, evit gwelout da betra e



talveje ann hemole'h. Pa oe gwelet ann Aotrou Lannier pehini e oa hanaveet ha karet e Landreger, e kouczaz e gla-c'har hag e tristidigez, kement e oa en em zastumet dirak dor ar c'hlandi, ha dre holl e oe skuliet dacrou gant kement a welaz her c'has d'ar prizoun. Antronoz e oe ambrouget da Lannuon, ha goude da Wengamp ha da Sant-Briek. Er gearma e oe barnet da zek vloaz prizoun ha da ziu heur *karkan*, pe tro-gouzouk. Neuze e oe digaset da glaustr Karmelited Gwengamp, e pelea'h e oa dastumet beleien goz departamant Kosteaz-ann-Nord, ha deiz foar ann Nedelek e oe lekeat enn diskouez war eur chafod savet war al leur-ger. Choum a eure er prizoun bete maro Robespier : d'ar mareze e teuz kelou a beoc'h, ha war-ze, e oe lekeat e frankiz gand ann Aotrou a Gergre, dalc'her Breujou Gwengamp. Evel ne oa ket koulskoude gourc'hemennet c'hoaz digeri ar prizouniou, ann Aotrou Lannier a renkaz rei he c'her da zistrei, ma ne oa ket ar peoc'h douget e gwirionez. Ar peoc'h a oe douget, mes evit lavarout mad, hep beza douget : eur miz bennak goude, e oa a nevez ar c'has war ar veleien goz. Skrivet a oe d'ann Aotrou Lannier donet dirak breujou Lannuon : ann Aotrou-ma, evel eunn den d'he c'her, a zeuz dira-z-ho : eur breur d'ezhan hen ambrougaz. Herman, e paotr gwen evel ma oa, a baeaz, enn noz kent ar varn, eur goan vad d'ar varnerien, hag antronoz e oe lekeat ar belek e frankiz. Dom lann a dec'haz buhan hag evel ma krenvae bemdez ann heskin, en em guzaz e tu Plongiel ha Kerborz, ha ze beteg ar peoc'h. — Ema abaoe 1815, Persoun kanton e Pontrev : beza ez eo ivez chaloni dre enor euz a iliz-veur Sant-Briek. — Petra bennak ma eo ann Aotrou-ma hoalet a dri bloaz ha pevar-ugent, en deuz c'hoaz ann holl spered hag ann holl skanvder euz ar iaouankiz (1).

(1) Klevout a rann lavarout, enn eur gas ar skrid-ma d'ar

Ober a ra dre he skiant hag he arvez vad, levezez he vreudeur beleien pa en em gav strollet gant-ho, evel ivez hini ann dud vad ho deuz darempred gant-han. Beza eo an di-veza belek *koz* breton a zo hirio enn Eskopti Sant-Briek.

Ann Aotrou Lannier en deuz great meur a skrid war ar *Revolusion*, ken e gallek, ken e brezonek, mes ne fell ket d'ezhan e vefent anavezet, ken a c'houde he varo.



## HEUL

### EUZ AR BARNOU

DOUGET

#### GANT BREUJOU SANT-BRIEK.

Eiz deiz goude m'ho devoa breujou Sant-Briek barnet e Lannuon, ann tri a bere am euz komzet, e varnjont c'hoaz eno Perez ar Roue, euz a barrez Tregrom. Ann den iaouank-ma hag he dad, a oa ho daou tamallet da guza beleien goz ha d'ho blenia dre holl dre ar vro. Ar Roue koz a oe paket war gement-ze, hag a iea da veza barnet d'ar maro, pa zeuz he vab da vennout mont enn he leac'h. Ke-

mouler, penaoz eo gwall glan ann Aotrou Lannier, hag en devezo poan vraz o tont da vad.



meret a oe he ginnig, ha d'eunn nebeut deision goude, e oe gillotinet war leur-ger Koz-Varc'had Plouaret. Ann holl dud vad euz ar vro, koulz *Sitoianed* evel *Istokraded*, a welaz ar bugel mad-ma pehini a eaz d'ar maro evit savetei he dad, hag hen mirout da sevel eunn tiad bugale iaouank en devoa. Unan euz ar re-ma, hag hirio matez gant Dom Nouel Keraudren, persoun e Plougiel, e deuz lavaret d'in ann histor. Ar vaouez-ma ne gomz nepred euz he breur Pipi, hep skulia eur mor a zaerou.

Goude ar re-ma, breujou Sant-Briek a varnaz e'hoaz d'ar maro, e miz Mae, — ann Aotrou Androuet, belek euz a Eskopti Sant-Malo. — E miz Gouere, Janetta Nouel, leanez euz a Borzik ; — Fransez Kauvel, kalvez euz a Blemet, evit beza kuzet beleien. — E miz Gwengolo, Burlot, belek euz a Sant-Gwenn. — E miz C'hoevrer, 1799, Tangi, chouan euz a Werleskin. — E divez miz Ebrel, Gabriel Poens Killi, ar Foll, ha Charlez Herland, chouaned. Ar pevar-ma a eaz d'ar maro enn eur grial : *Bevet ar Relijion ! Bevet ar Roue !*



## BELEIEN

### HA TUD VAD ALL MERZERIET

E DEPARTAMANT KOSTEZ-ANN-NORD.

E miz Kenver, 1791, prezegennou ar *Sitoianed* enn enep ar veleien a zinac'he al Le, a oe kiriek d'eur maro kriz braz e kearik Monkontour, enn Eskopti Sant-Briek. En em gavout a rea eno eur belek, hanvet ann Aotrou ar C'hler : he-ma a oa enebour d'al lezennou nevez, hag ho lavarou a wechou ne blijent ket d'ezhan : ann dra a zisplijaz ive da baotred vad Monkontour, hag eunn nosvez ma oa o tistrei euz sakramanti eunn den klan, eur vanden dud iaouank en em gemeraz out-han, hag her goloaz a fank hag a zaotr. Evel ma talc'he bepred goude kement-ma da zinac'h al Le, e oe mennet he gastiza. Evel-se tud kriz a eaz d'her gortoz enn eur ru dre behini e l'lie tremen : hen diskarr a rejont d'ann douar, her breva hag her mac'ha gant ho zreid. Gallout a eure koul-skoude en em stleja d'ar gear, mes mervel a eure unnek deiz goude, hep ober klemm ebed na diskulia he waskerien. Beza e oe e Breiz, ann hini kenta a oe merzeriet evit ar Feiz.



Ar zoudarded c'hlaz a bere e oa neuze karget ar vro, a lazaz kalz a veleien hag a dud feal : ar *gwardou-nasional* a reaz evel-t-ho. E miz Kenver, 1796, ar re c'hlaz, o veza paket ann Aotrou Chapell, Kure e Plemet, her brevaz a daoliou lamm fuzil; — ann Aotrou Villechaperon, belek a Sant-Gwenno, a oe fuzillet e toull he zor; — Gauron, Persoun Lanle-raz, a oe fuzillet evel-t-han. — E miz Meurz, ann Tadou Mesle ha Paskal ha kalz a venec'h all euz a abatti Sant-Aubin, e tu Lamball, a oe fuzillet enn ho gweleou gand eur vanden dud iaouank euz ar gearma. Beteg ama ar venec'h-ma a oa bet lezet e peoc'h enn ho abatti : ho zi ne oe ket gwerzet gand ar *Republik*, ha kuit a oant enn eur baea ar ferm d'ezhi. Mes chetu ma arruaz, enn drivet a viz Meurz, da seiz heur-noz, eur bagad tud iaouank euz a Lamball, d'ho asrec'hi, war zigarez klask Chouaned : divarc'ha a reont ann doriou ha mont tre er c'hlostr, enn eur grial : d'Ar Chouaned ! d'ar Chouaned ! Eur mevel a zav hag a lavar d'ezho n'euz hini enn ti ; mes ar re-ma n'her selaouont ket, hag a bign kerkent da gamprou ar venec'h. Ho fuzilla a reont enn ho gweleou, ha goude beza torret ha kemeret dre ann ti ar pez a blije d'ezho, e tiskennjont d'ar segreteri : kemer a reont al listri sakr, dicafranta ar gwiskadou iliz, ha karget euz ar preizou-ze, e tistroont da Lamball, enn eur ober jolori vraz. Daou zeiz goude, barner a-beoc'h Pledeliak ho diskuliaz d'ann Distrik,

mes e oat enn eunn amzer e pehini e oa mad ober holl d'ar veleien, ha ne oe great netra d'ar baotred vad-ze. — Ar Rei, noter e Laurenan, a oe fuzillet enn he di gand *kolonn-mobil* Loudeak ; Ollier Kongretell, labourer euz a Blemet, a oe fuzillet enn he vourc'h ha taolet hanter veo, ebarz ar bez ; — er sul Fask, ann Aotrou Josse, Persoun Korel, a ica mintin mad da vourc'h Sant-Thelo, gand Loeiz C'houedik ha Matelin Raut : paket a oent gand eur *golonn-mobil*, e tal pount Jeffray, ha kaset dirak Maer Sant-Thelo, evit beza anaveet. Eno e oa ereet ann Aotrou Josse, evit he gas, ne ouzeur da beleac'h. Pa oet arru e kear Menez-Rouz, e parrez Sant-Karradek, korporal ar *golonn-mobil*, a lavar d'ezhan a helle te-c'het kuit : mont a ra evit hen ober ; mes kerkent ar c'horporal hag he dud a denn war-n-ezhan ; koueza a ra d'ann douar hag ar zoudarded he beur-laz gand begou ho fuzillou. Tud vad a zougaz he gorf da vered Sant-Thelo evit her beia eno. — E miz Kenver, 1798, ann Aotrou Jorjelin, belek euz a Bleuk, a zo paket gand eur *golonn-mobil* pa oa o sakramanti eunn den klan, ha fuzillet eno e tal ann ti : ne oa hoalet nemed a zeiz vloaz war-n-ugent : bet e oa beleget e Bro-Zaoz. E miz Gwengolo, ann Aotrou Kochon, belek euz a Blougenast, a oe fuzillet e parrez Pleni ; — e miz Kerzu, ann Aotrou Lonkl, belek euz a Blougenast, hag e dad a oe ho daou fuzillet gand eur *golonn-mobil*. — E miz C'hoevrer, 1800, ann Aotrou Me-



heust, Kure e Morieux, a oe paket e ti Matilin Josset, gant paotred vad Sant-Briek ha fuzillet gant-ho e troad eur groaz a zo war krec'hen Boulboute, peuz dost da Zant-Briek. Ann Aotrou-ma a oa tremenet da Jerzea, e 1792, hag a zistroaz d'ar vro e 1797.

Ann Aotrou Meheust a oe, e Breiz, ann diveza helek lekeat d'ar maro evit ar Feiz, rak ne oe merzeriet nemet goude ann Aotrou Baron, Persoun Karnak, pehini a oe lazet enn he di gand ar re c'hlaz, enn derou ar bloaz 1800. Eskopti Sant-Briek, o koll ann Aotrou ar C'hler, en devoa, a zaleg 1791, roet enn hor bro, ar c'henta kovesour euz ar Feiz : rei a eure ivez ann diveza enn eur goll ann Aotrou Meheust.



## BELEIEN

HA TUD FEAL BARNET D'AR MARO

GANT BREUJOU BREST.

Breujou Brest a oa, evit lavarout ar wirionez, ar re grisa a oa e Breiz. Savet e pad ann heuz vraz, ho devoa evit barnerien tud ken displek ha ma oant digar. Ragmei, deuet euz a vreujou Pariz, a zalc'he ar gador, ha Donzeverteuil, manac'h difroket, a oa ann ta-

maller. Eur skolaer mezekniez hag eur mevel kalvez, euz a Vrest, a oa daou euz ar varnerien. Eur marc'hadour iuzeo, hanvet Brandin, a oa unan euz ar jured.

Ar breujou fero-ma, a ziskouezaz ho c'hasoni evit ar veleien enn eur varna d'ar maro, kement hini a oe digaset diraz-ho. Ann hini kenta a gasjont d'ar maro, a oe ann Aotrou ar C'hoz : hema a oe barnet er bevarzek a viz Meurz. Abarz unnek deiz goude, e oe barnet ann Aotrou Drevez, Kure e Rekouvrans, e Brest. Ann Aotrounez Iann Habask, Kure e Plourin, ha Gwillou Petoun, Kure e Kerlouan, a oe digaset ivez hep dale, dirak ar breujou mad-ma : barnet a oent e tro hanter Ebrel, ha dibennet er sizun goude, war leur-gear Lezneven. Ebarz ann hevel sizun, e oe c'hoaz merzeriet ann Aotrou ar Branellek : he-ma, eur pennadik araok he varo, a zavaz eur ganaouen druezuz, e pehini e kaveur menosiou ar verzerien genta. Chetu ama ar ganaouen :





## MENOSIOU DIVEZA

ANN AOTROU AR BRANELLEK.

((IEZ LEON.))

WAR DON : *Sanctorum meritis.*

Ar varn a zo douget,  
N'ez euz mui a dermen;  
Dilenn 'zo d'in roet  
A zaou gand al Lezen,  
Pe dinac'ha ar Feiz,  
Pe beza dibennet :  
O kinnig ha kri ha kalet !  
  
Me zilenn ar maro,  
Euz a greiz va c'halon,  
Ha me a gemero  
Ar gwir Relijion,  
'Lec'h heul lezen direiz  
Eur gampr kontammet holl,  
Ha mad da gas ar vro da goll.

Va gwall ha va zorfed,  
Dirag ann Nasion,  
Eo ma 'm euz prezeget  
Ann Aviel gwirion,

Tamallet al Lezen,  
Da veza chismatik  
Hag ouc'hpenn ive, heretik.

Na brezegenn netra  
Enep ar gwir Lezen,  
Gand va goad her sina  
Me hen raio laouen ;  
Mes enep eur c'hontamm,  
Hag eur c'hontamm gwalluz  
A ro ar maro peur-baduz.

Pobl a zellit truez,  
Eur wech c'hoaz kent mervel,  
Kuita da zallentez,  
Dalc'h mad d'ann Aviel.  
Gwa, gwa, ha mil gwec'h gwa !  
D'ann neb n'hen heulio ket,  
Rak hep mar, e vezo kollet.

Digor da zaoulagad,  
Kren, ha deuz da euzi,  
Me a ia gant va goad  
Da ziskouez da fazi.  
Ia, evit va feiz,  
Difenn ar wirionez,  
Tud direiz, me ro va buez.

Lavar c'hoaz, mar kerez,



Den dibouell ha digar,  
Ez eo war zigarez  
Kæout madou ann douar,  
Am euz bet dinac'het  
Da doui lealded,  
Ha gouzanv poaniou ker kalet.

Mez perak, va Doue,  
Klaskout en em wenna,  
Dirak tud didrue,  
Tud ann displeala,  
Heretiked direiz,  
A zismantr gant drougiez  
Ann Iliz hag ar Gristeniez.

Selaou, te breur diyad,  
Breur difeiz ha diboell,  
Krial a ra va goad  
Evel hini Abel,  
Venjans enn da enep,  
Ha da zivadelez,  
Ha goude enep da zrougiez.

Breur kri ha displeal,  
Ha te hell c'hoaz difenn  
Eur gelen ker gadal,  
Ha ker garo lezen?  
Gant Satan 'out trec'het,

Mar deuz c'hoaz da heulia  
Mac'herien a deu d'am laza.

Eur wech c'hoaz, va breur ker,  
Saveta da ene;  
Heul Iliz hor Zalver,  
Ha dilez prim da le,  
Mammen euz da zizeur  
Ha da zaonedigez,  
Ha kevret dizeur ar bobl kez.

Pet mil a eneou  
'C'h euz a vrema kollet,  
Dre hoc'h holl gwall skouerion,  
Te ha da vignoned!  
Touerien fall, direiz,  
Dre holl e rit brezel  
Da Jezuz, d'he Iliz santel.

Eur weach dilezet  
Gant ho kras, va Doue,  
Evel dour, 've efet  
A bep seurt fallente;  
Arruet 'barz al lonk  
Ar pec'her kaledet,  
Ah! pet gwall a zo gant-han gret!

Sklerit ho daoulagad,  
Va Doue, d'ar re zall;



Enn abek d'ar re vad,  
Espernit ar re fall;  
Lakit, mar plich gan-e-hoc'h,  
Mar d-eo ho madelez,  
Ar peoc'h enn hon rouantelez.

Gant ho kras, va Jezuz,  
Me c'houzanvo laouen,  
Peb seurt poaniou grevuz,  
Kounnar va bourrevien.  
Me 'varvo enn Iliz:  
Va c'horf 'iel d'ar maro;  
Hogen va feiz a c'hounezo.

Ra zenio va maro,  
Jezuz, Salver ar bed,  
Da rei ar peoc'h d'am bro  
Ha c'hoaz ar sioulded,  
Ma vezo hoc'h hano,  
Keit all 'zo blasfemet,  
E peb bro gand ann holl meulet.

Ia, dre wir, va Doue,  
Me ra gant levencz,  
Euz va c'horf, va bue,  
Ann azeulidigez:  
Bezot d'e-hoc'h dudiuz,  
Disteurel, me ho ped,  
Tud kabluz, ha tud dirollet.

Va brasa kalonad,  
O kuitat ar bed-ma,  
Eo ma 'z oar ken divad  
Ma 'z eer da gastiza  
Va madoberourien,  
Va brasa mignoned;  
'Vit ma beza digemeret.

Kalon hag habaskded,  
Intanvez, bugel paour,  
Doue en deuz gwestlet,  
'Vid eur werennad dour,  
Roet enn he hano,  
Gobr kaer ha dudiuz,  
Ebarz ar vuez peur-baduz.

Kimiad, pobl a Gastel!  
Kimiad, penitanted!  
N'en em wellfomp ken pell,  
Dalc'hit d'ar feiz bepred;  
Nep a goll he vuez,  
Balamour da Zoue,  
Hep mar ebed, he savete.

Kimiad, va breur Gwillou!  
Kimiad, va breur Biel!  
Dalc'hit war ho taelou:  
'Barz 'n holl Lezen santel  
E kefot abegou



A frealzidigez :  
Heuliit-hi gant gwirionez.

Va breudeur Beleien,  
Na golit ket kalon,  
Labourit da zifenn  
Er vro, ar feiz gwirion,  
Da c'hounit eunn ene  
Disprizit ar maro,  
Ha Doue kerkent ho paco.

Va breudeur Beleien,  
Nevez merzeriet,  
Ho deuz ho c'hurunen  
'Barz ann Env kemeret :  
Me ho ped, va Jezuz,  
Da rei d'in ho c'halon,  
Ma arruinn 'kichen ho zron.

Evel ar Vadalen  
Dira-z-hoc'h daoulinet,  
Gant glac'har hag anken,  
Me a wel va fec'hed :  
Va Doue, distaolit,  
Ha na zisprijit ket  
Eur galoun vucl, glac'haret.

Erruet eo eta  
Penn va fire'hirinded,

Kuitat a rann gant joa  
Ar bed-ma milliget,  
Evit monet d'ar c'hloar  
En deuz Doue gwestlet  
Da nep en devo kendalc'het.

O devez dudiuz  
A laouedigez !  
Mont da gavout Jezuz  
Enn he rouantelez !  
Beza enn eur predik  
Er barradoz gant-ha  
Da virvikenn o ehana !

— SKLERIDIGEZ. —

Ann Aotrou Iann-Mari ar Branellek a oa ginidik euz a  
barrez Gwiseni : paket a oe e ti intañvez ar Gwenn, e kear  
Kastel-Paol, e peleac'h e oa Kure. Breñjou Brest her barnaz  
d'ar maro : he verzerenti a erruaz d'ar iaou-gamblid, er zei-  
tek a viz Ebrel, 1794 : hoalet a oa a zeiz vloaz ha tregont.  
He venosiou a zo bet roet d'in gant eunn intañvez goz, euz  
a Lesneven.





## HEUL

### EUZ A VARNOU BREUJOU BREST.

Eur miz goude ann Aotrou ar Branellek, da hanter miz Mae, Breujou Brest a gase d'ar maro ann Aotrou ar Rolland, Persoun Trebrivan. — E miz Even e varnent, Jakob, belek a Zant-Pabu; — ar Chapalan, belek a Blougwin, ha gant-ho ho daou, eur c'hoar d'ann Aotrou ar Chapalan; — e miz Gouere, Klec'h, belek a Blestin, hag Anna hag Anastasia ar Blan, euz a Vontroulez, evit her beza kuzet.

Ama e teraouaz Breujou Brest barna d'ar maro ar re a guze beleien. Bete neuze ho devoa ho espernet. Ar *Gouvansion* a zougaz diou lezen enep ar re a guze beleien goz : ann hini genta, euz ann dregont a Vandemiair, bloaz II, ho barne da veza kaset d'ar broiou pell : ann eil, euz ann daou war-n-ugent a Jerminal, bloaz II, ho c'hemere evel ken-wallerien ar veleien, hag ho barne evel-t-ho d'ar maro. Kalz a vreurjou, evel re Sant-Briek hag ann Orient, a heulie al lezen-ma araok ma oa douget. — Seul vui e kase Breujou Brest beleien ha tud feal d'ar maro, seul vui e teuent sec'heduz a wad. Evel-se e varnjont c'hoaz, e miz Gouere, Mari-Juliana Gigant, leanez a Lan-

dreger hag eunn demezel Kerlean, euz a Daole, evit beza kuzet beleien. — Boujart, kaner e Montroulez, evit beza taolet dindan he dreid, ar *gokarden nasional*; — ann tad Mevel, kapusin e Montroulez : — Perrina Demaret ha Barba Jago, leanezed, Modesta De Forsants, ha gant-ho ho zeir, Juliana Demaret, evit beza kuzet beleien : — Ar Meur, belek a Bloudalmezeau; mes hema a dec'haz diouc'h ar maro, dre skoazel eur mignon, hanvet ann Aotrou ann Hir, kuzulier e Brest.



## BREUJOU KEMPER.

Barnerien Breujou Kemper a oa ivez da genta, kriz braz e kenver ar veleien goz. Barna a rejont d'ar maro, e miz Meurz 1794, ann Aotrou Riou, Persoun Lababan; — e miz Ebrel, Gabriel Raguenez, belek iaouank euz a Landudek. Ar barnour braz, pehinijen devoa great he studi kevret gand ann Aotrou Riou, a fellaz d'ezhan he zavetei. Lavarout a reaz d'ezhan e kreiz ar varn : « Aotrou Riou, c'houi hoc'h » euz tri-ugent vloaz, rak kosoc'h a oac'h eged-oun- » me. — Nann, eme ar belek gwirion, tri miz a vank » d'in. » Da zul a Bleuiou, da gresteiz e thie beza dibennet. Evel ma tigore ar pask ann devez-ze, e talc'haz da govez beteg unnek heur hanter. Neuze e la-



varaz d'ann dud a joume hep beza bet koveseet :  
« Ne ket re d'in kaout d'am zro cunn hanter heur  
» evit en em lakaat e stad da vont ivez da gavout va  
» Doue. Pedit evid-oun ! »

Enn eil war-n-ugent a viz Mae, c'houec'h war-n-ugent euz ar varnerien vad-ze, e oe ho-unan barnet d'ar maro ha gillotinet e Brest. Kement-ma a gnaaz ar re all e kenver ar veleien. Evel-se, e Kemper, ne oe ket barnet d'ar maro kement a veleien, evel ma oe barnet el leac'hiou all euz a Vreiz. Ne weler ket e ve bet barnet kalz all, oc'hpenn eget ann Aotrounez ar Gall, Persoun Plouenan ; — Koirigou, belek euz a Gastel-Paol, — hag Anna ar Zant, leanez : ar re ma a oe gillotinet e miz Gwengolo.

E miz C'hoevrer, 1795, e oe great e Mabilais, tost da Raozon, eunn tammik peoc'h e tre pennou ar chouaned hag ann dispac'herien. Neuze ar veleien guzet en em ziskouezaz ; mes gwir-henvel eo penaoz ar peoc'h-ma ne oa nemed eunn drubarderez euz a berz ann dispac'herien ; ann heskin a zalc'haz evel diagent. Ann Aotrou Jamin, belek euz a Eskopti Kerne, a eure embann penaoz e lavarje, da zul Fask, ann oferen enn eul lann a zo e parrez Sant-Thelo : ar c'helou-ze a dennaz di eul lod braz a dud euz ar parresiou diwardro. Ar re c'hlaz a arruaz war ann taol, hag a fuzillaz ann Aotrou Jamin ouc'h ann aoter.

## BREUJOU

### ANN ORIENT.

Ar stad a vrezel e pehini e oa Gwenned, a le-kee ann dispac'herien tear-oc'h-tear da glask ar veleien goz pere a oa kuzet ebarz ar vro-ze. Kalz a gouezaz e tre ho daouarn, ha kerkent e vijent kaset dirak Breujou ann departamant, pere a oa neuze enn Orient. Ar Breujou-ma a oa dalc'het gand unan euz ann dud displez-ze, pere a esa ann holl vicheriou hag ho mezeka holl. Hannoier a oa he hano. Ganet enn Normandi, e oe tro-e-tro manac'h, soudard, soudard-amzent, mordead, hag ofisour war eul lestr preizer. Chetu aze ann den a varne d'ar maro ar veleien hag ann dud vad a zigaset d'he varn. E miz Kenver, 1794, e varnaz ann Aotrou Minnier, belek euz a Limerzel, ha kevret gant-han Job Mauriz, mear e Pluherlin, ha Iann Desgrez, evit her beza kuzet ; — ann Itroun Godard, euz a Rochefort, e tu Redon, evit beza kuzet beleien ; — Dilli, belek, paket e Beubri, — e miz C'hoevrer, Servet, belek ; — e miz Meurz, Iann Ollier, belek euz a Gistinik, ha God Passal he vatez, evit her beza sikouret da dec'het ; — e miz Mae, Brien, belek a Zant-Mauriz ; — Mark



Denoual, gwiader euz a Sant-Visant, Perez Jikel, ha Janetta Brien, ho zri evit beza kuzet beleien; — Maieux, belek euz a Eskopti Sant-Malo, ha Janetta Tregarat ha Jaketta Merli, euz a Zerent, evit her beza kuzet; — e miz Even, Garel, Kure e Gwegon, hag Anna ar Iann, evit her beza kuzet; — e miz Gouere, ar Breton, belek a Blenkadeuk; — ann daou Santerr, contr ha niz, euz a Eskopti ann Naoned; — Dom Matilin Leon, manac'h euz a Alrea. — Enn deiz kenta a viz Kenver, 1796, Lavenaz, belek euz a Ambon.

Breujou ann Orient a zo kaset da Wened : eno ez int ker kriz, pe krisoc'h eget biskoaz. E miz Meurz, 1796, e oe gillotinet e Gwened, ann Aotrounez Rog, belek er seminer; — Robin, belek euz a Bon-tivi; — ar Manour, Persoun enez Hedik; — ar Beyr; — Hemeri hag eur belek all. — Desprez ha Rakape, euz a Vrains, a oe gillotinet e Redon.

Ann dispac'herien ne oa ket a-walc'h d'ezho barna ar veleien hag ann dud vad d'ar maro. Enn ho c'hoant vraz d'ho gwasta buhan ha buhan, ho lazent dre holl e leac'h m'ho c'havent. — Persoun Gwiskriff a dremenaz da Vro-Zaoz e 1792 : e miz Gouere, 1795, e teuz d'ar vro gand ar C'hallaoued all a deuc da Giberon, hag euz a-walc'h e oe da dec'het eno diouc'h ar maro. O veza eat neuze d'he barrez, e falveaz d'ezhan lavarout ann ofern evit ar re lazet e Kiberon : cunn niver braz euz he barresianiz hen

heuliaz d'ann iliz : d'ar mare ma c'horree ar c'halir, e kouezaz d'ann douar, goloet a wad Jezuz-Krist : eur grizillad tennou losket gand eur vanden re c'hlaz, pere a oa dilammet eno, hen astennaz maro-mik ouc'h treid ann aoter. Daou zen hag eur vaouez a oe ivez lazet kevret gant-han. — E miz C'hoevrer, 1796, Kerantem ha Kornulier, ofiserien breton, paket gant re c'hlaz Loudeak, e parrez Sant-Aignan, a oe fuzillet gant-ho enn eul lann a zo a daost d'ar barrezze; — e miz Meurz, ann Aotrounez ar Floc'h ha Feutraï, beleien, a oe ho daou kountellet e Gwened; — Kadoret ha Kadal, beleien euz ar C'hamp, — Kouedlo euz a Elyen ha tri belek all, a oe merzeriet; — e miz Mezeven, Brien, Persoun Sant-Visant, a oe fuzillet gand ar re c'hlaz, enn he barrez; — ann Turnier, Persoun Plumeliau, a oe fuzillet dirag he barresianiz; eunn nebeut deisiou goude, ar C'hlaic'h, belek ivez euz a Blumeliau, a oe fuzillet enn hevelep parrez; — Klean ha daou labourer all a zo paket enn eur c'huz, tost da Voreak, kaset da Josselin ha barnet eno d'ar maro; mervel a reont enn eur grial : *Bevet ar Relijion ! bevet ar Roue !* E tro ann hevelep amzer e oe ivez merzeriet Nevez hag ar Roc'h, beleien, ha Gandair, abostoler; — e miz C'hoevrer, 1799, Petikor, Kure e Gwern, ha Dastumer, Kure e Lokmine, a oe lazet, ann hini kenta gand ar re c'hlaz, hag ann eil gant archerien; — ar Baron, Persoun Karnak, a oe fuzillet enn he di, gand eur vanden re c'hlaz, enn derou 1800.



# EMGANN

AR VILLE-MARIO

— 1795 —

Er bevar a viz Meurz, eur vanden a zaou vil chouan en em zatumaz e mereuri ar Ville-Mario, e Sant-Kae-Gall, e tu Sant-Briek, evit digemer tud hag armou a zeue euz a Vro-Zaoz, hag a dlie beza diskennet gand ar Zaozon war aod Plouha. Ar c'habitan Redoute, e gward e Porz-Oliod, o veza klevet kement-ma, a caz evit ho diarbenn, mes buhan e oe roet d'ezhan ar chas. D'ann abardaez e tiskennaz d'ann aod eunn daou c'hant chouan evit skoazia ann diskenn : gortoz a rejont enn-aner a hed ann noz hag evel ne oa kelou ebed euz a listri zaoz, e pignjont, pa darzaz ann deiz, da gavout ar re wenn all da Ville-Mario. Eno e tremenjont drant braz ann deiz hag ann noz, ouc'h en em guzulia evit kemer Porz-Oliod ha krapa ar poultr hag ann armou a oa er gearik-ma.

Redoute en devoa a zalek ar heure, roet da c'houtout e Sant-Briek, petra a oa a nevez e Ville-Mario :

— 291 —

kerkent Menaj, penn bataillon, a zeuaz di gant daou c'hant glaz, ha da zigor-noz, en em lekeaz sioulik braz, gand he dud ha re Redoute, enn dro da Ville-Mario. Pa oa ar chouaned o tec'hel, e oent brevet a dennou : ar re-ma, kemeret er giz-ze hep gouzout d'ezho, hag o veza evit ann darn vuia hep armoutan, a stourmaz nebeut ouc'h ar re c'hlaz, hag en em skignaz hep dale. Niveri e rear penaoz enn emgann-ma, e choumaz, e tre ann eil hag e-gile, eunn triouec'h den war ann dachen : besiet a oent a hed eunn douvez-koz a zo enn dro d'ar porz.

Da eur pemzek deiz goude ann emgann-ma, ec'h arruaz dirak aod Plouha, eur pemzek lestr bihan Zaoz, hag a heoraz eno e pad eunn eiz deiz. Evel ne arrue den evit digemer ar pez a oa gant-ho, ha ma welent ar c'hrec'hiou goloet a re c'hlaz, e tec'hjont goude beza tennet war ho zeltou, mes hep gallout ho ziet, ouc'h penn kant tenn kanol bemdez. Eur c'houezek lestr Zaoz all a zeuaz a darre, eunn nebeut deisioù goude, da heori e plek-vor Sant-Briek. Merdei a reont e pad tri deiz, e tre Treveneuk hag aod Penn-pol, enn eul leuskel tennou kanol, mes evel ne deue den d'ho c'havout, en em dennjont da Jerzea ha da C'herneze.






## AR PEOC'H

GOUDE MARO ROBESPIERR.



- 1795 -



Ar *Gouvansion*, goude maro Robespier, en em ziskouezaz kalz nebentoc'h kriz e kever ar veleien goz hag ann Aristokraded, ha chetu ar pez a zigasaz kement-ma. Puisaie a skrivaz euz a Vro-Zaoz da Chouaned Breiz hag ar Vande, evit en em glevout gant-ho, ha deski d'ezho menosiou ar Zaozon a-enep ar C'hallaoued. He lizeriou a oe paket gand ar re c'hilaz ha kaset d'ar *Gouvansion*: hou-man spountet dre ar pez a oa enn-ho, a c'hourc'hemennaz kerkent lezel ann argadennou ha klask ann tu da zougen ar Chouaned da ober ar peoc'h. Mennet a oe ar frankiz d'ar re anezho a oa bet paket er prizouniou, evel ivez d'ar veleien goz ha da gement a oa bet dalc'het dre ma tinac'hent plega d'ar *Gouvansion*. Evel-se Gwezno ha Gwermeur e reaz digeri prizouniou Breiz-izel. Ar Gondtez a Zilz hag he merc'h a zo lekeat er meaz euz a vac'h Gwened; pemp den, kar da Gadoudal, euz a hini Brest, ha tri-c'hant den, euz a hini ann

Oriant. Ar re-ma a oa barnet da veza kaset d'ar broiou pell: barnet a oent enn diou heur; mes evit terri ho barn, e oe lekeat eiz deiz: ann dislealded a gav bepred ann tu hag ann dro da vont buanoc'h eged ar gwir. E Lannuon, er Roc'hbernard, e Gwengamp, ha dre holl, evit lavarout mad, e oe digoret ar prizouniou. Ar veleien breton dastumet e koz listri e Rochefort, a oe ivez lezet da zistrei da Vreiz; mes ne zistroaz nemet c'houec'h ha tregont euz a drizek ha tri-ugent ma oent kaset di da genta. *Kostez-ann-Nord* a gollaz eno c'houezek, war c'houec'h war-n-ugent; ar *Finister*, eiz, war nao war-n-ugent; hag ar *Morbihan*, daouzek, war driouec'h. D'ann hevelep mare e lezet ivez da vont d'ho bro, beleien departamant *ann Nievr*, pere a oa dastumet e Brest. Ne oa choumet anezho nemet daouzek euz a unan-ha-tri-ugent ma oant digaset da Vreiz. — Ar veleien guzet ne oant ken heskinet: al lezennou pere a dorre ar Relijion, a iea ivez da veza torret ho-unan, ha torret a oent zoken — kemennet a oe da yistri ann Distrigou choum hep tregasi den enn abek d'he relijion, ha lezel pep hini da heulia frank he greden. — Chetu penaoz e komze Gwezno ebarz ar *Finister*. Ar Vretoned a welaz ann traou-ma gant kalz a blijadur, ha karget a oant a levenez o venna e oa arru ar peoc'h; mes touellet a oent enn ho ged: kement-ma ne oa nemed cunn diskuiz euz ann dispac'herien pere a ehane evit heskina gwell goude-se; hag eunn tam-



mik sioulded pehini a dremene ha ne bade nemed evit rei d'ann avel ha d'ar barrou-arne, ann amzer d'en em zastum.

Ar veleien touet ho devoa dinac'het rei d'ar *Gonvansian* ho lizeriou-a-veleien, a oa het ivez paket er prizouniou : lekeat a oent e frankiz evel ar re goz, ha zoken kentoc'h evit-ho. Ho c'henta preder a oe, nann d'en em unani gand ann Iliz, mes da adsevel ar chism ha da boelladi d'her c'henderc'hel. Ann Eskibien nevez a zistroaz d'ho Eskoptiou, hag ar veleien d'ho farresiou. Ar re-ma holl, petra bennak ma kemerent ho ilizou a-enep gwir, evel e 1791, a zalc'haz d'en em zellet evel gwir Eskibien ha gwir Bastored. Evit esaat en em wenna ha mirout ivez da goll ho c'hargou, e pedjont ar re goz d'en em unani gant-ho; mes ar re goz na hellent ket en em unani gant tud hag ho devoa dilezet ar Pab hag ar gwir Eskibien, hag a zinac'haz selaou ho fedennou. Ar re nevez a welaz e helle ann dinac'h-ma dont da veza gwalluz braz evit-ho, hag evit diarbenna kement-ze, e klaskjont lakaat dilezel ha kasaat ar re goz, enn eur brezegi e oant *tud amzent ha tud pere a glaske ar reustl kentoc'h eged ar peoc'h* : mes ho frezegen ne dalveaz da netra. Ann niver brasa euz ar Vretoned a rede da heul ar re goz ha da glevout ho ofiz hag o frezegennou : eur sitoien mad bennak a welet hep ken war lerc'h ar Bersouned nevez. Kement-ma ho erezaz a grenn enep ar re goz, hag ho diskuljont da

vistri ann Distrigou, o lavarout penaoz *en em guzulent a-enep ann Nasion hag e oa talvoudek ha poent braz herzel out-ho*. Sclaouet e oent hep poan, hag ann heskin e zeraouaz a nevez : abarz divez 1795, e oa ker kriz pe grisoc'h eget biskoaz.

Ar Chouaned a zavaz droug enn-ho o welout kement-ma, ha chetu m'en em doljont war ar veleien nevez evit ho c'hastiza abalamour d'ho dislealded ha d'ho flaterez. Mont e reant enn noz d'ho c'hemer enn ho zicz, ha goude beza roet d'ezho eur predik evit en em erbedi da Zoue, ho fuzillent war ann dachen. Beleien nevez eur c'hanton euz a zepartamant Kosteann-Nord, a oe lazet er giz-ze, enn nevez-amzer ar bloaz 1795, pe zoken diagent. Kement-ma ne oa ket euz ar gwella, na marteze hervez ann holl reiziou euz ar gwir, mes ar c'hentelliou-ze a viraz ouz kalz a trouk; spounta a rejont ann *Intrued* all hag ho lakaat a rejont da veza karantezusoc'h e kenver ar re goz. A-hend-all ar veleien geaz-ze a oa ker kasauz d'ann dud vad, ha zoken da galz a *Sitoianed*, ken ne oe den glac'haret gant ho maro kriz, e keit ha ma oe enn-enep, skuilet kalz a zaerou war hini ar veleien goz, pere a varve war ar chafod pe dindan taoliou ar re c'hlaz.





## AR RE C'HLAZ.

— 1795 —

### KENTEL.

O vale dre ar Vande, bro enn tu all d'ann Naoned, hag hogoz henvel ouc'h Breiz-izel, e tigoueziz e milin ar Pount, tost da gear Beaupreau, e ti tud Brouillet, tadou va c'hen-vreur, belek aluzuner e bac'h Fontevrault : choum a riz eur maread amzer gand ann dud-ze, hag e kaviz eno eur goaz koz, hoalet a bemp bloaz ha pevar-ugent, hag en devoa great ha gwelet kalz a vuzudou enn he iaonankiz. O klevont e oann euz a Vreiz : — Aotrou keaz, eme ar Vandean koz, me a anav-ho pro ; brema a zo e tro enn hanter kant vloaz, e oann bet bete Roazon, Pontorzon ha Gwenned : neuze e oa c'hoari gaer er c'hosteiu-ze, evel ivez dre aman. E tre-z-omp Bretoned ha Vandeaned ez omp bet ato en em glevet, ha stourmet hon euz enn hevelep giz evit difenn ar Roue hag ar Reljion : bet omp ivez holl gwasket mad e pad ann Dispac'h. C'houi koulskoude, n'hoc'h euz ket kement gouzanvet ha ni, rak dre ho pro, ar re c'hlaz milliget n'ho deuz ket great kement a renz : aman e tevent holl : ar milinou a dajont da genta ; sellit aze enn traon, hini ar Pount, da dud Dronet ha Bronillet, houn-nez a oe unan euz ar re genta devet : hon ed a vije flastret, pe troc'het e glaz evit ar c'hezek.

Endalc'het a oamp d'en em guza er c'heviou hag er c'hoajou, ha da zigaz hon tud d'hon heul, rag ar re c'hlaz a walle hag a laze ar re a gavent : stourm a remp out-ho euz hon gwella, ha meur a weach e paejont ker ho gwastador : aze enn tu all d'ann hent, a zo douaret seitek e tachen Brouillet : mes ze, Aotrou, ne d-eo netra ; tremen a refot Chollet, Vihiers, Thouarz, etc.... Enn douarou war dro, a zo hogoz kel liez a c'hlaz hag a c'heoten a zo war ho gorre. Chetu aman ouc'h va gwele, eur falc'h hag e deuz distripect meur a hini ; evel ma wellit, e vije troadet a enep : neuze n'am boa ket c'hoaz ar fuzil zu a zo aze war ar chiminal : houn-nez a oa euz ar gwella ; n'em euz-hi ket gwelet o c'houita nemed pa oamp oc'h emganna kear vraz ann Naoned : eno en em gaviz dirak eur *ward-nasional* hag a lavarent a oa euz a Bontrev hag euz a Lezardrev, pelloc'h evit Sant-Briek. Ar baotred-ze a dec'haz boban, va fuzil a oa ivez gleb eunn tamm, hag e van-kiz meur a hini anezho. D'ann amzeriou-ze, me a gounnare, evit lavarout gwir, pa welenn eur glaz. Eunn nebent bloavesiou-ze, e teuaz e gward, aze da Veaupreau, eur bagad brezilidi, nemet ne oant ket glaz holl, ne ouzounn ket ha me em bije gallet mirout da gemer c'hoaz va fuzil zu : evit gwir, ar baotred-ma a zo bet sioul awalc'h, ha n'euz ket bet kalz a drouz. — Ar Vandean koz a zanevellaz c'hoaz meur a vuzud all, re hir da lavaront.

Ann taoliou kaer-ze a reaz d'in dont goude d'ho hevelebe-kaat gand ar re en em gav er ganaonen a heul. Gwelout a rear penaoz e oa ar Vretoned hag ar Vandeaned kentraouet, evit lavarout mad, dre eunn hevelep spered. Ar Vandeaned en em dispac'haz dre ma felle d'ar Republik ho c'has holl d'ar brezel : ar Vretoned, d'ann taol kenta, a zispac'haz dre ma lamet digant-ho ho belcien ; ha goude-ze, evel enn tu all da ster al Loer, e tigarejont ar zao braz a dud a oe great da vont d'ar brezel, evit lakaat ann Dispac'h enn ho bro. Ar



Vandean, mui hegarad ha nebeutoc'h tear evit ar Breizad, ne gavaz enn he veleien nemet tud, da gant-ho da vont d'ar maro : klemm a reaz anezho hag ho c'halounekaat a reaz da c'houzanv ar verzerenti, mes evel ma tiskrede euz he nerz, ne fellaz ket d'ezhan ho lakaat da c'hedal, ar pez ne c'hede ket he-unan. E Breiz, ar blouiziz a zellaz evel eunn dlead evit-ho, lakaat e gwall ho bucz, ha stourmi evit ho-beleien, hag hen ober a rejont — Danevel ar Vandean koz a ziskoueze n'en devoa ket a anaoudegez euz ann holl zismant great e Breiz gand ar re c'hlaz, ha dreist holl ebarz ar Morbihan. Ann dismantr braz-ze a zo diskleriet aman goude gant Gwillou Arven, euz a Gervlezek, e tu Courin.

◆◆◆ XXX. ◆◆◆

## GALVADEN D'ANN EMGANN.

(IEZ KERNE.)

WAR DON : *Reit d'am daoulagad...* ama goude.

Ar chas a glevann oc'h harzal ! Chetu ar soudarded C'hall !  
Tec'homp kuit trezeg ar c'hoajou ! kasomp arog hor chatal !

Daoust hag hen, potred Kerne, e c'houzanvimp da vikenn  
E c'houzanvimp ar Vacherien a wask al labourerien ?

Gwalletgant-he hor merc'hed koant, lazet mamm, ha mab, ha den;  
Lazet zoken ann dud klan paour, balamour d'ho daouarn gwenn.

Tanet gant-he ti ar beorien ; diskaret ar manerieu ;  
Devet ann ed, devet ar foen, er parkou hag er prajou.

Troc'het ar gwe el liorzou, ha laket da ober tan ;  
Ken na vo avalou na zist, da nao pe zek vloaz c'hlan.

Laeret hor zaout, hon ounnered hag hon ejenned, siouaz !  
Ha kaset mesk gand ho ferc'hen, d'ar c'higer d'ar c'herieu braz.

Laeret zoken traou ann iliz ; pilet zoken hon touriou ;  
Straojet zoken ar garneliou, ha skignet ar relegon.

Gwastet traouniou kaer Breiz-izel, ken dru ha ker glaz gwec'hall ;  
Ken na glever mui tro-war-dro mouez den, ken nebeut chatal.

C'hoaz ma ve roet skuilla, horgwalc'h, daelon dru d'hon daoula-  
Mes dal ma wel skuilla daelou, ann den ker a skuil ar goad. [gad,

C'hoaz ma ve roet kaout eur groaz, e pelec'h e taoulinfemp,  
Evit goulenn digand Doue ann nerz pini a vank d'emp.

Mes ho kroaz santel, ma Doue, 'zo bet pilet e pep lec'h ;  
Ha kroaz ar Gwinterellerez a zo savet enn he lec'h.

Temde weler ho peleien, evel-d-hoc'h war ar c'halvar,  
Evel-d-hoc'h o stoui ho fenn, o pardoni d'ann douar.

Re ho deuz gallet tec'het kuit, ia da gubet er c'hoajou ;  
Ha ec'h ofornont deuz ann noz, e bag, war vor a wechou.

Dern ho deuz treuzet ar mor braz, divroet ha dizouten,  
Gwell gant-he senti ouz Doue, evit senti ouz ann den ;

Gwell gant-he dibri dianken, er broiou pell, bara kerc'h,  
Evit dibri bara gwiniz, bara ann diaoul, gand ann nec'h.

Enn ho ziez, ann douerien a zebr danvez ann dud paour,  
Goude beza gwerzet Doue, evel Judaz, evit aour.



Piou bennak ne fell ket d'ezhan mont da glevet ann touer,  
'Zo war riskl da goll he vue, bet denchentil pe gouer.

Tudchentil, ha tud a Hiz, tud diwar mez, sonn ho fenn,  
Ann holl Vretoned a waner balamour ma int kristen !

Breman hallez, boéd ann Ifern, rei da galon-te d'ar joa,  
Pe 't'euz laket hon elez-ni ebarz ann env da wela !

Pe 't'euz laket lezen ann diaoul e lec'h gwir lezen Doue,  
Pe 't'euz lazet ar veleien, ann dudchentil, ar Roue !

Pe 't'euz lazet ar Rouanez, pe 't'euz sklaket d'ann douar,  
He fenn gant penn flour Eleshed, ann itron zantel, he c'hoar;

Pe 't'euz tolet er c'hao hudur mab ar Roue, hen bugel,  
Hag hen dalc'hez e-barz ar fank da vreigna ha da vervel.

Kuz da benn, heol benniget, en eur welet torfejou  
Pere na glefent beza gret nemet gant drouk-sperejou !

Kenavo, Jezuz ha Mari, dispennet ho skeudennou,  
Ha laket d'ober paveiou, gand ar re c'hlaz, er c'heriou.

Kenavo fons ar vadiant e lec'h a gefchomp gwech-all  
Nerz evit gouzant ar maro kent evit ieo ann dud fall !

Kenavo kleier benniget, a gane war hor pennou,  
N'ho klevomp mui ouz bor gervel, sul na gwel, d'ann ilizou.

N'ho klevomp mui o kana ge; siouaz, divade ho penn !  
Teuzet, siouaz ! gand ar geriz evid ober gwenneien !

Kenavo, Bretoned faouank, a c'halver d'ann armeon,  
E lec'h ma koller enn eunn tol ar feiz hag ar bueiou.

— Kenavo, ma map, kenavo da draouiennou Jozafat !  
Pa vi mez deuz a Vreiz-izel, piou a zifenna da dad !

Pa lammo re ker gant ma zi, me 'vo klevet o laret :  
— Ma vije bet, ma mab er ger, en dije ma diwallet !

— Deuz e tre diou vrec'h da vamm goz 'deuz da zouget, ma bugel,  
Deuz war galon 'deuz da vaget, ma mabik paour, kent mervel !

Pa zistroi enn dro d'ar ger, 'vinn eet kuit deuz ar bed-man ;  
Deuz aman, deuz m'az priatinn, evid ar wech divezan.

— Tevet, ma mamm, tevet, ma zad, ne inn ket d'ho tilezel ;  
Chom a rinn evid ho tifenn, evid difenn Breiz-izel.

Reuzedik braz eo bout gwanet ; bout gwanet ne ket mezuz ;  
Ne met plega d'ar skraberien, evel tud lent ha kabluz !

Mar d-co red monet d'ann emgann, emgann a rinn 'vid ar vro ;  
Mar d-co red mervel e varyinn ; kuit ha laouen war eunn dro.

M'euz ket aon rag ar bolodou ; ne lazint ket ma Ene ;  
Pa gouezo ma c'horf d'ann douar, ma Ene 'zavo d'ann ee.

Arog ! potred vad Breiz-izel ! entana 'ra ma c'halon ;  
Kreski a ra nerz ma diou vrec'h ; bevet ar Relijion !

Bebet ann neb a gar he vro ! bevet mabig ar Roue !  
Ha ra ielo ar botred c'hlaz da c'hout hag hen 'zo Doue.

Buhe evit bubel tud vad ; laza pe beza lazet !  
Red e oa da Zoue mervel evit gonid war ar bed.

Deuz er penn gan-e-omp, Tinteniak, gwir-Vreton a holl viskoaz,  
Te pini rog beg ar c'hanol, morse da benn na droaz.



Dent er penn gan-e-omp, tudchentil, goad real demeurez ar vro ;  
Ha Doue a vezo meulet, gant kement kristen a zo.

Hag enn divez e teui enn dro e Breiz al lezen gwirion,  
Kouls ha Doue war he oter, hag ar Roue war he dron.

Hag a neuze traounion Kerne a zeuio glaz adarre,  
Hag ar galon a zigoro gant bleun ann ed hag ar gwe.

Neuze, kroaz Jezuz, hor Salver, a zavo splaun war ar bed ;  
E'harz he zreid liliou kaer, dru gant goad ar Vretoned.

— SKLERIDIGEZ. —

Ar skraberien o welont na hellent ken anavezout ann dudchentil, ar veleien hag ar re all a felle d'ezho lakaat d'ar maro, dre ma teue ann dud-ze d'en em zic'hiza e pep hent, a vennaz sellet daouarn ar re war bere e tiskredent. Nep a vije kavet gwenn he zaouarn, a vije pe lazet, pe paket er bac'h, kuit a brosez nag a enklask all.

Kroaz ar gwinterellerez eo ar *c'hilotin*, digaset gant Robespierre evit lakaat buanoc'h ann dud d'ar maro.

Ar c'halvaden a zo aman diaraok a oe klevet e pep leac'h dre Vreiz. Tud iaouank Pluvigner a laka war ho fenn Robien iaouank, Loeiz Plumio ha Korneli. Kemer a reont ann diellou, ann armon ha kement a oa e Pluvigner. Ar c'hondt a Silz a sav ivez, mes kannet ha lazet eo e kastel Pennhouet, e pelec'h e oa gand eiz kant Gwennedad. Jorj Kadondal a gemer he leac'h, ha goude meur a emgann ouc'h ar re c'hlaz, e laz, e Floranj, Josnet, ho jeneral. E keit-ze Lantivi-a-Gerveno ha Leisseg a ia da Bond-ar-Veuzen, gant c'honec'h kant gwenn : ober a reont ngent leo dre vesk kalz a wardou

hep beza dalc'het gant hini. Re wenn Sant-Goazek, Leuhan ha Laz a deu d'ho c'havout da Edern : en em daol a reont war Bond-ar-Veuzen, ha goude beza he c'honnezet ha kemeret ar poultr, hag eunn dek mil skoed arc'hant a oa eno, en em dennont war-zu Pleiben, Glomel ha Tregarantek. Biskoaz a gaeroc'h nag a welloc'h taol ! Pourveet er giz-ze, diwar goust ar Republik, en em lekejont gant mui a galoun eget biskoaz, da stourmi ar re c'hlaz, hag ebarz eunn eiz deiz goude ho devoa ho difourc'het euz a veur a leac'h. D'ann hevelep mare, Iann-Mari Hermeli, ginidig euz a Lokmariaker, a ia gant tregont gwenn euz he re, da emganna eur gorveten a bevarzek kanol, a oa e mor Gwenned : he c'hemer a reont, ha kas gant-ho ar pez a oa enn-hi. —

Mar boa emgann er Morbihan, e Koste-ann-Nord e oe ive hep dalc. Maro Bois-Hardi hag hini Kakerai, evel ann dismantr a rea e pep leac'h ar re c'hlaz, a lakaaz drouk e pao-tred Koste-ann-Nord, hag a reaz d'ezho askemer ann ar-mou. Loeiz hag Aime-a-Voiski a gannaz ar re c'hlaz, e Romagne, hag e kichen Arjentre : eunn nebeut deisiou goude, skoazellet gant Koesbouk, Hubert ha Blondiau, e roont c'hoaz ar chas d'ar jeneral Humbert, ebarz e koat Bezierz ; da zaou c'hant glaz e Vicuill, ha da wardou Ponteau-Gerin ha Lorrux, e Barouj-du-Desert. Eno e oe fuzillet ann tri sitoien mad pere ho devoa paket ha gwerzet ar Prins a Dalmont. — Dubreil a Bontbriand hag Herri-a-Voishamon en em laka kevret gant Bois-gi. Ar Markiz-a-Banjes ha Job La Trebonierr a gemer leac'h Jarri, great prizounier ; De La Roch, hini Bois-Hardi, ha Tinteniak, hini ar C'hondt-a-Silz. Breiz holl en em gave, er giz ze, savet a enep ar Republik : ar Main-izel hag ann Normandi a oa ivez dispac'het. Biskoaz ne oe e gwelloc'h reiz broiou ar c'hus-heol : biskoaz ivez ne oe falloc'h na doanusoec'h stad ar Republik. War gement-ze holl, Puisaie a reaz difrea evit ober diskenn Kiberon. Chetu aman ann diskenn-ze.



## DISKENN KIBERON.

— 1795 —

Ar Gouvanion, pehini aboue tost da dri bloaz, a waste ar C'hallaoued, a oa deut da veza kaseet hogoz gand ann holl. Ar Brinsed Gall, ar C'hallaoued en em dennet da Vro-Zaoz, hag ar Zaozon ho-unan, a ven-naz penaoz e oa mad ann amzer da ober war ar vro-riou Gall, eunn diskenn evit diboania ar Rouantelez diouc'h he gwaskerez.

Breiz a oa neuze dipac'het hogoz holl : ar vro-ma a oe kavet ar gwella evit ober ann diskenn, hag e oe dibabet evit-ze, bek-douar Kiberon, e tre Gwenned hag ann Oriant, hag eur seiz leo bennak diouc'h ann diou ger-ze : ar bek-douar-ze en deuz war dro teir leo a hed, hag eunn hanter leo a ledander.

Kalz a Zaozon, hag e tro pevar mil Gall en em lestraz : eunn tregont belek bennak, hogoz holl euz a Vreiz-izel, en em gave ivez enn ho zouez. Puisaie a oa enn ho fenn holl, ha d'Hervilli ha Sombreuil war he lerc'h. Eur pennadik araok ma tec'haz al listri euz a Vro-Zaoz, Puisaie a zeuz da Vro-C'hall, evit

— 305 —

gwelout penaoz e oa ann traou, en em glevout gand ann Ofiserien hag ar Chouaned, hag ho lakaat da zont d'ann aod, abarz digouez al listri. Diskenn e reaz e tu Sant-Briek, gant kalz a re vraz, evel ar C'hondt Vauban, marc'heien a Dinteniak hag a Vois-Berthelot, Markiz Konflans hag ar Prins a Vroglie.

Er bevarzek a viz Even, 1795, e verdeaz al listri etreze Breiz, hag abenn daouzek deiz e oant dirak Kiberon. Ebarz ann treuz e kannjont listri ar Republik, deuet da enebi out-ho. Ar vrud euz ho gounid a dennaz da Giberon kalz a dud euz a du Sant-Briek, Roazon, Gwenned, Plouermel, ann Oriant ha Sant-Malo, pere ne c'hortoent nemed ar mare d'en em dizober deuz ho gwaskerien. Er seiz war-n-ugent a Vezeven, e oe great hep heac'h ebed, ann diskenn kenta e Karnak : eno war ann aod, ann Aotrou 'n Eskob a Dol a lavaraz eunn oferen evit ar Roue iaouank Lociz XVII, euz a behini e oa klevet ar maro, e pad ann treiz ; ha kerkent e oe embannet Roue a Vro-C'hall hag a Navarr, ar C'hondt a Brovans, pehini a gemere ann hano a Lociz XVIII. — Estlammusa tra ! Eunn ofiz kanvaouez evit eur Roue, maro bugel enn eur prizoun ! Eur beden evit gervel da gemer he leac'h, eur Roue harluet ! ha kement-se holl war zouar koz Breiz-izel, dirak mein hir Karnak, dirak tudhentil ar vro, pell a oa er meaz anezhi, ha dirak kevrenneien all d'ar Roue, pere goude beza gouzanvet kement a boaniou e diabarz ar vro, a zeue da



rei ho buez war ribl ar mor braz, dindan kanoliou al listri Zaoz, pere a gredent e oa enn tu gant-ho.

Ann Aotrou a Herse, Eskop Dol, lekeat gand ar Pab da Vikel abostolik, a eure digerri iliz Karnak hag ar re diwardro, ha dre holl e oe kinniget ar zakrifiz evit digwezh mad ann emgann. Goude kement-ma holl, a kent mont pelloc'h, Puisaie a gaz Tinteniak, Bois-Berthelot ha Vauban gant Chouaned ar Morbihan, hag ar re deuet euz a leac'h all, evit difourka ar re c'hlaz diouc'h Landevan, Lokmariaker ha Mendon : hen ober a rejont. Ebarz ann divez en em gavaz ar re wenn enn niver a c'houezek mil. D'ann dri a viz Gouere, e tiskennont e gour-enezen Kiberon, hag hep dale e stourmont kre Penthiévr, diwallet gant seiz kant glaz : ar re-ma a reaz ho c'hennig hep klask en em zifenn, hag a c'houlennaz beza engwestlet kerkent e touez ar re wenn. Puisaie ha d'Hervilli ho c'hemeraz dre eunn dalledigez dizeur hag eur fians re vraz, ha kement-ma a oe ar penn abek euz a gel liez a zarvoud reuzeudik, goude beza bet kemend a chanz vad. E keit-ze Hoch, penn-armeou arvorioù Breiz, a zeuaz euz a Roazon da Wened, gant kalz a zoudarded, ha goude meur a emgann kollet ha gounezet, en em lekeaz dirak toull dor gour-enezen Kiberon. Hep dale ec'h askemeraz kre Penthiévr, dre drubarderez David Goujon hag ar re c'hlaz all, pere ho devoa en em roet d'ar re wenn, hag a oa bet lezet gant-ho hogoù holl ebarz ar c'hre.

Kement-ma a arruaz enn unan war-n-ugent a viz Gouere, war dro teir heur diouz ar beure. Nebeut diaraok, Sombrenil a oa eat da Gervadi, eunn tri falevars leo pelloc'h, hag e pe leac'h e oa ann niver brasa euz he dud. Pa glevaz ar c'hoari, e tistroaz e treze Penthiévr, mes re zivezad e oe. Ar re c'hlaz a ra d'ezhan kila : klask a ra ober penn d'ezho, mes eul lod braz euz he dud a zo spoutet : en em denn a reont e trezek ar mor, hag her c'has a reont gant-ho, kaer en deveuz herzel. Sonjal a reont penaoz al listri Zaoz, o klevout ann tennou, ho divije digaset bagou d'ann aod ; mes lestr ebed na flach. Na pegen truezuz e teue stad ann dud paour-ma ! N'hellont ket distrei hep beza friket gant kanoliou ar re c'hlaz : n'hellont ket mont pelloc'h, ar mor o veza dira-z-ho. O tizout al listri Zaoz ec'h hellont hep ken tec'het dirak ar maro : mes pell int, ha penaoz ho gonit ? Eur vag vihan bennag a zo e porzik Oranj : darn en em daol enn-ho a vac'h hag a ra d'ezho gweledi : darn all a glask mont war neu d'al listri, hag a veuz e kreiz ar gwagennou : na pebez arvest glac'haruz ! O welout kel liez a reuz, ne gred den pelloc'h en em fisiout er mor. Petra eta a vo great ? Eunn den a dosta ouc'h Puisaie : Rohu eo, levier breton : heman a c'houlenn beza kaset d'al listri Zaoz, evit ober d'ezho tostaat ha digas bagou. Mont a ra beteg enn-ho, mes ne flachont ket evit-ze. Ann arvar hag ann nec'h a zav e kalounou ann holl. Neuze Puisaie en em daol he-



unan enn eur vag, evit mont ivez beteg ar Zaoz. E keit-ze Sombreuil a diz ar c'hre nevez, mes gant kalz a boan : heman oa war ar bek pella, e tu ar mor. Eur c'houec'h mil e tre groagez ha bugale, en em denn eno gand he re : a vec'h e oant ebarz, ma weljont daou lestr o tostaat. Ar Zaozon ne deurvejont ket selaou Rohu, selaou a rejont Puisaie, ha tostaat a rejont kerkent. Dre dan ho listri e talc'hjont eunn nebeud ar re c'hlaz, hag e rojont amzer da ouc'hpenn triouec'h kant gwenn da zewel er bagou kaset d'ho c'hemer; mes enn eur denna war ar re c'hlaz, e tennjont ivez war ar re wenn : chetu ar pez a lavar kalz, hag ann dra a henvel beza gwir. Ar bagou ne verdeent ket buhan awalc'h da c'hoand pep hini : holl e karjet beza enn-ho : holl e klasket pignat enn-ho : meur a vag a weledaz o veza re garget. Ann dud ne hellent ket pignat, en em daole war neu hag a zalc'he mad d'ar bagou : gourdrouzet e oent evit ho lakaat da ziskregi; pelleet e vijent goude a daoliou roev : lavarout a rear zoken e troc'haz ar Zaozon ho daouarn da galz : krisder hirrisuz hag a hell beza a boan didamallet dre ar garantez en deuz pep hini evit he vuez!

E mesk ann holl draou euzuz-ze, chetu ama ivez arvestou hag a zo frealzuz. Eur greunadour a zoug diwar neu ar Vaillant-a-C'hlatigni da eul lestr Zaoz, hag a zistro kerkent d'ann emgann. Ann Duk a Leviz goullet, en em stleje war vord ann aod, daou vretou

ouz hen harpa : tostaat, a gri ann daou-ma, da eur vag a oa a bell, kemerit hor sturier, ni na c'houlennomp ket mont gan-e-hoc'h. Pa oa ar vag o tostaat evit hen digemer, douger banniel d'Hervilli, en em daolaz ivez er mor enn eur grial : — Saveteit va banniel, ha me a varvo laouen. — Savet a oe ann Duk a Leviz dre ar banniel, hag ann tri gwenn a choum a galoun vad ebarz ann aod. Ann Aotrou a Herse, Eskop Dol, hag e vreur, he Vikel vraz, a oa ive er mare-ze tost d'ann aod; eur vag ho gortoze evit ho c'hemer; mes re garantezuz a oant evit dilezel ar re wenn : — ha lezel a raimp-ni, eme ann Eskop d'he vreur, hep dizoan hag hep skoazel evit ho eneo, ann dud goullet reuzeudik-ze, hor c'henvroiz : ah ! va breur, n'ho dilezomp ket, ha roomp, ma eo red, buez hor c'horf evit hini ho ene, — hag en em lezjont gand ar re c'hlaz hep enchiez ebed. Ann Aotrou a Gerlouri, Chaloni a Landreger, a eure eunn hevelep tra : paket a oent kevret gant dek belek all.

E keit-se, Sombreuil hag he re a gemere kaloun : en em ganna a reont da vad ebarz ar c'hre nevez : mes ar bollodou a ia da vankout d'ezho, rak ne sonjent ket ho divije renket diouall kement ar c'hre-ze : — Aotrounez, a gri Sombreuil, n'hon euz ken a vollodou, mes ho pet sonj penaoz enn eunn hevelep stad, Grout-a-Sant-Jorj, penn-kouaden breton, a ree karga kanoliou he lestr gant he listri arc'hant, hag ho c'hase, e giz bollodou, d'he enebourien : — Kement-



ma a roaz eur zao-galoun d'ann dudchentil-ze; mes nebeutoc'h euruz eget Grout, n'ho deuz ket a listri arc'hant evit ober bollodou : koulskoude tenna a reont ker kaer, ken na verz ket ar re c'hlaz ann diouer e pehini emaint. Sombreuil n'en devoa ket eiz kant den e stad d'en em zifenn, hag ar re c'hlaz a oa enn tu-hont da bemzek mil. En em ganna a rejont pell gand eur galoun dispar. Ar re c'hlaz a gri d'ar re wenn : — Taolit ann armou, n'ho pezo poan ebed. — Ar re-ma o welout na hellent mont ken, en em laka, war ar gwestl-ze, e trugarez Hoch : mes, siouaz ! touellet braz a oent : ar re c'hlaz en em daol kerkent war-n-ezho; ho gwasta a reont hag ho c'has da Alre. Lavarout a rear penaoz e oant, da nebeuta, enn niver a bevar mil. Dastumet a oent eno, toueze-touez, ebarz iliz ar Spered-Santel hag enn hini ar Gordelierien.

Hoch ne oa ket eunn den kriz : war zigarez redek re Tinteniak pere, renet gant Pontbellanjer, a oa en em skignet e tu Sant-Briek, ha pere, a-unan gand al listri Zaoz, a c'hourdrouze kemer ar vro-ze, a roaz blenadur ar Morbihan d'ar jeneral ar Moin, hag hel lezaz eno da ober he benn. Er seiz war-n-ugent a C'houere, he-ma a lekeaz Barbarou, Dukarp, Bouvet ha P. Kunit da varn ar re wenn : Sombreuil, Soulanjez, Lalandell, Rien, Petit-Gwiot, Eskop Dol, he vreur, daouzek belek ha prizounerien all, a zeu diraz-ho, hag a zo barnet da veza fuzillet e Gwenned, ha

se dindan peder heur war-n-ugent. Kerkent e oent kaset di hag o veza arru'eno, e tro hanter noz, e oent dastumet enn ilz Sant-Patern. Antronoz e oent renket war leur-vale ar Waremm. Lavarout a rear da Sombreuil en em lakaat d'ann daoulin : — ne stouann, eme-z-han, nemet dirak Doue pehini a azeulann : choum a rann em zao dira-z-hoc'h, c'houi pere nedoc'h nemet tud evel d-oun. — Mervel a ra d'ann oad a c'houec'h vloaz war-n-ugent. Eskop Dol, he vreur, hag ar re all a bere a zo komzet, a gouez d'ann douar kevret gant-han. Chetu hanoiou belcien all euz a Vreiz : Larc'hantel, Vikel vraz a Gemper; Kerlouri, Chaloni a Landreger, ha Larjez, Persoun Pleuveur-Bodou.

Ar jeneral ar Moin a zav daou vreur nevez enn Alre : ann ofiserien Gall, galvet da vont d'ho derc'hel, a zinac'h mont. Enn armeou Gall, e oe a viskoaz hag a vo da vikenn tud vad : aman ann enor a c'hourc'hemenne dinac'h : dinac'h a rer holl. Ar Moin eta a oe rediet da gemer Beljed hag ofiserien all a ziaveaz bro, da zerc'hel he vrenjou : ar re-ma a varnaz buhan ar re wenn. Ann ofiserien Gall o devoa dinac'h et beza barnerien; ar soudarded ne houlenjont ket beza bourrevien. Eur bagad briz-soudarded euz a Bariz, Arraz hag ar Jirond, a iciaz war ho dinac'h; ha d'ezho ha d'ar re ar Beljik, e roaz Blad ar garg da lakaat ar re wenn d'ar maro. Fuzilla a reat bemdez enn tre hanter kant ha dek ha tri-ugent.



Karrenerien arme ar re c'hlaç a gase ar re varo d'ann douar. Goude ho beza diwisket, ho stlejant dre ho bleo, ho divrec'h pe ho divesker, hag ho sklapent ebarz ann toull boutin. Gwelet a oe euz ar verzerienze, pere ne oant ket c'hoaz maro, o krial hag o esaat sevel euz ann toull : ar c'hleuzeurien ho feur-ziskare a daoliou pal, hag ho goloe a zouar gand eur c'hoarz goapauz. Eur weach ma choumaz kalz hep beza lazet mik, na goloet mad a zouar, e oe gwelet enn deiz warlerc'h, divrec'h ha divesker deuet er meaz euz ann douar. Ann dra-ma a reaz kement a heuz, ken na gefet mui a zoudarded evit fuzilla. Roet a oe urz da gemer enn ho leac'h bugale euz a zek bete pemzek vloaz, ha ze evit ho boaza d'al lazerez : neuze e fuzillet hep prosez. Netra na helle ken diouall euz ar maro ar re a choume c'hoaz euz a dud Kiberon. Ann darn vuia anezho a oe merzeriet e prat Trealre. Pevar c'hant eur bloaz ha tregont diaraok, ar prat-ze a Drealre, a oa bet c'hoaz ruiet gant gwad ar Vretoned, ebarz ann emgann vraz e pehini ar C'hondt a Vonfort a c'hounezaz war Charlez a Vleaz, pehini a oe lazet eno. Ann daou-ma en em gannaz e pad tost da dri bloaz war-n-ugent, hag a oe kiriek da varo ouc'hpenn daou c'hant mil den. Emgann Kiberon a badaz tri deiz war-n-ugent.

## — SKLERIDIGEZ. —

Ne gaver enn holl vrezeliou a ziabaz eur vro, netra eusoc'h evit ann emgann reuzeudik-ma. — Dizunvaniez hag ezez e tre ar pennou, d'ar mare ma tlient muia en em guzulia hag en em glevout, re a fisians goude eunn digwez mad bennak, mes nebeut talvoudek, re a zale da gemer mad ann amzer, trubardereziou kasauz aberz kalz, ha dreist holl aberz ar Zaozon, chetu, hervez ar re a oa eno, hag hervez ann danevellerien, ar penn abek euz ann darvoud gwelvanuz-ze, e pehini e oe skuliet kemend a c'hoad, ha lekeat e kanv kel liez a di enoruz euz ar vro.

Gwennediz ha kalz a reall o welout ann nerz hag ar menosiou kristen ho devoa diskouezet ar vrezelidi wenn en eur vont d'ar maro, ho sell evel merzerien hag a zeu da bedi war ho bez; abaoue ez eo hanvet prat Trealre, *Tachen ar Verzerien*. Er bloaz 1816, ann Aotrou Deshaies, Persoun Sant-Gildaz-Alre, a reaz dastum relegou ann dud-ze hag ho lakaat enn iliz ar Chartreuz : besiet int bet abaoue enn eur gazel gaer savet ouz ann iliz-ze : war he zal eo skrivet e latin ar c'homsiou-ma gant lizerennou aour : *Gallia marens posuit*; da c'houzout eo e brezonek :

Ar vro holl kanv aouet  
E deuz-hi bet savet.

Enn diabarz ez euz eur bez e mabr gwenn. Al leac'h-ma a oe binniget er bemzek a viz Here, 1829, gand ann Aotrou Poulpiket, Eskop Kemper, pehini en em gavaz ivez enn emgann Kiberon, hag en em zaveteaz o c'hounid diwar neu al listri Zaoz. Ann Dukez a Angoulem a brenaz goude ann dachen e pehini e oa bet merzeriet ann dud-ze : eunn iliz vihan



a oe ivez savet eno dre gest : war he zal e lenner e latin : *In memoria aeternae erunt justi*; da c'houzout eo e brezonek : *Ann dud vad a vezo koun anezho da vikenn*.

N'ez euz e Bro-C'hall ken arouez euz a reuzion ann Dispac'h, nemet ar besiou-ma savet gand ar Vretoned. E Pariz hag enn holl geariou-all, e werzer hag ec'h ebater war a leac'hion e pere e oe lamet ar vuez digand hon tudou koz. Ann ankounac'h euz ann amzer dremenet, hag ar wallegez evit ann hini da zont, ho deuz mouget er c'halounou ar zonj euz a wallou ar *Revolusion*. Flastra a reomp hep azonez, hep glac'har, hep aoun evid-omp hon-unan, ann tachennou war here eo bet dibennet pe fuzillet kement euz hon tudou. Breiz, enn eur zevel ar bez-ze d'ar Verzerien, a zo bet e kever he bugale, anaoudekoc'h eged ar broiou-all : ar re-ma, mechans, ho deuz bet klasket ober ankouat ar reusiu tremenet, evit mirout na ve enkrezet peoc'h fallakr darn, ha ged kabluz darn all.

Ar Moin a skrivaz da Hoch eunn nebeut goude, evit rei d'ezhan da c'houzout ar pez a oa tremenet : diouz he lizer e weler e oe lazet seiz kant unnek, a enep ar gwestl roet enn diviz, hag e varvaz pevar c'hant er bac'hion; mes da lavar ann holl, ann niver euz ar re-ma a oa c'hoaz brasoc'h. Ebarz euz he lizer ar Moin ne gomz nag euz ar re lazet enn emgann, nag euz ar re beuzet er mor; nag euz ar re kemeret enn emgann hag e kre Penthiavr, ha merzeriet ivez touez-c-touez gand ar re all.

E touez kel liez a verzer e kaver ann Aotrounez a La Noue, a Gakerai, a Rieu, a Gordai, a Garadek, a Gerri, a Veuregard, a La Housaie, a Gourzon, a Germoisais, a Goatlosket, a Bluskellek, a Gernevez, a Ville-Eon, a Dalhouet, a Gergariou, a Volud, a Soulanjez, a Coatudavel, a Beillak, a Harzkouet, a Laseini, a Gesril, a Bapeu, — Duportail, Kotel, Dano, Fevenot, Gimel, Peron, Pezel, Priez, Rio, Rober, Siko, Vaudin, etc. ...

Ann holl hanoiou braz-ze a zo kemmesket gant re eur maread a vecherourien, a labourerien, a skolaerien, a vourc'hisien, a verdeidi, a werzerien pere ho devoa ivez choanteet en em ganna, ha mervel evit mad ho bro.

Paotred ioulek Pariz, Arraz hag ar Jirond, pere ho doe ar galoun da heulia re ar Beljik, ha da lakaat ar re wenn d'ar maro, a baeaz ker kement-se. Boisgi en em daol war re Bariz, hag ho laz holl, tost da Foujer : Blandin a laz re Arraz; eunn nebeud anezho great prizounerien, a c'houlenn trugarez : — fuzillet hoc'h-euz e Kiberon, e me Blandin, fuzillet a viot aman. — Re ar Jirond hag ar Beljik a choume c'hoaz : ho zro a arruaz hep dale. Er seiz war-n-ugent a viz Eost, darn a oe lazet gant paotred Jamb d'Arjent, darn all gant Sepeau, pe Vandeaned Charett. Ar re ziveza a arruaz gant-ho, evit ladarout mad, ar pez ho devoa great e Kiberon; redet, peuket gand ar re wenn, en em zastumjont e tour Bre, tost da Lalal. Ar re wenn o welout na hellent ket ho c'hemer buhan awalc'h, a ra eunn tan braz enn dro d'ann tour : ar moged a zav hag a voug ar re c'hilaz : ar re-ma a gri en em rofent ar baje roet d'ezho ar vuez. — Roet e vo d'e-hoc'h, a oe laret d'ezho dre le : — Diskenn a reont deuz ann tour, ha kerkent e oent holl fuzillet. Ar re wenn a lavare : — Torret hoc'h euz ho ker e Kiberon, ni a dorr ama hon hini; pep hini d'he dro, ha Doue hor barno holl. — Ebarz divez miz Eost ne oa hini euz ar haotred vad-ze e buez.

E pad emgann Kiberon, ar Markiz a Joyeuz, penn ar Chouard e tu Sant-Briek, a gemer kear Kintin, hag a zav eno ar gwir a gant mil livr, ken eunn arc'hant, ken enn ed hag a traon all : ne oa gant-han nemed eur pemzek kant den, hag eunn nebeut plouiziz euz a zivardro. Mont a ra goude da Castel-Audren pehini a gemer ivez. Eno e klevaz koll emgann Kiberon. Ar pez a reaz d'ezhan tec'het kerkent; mes kent tec'het, e zavaz eur gwir a zaou-ugent mil livr : en em denn a reaz da du Quintin, e pelec'h en em rannaz he dud.



# AR RE WENN,

PE AR CHOUANTED.

— 1795 —

## KENTEL.

E parrez Sant-Ouen-des-Toits, tost da Laval, *departamant Mayenn*, en em gave pevar breur, bugale da Bierrez Kottereau. Ann dud-ma a oa anaveet er vro, dindan ann hano a chouanted, pe kaouaned, lezhano roet d'ho zad koz abalamour m'en em lekee pervaia a du, pa 'n em zastume he amezeien evid eul lid bennak. Iann, eil vab Pierrez, en em lekeaz tuer; paket a oe hep dale gand ar wiraerien ha barnet d'ar maro. He vamm a ia kerkent war he zroad da Bariz: en em lakaat a ra war hent ar Roue, ha pa zeu heman da dremen, en em strink d'he dreid: — trugarez, eme-z-hi, evit va bugel! en em lekeat e oa tuer, mes ne oa nemed evit gounid bara d'he vamm ha d'he vreudeur! — Ar Roue a reaz trugarez da Iann, ha Iann, eunn nebeut gonde, a stourmaz kre evit ar Roue: da hanter Eost, 1792, e savaz evit hen difenn: he vreudeur hag he c'hoarezed a reaz evel-t-han. Ac'houdevez e oe galvet chouanted, pe chouaned, pe kaouaned, ar re a stourme e Breiz hag e Main-izel, evit ar Roue, al lezennou koz hag ar Relijion.

Ar ganaouen a heul a zo tennet dez *Barzaz-Breiz* ann Aotrou Th. DE LA VILLEMARQUE.

XXXI.

# AR CHOUANTED.

(IEZ GWENNED)

*War eunn ton anavezet.*

Ar re goh hag er mere'hed hag er botred bihan,  
Ar re pere n'int ket goest da vonet d'en emgann,  
Ar laro enn ho ziez, abarh mont de gousket,  
Ar Bater hag eunn *Ave* euit er chouanted.

Ar chouanted a zou tud vad, a zo gwir grechenion,  
Ar met da zifenn hon bro klouz el hun beleion;  
Ar skoont ar tal hou tour, m'hou ped, digouret d'e:  
Ar Doue else, me zud vad, zigoro d'hoc'h, eunn de.

Ar lian bleu-ru a lare d'he vamm goh ur mintia:  
- Me ia me ged Tinteniak, pe monet a blij d'eiñ,  
- De deu vreur dez me losket, ha te me losk eue!  
Ar re mar plij d'id de vonet, ra de renai Doue! —

Ar re zae er chouanted, ez a bob korn a Vreih,  
Ar Dreger hag a Gerne, hag a Wened ileih,  
Ar re c'hlaz digoueh get-he, e maner Koatlogen,  
Ar re a gosteeu Bro-C'hall, tri mil enn ur vanden.



# AR RE WENN,

PE AR CHOUANTED.

— 1795 —

## KENTEL.

E parrez Sant-Ouen-des-Toits, tost da Laval, *departament Mayenn*, en em gave pevar breur, bugale da Bierrez Kottereau. Ann dud-ma a oa anavcet er vro, dindan ann hanô a chouanted, pe kaouaned, lezhano roet d'ho zad koz abalamour m'en em lekeo pervaia a du, pa'n em zastume he amezcien evid eul lid bennak. Iann, eil vab Pierrez, en em lekeaz tuer; paket a oe hep dale gand ar wiraerien ha barnet d'ar maro. He vamm a ia kerkent war he zroad da Bariz: en em lakaat a ra war hent ar Roue, ha pa zeu heman da dremen, en em strink d'he dreid: — trugarez, eme-z-hi, evit va bugel! en em lekeat e oa tuer, mes ne oa nemed evit gounid bara d'he vamm ha d'he vreudeur! — Ar Roue a reaz trugarez da Iann, ha Iann, eunn nebent goude, a stourmaz kre evit ar Roue: da hanter Eost, 1792, e savaz evit hen difenn: he vreudeur hag he c'hoarezed a reaz evel-t-han. Ac'houdevez e oe galvet chouanted, pe chouaned, pe kaouaned, ar re a stourme e Breiz hag e Main-izel, evit ar Roue, al lezennou koz hag ar Relijion.

Ar ganaouen a heul a zo tennet dez *Barzaz-Breiz* ann Aotroun Th. DE LA VILLEMARQUE.

XXXI.

# AR CHOUANTED.

(IEZ GWENNED.)

*War eunn ton anavezet.*

Ar re goh hag er merc'hed hag er botred bihan,  
Ha re pere n'int ket goest da vonet d'en emgann,  
Alaro enn ho ziez, abarh mont de gousket,  
Ar Bater hag eunn Ave euit er chouanted.

Chouanted a zou tud vad, a zo gwir grechenion,  
Euet da zifenn hon bro klouz el hun belecion;  
Ar skoont ar tal hou tour, m'hou ped, digouret d'e:  
Goude else, me zud vad, zigoro d'hoc'h, eunn de.

Al lian bleu-ru a lare d'he vamm goh ur mintia:  
— Me ia me ged Tinteniak, pe monet a blij d'ein,  
— De deu vreur dez me losket, ha te me losk eue!  
— Iez mar plij d'id de vonet, ra de renai Doue! —

Ar re zaie er chouanted, ez a bob korn a Vreih,  
Ar Dreger hag a Gerne, hag a Wened ileih,  
Ar re c'hlaz digoueh get-he, e maner Koatlogen,  
Ar re a gosteou Bro-C'hall, tri mil enn ur vanden.



— Chetu enn heur e sonein, chetu enn heur sonet,  
Me emgafemp, eur wech c'hoab, ged er c'hoh zou-  
[darded.

Bec'h ar-n-oc'h, potred a Vreih, bec'h ar-n-hoc'h,  
[ha gwelomp]  
Mar m'ann Diol enn-tu get-he, ma Doue enn tu gen-  
[enomp. —

Ha pa oant deit de grogein, hen darc'he el ur goah :  
Get-he bop e fuzul vad, get-hen meit he benn-bah,  
He benn-bah, he chapelet hag a Zantez-Anna,  
Ha kemed e dostei, a oa pilet get-ha.

Ha toullet ker oa de dok, ha toullet he jupen,  
Ha loud hag he vleu troc'het, ged eunn tol a zabren,  
Hag er goed a zivere demeuz toull he goste ;  
Ha n'arzaoue e tarc'hout, hag oc'h penn e kane.

Ken n'hen gweliz ket mui tamm, hag he weliz endro,  
Hag hen tennet a goste dindan ur wenn dero,  
E wilein leih he galon ; chouket get-han he benn,  
Enn eutreu Tinteniak por a-drez ar he varlen.

Ha p'achue enn emgann ar dro enn nozeoh,  
Chouanted a zidoste re ieuang ha re goh,  
Hag a denne hou zokeu, hag a lare else :  
— Chetu ma goneit gen-emp, hag hen, siouah, marue. —

— SKLERIDIGEZ. —

Ar jeneral Tinteniak, eunn nebeut deisiou goude ann  
diskenn e Kiberon, a dremenaz da goad Molak, gand eur van-  
den chouanted : dleout a rea arruet charz ar bevarzek a viz  
Gouere, e koajou Kamorz ha Lanvau, evit, er c'houezek, ke-  
mer ar re c'hlaz a ziadre, e keit ha ma vijent kemeret ivez  
ebenn gant Puisaie ha d'Hervilli. Hoch en doe anaondegez a  
gement-ma, hag a gasaz Champeau da ziarbenn Tinteniak :  
en em gavout a rejont e Koetlogon ha kerkent e savaz kann.  
Jorj Kadoudal, d'Allegr hag ar Mersier en em daol war ar re  
c'hlaz hag a ra d'ezho kiza. Ar gounid a goustaz ker d'ar re  
wenn. Tinteniak a oe skoet gand eur bollod enn he galoun  
pa oa o lammet war eur glaz pehini her bize euz a dost :  
houeza a eure maro enn tre divrec'h Julian Kadoudal, unan  
euz a vrendeuz Jorj, ha pehini, eunn eur harpa ar jeneral  
maro, a denn hag a laz ann hini a lame digant Breiz unan  
euz he brudeta bugale.

Tinteniak, ar *Rochjakelin Breiz*, a oe lazet enn tre Jos-  
sellin ha Ploermel, tost d'ann *hanter-hent-ze* ker brudet, e  
pe leac'h, e 1350, ann Aotrou a Dinteniak, ar *c'hoarier*  
*baera euz ann dervez*, hag Alan-a-Dinteniak, he dudou koz,  
ho devoa gand eiz war-n-ugent Breton all, gouneet war dre-  
gont Zaoz. Ar maro-ma a gargaz a c'hlac'har Jorj hag holl  
klotred ar Morbihan.





## DISPAC'H

BRO - ZAOZ HAG HINI BRO - C'HALL

**Hevelebekcet ann eil gand egile.**

— 1795 —

KENTEL.

Herri VIII, Bone a Vro-Zaoz, a falveaz d'ezhan terri he zimizi gant he bried, evit kemer Anna Boulen, hi matez. Ar Pab Klement VII, a zinac'has ober ann diforc'hidigez : Herri a vuanekeaz out-han, hag a reaz en em ziskleria dre he Lezhuel, penn euz ann iliz, e Bro-Zaoz : heskina a eure ar re ne c'houlennjont ket anavout he wir nevez. Thomaz Moruz, Kanseller braz, ha Fischer, Eskob a Rochester, a oe lekeat d'ar maro. Evit en em venji ivez euz ar venec'h hag al leanezed pere a zalc'he mad d'ar Pab, Herri a reaz ho harlua euz ho c'hlostrou, ha goude e kemeraz ho madout. Dimezi a eure da Anna, mes cunn tri bloaz goude, o veza kazaet out-hi, he lakaaz d'ar maro. Goude maro Herri, Edouard VI, a zistrnjaz a grenn ar Relijion gatolik e Bro-Zaoz. — Ouc'h ann dispac'h-ze, deraouet e 1332, ec'h hevelebekca ama ann Aotrou ann Hermit, dispac'h Bro-C'hall. Ar Pab Pi VI, en devoa great he-unan ann heveledigez-ze enn eur berr-lizer, kaset da Eskibien ann *Asamble Nasional*, enn drizeg a viz Ebrel, 1791.

DISPAC'H BRO-ZAOZ HA BRO-C'HALL.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Va Doue leun a drugarez.* — 83.

Doue en deuz diouganet ar gonid da vikenn  
D'ar gwir Iliz gatolik war hec'h enebourien,  
Keit ha ma vo ar bed-man, ann heol, ar sterenno,  
Iliz Jezuz a-enep ann ifern a bado.

Mes pe lennann ar Skritur, n'en deveuz ket gwestlet  
Hon Zalver d'imp a chomje bete divez ar bed  
Ar Fe ebarz enn eur vro zaotret dre ar gwallo,  
Ouc'h penn, e lec'h ma touger enep d'ei ann armo.

Goad ann dud vad a skulier e pep tu a Vro-C'hall,  
A gri enep d'imp venjans, 'vel goad Abel gwechall :  
O Gallaoued, tud digar, o kalono kalet,  
Me gred ez eo ann dro-man, ho poezel peur garget.

Euz a holl c'hraso Doue pa rit eunn implij fall,  
Eo reiz e vec'h diweret, ez afent d'eur vro all,  
E kouefac'h 'barz ann dilez, hag e kolfac'h ar Fe :  
Deuz eunn dizeur e kouefet enn eunn dizeur neve.

E Bro-Zoz a oe heuliet gwechall ive da benn  
Gant kalz a virvidigez Lezen ar Gristenien,  
A galz deuz a dud santel, a Sent a oa karget ;  
Enezen ar santelez a oa dre holl hanvet.



Ann Hiz 'zo e kanvo, ann dud vad 'zo keuziet,  
O welout ar gwir Lezen er vro-ze distrujet ;  
Rannan e ra ma c'halon, me 'm euz doan, hep dale  
Na vemp evel ar Zozon, hep Lezen hag hep Fe.

E Bro-Zoz al lezen vad a oe neuze kollet,  
Evel m'he c'holler hiric enn touez ar C'hallaoued ;  
Pe mar fell d'ec'h-hu ober dishevelidigez,  
Mu a wad a vo skuliet, siouaz d'imp! enn hon touez!

Ar Roue Herri eizvet dre he likaouerez  
En deuz gret koll d'ar Zozon ar Fe, hag he c'holl glez ;  
Bet a oa pell o harpan 'n ho zouez al Lezen vad,  
Mes ann den gadal breman 'zo dare d'he c'huitat.

E-pad tost da driouec'h vla Herri en doa bevet  
'Barz ar brasan karante, gant Katel, he bried,  
Mes matez ar Rouanez, hanvet Anna Boulén,  
E ra d'ezhan kasaat he bried, he Lezen.

Hon-nez a deu da c'honid he galon dre c'hened,  
Ha disklerian 'ra d'ezhi e ioul hep mez e-bed,  
Ar Prins gadal a embann da holl dud he balez,  
En deuz c'hoant braz d'he c'hemer barz-e-pricdelez.

Da Rom a oe hep dale gand ar Roue skrivet  
Da bedin ann Tad santel da derrin he eured ;  
Komz e ra c'hoaz 'n he lizer, deuz a Anna Boulén,  
Hon-nez, 'm'ezhan, e raje enor d'he gurunen.

Ar Pab a deu da zinac'h he c'houlenn d'ar Roue,  
Rak kement-se 'zo enep al Lezen a Zoue,  
Mes ar Roue konnaret, o vout bet dinac'het,  
E ra terrin he zime, a gaz kuit he bried.

Dre venjans en em zistag deuz ann Hiz romen,  
Hag enn iliz ar Zozon a vo ar c'hentan penn ;  
Chetu-han Pab ha Roue, ne vezo ken renet ;  
He vatez Anna Boulén a gemer da bried.

Mantret eo gand ar c'hlae'har kalon ar Rouanez ;  
Pa wel he matez ganaz ouz he lakat er mez ;  
Karget a distridigez, a enoe, a enkrez  
E varvaz e berr amzer gand ann davedegez.

Herri 'gemeraz e berr, kas ouz Anna Boulén,  
Ann drouk 'zo hep padelez, ne chom ket pell da ren :  
Anna 'be war ar chaffod he darempred diroll,  
Gwanet eodiouz he dellid ; eurskouer gaer 'vid ann holl.

Dont a reaz da Vro-Zoz kalz a heretiged,  
A brezegaz eul Lezen zaouzanuz, kontammet.  
Kement ho deuz ho heuliet 'zo kouet er greden fall  
Eunn hevel tra a welomp c'hoarveet e Bro-C'hal.

Eur vanden dud dirollet, enebourien d'ar Fe,  
Pere a ra ar brezel d'ann dud reiz, da Zoue,  
'Zo e Bro-C'hal, eme-z-he, oc'h eeunan al Lezen,  
Hogen he flemman 'reont, he c'holl hag he dispenn.



Gragalan a reont holl penoz ez eo savet  
D'imp e Bro-C'hall, ar frankiz d'ober ha da laret;  
Eul labour tud dizordren ez eo ar frankiz-ze,  
Ha beza 'vefet sklaved, mar bec'h feal d'ho fe.

Kelen ann heretiged a blijaz d'ar Zozon,  
Evel eur mel ar gwellan a c'hone ho c'halon :  
Evel-se ar falz lezen, ker c'houek evel ar mel  
'Deuz e Bro-C'hall goneet alciz a dud santel.

Ann dud fall-ze a gavaz alierien Herri  
E taill vad da zigemer hi hag ho c'hefridi :  
Ann dud hep fe, a wall-gas ann Iliz, al Lezen,  
A zo e Bro-C'hall skoriet gand ar re 'zo o ren.

Ar Roue Zoz a chomaz enn he wall pennadet,  
Hanval ouz eur Pharaon, he galon kaledet :  
Pa oe kollet pep gorto, ann Tad santel neuze  
A zougaz ann anaoue a enep ar Roue.

Allaz! kalz a Vinistred e Bro-C'hall oe kavet  
Er gwall hag er falz Lezen gand ar Pab tamallet ;  
Pedomp ann Otro-Doue da rein d'he sklerijen,  
Rag er mez ar gwir Iliz na vezo salvet den.

Chetu 'ta ar Roue Zoz, ann dro-man distaget  
Deuz ann Iliz katolig, evel eur brank troc'het :  
Enn he holl stado en deuz eul Lezen embannet  
Na vo mu pelloc'h enn-he ar Pab anaveet.

He wirio a oe nac'het d'ar Pab ebarz 'n hon touez,  
Difennet eo daskorin d'ezhan sentidigez :  
Dre eunn Aviel neve gret gand ar C'hallaoued,  
N'a vo pelloc'h na belek, na Pab anaveet.

Gwall diroget ez eo bet ar Pab, penn ann Iliz,  
He skeuden dre ar ruo 'oe stelejet e Pariz :  
Goude ma oa ho drougiez gant ann dud fall gwalle'het,  
Ho deuz neuze ar skeuden d'ar flammo kondaonet.

Ar Roue diroll Herri hag he alierien  
A c'houlennaz krenn al Le digand he holl wisien,  
Dre behini a vije d'ezhan a grenn pleget,  
Ha deuz a Iliz Bro-Zoz 'vit penn anaveet. —

Ann nebeud a zinae'haz al Le milliget-ze  
A c'houzanvaz ann heskin, darn 'gollaz ar vue :  
E Bro-C'hall ar veleien na houljont ket touet  
A zo muntret, harluet, e sklaverez kaset.

E rouantelez Bro-Zoz e oe kavet daou zen  
A chom stard evel eur roc'h a enep al Lezen,  
Hag a rebech d'ar Roue a oa direiz al Le,  
Na hellje den hen ober anez dinac'h ar Fe.

Unan anhe 'oa Eskop, eunn all Thomaz Moruz,  
Kaer a zo ho gourdrouzan deuz a boanio grevuz,  
Gand herder e respontont 'int reiz d'a skuil ho goad  
Kent kuitat ar gwir Iliz, na kuitat ann tu-mad.



Gant ma zud eo otreet al Le, eme Herri,  
Na hellfe den hen dinac'h hep dellezout kasti :  
Thomaz Moruz a lavar : Sentin a zo dleet  
Douz ann Iliz gatolik, p'hini e deuz komzet.

Nag a Eskibien gwiek, ha nag a dud leal  
Ho deuz bet evel Moruz komzet barz e Bro-C'hall,  
A enep al Le direiz a zo bet kemennet :  
Disprizet eo ho c'homzo, hag hi 'zo heskinet.

Ar mac'her e ra krenan Bro-Zoz dre he urzo,  
Ann Eskop fur ha Moruz 'zo barnet d'ar maro ;  
Ho daou a oent dibennet ; rein reont ho bue  
Da zifenn gloar ann Iliz ha gwir ar Pab ive.

Eskibien ha beleien, tud lig ha gwerc'hezid  
'Barz e Bro-C'hall hep niver, d'ar marv 'zo bet barnet ;  
Goul a reont trugare evid ho bourrevien ;  
Mervel a reont laouen evid ar gwir Lezen.

E Bro-Zoz ann darn vrasan a heuliaz al Lezen,  
Na gredent ket enebin, ar Roue a gemenn :  
Ann darn vian a zinac'h sentin ouz ar Roue,  
Hag a gav gwelloc'h sentin ouz Lezenno Doue.

Darn vraz deuz ar C'hallaoued ho deuz ive sentet  
Ouz al Lezenno direiz gand ar stado douget ;  
Darn a zinac'h gant kalon, ha kent mankout d'ar Fe,  
A ro ar peuch, ha mado, kalz zoken ho bue,

E Bro-Zoz a oe kavet kalz deuz a Eskibien  
Disleal d'ar gwir Iliz, d'ho Doue, d'ho Lezen,  
Hag a rez al Le direiz, 'viije anaveet  
Ar Roue penn ann Iliz, hag ar Pab dilezet.

Eunn tol braz a veleien, a venec'h a heuliaz  
Kentel ar falz Pastored, war ho lerc'h a douaz :  
Ebarz ar fallagriez, goude koll ho Lezen,  
En em daoljont holl kevret, evel galeourien.

Enn touez hon oll Eskibien, hep ken pevar judaz,  
A werzaz krenn ho Lezen, hag hep poan a douaz :  
Eur gwall all a rejont c'hoaz o sakran Eskibien,  
A zo breman *Intrued*, bourrevien d'al Lezen.

War ho lerc'h en deuz touet menec'h ha beleien  
A ra glac'har d'ann Iliz ha d'ann dud vad anken :  
En em glevet a reont da goll ann Ineo  
O prezeg ar falz Lezen dre holl er parrojo.

Ar galetan gwanerez a ra d'he dud Doue  
Eo digas falz Pastored da vlenian anzhe ;  
Rak bikenn n'en em gollo ur Pastor he-unan ;  
Eunn niver a Ineo en em gollo gant-han.

E Bro-Zoz ar Bastored 'oa feal d'ho Doue,  
A zinac'haz krenn al Le, eur gwall 'oa kement-se ;  
Bean a oent heskinet, deuz ho gwirio lamet ;  
Da eur vanden *douerien* 'oe ho lec'hio roet.



E Bro-C'hall ar Bastored na rejont ket al Le,  
A oe dre nerz diframmet a douez ho bugale,  
Gaud ann armo 'int klasket, ne voint ken gouzanvet :  
Eur vanden falz vinistred enn ho lec'h 'zo laket.

Ebarz er bro ar Zozon er giz-ze 'oe gwelet  
Eul Lezen fall prezeget gand ar falz vinistred.  
Ar bobl paour a oe touellet hag a heuliaz anhe  
A faziaz abarz-nemour, hag a gollaz ar Fe.

Evel-se eman ive 'n hon touez ann *Douerien*,  
O prezeg a vouez huel, d'ann holl eur falz Lezen,  
Dre ho c'homzo kontammuz 'zo kalz touellet gant-he,  
Pere a chom er fazi hag a zispriz ar Fe.

Chetu eta ar Zozon pell a zo distaget  
Deuz ann Iliz katolig, e kreiz ar chism beuet ;  
Kalz, siouaz ! a C'hallaoued a zo hanval out-he,  
E m'aint er mez ann Iliz, e stad fall ho Ine.

Piou bennag en deuz kollet he Lezen hag he fe,  
En em dol evel eunn dall 'barz e fazio neve :  
Eur vech ma ve ar pec'her er gwallo braz kouezet  
E torr holl hep poan spered, ne heul lezen e-bed.

Goude ma oe deuz ar Pab ar Zozon distaget,  
Ha goude m'ho doe a grenn ann Iliz dilezet,  
Ez int tec'het bep kammed a hent ar wirione  
Ez int kouet e mil drougiez hag e mil dallente.

E Bro-Zoz ann hol westlo a zo bet difennet  
Na weler ken a venec'h nag a Leanezed,  
Ho c'hlaustro hag ho mado 'oe lamet diant-he,  
Hag holl a oent kemeret evit mad ar Roue.

Ebarz e Bro-C'hall ive pep gwestl 'zo difennet,  
Ne vo gret ken a venec'h nag a Leanezed :  
Gwerzan a rer ho zier, ne chom netra gant-he  
Ha c'hoaz evezint euruz o kaout ar vue.

Dre lezenno ann Iliz ez eo bet difennet  
Ouz ministred hor Salver dont da gemer pried ;  
Mes goab e ra ar Zozon deuz al lezenno-ze,  
Ho ministred, a enep ann Iliz, a zime.

E Bro-C'hall 'zo beleien gwaz eged ar Zozon,  
Dre al Le int diskennet ebarz ar gwallo don :  
Darn anhe 'zo o vevan gant greg ha bugale,  
Hoc'h unan ez oc'h testo dimeuz ar wirione.

E Bro-Zoz ann oterio a zo bet diskaret  
Hag ar zakrifiz santel ne d-eo mu kinniget :  
Displegan fall ar Skritur, kanan salmo ha lenn,  
Eo holl Lezen ar Zozon : n'ho deuz ken a ofern.

E Bro-C'hall hon euz gwelet ann oterio freuzet  
Hag ar zakrifiz santel deuz ann ofern lamet,  
Robes-Perez a lare o komz deuz a hou-man,  
A oa herve ann dudo, eunn dra euz al luan.



Gwelet 'reomp e Bro-C'hall kalz a falz kristenien,  
Pere na heuliont pelloc'h na Doue na lezen,  
A zispriz ann treo santel, hag e ra dreist-gwirio,  
Ha n'ho deuz ken plijadur nemet gand ho mado.

E Bro-Zoz na enorer pelloc'h ar relego,  
Ar skeudenno 'zo torret, kaset deuz ann templo;  
'Vid ar grusifi zoken n'euz mu doujanz e-bed,  
Gant eur vanden dud direiz, ez eo, siouaz! flastret.

Ar Zent 'zo ho skeudenno e Bro-C'hall, bet saotret,  
War ar grusifi zoken gand ann treid 'zo kerzet :  
E meur a dempl na weler pelloc'h a skeudenno  
Draillet 'int bet ha tolet da zevin er flammo.

Pedin 'vid ann Ineo a zo o c'houzav poan,  
Herve lavar ar Skritur, a zo eur preder glan :  
'Barz e Bro-Zoz eo lamet ar *Fondasiono*,  
Ne rer ken a bedenno evit ann anaono.

'N hon bro 'eo gwerzet ive ar *Fondasiono*,  
Ne ve gred hini pelloc'h ebarz ar parrojo;  
Ho freizan a zo gret holl : breman 'eo dilezet  
Ann anaono hep skoazel barz er poanio kalet.

Ar govesion goude gand Herri 'zo lamet,  
Rak kement-se oa eur boan a vrelle ar spered :  
Disprizout 'ra ar Zozon holl ann induljanso,  
Ar Purgator 'zo zellet gant-he evel kelo.

'N hon bro ann induljanso hag ar govesion  
A zo gant kalz disprizet a gomz hag a galon ;  
Labour ann dud diskiant, em'he, 'eo kement-se ;  
Ni laro gand ar Skritur, 'int labour eunn Doue.

C'houec'h gourc'hemenn ann Iliz, e Bro-Zoz zo toret  
Ha na virer ken pelloc'h iun na koraiz ebed :  
Bouzar ez eo ar Zozon da vouez hon mamm santel,  
Na zellont na diouz gwener, na zadorn, na vijel.

'N hon touez ve kavet hirie eur bern tud dispac'het  
Hag ho deuz gourc'hemenn ann Iliz dilezet :  
Ouz ho gwelet a larfac'h e vent deut da Zozon :  
Na viront ken na koraiz, iun, gwener na zadorn.

Ar Zozon ne anzavont nemet daou Zakramant,  
Ar goan baskal 'zo unan, egile badiziant,  
Ann Urz, ar Briedelez, Kouzoumen ha Nouen  
A zo holl nac'het gant-he, koulz hag ar Binijen.

Breman ar Briedelez a zo gant al Lezen  
Sellet ebarz e Bro-C'hall, 'vel eur marc'had hep ken.  
Chetu ar Briedelez a Zakramant lamet,  
Ann holl Zakramancho all, a zo dre holl zaotret.

Tennet em euz dira-z-hoc'h ho skeuden, Gallaoned,  
Kalledet oc'h er gwallo, evel Sozon dallet,  
Reiz 'eo e vec'h kastiet ive evel Sozon,  
Hag e vec'h c'hoaz diweret deuz ar Relijion.



Trugare deuz ma Doue, troet ar c'halono,  
 Bet true ouz hon daero hag hon huanado :  
 Glanet net ac'hanomp holl dre eur gwir binijen,  
 Gwell e ve gan-emp mervel eget koll ho Lezen.

— SKLERIDIGEZ. —

Chetu hanoiou ar pevar *Eskob a douaz* e Bro-C'hall ;  
 Brienn, Arc'heskob a Sans ; Talleirand, Eskob a Autun ; Sa-  
 vinn, Eskob a Viviers, ha Jarant, Eskob a Orleann : gallout  
 a rear c'hoaz lakaat evit pemved, Gobel, Eskob a Lidda, *in*  
*partibus*. Ar c'hant pemp ha tregont Eskob all a zinac'haz  
 ober all Le.

Ar ganaouen-ma a zo bet roet d'in gant Fiakr ar Roue,  
 euz Kerhuelen, e parrez Plouaret.



## HISTOR

### AR REVOLUSION

— ABAOUE 1789 BETE HANTER 1798. —

#### KENTEL.

Ann Direktoer a skrive d'he dud, e divez 1795 : — Diwallit  
 ouc'h ar veleien fall-ze pere a zalc'h da brezek ar pezh ne gre-  
 dont ket : ne gollit morze a well ann dud milliget-ze, ha ra  
 vezo buhan sevenet al lezen pehini ho gwask, ho sko hag ho

c'haz er meaz euz ar vro. — Nebeud a vad a oa da c'hortoz  
 goude kement-ma. Evel-se er 23 a viz Du, e oe embannet a  
 nevez al lezen douget enep ar veleien : rediet a oent da de-  
 c'het euz ar vro : kement-ma a beurgargaz ar Vretoned a  
 c'hlac'har. Chetu ar pezh a zo lavaret gand ann Aotrou ar  
 Iann, ebarz ann diou ganaouen a heul : enn hini genta e ma  
 ann traou tremenet abaoe 1789. Er skleridigez eo danc-  
 vellet ar re arruet e 1797, ha derou 1798.

••••• XXXIII. •••••

### HISTOR AR REVOLUSION BETE DIVEZ 1795.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Cheleuet-ni*, 58. — Enn eul lakaat daou  
 gouplad enn unan.

Reit d'am daoulagad, ma Doue,  
 Diou ruzelen a zaero,  
 Ma hellinn goelan noz ha de  
 Ann dizeurio deuz ma bro.

Eur galon a c'hlac'har mantret  
 En em zivoc'h o voelan ;  
 N'am frealzo man all ebed,  
 Keit ha ma vinn er bed-man.

Ne oa rouantelez er bed  
 Kaeroc'h 'vit hon bro gwechall ;  
 Chetu-hi pare dismantret  
 Gand eur vandennad tud fall.



Ho hano zo Protestanted,  
Enebourien da Zoue,  
Ho deuz eur bohl mad sebezet  
Dre ho lezenno neve.

Ar re-man n'euz biskoaz karet  
Nag Iliz, na Rouane.  
N'anaveont ken mestr er bed  
Nemed ann *Egalite*.

*Egalite* ha *Liberte*  
Chetu eno ho mestro,  
Chetu eno ho Rouane  
Ha zoken ho idolo.

Deuz a lezenno ker gwalluz  
A teu hep seurt dizeurio,  
Na gever na reol, nag urz  
El lec'h ma ver holl mestro.

Me ia da zeraou dre 'r vammen  
E deuz gret dizeur hor bro :  
Heuliet ac'hanon penn-da-benn  
Ha dalc'hit mad d'am c'homzo.

Loeiz c'houezeg, enn he amzer,  
A lakaz dre wallegez  
Eur protestant, hanvet Nekker  
Da ren he rouantelez.

Betek neuze hon Rouane  
N'ho devoa biskoaz fisiet  
Kemer tud euz eur fe neve  
Da veran ho *c'habinet*.

Rak lakat gant Katoliked  
Protestanted er c'hargo,  
A zo kemer hep mar ebed  
Ar gwir du da goll eur vro.

Nekker a vag enn he galon  
Torfejo deuz ar gwasan ;  
D'ann tron ha d'ar Relijion  
E ro ar gwall dol kentan.

Pa en deuz pep tra kempennet  
Ha c'houezet hon dizeurio ;  
En deuz hep dale kuitaet  
Hag en em dennet d'he vro.

Breman a hellez, aneval,  
Rein holl da galon d'ar joa,  
Pa t'euz enaoued ann tan gwall  
Enn eur vro euz ar c'haera.

Kenvreudeur da wall oberio  
A zo skignet enn hon touez,  
Hag a ra gouzanvin d'hor bro  
Mil ha mil fallagriez.



Harluet eo ar veleien  
Ha diskaret ann Iliz :  
Hor Roue 'zo kouezet he benn  
War ar chafod, e-Pariz.

Penn ar Rouanez, nez goude  
A deu ive d'ann douar,  
Hag er bloa warlerc'h e kouee  
Penn Elizabeth, hi c'hoar.

Lociz seitek, hag hen bugel  
Gant-he 'barz ar bac'h dalc'het,  
Ho deuz lakaet da vervel  
Dre eunn evach kontammet.

Deuz d'en em guz, heol binniget,  
O welout eur seurt gwallo,  
Na hellont, hep mar, bezan gret  
Nemet gant drouk-sperejo.

Nag ar mado, nag ar vue  
N'int da zen pelloc'h 'n hon touez,  
Lazan ra ann eil e-gile  
Gwaz eged al loened gwez.

Chetu aze ar freuz neve  
Deuz kelen Heretiged,  
Chetu deuz ann *Egalite*  
Aze ann evurusted.

Gwelet a rit, ma Broiz kez,  
Donder ho kouli breman,  
Ne zo ken a baredigez,  
Eman ar c'hrin-beo enn-han.

Mar bijemp bet Doue karet,  
Ha karet gant karante,  
N'en dije ket hor c'hastiet  
Dre gel liez a zoare.

Dibod eo ar Gall, ar Breiziad  
N'en de da rebech d'ezhan,  
Eunn dra bennag he skiant-vad  
War ar gwallo a-vreman.

Enn touez ar reuzio, ma Jezuz,  
Hon euz tennet warnomp holl,  
Horelijion keeluz  
Zo et d'imp, siouaz! da goll.

Birvikenn na 'n em bellao  
Ar c'holl-ze deuz ma spered,  
Ar c'holl dimeuz ann Ineo,  
A zo eur c'holl diremet.

Nann, ne zo na poan, nag anken  
N'hor dije c'hoaz gouzanvet,  
M'hon dije gwelet ho Lezen  
Gan-emp enn hi lec'h chomet.



Bannan a renko ma c'halon,  
Mar na deut, o ma Doue,  
Da lakat ho relijion  
Da ren 'n hon touez a neve.

Rak penoz bevan divorc'het  
Diweret deuz ho kraso,  
Evel hep gorto d'ho kwelet  
Ha d'ho meulin enn Envo.

O Relijion keeluz,  
Savet gant goad ma Doue,  
Merk talvouduz hag estlammuz  
Deuz he vrasan karante.

N'ho gwelfomp ken eta 'n hon touez,  
Kimiadan a rit hor bro,  
Kuitat 'rit ar C'hallaoued kez;  
Na zellezont ho kraso;

Korf keeluz, deuz ma Zalver,  
Goad sakr, skuliet war ar groaz,  
N'ho kwelfomp mu war ann oter  
O c'houlenn evid-omp gras.

Na gleofomp ken nebeut bikenn  
Ar c'hleier ouz hor gervel  
Da vonet holl d'ann oferen  
Ha d'ar pedenno santel.

Kimiad eta, templo santel,  
Kimiad d'hor gwir vinistred,  
Red 'vo eta breman mervel,  
Hep bezan zakramantet!!

D'ec'h pinsin badisiant, kimiad,  
Kimiad, kovesiono,  
Kent a oamp holl dre-z-hoc'h timad  
Gwelc'het deuz hor pec'hejo.

Enep klenvejo hon Ine,  
N'hon bo 'ta louzo ebed!  
Petra 'ta refomp, ma Doue,  
Ma na deut c'hoaz d'hon c'haret!

Kimiad, kador ar wirione,  
E-pelec'h em euz klevet  
Treo talvouduz braz d'am Ine,  
A ree brezel d'ar pec'hed.

C'houi tud feal, skuliet daero,  
Enn ho koll sonjet er-fad,  
Dent da welan ho pec'hejo,  
Skuliet daero druz a wad.

Pedet evit ar bec'herien  
Ma plijo gant eunn Doue,  
Ho reizan holl d'ar binijen  
Kent 'vit klozan ho bue.



C'houi ive, tado ha mammo,  
N'hellfac'h bikenn gwelan re,  
O welet ho pugaligo  
E gwall da goll ho Ine.

Ma eo 'ta arru ann amzer  
Ma vo red chom er stad-man,  
M'ho ped, ma Doue, d'em c'hemer,  
N'houllann ken chom er bed-man.

Ouz ma mouez, ma na selaouet  
Me grio war bouez ma fenn,  
Ha marteze em c'hemerfet  
Evel ar Gananeen.

Pell deuz joaio foz ar bed-man  
Demp da dremen hon bue,  
Mar n'heller ken kavet enn-han  
Na relijion na Fe.

---

— SKLERIDIGEZ. —

Nekker a oa ministr braz Loeiz XVI : ginidig a oa euz ar gear a Jeneva, e pelec'h e oa savet enn hugenodach. E 1790, o veza evit ann deirvet gwech, kollet grad-vad ar Roue hag ann *Assemblée*, en em dennaz d'he vro, enn eul lezel war gampi war denzor ar Roue, daou villion pevar c'hant livr, hep komz euz he balez nag euz he vaner. Ann dra-ma a oa

nichans, evit diskouez en devoa great euz ar gwella, he var-c'hajon he-unan. Ar pez a reaz muia bruda he garg, hag a wastaz ivez ar muia ar vro, a oe ar groudigez euz ann ar-c'hant paper, hanvet *Asignalou*. — Loeiz XVI, a oe lekeat d'ar maro, d'ann oad a eiz vloaz ha tregont ha pevar miz, enn unan war-n-ugent a viz Genver, 1793. Er c'houezek a viz Here, em hevelep bloaz, e oe ivez dibennet ar Rouanez Mari Antona, d'ann oad a eiz vloaz ha tregont, nemed eunn nebeut deisiou : he c'hoar Elesbed, oajet a dregont vloaz, e doe ann hevelep maro, enn dek a viz Mae, er bloaz goude. — Loeiz seitek a oe dastumet enn eur bac'h, e pelec'h e oe roet d'ezhan evit evesiad eur c'here, hanvet Simon, den gadal ha didruez : heman en devoa bet urz da lakaat he holl wiziegez d'ober euz a Loezik, eur paotr direoll, ha d'her gwallgas evit gwalla he gigen; Simon a rea mad he garg. Eunn nozvez ma oa ar Prius iaouank o kana soun ar *paour keaz Jakez*, Simon a arruaz evel eunn den kounnaret hag a lavaraz d'ezhan : — Ne gan ket, ne gan ket ann toniou-ze ! Mar fell did kana, bleik bian, kan soun *ar Marseilles*..... Ar paotr a davaz..... *Ar Marseilles!* diouc'h-tu, Kapet, a lavaraz ar c'here enn eur sevel he zorn. — Loeiz a choumaz sioul — kana a ri-te, pe me ez f..... — Nann, ne ganinn ket ar soun-ze : ober a rea heuz d'am mamm ha d'am c'hoar. » — Neuze ar fallakr Simon her skoaz. Ar gwall zigemer-ze a vije great d'ezhan noz deiz, ha dre-ze ne badaz ket pell : kalz a lavar e oe roet d'ezhan kontamm : mervel a eure enn he vac'h, enn nao a viz Mezeven, 1793, hoajet a zek vloaz ha daou viz.





● XXXIV. ●

KENTEL D'ANN DUD DIROLLET.

— 1796 —

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Gwerz santez Anna.* — 57.

Meurbed ez onn sebezet pe sonjann, ma Broiz,  
Er gonnar, er gasoni 'zo ouz ar gwir Iliz :  
Dallet eo ar Gristenien, hag ar pezh 'zo gwasan,  
Karet a reont ar re a zo ouz ho dallan.

Ma anavfac'h, ma breuder, al Lezen gontammet,  
A siler enn ho kalon gant kemend a wended,  
Ho pefe lec'h da welan ho tizeur noz ha de,  
D'her gwelan awal'h zoken, 've re verr ho pue.

Koll a ret holl, ma breuder, pe deut da goll ar Fe,  
Hag hoc'h euz e gwirione, kollet anei hirie :  
Laret d'ec'h nep a garo, bevan hep doan ebed,  
Me lar : Gant stad hoc'h Ine, 'tleet bezan nec'het.

Eunn estlamm eo, eunn drue, klevet darn o laret,  
Ez eo hep ken dre bennad ho deuz ar vinstred,  
Dinac'het ober al le douget gant ar stado :  
Ann dud dall a hell breman barnan deuz al livio.

Na ma vije dre bennad, n'ho dije ket touet  
E oa reiz ho c'hastian, evel tud dispac'het ;  
Mes piou a lak dre bennad 'harz e gwall he vue,  
A zilez ha mignoned, bro ha kerent ive ?

Ann evez-mad, ar furnez hell ober kement-se,  
Hep ken pa vezer e-red da zifenn tu Doue,  
Neuze e renker ha rein, ha dilezel pep tra ;  
Digalon 've ann hini a deufe da fazia.

Er mez deuz ar gwir Iliz n'euz nep silvidigez,  
Her c'hredin, ma breuder kez, a ve eunn diotiez :  
N'euz nemed unan hep ken p'hini 'c'heuz kuitaet  
Aboue m'hoc'h euz bet heuliet ar veleien douet.

Ar Pab hag ann Eskibien anaveet gant-han,  
Hon-nez eo ar gwir Iliz n'hellket dont da fazian,  
Ar re deu dre eunn or all ne d-int nemet bleizi  
Dindan skeud gwir Bastored, 'vit gallout ho tibri.

Ar veleien evit-he da vezan beleien  
Anez beza bet galloud, n'hellont ket dont da ren  
Enn nep lec'h ann Ineo : kement-man 'zo a Fe,  
Lennet ar Zened a Drand ; eno e kefot-ze.

Enn Aviel e kavann eunn hevel gwirione,  
Petra 'vo red da glask d'ec'h, c'hoaz goude kement-se ?  
Evesait 'ta ervad da gomzo hon Zalver,  
N'oufenn lavaret netra hag ave muoc'h skler.



- » Evel m'en deuz ma c'haset ma Zad a zo enn ne,
- » Er giz-ze, ma Ebestel, ho kasann, c'houi ive;
- » Et eta dre ar bed holl, da breseg ma c'homzo,
- » Ma c'harante e ra d'in, klaskout ann holl boblio.

Chetu hi eta kaset da breseg dre ar bed ;  
Diagent nep karg belek n'ho devoa biskoaz gret :  
Den e-bed barz ar winien n'en deuz talvoudegez,  
Ma na ve d'ezhi kaset gand ar penn-tiegez.

Klevet hoc'h euz-hu biskoaz ar vue a Oza ?  
Ne laboure ket enn templ ; nemed den lik ne oa :  
Heman a zavaz he zorn vit harpan Arc'h Doue ;  
Raktal e koue d'ann douar, diweret a vue.

Neuze me ho lez da varn ann drougiez, ma broiz,  
'Zo gret gant tud ar bed-man, o veran ann Iliz :  
'Vit koll ar vue besand 'zo c'hoaz nebeud a dra,  
Mes pe goller ann Ine, hen-nez eo ar gwasa.

Ne hellann ket koulskoude ho kwelet o kerzet  
Gand cunn er ken dizaouzan 'barz enn hent ar pec'hed  
Hep kavet 'barz ma c'halon ar c'hlac'har ar vrasa  
Ha ma n'ho kwelann o trei n'em bezo ken a joa.

Ma hoc'h euz a grenn mennet da zont da guitaat,  
Ann Iliz ho mamm zantel, enep d'am ali mad,  
E renkann ho tilezel, hag ober d'ec'h aman,  
Ann daero em daoulagad, ma c'himiad divezan.

Me iel, lapouzedigo, d'ho klask enn ho koajo,  
Da laret d'ec'h ann abek e ra skuil ma daero :  
C'houi a vo muoc'h tener, lezel rafet ho kan  
Pe zeraouin dira-z-hoc'h danevellan ma foan.

Ho c'hoario diantek, ho mouezio dudiuz  
E vo d'in gand ann amzer, hep mar mu frealzuz,  
Evid ar joa a gavann pelloc'h gant tud ar bed,  
N'heller ken ho anaout, e-giz ma 'z int troet.

---

— SKLERIDIGEZ. —

D'ar mare ma oe savet ar ganaouen-ma e oe eunn tamm  
peoc'h evit ar veleien, evel ivez evit ann dudchentil. Ann  
Direktoar a zigasaz ar jeneral Hoch da Vreiz, evit ober ar  
peoc'h gand ar chouaned breton : ar re-ma her c'hemer di-  
gant-han enn divez miz Even : pep hini a zistro d'ar ger, mes  
war eur ger aberz Jorj Kadoudal, pep chouan ivez a zigaz  
gant-han he arm. Hoch a c'hour'hemenn rei ann armou :  
den na ra van : kenniga a ra dek skoed evit pep fuzil a vo  
digaset ; ne d-eo ket muoc'h selaouet. Ann dud vad-ma a  
sonje ho divije ezomm anezho eur mare abretoc'h, pe eur  
mare divezatoc'h ; hag evel ma torret a neuze enn ho c'hen-  
ver ann divizou euz ar marc'had, n'ho devoa more'hed ebed  
evit ho zerri ivez d'ho zro. Gwelout a reant e klasket ho di-  
zarmi dre zouster, mes hep ken evit gallout heskina gwella  
ze ar veleien goz hag ann dudchentil. Aboan a oant distro,  
ma tigemerjont, daoust d'ann holl lezennou, enn ho ziez  
hanter ziskarret, ann dud tec'het euz ar vro, ha pere n'ho  
devoa perz ebed er beoc'hidigez ; evel ivez ann ofiserien pere,



goude beza pleget, a oa heskinet gant paotred Hoch. Ann traou-ze a zisplijaz kre d'ann *Direktoar*, hag e c'hourc'hennennaz kerkent heskina ar pennou chouaned pere ne oant ket tec'het euz ar vro : sevel a eure goude goeliou evit derc'hel sonj euz ann deisiou kaera euz ar *Revolusion*, evel ann unan war-n-ugent a viz Genver, 1793 : heman a oa, hervez ann dispac'herien, *ann deiz ha bloaz euz a gastiz gwirion ann diveza euz ar Rouaned*. Enn deiz-ze e vije lekeat e pep leac'h, diellou war bere e oa rediet pep gall da zoni dindan boan a varo, da sina *kas d'ar Rouelez*, hag enn deiz-ze ne oa mad da zen beza klan, na mont da vale. Kavout a rear c'hoaz kalz euz ann diellou-ma, mes ne lenner war-n-ezho nemet hanoiou dougerien, mevelien, keginerien-tavarniou.... E meur a barrez na zeue den da lida ar gouel. Enn eunn unan bennag en em zastame ann dud; mes chetu penaoz : diskithen dre eul lizer a skrivaz war-ze d'ann *Direktoar*, Jossik, *ofiser publik*, enn eur barrez a Gerne. — Gouel ann daon a Bluvioz (unan war-n-ugent a C'henver) a zo bet lidet aman dirak ar bobl, dre eunn ofern en deuz lavaret ar c'hloc'her koz d'ann heur a-vepred. Sina kas d'ar Rouelez, a zo sina kas d'ar Roue, map hena ann Iliz, ha sina kas d'ar veleien, a zo sina he *renonsi* da Zoue ha d'he Iliz. Ar Juzevien ho devoa staget ho Roue ouc'h ar groaz; abaoue e redont ar bed : ar C'hallaoued ho deuz dibennet ho hini : redek a raint d'ho zro. —

Kement-ma a dlcaz saouzani ann *Direktoar*, mes enn enep, na reaz nemed hel lakaat da gounnari. Er bloaz goude e oe heskinet ker gwaz ha biskoaz, ar veleien hag ann dud-chentil : *kolonnou mobil* a rede dre ar vro hag a vac'he hag a laze kement a vije diskuliet d'ez-ho gand ar renerien, evel enebourien d'ann *Nasion* : ar re ne vije ket teurveet ho laza, a vije kaset da Rochefort ha paket eno e koz-listri war bere, a varvaz kalz anezho dre ann dienez hag ar c'hlenved.

E 1794, e oa bet c'hoaz kaset di kalz a veleien : chetu hanoiou ar re a varvaz eno. *Euz a Eskopti St-Briek* : Bernard, a Lantik, — Herve, a Hemon, — Ketier, — Raoul hag ar Solmier, Abostoler : — *Euz a Eskopti Kemper*, — *Persounded*, — Kalvez, Tregwennek ; — Korvoisier, Irvillak ; — Kelern, Daoulaz ; — ar Biz, Feuille ; — ar C'hloarek, Forest ; — *Kureed*, — Bellivet, Rostrenn ; — ar C'hoant, Burtulet ; — Plassart, Pleiben, hag ar C'haz, manac'h : — *Euz a Eskopti Treger*, — Ferkok, Persoun Plufier ; — ar Iann, Kure Brelevenez ; — Prat, Plouzelamb ; — Jakemart hag Aleksandr, Menec'h : — *Euz a Eskopti Gwenned*, — *Kureed*, Ann Toullek, Sene ; — Bernard, Billio ; — Herve, Mor ; — ar Bihan, St-Gerant ; — ann Tiek, Marzan ; — Robert, Glenak ; — *Beleien all*, Benoat ; — Brulon ; — ann Toullek ; — Klober ; Gardi ; — ar Pierez ha Bigidel.

Ann *Direktoar* o welout kement-ma, hag evit mirout ne vije lavaret penaoz e felle d'ezhian ho lakaat holl da vervel war ar c'hoz listri-ze, a reaz kas ennn niver braz anezho d'ar Giana ha da enez Re. Chetu hanoiou ar re a varvaz. — *Er Giana*, — *euz a Eskopti Gwenned*, — Denoual hag ann Divellek, arc'h-beleien ; — Valle, Persoun Plouhinek ; — ar Bail, Kure Sulniak ; ha Boursikault, Kure Sarzeau. — Ar Pap, Kure Santez Trifinn, *euz a Eskopti Kemper* ; ha Kombaut, Kure St-Martin, *euz a Eskopti Leon*. — Ar Zaoult, Kure Trefflouenan, *euz a Eskopti Leon*, a varvaz enn enez Re. — Mervel a eure, hep mar, kalz a veleien all breton, el leac'hion a bere a zo komzet, mes chetu ann hanoiou am euz gallet kavout. — Pa emaomp gant beleien maro er meaz euz a Vreiz, chetu ama hanoiou re all maro ivez enn harlu, hag euz a bere n'euz ket bet c'hoaz komzet. — Morvan ha Marion, kentellierien e seminer Treger ; — ar Gwillou, Persoun Lamvellek ; Riou, Koadout ; — Servel, St-Karadek ; — Gofvri, Vikel vraz e St-Briek, a zo maro ho c'houec'h e Jerzea ; —



Villebois, Persoun S<sup>t</sup>-Salomon Gwenned ; — Livois, Persoun iliz veur Gwenned ; — Gwegan, Pontivi ; — Eon, Limerzel ; — ar Mogn, Plemet ; — Persoun Hennebont hag hini Rumengol, a zo maro e Spagn ; — ar Bot, Persoun Arzal, a varvaz o tremen euz a Spagn da Jerzea.



## ANN DOMMERIEN.

— 1798 —

Ar *Gouvansion*, e 1793, a wiskaz e c'hiz chouaned breton, eur vanden galcourien euz a Vrest, hag ho loskaz er c'hiz-ze war Vreiz, gant gwir da skraba ha da dana dre holl : he menos a oa dougen dre eno da gasaat ar chouaned. Ann *Direktoar*, e 1798, a gasaz ivez da Vreiz, eur bagad tud fall euz a Bariz, gand eunn hevel gwisk, ha dre eunn hevel menos. Ar baotred-ma a rusie cunn trebez pe eur billik, hag a redie da azeza war-n-ezho, ann dud ho divije c'hoant da laerez. Goude beza er giz-ze, ho bourreviet enn hano Doue hag ar Roue, e kemerent ar pezh a blije d'ezho, hag ez eant da *domma* d'eul leac'h all. Sotin, ministr ar reiz, a skrivaz e-kuz da vistri *Distrigou Breiz*, evit ho fedi da skoazia ann *dommerien*, ha da grial war ar chouaned, pa vije arruet eunn taol fall bennak.

Ann *dommerien-ze* a laeraz hag a lazaz dre Vreiz eunn niver braz a *Sitoianed*. War-ze ar jeneral Michaud, e gward e Pontivi, a ziskleriaz penaoz e lakaje e stad a c'hrounn kement parrez e pehini e vije bet lazet eur re bennak, pe bet laeret gand armou, pe e pehini e vije bet digemeret eunn den tec'het euz ar vro, pe eur belek koz. — Er giz-ze e taolet war ar re wenn gwallou euz a bere e oa kiriek ann *Direktoar*. Ar blouiziz a zinac'haz plega da waskeresiou pere a oa disleal, pa oa gwir penaoz ann holl dorfejou a oa great gant tud dianav. Renerien ar parresiou a lavaraz penaoz ne dlie ket ar re-ma beza lekeat kred euz a wallou great er vro gand ermezidi dianav ; mes ne oent ket selaouet. Klasket hag heskinet a oe a nevez ar veleien, ann dudchentil hag ar re ho skoazelle : ar vro a oe mantret dre ann torfejou ar brasa : laza a reat hep kemm ebed. C'hoar ha breur kaer Gwillemot a oe lazet e Radenak. Lomeni-a-Vrienn, iaouank, a oe fuzillet e Kemper, hag Andreo Gwillemot ha Leisseg, e Gwenned. Eur bagad briz-soudarded euz a Bariz, a lazaz epad pemp deiz, kement a gayjont war ho hend. Er c'houezek a viz Even, ec'h arrujont e tro hanter-noz, e ti intanvez Plouret, pehini a choum tost da Vignan : goulenn a reont digant-hi pe seurt maro en devoa bet he gwaz : evel ma lavaraz d'ezho e oa bet lazet evit Doue hag ar Roue, e lazjont dira-z-hi seiz bugel he devoa : he laza a rejont ivez neuze : dre ma oa dougerez a eiz miz, he di-



gorjont gand ho c'hlezeier, hag e fuziljont goude he bugel iaouank, evit na joumje den euz ann tiad tud-ze.

Ezvoan Duno a oe ivez paket gand ar barizianed-ma : evel m'ho devoa ezoumm euz eunn den evit ho blenia da Wened, hel lezjont e bue : mes pa oant arru eno, her barnjont d'ar maro. Pa oa o vont d'ar chafod ec'h arruaz he c'hrek hag a griaz : — Va gwaz a zo chouan hag ez et d'el laza ; mes me a zo ivez chouanez, hag e teuann da c'houlenn mont enn he leac'h. Beza am euz tri bugel pere a vev dre he labour, hag evit pere ounn brema evel netra. — Vernet, unan euz ar vistri, a sin eur paper hag hen ro d'ar yamm vad-ze : — Dal, eme-z-han, chetu aze trugarez evit da waz, ha da varn da unan : ne belli ket lavarout ne ra ar *Republik* netra evit ar chouaned. — Diou heur goude e oe gillotinet ar c'hrek-ma, mes he den a oe ivez gillotinet antronoz.



## VENJANS

AR RE WENN.

— 1798 —

Garventez ann Direktoar e kenver ar re wenn, a lekea ar re-ma da veza garo e kenver he re : ar re c'hlaz n'ho espernent ket, hi na espernjont ket ar re c'hlaz. Spiet a oant, dalc'het a dost, diskuliet, lekeat d'ar maro ; skrapa, laza a reat ho zud : en em venji a rejont. — Tost da Votref, Gwermeur, Kannad Kemperle, ha Poulizak a zo paket gant-ho, ha fuzillet e koat Konvo. E Logivi, ar gwiraer hag he dud, anavezet evit beza spierien d'ann *Nasion*, a zo lazet holl enn ho zi : — Jollik, e Pennvenan ; — ar Garv koz hag he vab, belek touer, e Goudelin ; — Riou, e Plouilio ; — ann *ofiser munisipal* hag eur c'here, e Plouaret ; — Broc'h ar Gak, e trogeri ; (1) — ar

(1) Ann dud-ma na oent ket lazet holl e 1798 ; unan bennak anezho a oe lazet diagent, hag unan bennak goude. — Kalz euz al lazereziou-ma a arruaz e tu Landreger, hag evel ma oa sellet ar gear-ma evit beza mad ouz ar chouaned, e oe lekeat e stad a c'hrounn, enn noz ar bemp war-n-ugent a viz Du, 1798.



Rouz Penn-ar-C'hoat, e Peurit-ar-Roc'h, — hag eunn niver a *Sitoianed* all, a zo lazet dre Vreiz. Ar vengans eleac'h ar gwir a roe kemm-ouc'h-kemm : hag ar c'hemmou-ze a oa spountuz.

Ar chouaned a valee dre ar vro hag a rea paea gwirion d'ann dud ho devoa prenet madou ann dudchen-til : fuzilla a reant ar re a zinac'h paea : evel-ze e fuzilljont e Plouha, ar Gwillou, ar Foll ha Gwill ar C'hornek, euz a vaner Sant-Jorj. — Ann dud ho devoa great ann taoliou-ma, a dremenaz goude da goat ar Rez-Veur, e Peurit-ar-Beskont : paotred Pontreo a zeuaz evit ho difourka ac'hano, mes kannet int hep dale gant-ho : eunn daou pe eunn tri euz ar gwardouze, hag eur c'hemend all a chouaned, a joumaz war ann dachen. E keit-ze eur bagad chouaned all a zeve *thelegraf* Plougonver, hag hini Bourc'h-Briak, hag a ganne ivez paotred Gwengamp, deuet da redek war ho lerc'h : ho c'hanna a rejont c'hoaz e Treglamuz. Ama e oe lazet Taupin, pried ann Itroun a behini a zo bet komzet. Taupin hag eur glaz a denn war eunn dro, ann eil war egile, hag en em laz kevret. Antronoz e oent beziat e bered Treglamuz, ha gant-ho nao all, ken chouaned, ken re c'hlaz. Taupin en devoa miret, daou zeiz diaraok, ouc'h ar chouaned da laza ann Aotrou Godest, persoun *touer* e Treglamuz. —

## DUVIKET

### A GLASK DIEUBI PENNOU CHOUANED

A OA PAKET

**E Bac'h Sant-Briek.**

HANTER MIZ EVEN, 1798.

Ar Pap, Duval ar Griz, Andrev, Gwillemot ha kalz a chouaned hag a dud all a oa bet paket e bac'h Sant-Briek. D'ann noz euz ar c'houezek a viz Even, 1798, Duviket, Rohu, Jorj Kadoudal, ar Mersier ha Rarfort a ia evit ho dieubi, ha ze gand eunn tri-ugent chouan bennak hep ken. Arruout a reont e tro-noz dirag ar bac'h hag e lavaront d'ar Solier ho devoa paket eunn *emigre*, pe eunn den harluet euz ar vro. Jorj Kadoudal, evit ma teuje gwelloc'h ann taol da vad, en devoa roet da bevar-ha-tregont euz he baotred muia kalonnek, dillad pevar-ha-tregont *guard-nasional* lazet gant-ho; mes evit-ze, ar Solier a lavar e oa difennet out-han, abaoue daou zeiz, digeri doriou ar prizoun epad ann noz. Duviket a welout ke-




ment-ma, en em dennaz gant he dud da du Henon. Laza a reont enn hostaleri Militantrouill, eunn dek pe eunn daouzek glaz deuet da stourmi out-ho; mes Duviket a zo paket eur pennadik goude, ha digaset da Sant-Briek. Eno eo barnet d'ar maro ha fuzillet enn naontek a viz Even. Mervel a eure enn eur grial : — Bevet va Doue ! Bevet va Roue ! — Ar c'habitan glaz Honore, pehini en devoa great her paka, a oe, eunn nebeut deisiou goude, kavet lazet enn eur c'hoat : kemm doaniuz euz a varo Duviket.




## AR CHOUANED

### A EMGANN SANT-BRIEK.



— 1799 —



Ar Mersier a zastum e koat Lorj, he vanden, hag hini *Koste-ann-Nord*, renet gant Sant-Rejent. Enn noz euz ar bemp d'ar c'houec'h war-n-ugent a viz Here, kreet gant paotred Kerigan, Kourson ha Karfort, e kerz war gear S<sup>t</sup>-Briek, diwallet gand ar jeneral Kasabianka, hag ouc'h penn pemzek kant glaz : kemer a reont kear ha dieubi tri c'hant gwenn a oa eno er prizoun : goude ez ejont da di ann *Distrik*,

hag e kasjont gant-ho ar paperiou hag ann diellou. O veza tec'het euz a S<sup>t</sup>-Briek ha distroet da Lorj, en em gannont eno gant ar re c'hlaz : koll a reont eunn nebeut tud, ha dreist holl ann Aotrou Flother hag he vamm : da zasprena ann Itroun-ma e oa eat ar chouaned da S<sup>t</sup>-Briek. Ar re c'hlaz a gollaz ivez kalz euz ho re, ken e S<sup>t</sup>-Briek, ken e Lorj.



### OBERIOU ALL AR CHOUANED

EPAD 1799, HA DEROU 1800.

E keit ha ma emgannet S<sup>t</sup>-Briek, Pontbriand a zalc'he euz he du arvorion Dinan; ha goude beza kemeret armou hag arc'hant a zeue euz a Vro-Zaoz, e laka da blega Plankoet, Jugon, Matignon hag ar vro euz a S<sup>t</sup>-Malo da Lamball. — Euz ann tu all, Pierez Gwillemot a gemer Lokmine, ha Jorj Kadoudal gour-enez Rhuiz, Gwenned, Porz-Navalo, Landevan ha Muzillak. Eunn nebeut deisiou goude, Jorj a emgann c'hoaz ar jeneral Harti, ha Pierez a laz pemp kant glaz e parrez Buleon. Evit rei mui a nerz d'ann holl c'hounidou-ze, al listri Zaoz, pere a c'hortoet gand arc'hant hag armou, en em ziskouez er mor : Jorj a ia d'ho digemer gand ouc'h penn pemzek mil den. Rei a reont d'ezhan ho c'harg, war aod Ambon. Ar jeneral Harti a deu da Elven evit mirout



ouc'h Jorj da dremen, mes Jorj hag ar Mersier hen taol war he giz.

Ar *Morbihan* ha *Koste-ann-Nord* a oa a grenn dispac'het : ar *Finister* hep ken a oa sioul; mes en em sevel e ra ivez. Tu Skaer a Ker-Ahez a zo karget a chouaned, dastumet gant Dubot ha Bonavantur. La Boissier, Kerusoret ha Kerbalanek a ren paotred Plouvorn, Gwimiliau hag ar parresiou diwardro, ha dre ma en em glevant gand ar Rumin, Kresollez ha Trelen, pennou re tu Landreger, e tiezent kalz gwardou ar Republik.

Enn noz [ann unnek d'ann daouzek a viz Here, daou c'hant gwenn a emgann kear Kemper : en em denn a reont goude hep na zeu den da stourmi out-ho.

Enn nao war-n-ugent a viz Du, listri Zaoz en em ziskouez e tu ar Raz hag Ouessant. Jorj a dosta evit kemer ann armou hag ann arc'hant a zigasant d'ezhan, ha goude beza ho c'haset da S'-Nolff ha da Blaudren, a lamm war ar jeneral Harti deuet evit hen diarbenn, hag he drec'hi a ra : dinac'ha a ra sina ar peoc'h a felle da lod euz ar re wenn da ober e Pouanse (ar re ne oant ket euz a Vreiz), ha dere'hel a reaz d'en em ganna. He letenanted a ra evel-t-han. Bonapart, kenta Konsul, a ziskleri d'ezho ar brezel hag a ra o c'hlasg evit ho lakaat d'ar maro : kas a ra evit-ze ar jeneral Brun e Breiz. Jorj a emgann Harti war huelded Meukon : eno pevar-ugent gwenn a

ieaz enep pevar-ugent glaz, hogoz evel enn emgann ann Tregont. Jorj a oa e penn ar re wenn, hag Harti e penn ar re c'hlaez : daou-ugent euz ar re-ma a oe lazet : ar re all a gemeraz ann teac'h. — Sol ha Jorj en em dosta. Harti, euz he du, a askemer boure'hiou Rochefort ha Kestembert, hag enn nao war-n-ugent a C'henver, 1800, Brun a ia tre e Gwened. Daou zeiz goude, Jorj a emgann ar re c'hlaez, da genta e lagennou Pont-al-Lok, ha goude e lann Morbouleon hag e Billio : menna a ra neuze ober ar peoc'h : — M'ar n'am bije, eme-z-han, da emganna nemed ar pemp ha tregont mil den pere a zo hirie er *Morbihan*, ne rajen ket ar peoc'h : dre eur brezel a hek me am bije ho dismantret hep dale; mes re all a zeufe ker-kent enn ho goude, hag ar brasa reusioù a arrufe hep mar, ma ve astennet pelloc'h ar brezel. — Evel-se Jorj a c'houlenn komz ouc'h Brun; mont a ra d'he gavout gand eunn nebeudik chouaned. Brun a ro he zorn d'ezhan, mes ar jeneral Debell a lamm war Jorj : — Karget ounn, eme-z-han, a berz ar c'henta Konsul, da genniga d'e-hoc'h ann derez a jeneral divizion enn arme Moro; war ho tinac'h e tleann kas d'ezhan ho penn — Va fenn, eme Jorj, ouc'h hen heja gant rogentez, red a ve he gaout, ha n'e-mounn ket dare d'hen rei. — Goude ann dra-ma, pehini a oe tamallet gant Brun, e kouezjont ho daou war c'horre eur c'hleuz. — Red e oa plega, pe gwelout ober euz ar *Morbihan*, ar pez a oe great euz




ar Vandea, e 1793. Jorj ne varc'hataz ket, hag enn eil a C'hoevrer, 1800, ar peoc'h a oe sinet. Klevet a oe kerkent e oa arru e Kiberon, listri Zaoz evit digas arc'hant da Jorj : — Livirit d'ann Amiral, a lavar Jorj, am euz great ar peoc'h, ha na hellann ket kemer arc'hant evit ober ar brezel. — Evel-se Breiz a oe sioul e pad eur pennad amzer.

Jorj a ia da Bariz hag a zinac'h kemer digant Bonapart, ann derez a jeneral divizion, ha kant mil livr leve, evit tremen hep ober ar brezel : war-ze Bonapart a ro urz d'en derc'hel, mes Jorj a dec'h hag a dremen da Vro-Zaoz, epelec'h, gant he benn braz ha kalet evel reier he vro, e kinnig da alierien ar Brin-sed, eunn dro frank hag ecun pehini a helle diskarr a-blen ar *Revolusion*.



## BONAPART

A RA AR PEOC'H.



— 1800-1804 —



KENTEL.

Napoleon Bonapart, galvet da Gonsul enn divez ar bloaz 1799, a ziskaraz hag a ereaz a grenn ann dispac'herien. Evit dougen

ar Vretoned hag ar chouaned all d'a ober ar peoc'h, e westl rei d'ezho ho beleien hag ho Reljion : embanna a reaz war-ze ar frankiz, mes gand na roje ar *Republik* nag ilizou, na leve d'ar veleien. Evel-se e oa ann traou pa zigwezaz, enn Eskopti Kerne, enn naontek a viz Du, 1800, eunn taol pehini a reaz kalz a drouz, hag a heller da sellout evel reuzedik braz. — Audrein ha pevar den all a bignaz eunn eur c'harr, e Kemper, evit mont war zu Montroulez : da nao heur-noz e tec'hent euz a gear. Pa arrue ar c'harr dirak chapell Sant-Herve, war barrez Brick, eul leo hanter dioue'h Kemper, e oe lavaret d'ar c'harenner choum enn he zao. Daouzek chouan, eunn touez pere e oa *La Volonte*, *Paotr Kemper*, ha *Ligwarou* a zigor dor ar c'harr : gourc'hemenn a reont d'ann dremenidi diskenn. Ar re-ma a ziskenn kerkent : Audrein hep ken a choumaz kuzet er c'harr. Ar re wenn her gwel, hag a gemenn d'ezhan diskenn evel ar re all : — ma n'ho'h euz, eme-z-ho, netra da rebech d'e-hoc'h enep ar Roue, nag enep d'e-omp, n'ho pet aoun ebed : ni n'omp ket diskolpe-rien, mes tud hag a gar ar Roue. — Audrein a ziskenn eunn eur grenna. Ouc'h ar sklearder wenn o daol al loar war henchou doum Kerne, unan euz ar chouaned a anav ann *Eskop dero* : kerkent hema a glev *La Volonte* o c'houlenn digant-han, e brezonek, — ha beza ec'h-euz-te gan-ez da zillad Eskop ? — Ia, eme Audrein. — Mad, a gendalc'h ar chouan, en em wisk eta eunn Eskop : gwall bell zo n'hon euz gwelet hini. — Pa oa en em visket Audrein, ar chouaned en em zastumaz eunn dro d'ezhan : mont a reomp, eme *Paotr Kemper*, da varn ac'hanout : belek d'ar gwir Doue, ec'h euz gwerzet ann liz : bugel da Vro-C'hall, ec'h euz mouezet maro ar Roue Lociz XVI : petra ec'h eus-te da lavarout evit en em wenna ? — Audrein a valbouz : — Sitoianed....., Aotrounez, keuz am euz euz ar pez am euz great : goulenn a rann trugarez digant Doue ha digand ann dud. — Ann dud, eme



*Ligwarou*, na hellont ket ober d'id trugarez, rak ober a ra-  
fez anevez gwel pe well; ann den dispac'her a dro a gro-  
c'hen, mes ne dro morse a galoun. N'ec'h euz ken nemed ar  
maro da c'hortoz aberz ann dud: pet Doue ma vo trugare-  
zusoc'h enn da genver. — Goulenner maro ar Roue a bleg he  
ben, hag a lavar, o sonjal e vije espernet: — Goulennet am  
euz maro ar Roue, mes gand eunn tamm dale, ha dre aoun  
hep ken am euz her great. — Beza out eta eunn den digal-  
loun hag eunn difroked: ni, ne d-comp ket beleien, ha  
koulskoude ez comp da veza lealoc'h evid-oud: te ec'h euz  
kaset eunn den dinamm d'ar maro, ni a ia da gastiza eunn  
den nammuz. — Kerkent Audrein a gouez, skoet gand ho  
bollodou.

Bernadott a zo digaset evit peoc'haat Breiz-izel: evel ne  
bleget ket d'ezhan, e laka gwiriou braz war ar vro, hag e ra  
fuzilla ar Mersier, Kobb, Bonnard, ar C'hrom, Jafre, Julian  
Kadoudal ha kalz a re all. E keit-ze Bonapart a droe he ar-  
mou enep ann Ermezidi hag ho zrec'hi a rea holl: rog euz  
he c'honidou, e c'hoanta sevel eunn impalaerded, hag evit  
her zevel gwelloc'h, e ra ar peoc'h gand ar Pab; ann Erme-  
zidi her sinaz ivez, hag ann Europa en em gavaz er giz-ze, e  
sioulded: ar peoc'h-ze eo ann hini danevellet er ganaouen a  
heul, pehini a zo bet savet gand ann Aoutrou ann Hermit.

⊙⊙⊙⊙ XXXV. ⊙⊙⊙⊙

## AR PEOC'H.

(IEZ TREGER.)

WAR DON: *Evnik a gan er c'hoad huel.* — 19.

Embann e rann d'ec'h eur c'helo | Evit ann holl e tle beza  
A laouenna ar c'halono | Dre Vro-C'hall eunn abeg a joa.

Ar c'helo-man a zelleze  
Kaet eur c'hannad euz ann ee,  
Evel a joa gwechall kaset  
Da Zakari, d'ar Brofeded.

Ne zo spered krouet ebed  
Gant pehini e ve poellet  
Ar builder a vad hag a joa  
A zigaz d'imp ar c'helo-ma.

Ar peuc'h, ma breudeur, a zogret  
Ar peuc'h keit amzer gortoet,  
Goulennet 'barz ar pedenno,  
Goulennet dre galz a zacro.

Peuc'h santel, deut er c'halono,  
Pell zo emaint ouz ho korto;  
Ni ho sello gant karante  
Evel eur ro aberz ann ee.

Done ar peuc'h, ann armeo,  
Blodet dre hon huanado,  
Diwar he dron e ra eur zell  
Hag a ehan gléz ar brezel.

Goude hor beza arnodet  
Ha dre ar poanio hor glanet,  
E teu kerkent d'hor frealzi  
Ha da rei sioulded d'imp-ni.

Digaset en deuz Bonapar  
Pehini zo c'heaz hep he bar;  
Hen-nez en deuz bet dilennet  
Da zere'hel ar Jakobined.

Evel ar c'hoar ouz nerz ann tan  
Kemend a zo a bleg d'ezhan;  
Peuc'haat 'ra ar Rouaned,  
Ho lakat kun evel oaned.

Torret en deuz ho foellado,  
Teurel a reont ann armo;  
Ar peuc'h a zo gret ha sinet;  
Bro-C'hall enn eunn taol zo troet.

Ar c'halono a oa ienet,  
Ar sperejo dizunvanet,  
Gand ann tan euz he garante  
A domm; a unan anezhe.

Breman 'ta dre ann unvaniez  
E vefomp e kevredigez,  
Ne zo ken enebour ebed,  
Evel kerent omp lakaet.

Brezel kri a skuil gwad map-den,  
Ke d'ann ifern evit bikenn,  
Ne zistro mui war ann donar  
Da lakatar c'haov, ar c'hlae'har.

Tremenet out, ma reni ken,  
Pelloc'h nag hirvoud, nag anken,  
Gand ar peuc'h e vo die'haouet  
Ann noaz hag ar gwall e t'euz  
[gret.

Perak n'am euz-me ket aman  
Gerio nerzuz da zisklerian,  
Ann eur-vad zo hirie ozet  
Drear peuc'h d'hor bro glae'ha-  
[ret.

Frank a vo ar werzidigez  
Ha ne vo den pelloc'h diez,  
Evid kemprenna he vado  
War vor, war zouar, e peb bro.

Ar brezel en devoa lamet  
Kemend a ree hor joausted;  
Mes ar peuc'h, tad ann holl  
Ho digaso arre d'ar vro. [vado,

Enn douar 'oa pinvidigez  
Hag a zeraou en em ziskouez,  
Deuz he galon a vo tennet  
Ann aour, ann arc'hant 'oakuzet.

Gwelet vo ar mor goloet  
Dre holl gand al listri karget  
Deuz a bep seurt marc'hadourez  
Da zigaz d'ar Rouantelez.

Ar peuc'h a ia d'ober gwir vad  
Hag e pep renk hag e pep stad:  
Da bep hini 'vo distolet  
Ar pez a zo d'ezhan dleet.

Tud a vor ha marc'hadourien,  
Aterien ha mecherourien,  
Breman a vezo d'ec'h miret  
Pez hoc'h euz gant poan goneet.



Ann dudchentil, ar vinstred,  
Ne vezint pelloc'h heskmet,  
Dalc'het ha distolet a vo  
Da bep hini he holl wirio.

Ar peuc'h a gresk ar vertuio  
Hag a bella ann emganno,  
Mezur e ra ar garante  
Gand ann nesan ha gant Doue.

Ankouet ez eo ha distolet  
Ar c'hunuc'h enno tremenet;  
Unanet omp evel breudeur  
Ne glesfor ken komz a zroug-eur.

Ne vo ken a vrud, na dael,  
Ne vo ken a gaon, nag a wel,  
Ken a zismant, nag a anken  
Na laz entre ar gristenien.

Ar mor na deui ken da ruiñ  
Dre ar vuntrez 'oa war-n-hañ,  
Ann douar ne vo ken douret  
Gand ar gwad a sterio skuliet.

Al levenez, ann arvesto  
A zo o tigerin 'n hor bro,  
Ar c'hri hag ar sonio a joa  
A laka ann er da skiltra.

Ar c'herio holl a zo skleriet,  
Ha tan a joa dre holl zo gret;  
Ar binio skiltra dre ho zon  
A garg a zudi ar galon.

Ann holl a zo laouenaet  
Hag enn eur mor a joa beuet,  
Koz ha iaouank, braz ha bian  
Holl ez oar tennet 'meaz a boan.

Darn n'hellont ket chom enn ho  
[za,  
Trec'het ez eo war-n-he ho joa,  
Emaint evel tud sonezet,  
Dilavar, badet, saouzanet.

Ar Brezel en devoa kaset  
Pell deuz ar vro, hor mignoned,

Ar peuc'h a zigaso atre  
Kement vo chomet e bue.

Gand ar brezel 'oa lakaet  
Kalz enn eur sklavezrez kalet,  
Ar peuc'h a ia er prizonio,  
A dor, a frik ho chadenno.

Sklaved paour, sec'hit ho taero  
Dieubet oc'h deuz ho poanio,  
Ez et da vezan evel kent  
Gand ho pugale, ho kerent.

Ho kalon a zeraou tomma,  
Skulian a ret daero a joa,  
Oc'h arvestin hoc'h eursted  
Goude bezan keid gouzanvet.

Priejo en em frealzet,  
Ha breman n'em laouenaet  
Ez et da welet a neve  
Ar re ho deuz ho karante.

Breman ne vo ken diframmet  
A dre ho tivrec'h eur pried;  
Bebet er vrasan karante  
Ha doujet ann cil-egile.

Ann tado, ar mammo hastet  
A zo war eur mene savet,  
Evit ma welfaint kent aze  
O tont d'ar ger, ho bugale.

O joa l ho gwelet a reont  
Ha d'ho briata a redont:  
Deuz ann eil tu hag egile  
'Zo merko braz a garante.

Ober a reont eur banked,  
Pedin 'reont ho mignoned,  
Da zont gant-he da gen-drida,  
Ha da gemer lod enn ho joa.

Ah! ho bugale oa kollet,  
Ha chetu int atre kavet,  
Kimiad eta, anken ha kav!  
Pep kalon zo laouen ha skany.

Ne welet mu, c'hoarezed kez,  
Savet eo ho tristedigez;  
Ar peuc'h erod'ec'h ho preudeur  
Hag ho miro deuz pep droug-  
[eur.

Breman a hello pep hini  
En em rei holl d'he brederi,  
Ha meran e peuc'h he vado,  
Kuit a wall, ha kuit a gollo.

Al lezen gristen 'oa lamet  
Hag hi ministred harluet;  
Hogen ar peuc'h ho digaso  
Da ren a-neve 'barz ar vro.

Ineo mad, deuz ho kalon  
E teue buanado don,  
Aboue ma oac'h dispartiet  
Deuz ho Pastor, ho Ministred.

Arru ez int, et d'ho gwelet,  
Ho c'halon a zo entanet,  
Gand ar c'hoant da rei d'hoc'h  
[ine  
Pell 'zo war iun, bara 'n ele.

Selaouet, denved dianket,  
Mouez ho Pastor, et d'her c'havet,  
N'ho pet doan rag ar rebecho,  
Kunvezel holl eo he gomzo.

War he zaoulin ez ai gant joa  
Evit ho samman war he skoa  
D'ho tougen holl gant-hañ d'hedi  
D'ho pastur ha d'ho frealzi!

Seul-vu 've bet braz ar c'blenved,  
Seul-vu e prizer ar iec'hed,  
Seul-vu ez omp bet reuzendik,  
Seul-vu e vefomp gwenvidik.

Ar c'hosan n'en denz ket gwelet  
Biskoaz kement a wad skuliet:

Meneio a gorfo maro  
A zo bet gret enn emganno.

Kalz 'zo enn emgann gouliet,  
Kalz enn eur mor a wad lazet,  
Hag ho deuz lest dre ho maro  
Kalz a c'hlaç'har hag a ganvo.

Nag a dad, a vamm hag a c'hoar  
Nag a vreur a zo e glac'har!  
Nag a bried 'zo ankeniet,  
A vogel diberc'hen laket!

C'houi 'zo 'barz ar brasanenkreuz,  
Kalon, kalon, bugale gez!  
Goulennit holl ann habaskded,  
Eur mad all d'ec'h a zo ozet.

Bezomp oll karget a drue,  
Pedomp, ma breudeur, 'vid ar re  
Ho deuz bet skuliet ho holl wad  
Evit difenn al lezen vad.

Gloar da vikenn d'ec'h, Doue  
[mad,  
Breman hag ebarz ann hir-bad;  
Digasaret ar peuc'h 'n hontonez,  
Kemeret hor meuleudigez.

Mil bennoz d'ec'h, Prinsez ann  
Kargetez oc'h bet a drue, [Ee,  
O welet o redeg ar gwad  
Deuz ho pugale hegarad!

C'houi hoc'h euz skoazeller  
[meurbed  
D'ar c'hras kaer 'zo d'imp diga-  
Enn eur atizan menosio [set,  
A zioulded d'ann holl boblio.



Er bemzek a C'houere, 1801, e oe great e Pariz, eur *C'honkordad*, pe eur gevredigez, e tre ar c'henta *Konsul* hag ar C'hardinal Spina, kannad ar Pab Pi VII : ar gevredigez-ma, pehini ne oe embannet nemet d'ar bemzek a Ebrel, 1802, a reaz chana ar elhism hag ann heskin, a lekeaz paea evit mad eur leve d'ar c'hloer, ha digas Eskibien ha beleien e pep leac'h dre ar vro.

Napoleon ne hevele beza great ar peoc'h hag ar gevridigez-ma nemet evit krevaat gwel he impalaerd : hen a oa ann Aotrou hag ann holl, ken ann dud lik, ken ar c'hloer, a renke plega ha dont d'ober d'ezhan feiz ha gwazoniez. E keit-ze Jorj a zistro euz a Vro-Zaoz hag a ia da Bariz evit esaat hen diskarr : mont a ra he daol da fall ; paket eo he unan hag he chouaned gant-han, ha barnet int da veza dibennet. — E deiz ar varn, Thuriot, unan euz ar Varnerien, a ra da Jorj eur goulemn hag a zoueze ann holl : Jorj a sav hag a lavar d'ezhan : — C'houi hoc'h euz, eme-z-han, roet ho mouez evit maro ar Roue ; ma vijac'h kouezet dindan va dorn, e vije bet great buhan ho proses : grit er giz-ze d'io-me. — Derc'hent he varo e roer d'ezhan eur paper ha ma her zin, ez euz trugarez evit-han, hag evit he re. Digoret eo ar paper : Jorj a lenn : — Enn hano ann Impalaer..... — D'ar c'homziou-ze e ro ar paper d'ar Solier, hag o trei ouc'h he chouaned, e lavar d'ezho : — Va mignouned, greomp hor peden. —

Antronoz he greent c'hoaz war ar chafod.

Jorj a bign war-n-ezhan hep bugad, evel ivez hep kridien. Goude beza briateet Pikot, Rojer, Koster-St-Viktor, Tamerlan, Jaiaut, Burban, ar Mersier, Dukorp, Iann Kadoudal, al Lann ha Merill, pere a le d'ar maro gant-han, e fell d'ezhan

ho c'halounekaat c'hoaz eur weach. Goulenn a ra ma vezo dibennet da genta : na helle goulemn ken trugarez, ha derc'hel a ra kre d'ezhi, evit diskouez he fealded d'he vignouaned.

E heure deiz ar maro, pa oe goulennet digand ar c'habitan Labord, pehini a oa ouz ho evesaat, kelo euz a Jorj, — kousket en deuz, eme-z-han, enn noz-ma, mui e peoc'h egedun-me. —

Kadoudal a varvaz evel m'en devoa kousket.

Evel-se e varvaz d'ann oad a bemp ploaz ha tregont, ann lenn ze pehini en devoa bet digand he grouer, ann nerz hag ar galloud a ra ann dud talvoudek, ar penn pehini ho savemel, hag ar spered pehini ho diskouez. Jorj a oa en em saet anezhan he-unan. E pad ann unnek vloas dispac'h, ne lezaz morze ann armou : en em ganna a reaz dre holl, bepred, hag er penn araok.

Ann danevelerien ho deuz re gomzet enep ar penn-ma euz ar chouaned : keuz a vezo eunn deiz, da veza saotret gant drouk-komziou, eur vuez ker kaer ha ker glan evel hini Jorj.


Jorj hag he vignouaned a oe dibennet e Pariz, er bemp var-n-ugent a viz Mezeven, 1804.

Perez Gwillemot, mignoun da Jorj, a fell d'ezhan derc'hel da emganna Bonapart. Paket eo e parrez Plaudren, ha kerret gant-han Rio, ha Thiez, belek a ger Auffret : ho c'has a war da Wened, hag eno Gwillemot ha Thiez a zo fuzillet, e deron miz Kerzu. Euz ann nao ha tri-ugent chouan pere, 1801, ho devoa heuliet Jorj e Bro-Zaoz, pemzek a oe lazet dre urz Bonapart : ar re a glaskaz goude distrei da Vreiz, a oe lazet ivez evel-t-ho. Al lazeresiou-ze a zalc'haz epad renn ann Impalaer. Bro-C'hall, evel savet gand eur gourventen a c'hloer, n'e devoa ket a amzer da c'houlenn digant he mather, kount euz ar gwad a lekee da reddek.



# AR VRETONED

HAG ANN IMPALAER.



Napoleon deuet Impalaer, a glaskaz gounid ar Vretoned hag ar chouaned all, dre largetesiou braz : ann dud-ma a oe anaoudek euz ar madoberou-ze, hag a lezaz ann Impalaer nevez da ren Bro-C'hall enn he c'hiz; mont a rejont zoken d'hen heul evit her skoazia da ganna ann holl vroiou-all. Pa anavezaz Napoleon ho c'haloun hag ho fidelled, ho c'hemeraz holl evid ar brezel, ha peurgedged ar Vretoned, pere, evel m'hel lavare, ne wient ket dont war ho c'hiz. He emgannou a oa pemdeziek hag a dennaz hep dale euz ar vro, ann holl dud hag ann holl vad a oa enn-hi : kement-se a lekeaz ar chouaned, ha zoken ann dispac'herien goz, da skuiza gant-han : sevel a rejont kuzul d'hen diskarr. E 1809, pa zigouezaz tro reuzeudik Spagn, e kredjont e oa mad ar mare d'hen ober, hag e labourjont evit-ze, pep-hini euz he du. Taol ar chouaned breton a ieaz a grenn da fall : ar-rema ho devoa galvet euz a Vro-Zaoz, ofise-

rien evit ho lakaat war ho fenn. Napoleon en devoe anaoudegez euz ho donedigez e Breiz, hag a reaz kerkent redek war ho lerc'h : paket a oent holl ha kaset da Wened e pe leac'h e oent fuzillet, enn niver a zaou-ugent.

Na vije ger euz al lazeresiou-ma : ann Impalaer ne grede ket en divije da gounta gant den, ha den n'en divije kredet ivez goulenn kount ebed digant-han. Bro-C'hall a oa holl enn he c'hourc'henn : dleout a rea rei he diveza diner hag he diveza map, evit her skoazia da ziskarr ar rouaned euz ar gwennou kosa, ha da lakaat enn ho lec'h, ar re ziveza euz ar Bonaparted.

Ann den-ze en devoa great enn daouzek vloaz kement a draou ker burzuduz, ma arruaz eur mare e pehini e krene Bro-C'hall dira-z-han, evel dirak eur c'hastizer digaset gant Doue : den na grede na komz na flach. Ann tav-ze euz ar C'hallaoued, pehini a oa war eunn dro, eur wazoniez hag eunn heuz, a vezvaz Napoleon : en em gredi a reaz ganet evit nevezi ar bed. Etro divez miz Mae, 1811, e eure kemer e Rom, ha kas evel prizounier da Savon, ha digas goude da Vro-C'hall, ar Pab Pi VII pehini en devoa he zakret Impalaer, enn eil a viz Kerzu, 1804 : didrona a eure Bourboned Spagn ha re Naplez, ha trei penn da holl rouantelesiou ann Europa : goude, evel eunn eil Aleksandr, e teuz enn he benn gounid ann Inizi.

Netra na helle dere'hel ar waz red-ze : mes chetu



ma teuaz enn eunn taol, e 1812, ar skourn, ann dienez, ann emgannou hag ann digaloun da goll, e gweleac'hion ien ar Rusia, ar c'haera arme a oa bis-koaz gwelet war droad. Euz a bevar c'hant mil den eat d'ar vro-ze, ugent mil a boan a zistroaz d'ar gear : eunn niver braz ar Vretoned iaouank a varvaz enn argaden reuzeudik-ze. — Eunn nebeut goude, holl rouantelesiou ann Europa en em unanaz enep Napoleon : heman a gerz ivez hep dale da benn he vrud : beza ez eo koll gounid. War-ze Loeiz XVIII a zigaz da Vreiz ar jeneral Bar, ar Gwern ha Droz evit la-kaat ar chouaned da sevel : paket int er mor gant eul lestr gall, pa oant o vont da zouara, ha kaset ker-kent da enez Houat : eno int lazet, kuit a varn, enn daouzek a viz Kerzu, 1813. Kement-ma a harzaz ar c'heflusk e Breiz, mes n'hen harzaz ket e leac'h all. —



## DISTRO

### AR VOURBONED.

— 1814 —

### KENTEL.

Napoleon a oe diskaret diwar droun Bro-C'hall enn deve-siou diveza euz a viz Meurz, 1814. Goude ma en devoa kollet he arme vraz e kreiz ann erc'h hag ar skourn e bro Rusia, Rouaned ann Europa en em unanaz holl enn he enep. Goulenn a rejont ar peoc'h digant-han; n'he roaz ket d'ezho. Stroll al lezenourien, pe er c'hiz all *ann Asamble Lejislative*, a gemer war-n-ezhi da lavarout d'ezhan en em glemm ar vro, didudet ha diarc'hantet holl gant-han; hag ar stroll a zo torret kentiz. Pennou ar vro, o welout ne oa netra da lavarout da eunn den dallet gand he rogetez, a droaz kein d'ezhan. Ann armeou a ziaveaz a c'hrounn Paris; Napoleon a zired evit he dieubi; re zivezad eo. Paris, dre eunn diviz-brezel, e deuz digoret d'ann armeou; hag ar Senad, gand ar pennou all euz ar vro, ho deuz diskleriet ne d-eo mui Napoleon Impalaer. Napoleon oc'h en em welout dilezet gand ann holl, a ra dilez euz he gurunen e Fontainebleau, ha Loeiz XVIII a zo anavezet Roue gand ar C'hallaoned. Napoleon he-unan a roaz d'ezho ann ali d'he gemeront : « Brema, eme-z-han, pa eo



» achu pep tra evid-oun, ar gwella tra oc'h euz da ober eo  
 » gervel ar Vourboned. » Ne ket ar Zaozon eta na Rouaned  
 ar broiou all eo hon deuz rediet ac'hauomp da gemer  
 adarre ar Vourboned ; ni hon-unan eo hon euz galvet Loeiz  
 XVIII da zont war he dron. Hag ar re ho deuz great ac'hou-  
 devez kemend a drouz, o klask rei ann enep da gredi d'ar  
 bobl, na lavarent ket ar wirionez.

••••• XXXVI. •••••

## AR PEOC'H.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : Doue a zo war ann aoter. — 85.

Gand ar glao ha gand ann avel  
 Ann ed a zo bet pleget,  
 Her gwelet a rer o sevel  
 Kerkent ha ma int torret :  
 Savet hopenn, gwir C'hallaoued,  
 Trugarekaet Doue :  
 Hirie ar gurun 'zo laket  
 War benn sakt ho kwir Roue.

Deut da ankouat hoc'h anken,  
 Ha dilezet ho klac'har,  
 N'em oc'h mui dindan al lezen  
 Deuz hoc'h impaler digar ;  
 Napoleon 'zo diskarret,  
 Renket en deuz koll d'he dro ;  
 Re bell siouaz en deuz renet,  
 War-n-omp-ni, ha war hor bro,

A greiz ma oa galloudusan  
 Eo kouet dindan he zamm ;  
 Pa vezeur savet huclan,  
 Neuze 've ar brasan lamm.

Tro-war-dro ann holl Rouane  
 A sponte holl dira-z-han,  
 Leun a dristidigez hirie  
 Ez eo hen a renk plegan.

Mil ha mil bennoz d'ar Zaozon,  
 Ha d'ar Rused kement all,  
 Rak d'ar mac'her Napoleon  
 Ho deuz bet roet he stall ;  
 Kaset ez eo d'eunn enezen  
 Pell braz o kreiz ar mor don :  
 A-ioul, ma raio pinijen  
 Ha m'he graio a galon !

Ke kuit eta, Napoleon,  
 Ha ne deu mui war hon tro ;  
 Kaz gen-ez da gonskription,  
 Mant ha gwastadur ar vro :  
 Lezen doanuz ha milliget,  
 Gwasoc'h eged ar vosen,  
 Gand ann diaoul out bet savet,  
 Ke gant-han evit bikenn.

Piou a hellfe poellan bikenn  
 Ar goad en deuz bet skuilet !  
 Enn eur bloaz, trizek kant mil  
 D'ar maro en deuz kaset. [ den  
 Ma ve dastumet ann holl c'hoad  
 E ve karget eul lenn vraz,  
 Ha gant daero ann daoulagad  
 E ve karget brasoc'h c'hoaz !

Evit kastian hor gwallo  
 Done en deuz bet lezet  
 Da rena pell he lezenno,  
 Da waskan ar C'hallaoued.  
 Kement-se hor boamp dellezet  
 Dre hor pec'hejo, allaz !  
 Hon Roue boamp merzeriet  
 Ilag hon Rouanez, siouaz !

Tud C'hall, henvel ouz paganed,  
 A zilezaz ho c'hrouer,  
 A harluaz he vintred,  
 Ilag a bilaz he oter :  
 Evel-se dre wir wanerez,  
 Kaer ho deuz bet hirvoudin,  
 Bonapart ha Robersperez  
 Eo bet red d'he gouzanvin.

Goude ugent vloaz dizeurio,  
 Done enn he drugare,  
 A zeu da sec'han hon daero  
 Enn eur rein d'imp hon Roue :  
 Breure da Loeiz c'houezekved,  
 Mab bihan da sant Loeiz,  
 Dre he vertu hag e spered,  
 Ar c'hentan den a Bariz.

Na ma teuffe tud dispac'het  
 Dre zizeur c'hoaz da sevel,  
 'Vit klask brellan hon eurusted,  
 Ni a rai d'ezhe tevel,  
 Rak ni 'zo reiz d'en em gannan  
 'Vit hon Roue hag hon tad,  
 Ha da rein evit hen harpan  
 Hon bue a galon vad.

Breiziz, a greiz hor c'hhalono  
 Pedomp mad kroner ar bed,  
 Da otrean he vennosio  
 D'hon Roue muian karet,  
 Eur vue hag hir hag euraz  
 'Vit m'hellomp gant trugare,  
 Enn eur peuc'h ha braz ha paduz  
 Krial : *Bevet ar Roue !*

— SKLERIDIGEZ. —

— Distro ar Vourboned, eme ann dispac'her braz Kar-  
 not, enn eur skrid great e 1814, a roaz dre Vro-C'hall, le-  
 venez d'ann holl. Digemeret a oent gand eunn diskarg a ga-  
 lon diez da lavarout. Ann dispac'herien goz, pere a oa bet  
 gwasket gant Napoleon, gwaz eget ar re all, a gemeraz ho lod  
 el levenez voutin. Ann holl, hep kemm, ho devoa kement  
 gouzanvet, ken na oe kavet den na vije, e gwirionez, karget  
 a lavenez. —

Ar gonskription a denne bep bloaz euz ar vro ann dekved  
 euz ann dud, ha pevar ugent, pe gant mil den iaouank a



vije diskarret dre reiz, evel ar gwez enn eur c'hoad lekeat e trouc'h reizet. Mes pa oe great evel mecher euz ar brezel, neuze ann holl dud iaouank a oe diskleriet soudarded a zalek ann oad a driuec'h vloaz; holl e oant rediet da gemer ann armou, hag holl e oent lazet.

Diouc'h ar jedou ar bihana, e wleur e oe lazet, epad ren Napoleon, tri milion pemp kant mill Gall, hac onc'h penn pevar milion euz ar rouantelesiou all. — It neuze da veuli gounidou braz ann den dispar-ze!



## ANN DIVERR

### EUZ A HISTOR AR REVOLUSION.



— 1814 —



#### KENTEL.

Ebarz ar ganaouen a heul en em gav ann histor euz ann traou tremenet er vro abaoe 1789, bete miz Mae, 1814. Ann Aotrou ar Rous, pehini en deuz savet ar ganaouen, a lavar penaoz ni Bretoned, n'hon euz ket gwelet hon trevajou nag hon tiez devet dirak hon daoulagad, na stignet enn hor bro ann armeou-ze da heul pere e teu bepred reusiou braz. Ann dra a zo gwir evit eur c'horn bennak a Leon, a Dreger hag a Gerne, mes dre holl dre Wenned e tigwezaz, evit lavarout mad, ann holl reusiou a bere e komz ar ganaouen.

••••• XXXVII. •••••

(IEZ LEON).

WAR DON : *Jezuz enn eur vag, etc.*

Jezuz enn eur vag a bignaz  
He ziskibien hen heuliaz :  
Eur stourm ar brasa a savaz  
Hag ar mor a gounnaraz :  
Jezuz er vag a oa kousket,  
He holl ziskibien spountet  
A gri hag a deu da bedi  
Ho Mestr d'ho savetei.

Jezuz a gomzaz ; war he c'her  
E troaz holl ann amzer ;  
Ar mor a zioula ; ann avel  
A deu ivez da devel :  
He ziskibien souezet braz  
E tre-z-ho a lavaraz :  
Piou eo ann den-ma ker santel,  
Mestr d'ar mor ha d'ann avel ?

Bro-C'hall, henvel odc'h bag  
[sant Per,  
En em well a bell amzer  
Dismantret gant avellou foll  
Ha darbet d'ehi en em goll :  
Eur vanden tud trevariet  
Euz ann ifern didec'het,  
A deu da zilezel Doue,  
Hag a zibenn ho Roue.

E Pariz ann *Asambloou*  
Ha dre ama ar *C'hlabou*,  
Henvel mad ouc'h korventen-  
[nou,  
Labour ann drouk sperejou,

Henvel ouc'h bleizi kounnaret  
Dre Vro-C'ball en em skignet,  
Na c'houennont, leun a ziboell  
Nemet dismantr ho brezel.

C'hoantek-braz int holl da vle-  
Nefell da nikun plega, [nia  
Ar verc'h, ar vamm, ar mab,  
[ann tad

A zianzae holl ho gwad :  
Abarz lein ez oc'h tamallet  
Abarz koan ez oc'h barnet :  
Hag a gantchou noz ha mintia  
Ez a tud d'ar c'hillotin.

Ar vugale hon euz gwelet  
Ouc'h ho zadou dispac'het,  
Ar priejou dispartiet,  
Ar vleien demezet,  
Brezel, tan gwall ha lazerez  
Dre holl er rouantelez,  
Da ober pep tra *liberte*  
Nemet d'azeuli Doue.

Madou ar re vraz a werzer,  
Ho maneriou a zever,  
Tec'hel a renkout euz ho bro,  
Barnet ez int d'ar maro,  
C'hoar ar Roue hag he bried,  
Hon Roue muia karet,  
Mez am euz oc'h hel lavaret,  
E Pariz zo dibennet.



Gwelet hon euz bet a wechou  
Ann tadou hag ar mammou,  
Dionc'h ho bugale, souldarded,  
Eur weach dispartiet,  
Anat ma oa n'ho gweljent ken  
O tistrei d'ho bro bikenn,  
O teraoui larout gant ho  
Holl bedennou ar maro.

Gwelet hon euz ar bastored  
Euz ho farresiou kaset,  
Serri, gwerza ann ilizou  
Ha kevret ho leveou ;  
Gwelet hon euz ar veleien,  
Henvel ouc'h torfetourien  
Klasket, dalc'het ha bac'hiet  
War ar chaffod dibennet.

Daon bab santel hon euz gwelet  
O c'houzanv poanion kalet,  
Kollet gant-ho ho holl vadou  
Ha stlejet dre ar bac'hion,  
O wela war hon dallentez  
Ha naren war ho danvez,  
O wela poanion gouzanvet  
Gand ann iliz heskinet.

Diskibien Jezuz o veza  
E taill braz da bensea,  
A gri hag a zeu da bedi  
Ho mestr d'ho savetei :  
Jezuz a glevaz ho feden  
Ha kerkent a c'hourc'hemenn  
D'ar mor ha d'ann avel terri,  
Ha dalc'het int da senti.

Evel-se ivez, Kristenien,  
E santelez ho feden,  
E kichen ar groaz daoulinet  
Noz ha deiz ho deuz kriet :  
« Jezuz, kollet ez eo Bro-C'hall  
» Ma na blijit ket diwall  
» Ha teurveza 'n ho trugarez  
» Sellout out-hi a druez. »

Jezuz a gomz, ha pa gomzaz  
Hon dizeur a ehanaz ;  
Ne weler pelloc'h a vrezel,  
Ann dud fall a renk tevel :

Hor spout e joa a zo troet,  
Pep tra d'he leac'h zo kaset ;  
War he dron bon Roue pignet,  
Ec'h arru ar sioulded.

Ann diskibien zo souezet  
O welet ar mor tavet,  
Ann avel ker buhan kouezet,  
War ger ho Mestr benniget :  
Ha ni 'barz e Bro-C'hall ive  
Meulomp ann Aotrou Doue,  
Ne d-eo ket labour den ebet  
Pez zo hirio arruet.

A enep Bro-C'hall dispac'het  
Gwelet Rouanez armet,  
Kement-se hon euz bet gwelet  
Abarz hirio arruet ;  
Mes ho gwelet gounidek holl  
Ha ze hep donet d'hor c'holl :  
Ah ! kement-se zo estlammuz,  
Leveromp mui, burzuduz.

Mes ho gwelet oc'h hor gwalc'hi,  
Pa hellent en em venji,  
Hag ankounac'hat ho c'hollou,  
O tevel war ho mizou,  
O parae hor goulion,  
Hep arvesti hor gwallou,  
Hag o tilezel krenn pep tra  
Pa hellent goulean ranna.

Mes gwelet Loeiz triouec'hved  
War dron kaer Bro-C'hall pi-  
[gnet,

Diwar b'hini oe diskaret  
He vreur Loeiz c'houezekved,  
Hen pehini en deuz renket  
En em guza ha tec'het,  
Hen pehini oa dibourve  
A arc'hant hag a arme.

Hen pehini hon euz gwelet  
Ha sklaket ha disklaket  
Euz ann eil bro 'barz eunn eben,  
Ha rediet da c'houlenn  
Repu ha bara d'he holl re  
Ouc'h he vreurdeur rouane,

Kollet gant-han ged ha ged all  
Da welet bikenn Bro-C'hall.

Mes donet d'ober trugarez  
D'hon holl dizanaoudegez,  
O ankouat he zizeurion  
Evit sec'hi hon daelou ;  
Jezuz ouc'h he dad a c'houlenn  
Trugarez e vourrevien ;  
Loeiz ouc'h Doue 'n deuz mennet  
Trugarez ar C'hallaoued.

Mes gwelet ar peoc'h sinet  
Ha ker buhan aotreet :  
En em welet hanter gollet,  
Ha da da goueza, savet ;  
Sonjit, lavarit peb unan  
Ar peza a blijio gant-han,  
E kement-ma evid-oun me  
A wel ann dorn a Zone.

Bezit anaoudek, Bretoned,  
Bro-C'hall a zo dieubet ;  
Gouennit ouc'h ho pugale  
Distroet euz ann arme,  
Hag ho c'hlefot o lavaret  
Ez omp eur bobl espernet,  
N'hon euz gwelet nemed a bell  
Ann dispac'h hag ar brezel.

Trugarekaomp, Bretoned,  
Ann Doue mura caret,  
Allaz ! renket hoc'h euz, gwir e,  
Diweri ho pugale,  
Mes n'hoc'h euz ket gwelet ho  
Goloet a dud varo, [pro  
Lazet ebarz ann emgannou,  
O vrcina war ann henchou.

N'hoc'h euz ket gwelet ho tiez,  
Ho feen hag hoc'h holl danvez,  
Dirak ho taoulagad devet  
Hag evit bepred kollet :  
N'hoc'h euz ket gwelet ho pugel  
Dibennet enn he gavel,  
Ar vere'h digant he mamm la-  
Arc'hrek digant he fried. [met,

N'hoc'h euz ket gwelet hoc'h  
Flastret gant ann armeou, [edou  
Diwar ho gar, e glaz troc'het,  
E tre ar c'hezec rannet,  
Eun eunn devez hep ken kollet  
Kement ho poa-hu hadet,  
Ha dalc'het da devel ouc'h penn  
Ho kollou hag oc'h anken.

N'hoc'h euz ket renket, Breto-  
Evel kalz a Spagnoled, [ned,  
En em guza 'barz ar c'hevion,  
Redek dre ar menelion,  
War ho kein ho pugale samet,  
A bouez ann dorn ho pried,  
O krena evit bec'h enor,  
He zalvouduza tenzor.

N'hoc'h euz ket gwelet, Breto-  
Eun hor Breiz iz-diskignet [ned,  
Ann armeou-ze gant pe re  
E ten reuz a hep doare :  
Ya gwad a sklaz, va dorn a gren,  
Dinac'h a ra va fluen  
Skriva kement a zizeurion  
Ha kemend all a wallou.

Perak gant Doue eo plijet  
Hon esper, ni Bretoned ?  
E pad ann amzer dremenet  
Feal d'he lezen bepred,  
Hon euz, e gwall euz hontanvez  
Ha zoken euz hor buez,  
Her servichet gant lealded :  
Dre ze omp bet espernet.

D'ann daou lamm e teu ar c'hlen-  
[ved,

Gorrek e kustumm tec'het :  
Nebeut ha nebeut e saver,  
Eun eunn taol e tiskarer ;  
Hon dizeurion zo deuet ive  
Evel eur gaouad arme ;  
Hogen ho aoza na heller  
Nemet gant kalz a amzer.

Skoazellomp Doue, Bretoned,  
Er peza en deuz deraouet :



'N hor bro mar gwelomp hon  
 Hag ar sioulded ivez [Roue  
 Kanomp meuleudi da Zoue,]  
 Bezomp feal d'hon Roue,  
 Sentomp ouc'h he holl lezennou  
 Ha paeomp ann holl wirciou.

Evel hor Mestr her servichimp,  
 Evel hon Tad her c'harimp,  
 Bet pell reuzeudik he-unan  
 E oar petra ez eo poan,  
 Kefennet mad gant he groasiou  
 E tongo lod hor poaniou :  
 Everusted ar C'hallaoued  
 A zo anat 'vit bepred.

Doae a zo habaskeet,  
 Prizet en deuz hor c'hlevet ;  
 Tadou ha mammon enkrezet,  
 Ha c'houi, gragez glac'haret,  
 Sec'hit, sec'hit holl ho taelou,  
 Echu eo ann dizeariou,  
 Ne viot ken dispartiet  
 Diouc'h ho pugel, ho pried.

Eur *Republik* hon euz gwelet  
 Goude Loeiz c'houezekved,  
 Eur *C'honsul*, eunn Impalaer  
 Epad eur mare amzer ;  
 Hol laket ho deuz da grena,  
 Ah ! petra int-hi brema ?

Pep tra a dro 'barz enn dro d'e-  
 [omp,  
 Sonjomp er pez a welomp.

Ar rouaned hon euz gwelet  
 Didronet, er vac'h paket,  
 O koll ha frankiz ha danvez,  
 O koll zoken ho buez.  
 Savomp eta hor sperejou  
 Holl e trezeg ann envou ;  
 N'ez euz nemed eno hep ken  
 Madou, dudi hep anken.

Gwerc'hez Vari, Mamm a druetz,  
 C'houi d'hor bro difennerez,  
 Mar selaouit ar bec'herien,  
 Klevit ivez va feden :  
 Teurvezid skoazella bepred  
 Gwad-roeal ar Vourboned,  
 Buez hon Roue difennit,  
 Diouc'h pep gwall hen diwallit.

Ankounac'haomp, Bretoned,  
 Ar gwall amzer dremenet,  
 Evel breudeur en em garomp,  
 Evit hon nesa pedomp ;  
 Ha ma teufe tud dispac'het  
 Da glask trei ar pez zo gret,  
 Ni, bezomp feal da Zoue,  
 Bezomp feal d'hon Roue !

— SKLERIDIGEZ. —

Ann Aotrou ar Rous a oa ginidik a Sant-Thegonnek. Pa darzaz ar Revolution, e tinac'haz al Le, hag e tec'haz e Spagn. Distrei a eure pa zeuaz ar peoc'h, hag e oe lekeat da Bersonn e Plouzevede : arru war ann oad, e reaz ann dilez euz he garg, hag en em dennaz da Gastel-Paol, enn eunn ti a arzao a zo eno evit ar veleien : eno eo maro, hirhoalet.

Ar gargaouen a zo bet roet d'in gand ann Aotrou R. Tangi, Kure e S.-Thegonnek, e 1844.

**ARDAMEZ.**

Dleout a rajenn beza choumet hep mont pelloc'h eget distro ar Vourboned, e 1814, evel m'az eo douget e penn va leor ; mes kredet am euz e oa mad lavarout ivez eur ger war ar *C'hant-Deiz* : ez ann eta d'hen ober.



**DISTRO NAPOLEON,**

PE

**AR C'HANT-DEIZ.**



— 1815 —



Napoleon a-unan gand ar vrezelidi hag ar re a oa bet mistri dindan-han, a ziret euz a enez Elb, a drez Bro-C'hall enn eul lamm, hag a arru e Pariz, enn ugent a viz Meurz, 1815. Eunn embann a zeskas kerkent d'ar C'hallaoued, penaoz ann Impalaer a oa arru a-nevez enn ho zouez. Ar c'hellou-ma ne eure plijadur e Breiz, nemed d'ann dispac'herien goz pere, bepred asrec'huz diwar benn ar madoù ho devoa dastumet, a sonje e tenjent d'ho c'holl, mar choumje ar Vourboned da ren. Evit-se e weljont gant joa Loeiz o koueza, ha Napoleon o adsevel : digemer a rejont eta hema euz ho



gwella, ha pa ho devoa tapet a nevez ar voul, he ruiljont ker kre ha biskoaz, hag he zaoljont ker kent gand ann *Aristokraded* : ar re ma n'ho devoa na da gomz na da flach ; evit ann distera tra e vijent raktal dastumet e tre peder moger : evel-se Paillart koz hag he vab, ho daou euz a Landreger, a oe kaset d'ar hac'h da St-Briek, evit beza bet tamallet da veza bet oc'h ober kokardennou gwenn, e maner ar Rumin.

Ann holl heskinou-ze, great hep ken dre gasoni, a lekeaz drouk vraz enn Aristokraded, ha chetu m'en em venjont ker gwaz ha biskoaz war ho heskinerien. Meur a *federe*, evel ar C'haer, mear e Peurit-ar-Roc'h, a oe lazet gant-ho, tu-ma, tu-hont dre Vreiz : ne heller ket, evit gwir, ho meuli e kement-ze holl, rak mont a rejont aliez re bell ; mes kounnaret a oant, ha kounnaret a oat out-ho : ar vell a oa taolet, ha *federe* hag *Aristokrat*, pep hini a skoe euz he wella, hag a gase d'he du : pep kear roealst, evel Landreger, en em ganne ouc'h eur gear all *federe*, evel meur a hini pere a lezann da henvel : soniou ar re gaera a savet ivez a bep tu evit en em woapaat hag en em argadi ann eil e-gile : Heligoin, Kozannet, ha meur a roealst all euz a Landreger, a savaz re ar braoa.

Chetu ar pez a zouge c'hoaz ann Aristokraded d'en em sevel kement enep Napoleon. Gwelet a reant, evel ann holl dud fur, penaoz he zistro aiea da zigas eunn eil gwech, ann ermezidi ebarz ar vro, ha dre eno da veza abek da skuilla anevez kalz a wad, evel ivez da garga ann holl a reusion hag a vijou : evit diarbenna kement-se holl, e kredjont e oa euz ar gwella labourat da ziskarr ho-unan Napoleon. Evit-ze Sol a C'hri-solez, ar jeneral Brec'h, Markiz La Boessier, ann daou Gadoudal, ann daou Willemot, ann Thiez, Penn-ar-Ster, ar Goebl, Dagorn, Koroller, Rohu ha meur a hini all, e tu Gwenned ; — ann daou Rumin, Kourzon Ville-Hellou, Kozannet ha Topin, e tu Landreger ha Lannuon ; — Kourzon-

Ville-Valliou, Karfort, Trogoff, Chef-du-Bois, Kergaff, Kirc'h, ar breudeur Bak, Helloko hag he bevar map, ar Moen, e tu Sant-Briek ha Kintin ; — Pont-Briand, e tu Dinan ha Lamball ha Kount Kornouail, e Kerne, a c'halve d'ann armou paotred ar broiou-ze.

Enn dri war-n-ugent a viz Mae, eiz kant gwennedad en em zstum enn Alre, hag a emgann antronoz pemp kant *Bonapartist*, hogoz war al lec'h e pehini e oe, e 1793, merzcriet re wenn Kiberon : enn dregont e kemeront Ploermel ha Josselin, ha Redon, er bevare a Vezeven : Langourla a oe lazet dirak ar ger-ma. D'ann nao, Sol, gant tri mil den, ha ia dre Vuzillak da gavout ann aod, e pelec'h e thie ar Zaozon digas d'ezhan arc'hant hag armon. Ar jeneral Rouseo a zeuaz evit d'hen diarbenn, mes Sol hen taol war he c'hiz.

Emgann Alre hag hini Muzillak a oe goneet dre skoazel skolaerien skol vraz Gwenned. Ann dud iaouank-ma, enn ni-ver e tro eur pevar c'hant, a gemeraz ann armoa pa zistroaz Napoleon. Lakaat a rejont enn ho fenn Nikolaz, Kadoudal, ann Thiek, Rio, Gamber, Margadel ha Bainvel ; Nikolaz a oa ar c'habitan hag a oe lazet hep dale ; Bainvel a gemeraz he leac'h. Enn emgann Muzillak e kolljont kalz euz ho re ; eno e oe darebet d'ezho en em rei ; poultr ho devoa, mes n'ho devoa mui a volodou : ar vistri a oa nec'het braz, pa oe gwelet o tilammout war ann dachen, gragez ha merc'hed Muzillak : ar re-ma, o veza anavezet ezomm ho difennerien, ho devoa teuzet kerkent ho loaoui hag ho flajon stean, hag a oa diredet da rei bollodou dre holl e leac'h ma tistane ann tennou : kentraoui a reant ivez ar stourmerien, ha dre ho zrugarez e oe roet ar chas d'ar *Bonapartisted*. Ar re wenn a hellaz er giz-ze, arruout e treiz Folleu, e pelec'h e kemerjont digant al listri Zaoz, tri mil fuzil, daou ganol, arc'hant ha kalz a draou all.

E keit ha ma kanne Gwennediz ar *Bonapartisted*, paotred



Treger, Sant-Briek ha Kintin ho c'hanne ivez e parrez Lamalhour, e tal kastel Kloz-Madeuk : e keit-ze c'hoaz, Pont-Briand a gemere war-n-ezho Plankoet, Jugon, Ploubalai, Matignon hag ann arvor holl, euz a zalek Dinan bete Lamball. Goude ann taoliou kaer-ma, Kourzon ha Pont-Briand a ia gant ho zud d'ann Daouhouet, e pe leac'h e tie listri Zaoz dont da zigas d'ezho, arc'hant hag armou : enn eur arruet e kannont a nevez ar *Bonapartisted*, deuet da cnebi out-ho, hag ho rediont da choum eno war eur gree'hen evit ho gwe-lout o kemer he garg digant ar Zaoz. Goude beza he c'hemeret, en em dennont sioul war zu Kintin. Ar jeneral Fabr a ieaz abarz nemeur da redek war ho lerc'h, gant gwardou Sant-Briek, ha re meur a gear all, diredet d'her skoazia : ar chouaned a oa e S<sup>t</sup>-Jili, hag e S<sup>t</sup>-Juluan, diou gerik pere a zo war hent braz S<sup>t</sup>-Briek da Gintin : o welout ec'h arruet war-n-ezho, en em lekejont e S<sup>t</sup>-Jili, a dre d'ar c'hleusiou, a bep tu d'ann hent braz : ac'hano e tlient, pa vije ar *federeed* arru enn ho c'hreiz, tenna war-n-ezho hag ho laza holl : ann taol a oa kaer ha diarvar : mes ar chouaned, daoust da lavar ar *federeed*, ne glaskent ket dizeur tud ar vro : evel-se pa weljont oc'h arruout da genta enn ho c'hreiz, gwardou nasional e pere ne oa, evit lavarout mad, nemet pennou tiegez, Modez ar C'hozannet, pehini a oa er penn ho digemere da genta, a droaz ann urz hag a c'hourc'hemennaz tenna ker-kent, evit rei dre eno da c'houzout d'ar re all, ho devoa da zouza, pe da viana d'en em lakaat war ho evez : ar chouaned a heuliaz he urz : ne oe lazet nemed unan bennak euz ar *federeed* a oa er penn arak, hag euz ar gwardou all, pere ne deurvejont ket tenna talvoudegez euz a vad-ober ar C'hozannet enn ho c'henver. Fabr a oe kannet gand ar chouaned, e S<sup>t</sup>-Jili hag e S<sup>t</sup>-Juluan. Kement-ma a dremene e tro em-gann vraz Waterloo.

Enn unan war-n-ugent a viz Mezeven, Sol ha Laboisier

gand ho faotred, ha Bainvel gant he skolaerien, en em gann enn Alre epad daouzek heur, ouc'h ar jeneral Bigarre, ha ze hep na koll na gounid. Bigarre a gennik goude d'ezho ar peoc'h, gant ann diviz ho divije c'hoant da lakaat : — Javarrout a rejont : — Ar Rone pe ar maro. —

Juluan Gwillemot a dremen gant Jhe rumm enn tu all da ster ar Blavet, ha kemer a ra ker-kent Gemene ha Gourin : er gear-ma e c'halv ar blouiziz d'ann armou : mil den a deu raktal d'her c'havout : mont a ra gant-ho war Ger-Ahez, pehini en em ro d'ezhan, hag ac'hano war Bontivi, gand ar re wenn en devoa dastumet er *Finister* ar C'hont a Gerne pe Kornouaill.

Enn dri a viz Gouere, Sol a oa e bourc'h ar C'hamp gand ouc'h penn pemzek mil chouan : paotred Leridant en em daol, er bemp, war ar *Bonapartisted* hag ho c'hann e Pleskop : ar re-ma en em denn war zu Gwenned, pe en em guz e touez ann ed : fellout a rea d'ar chouaned mont raktal war Wenned, mes Sol ne c'houlenne ket koll ar gear-ma, hag ho c'hasaz war zu Elven ha kastel Kerleo. Eno e chomjont sioul, mes bepred dindan ann armou, da c'houzout pe leac'h ezaje ar vell : ne oent ket pell o c'hortoz : eunn nebeut deisiou goude e oe klevet a oa kollet da Napoleon, hag en devoa Loeiz XVIII great he zonedigez e Pariz, enn eiz a viz Gouere. En em daol a reont neuze da Wenned, hag eno e kreiz ar vrasa levenez, e oe kanet ann *Te Deum*, evit trugarekaat Doue euz a eil zistro ar Vourboned.

Chouaned ar *Finister* hare *Koste-ann-Nord*, en em dennaz ivez pep hini d'he du, da ober eunn bevel dra. N'oc'h euz biskoaz gwelet ker braz levenez evel a oe neuze dre Vreiz ; jeneraled, ofiserien ha soudarded Napoleon, ann dispac'herien goz hag ar *federeed* a zeuz holl da gemer lod enn arvestou boutin, evel evit diskouez d'ar chouaned penaoz e oant, pa welent ho mad, bepred reiz da gemer ann traou evel ma ar-



ruent, ha da anavout evit Aotrou, ann hini a emgannet der-  
c'hent.

Tamallet a zo bet ha tamall a rear c'hoaz d'ar chouaned  
breton ha d'ar chouaned all, beza troet enep Napoleon, evel  
ivez beza enebet ar Republik : ne glaskinn ket dislavaret ke-  
ment-ma : eaz eo gwelout pe vad, pe fall a rejont oc'h hen  
ober ; mes mar zo eur gwir bennak d'ho zamall war an dra-  
ze, ne gredann ket da vihana, e vefe gallet tamall d'ezho beza  
tennet talvoudegez vraz euz ho oberiou. Pa rannaz ann dis-  
pac'herien goz madou ar gloer ha re ann dudchentil, chouan  
ebed ne deurveaz kemer lod digant-ho : pa adsavaz ar  
Vourboned war ann tron, ar chouaned ne zastumjont ket  
adarre leveou braz : ar Vourboned ne brizjont, nemet gant  
poan, rei eur gopr bihan bennak d'ann dud feal-ze pere a  
oa en em garget a reuziou oc'h en em ganna evit-ho. Baleet  
a ve pell kent ma ve kavet eur bobl hag en defe tennet ken  
nebeut a vad euz kement a oberiou kaer ; ha pelloc'h  
d'hoaz, kent ma ve kavet kement a fidelled, goude kement  
a zianaoudegez. Ar Vretoned hag ar Vandeaned ho deuz a  
viskoaz dalc'het feal d'ar Roue : hirio koulskoude ho c'hre-  
dann kalz nebeutoc'h birvidik da c'houzout piou a vezo Aotrou  
e Pariz, ha keit ha ne vezint-ket re garget a wiriou, na ka-  
set re bell d'ann emgannou, na diweret euz ho relijion,  
hogoz ne reont kaz e dorn piou e vezo ar vont, na gant piou  
e vezo ruilet : gouzout a reont n'ho deuz netra da c'hounid :  
evel-se e klefot ar Vretoned o lavarout :

— Ar beorien a vo paour ato,  
Ha re ker ato ho debro.  
— Ato koulskoude oe laret :  
» Falla douar, ar gwella ed.  
— » Ar gwella ed pa deui enn dro  
» Ar roueou goz da rena'r vro.»

— Ar roue koz zo distroet,  
Ann amzer goz né deuz ket gret.  
— Ann amzer goz ne deui ket mui ;  
Trubardet omp, siouaz d'eomp  
[ ni !

— Siouaz d'eomp ! trubardet	— Neb a eaz da gredi e koue
Enn donar fall, 'ma fall ann ed.	Ann aour melen deuz beg argwe.
— Gwas-oc'h-gwas, kriz-oc'h-	— Deuz beg argwe ne goue netra
	Nemed ann deliou sec'h na
Diskiant eo nep n'her gwel ket.	— Nemed ann deliou sec'h na
— Diskiant nep eaz da gredi	Da ober lec'h d'ar re neve :
E teni da c'houlmed ar brini :	— Nemed ann deliou melen
— Da gredi a vlenio bikenn	Liliou war gouriou raden ;
	Da ober gwele d'ann dud paour.

Ha goude a savont ho daoulagad e trezek ann Ee, e pe  
leac'h emma ho holl c'hortoz, hag e teu c'hoaz gant-ho, evit  
en em beurfrealzi :

—[En emgorfortet, peorien geiz,] — Choui po, e lec'h gwele gwial  
Gweleou plan ho po eunn deiz : Gwele olifant er bed all.

( Barzaz-Breiz.)

### ARDAMEZ.

Va c'hoant a oa beza roet ama hanoiou ar veleien, a zal-  
c'haz enn Eskopti Treger, hep ober al Le, pe a zistroaz goude  
her beza great ; hanoiou ar re a dremenaz ac'hano da Jerzea,  
evel ivez hanoiou ar re a oa a bep tu euz a Vreiz, bannet da Ro-  
chefort, d'ar Giana ha da enez Re : skrivet am boa c'hoaz  
meur a ganaouen, ha meur a histor, evel hini eur wezen a  
*Liberte*, hanvet *Jannett ar Boudennou* . . . . .  
mes kement-se holl a vrasafe re va leor, hag e renkann  
ho lezel : rei a rinn hep ken, ha berr ha berr, diou ganaouen  
evit divuza eunn nebeut ar re a deurvezo lenn ar pez a zo la-  
varet ama diaraok war ar *Revolusion*.



KENTEL

ROET GAND EUR BUGEL D'HE DAD.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Chetu me digouet, ma mignon.* — 11.

— Mar be poelladuz ho spered,  
Hag ho tiskouarn e kleofet  
Laret eur gentel a roaz  
Eur mab d'he dad, hep klask tro

— Kaer en devez Salver ar bed  
Ha deuz he berz he vinstred  
Preseg stank d'imp hon dleado;  
Bouzar ez omp hogoz ato.  
— Da dad, da vamm a enori  
Evit pell amzer ma vevi :

*Da zen ebed ne ra nepred.*  
*Ar pez gouzanv ne garfez ket.*  
— *Ma breur, gand ar vend a*

*Ha netra ken, mentet a vi;*  
Kant mil gwech hon euz-han

Ha deut omp-ni gwell tamm

— Ebarz hon mad-ni e sonjomp,  
Hini ar re all 'ankoueomp ;  
Pe vezomp iac'h ne gredomp ket  
E tenffe kozni d'hon gwelet.

— Koz en deuz katz a wanderio  
Hag a ve diez a wecho :  
Hogen tad ha mamm douj ato  
Hag ho defe, zoken techo.

— Striz braz ez eo ar goure'he-  
Dre anoudegez c'hoaz ouz penn,

Evel dre wir, dre lealed  
E tleomp o douja bepred.  
— Gouzanyin hep klemm, ho-  
[ gwallo,

Ho frealzin enn ho foanio,  
Ha kement-se dre drugare  
A dle bepred ar yugale.  
— E ze a vanker aliez ;  
Ar re goz a gaver diez ;  
Didalvez int, a leverer,  
Pe da viana her sonjer.

— Ar potr Fanchik a zibunaz  
War gement-ze e dad Lukaz :  
Me raio d'ech ar werseen,  
Boutet hi don mad enn ho penn.

— Eul labourer, hanvet Lukaz,  
En devoa he dad Nikolaz,  
Hag eur zeiz deuz a yugale,  
Brasoc'h ann eil 'vit egile.

— Mado a oa a leiz ann ti,  
Ha mechans, c'hoantda zastumi ;  
*Seul vu a ve, seul vu 've c'hoant*  
*Da zastum leve hag arc'hant.*

— Nikolaz koz a fourgase  
He vah Lukaz hogoz bemde,  
War he zoare, he labourio,  
Mechans hep abeg a wecho.

— Ouz penn ma oa Kolaz gri-  
E laret ive e oa louz. [gnouz,  
Eur c'horn deuz ann ti a zalc'he  
Hag ann holl dreo a vastare.

— Dre he gomzio arabaduz  
E vousare ar c'hoz fleriu,  
Enn eur gleun, enn eur basset,  
Hen ho harze holl da gousket.

— Lukaz a zeraoue skuiza  
Gand ar gwaz koz, hag a esa  
Frankat he di a gement-se ;  
Esoc'h a lere, a vije.

— 'Barz arsonj-ze hag hen men-  
Her c'has e ker d'eur c'hlandi  
[ nat  
[ mad ;

Evit bevan maoc'h didrouz  
Ha beza kuit deuz ar grignouz.  
— Eunn de e lavaraz d'ezhan :  
Ni na hellomp ket, eme-z-han,  
Ho tamantin 'vel m'eo dleet.  
Rak bepred ez omp holl dalc'het.

— Me ho kaso, mar otreet,  
D'ar c'hlandi, hag eno 'vefet  
Kalz gwell damantet 'vit aman,  
Ha me 'vo kuit enn eur bean.

— Eno a zo tud dileuret  
Da zamantin ar re wanet ;  
E tuhont eaz ho po ive  
Da vont d'ann oferen bemde.

— Nebent a nebent Nikolaz  
Monet e ker a otreaz ;  
Neuze Lukaz hep gortoz mui  
A gaz ar potr koz d'ar c'hlandi.

— Ken en devoa ar yugale  
D'ho zad koz, darn anhe 'wele :  
Bemde a vije goulennet  
Ha ne vije ket distroet.

— Dreist ar re all, Fanch ann  
[ drivet

D'he data koz a oa keuziet,  
Rak prenet en devoa d'ezhan  
Eunn tok plouz brao evit ann  
[ han.

— Ann tado koz hogoz ato  
A gar ar yugaleigo ;  
A zigaz d'ezbe meur a dra,  
Hag a ziwall ho c'hastia.

— Dre gement-se ar yugale  
Ho zudo koz a gar ive ;  
Eunn den braz ar madobero  
Kent evit-he a ankoueo.

— Pa eaz e ker, e eaz Lukaz  
Da welout he dad Nikolaz,  
Hag e c'houennaz digant-han,  
Penez a oa ar bed gant-han ?

— N'e d-oun ket fall, a lavaraz,  
Gallout a rafenn bezan waz ;  
Ma hellfenn tomman ma gwele,  
Ne ve ket true ma doare.

— Ma am be sonj, eme Lukaz,  
Me digaso ar ballen c'hlaz,  
Hag e vefet gwell goloet  
Ha neuze a hellfet kousket.

— Pa arruaz Lukaz er ger,  
He yugale, n'hoc'h euz micher,  
A c'houenn kelo tata koz,  
Ha ne arruo ket fenoz ?

— Brao eo, emedi, lavaraz,  
Ha diouz tu a kendalc'has :  
Ke te, Fanchik, ke da gerc'hat  
Ar ballen c'hlaz da gas d'am zad.

— Laret en deuz lann arChervad  
Arruet henoaz d'he c'here'bat :  
He c'has a ra da Landreger,  
'N eur vont d'ar marc'had di-  
[ merc'her.

— Ar potr er gampr a zo redet  
Mes ar vallen en deuz rannet,  
Ha ker buan a tiskennaz  
Gand ann hanter war he ziscoaz.

— He dad o vezan bet gwelet  
E oa dre ann hanter troc'het,  
A lavaraz enn eur grozal :  
Didalve 'vo ann hanter all.

— Nann, eme Fanchik, ne vo ket,  
*Mar bevet da goz hen c'hefet :*  
Neuze 'barz er porz a redaz  
Gant doan dirak ann tolio haz.

— Lukaz a groz bag a skandal,  
Mes souden pa deu da zonjal,  
E lavar Fanch en deuz kavet  
Katz a breder 'vit he spered.

— Deuz ar gwellan en deuz poel-  
Penez e koz 'vije ozet. [let  
Neuze ez eaz don enn he benn,  
Nerz ar bevare goure'hemenn.

— He wall en deuz anaveet,  
Gwelet en deuz oa faziet,  
Ober d'he dad enn he gozni  
Ar pez ne garje gouzanvi.



— E pad ann noz e kement-se  
E sonjaz kalz enn he wele :  
Kent ma oa ann degoulaouet  
Da gerc'hat he dad ez eo et.  
— Biskoaz goudeze ne voundaz  
Ouz ar potr koz, hag hel lezaz  
Da ober ha da lavaret ;  
Hag hen damante mad meurbet.



— Kalz a gaver a Lukazed  
Enn de a birie dre ar bed,  
Hag ar pezh a zo ar gwasan  
Eo ez eont war baotau.  
— Mad ve kas Fanch dre Vreiz-  
[ize]l  
Da rei d'ezho eunn tam kentel :  
Me gred e raio lakaat  
Damanti gwel meur a goz-tad.  
— Tap 'ta, va fotr, tap war da  
[benn]  
Tap buan da banter pallen :



## HEVELEDIGEZOU.

(IEZ TREGER.)

WAR DON : *Eunn damoezen*, etc.

Eunn damoezen mar he hep  
[greun]  
A vo hefenn gant-hi huel ;  
Hag enn enep ann hini leun  
A bleg he fenn bepred izel.

Eunn den hep dellid, eur pec'her  
A vo bepred ar faensan ;  
Ann dud a zellid hag a skouer  
A zo bepred ar re vuelan.

Bale Tregar, Kerne, Gwenned  
Ha Leon a dreuz hag a hed.  
— Ke tre enn holl diegeso,  
Enklask mad stad ar c'hoz-tado,  
Ha pa gevi re dilezet,  
Dispask da ballen da welet.  
— Euz ar bravan a vo klevet  
Da gentel gaud al Lukazed,  
Ha pe ne vo, sklap gand ho fenn  
Euz da ziou vrec'h da damm pal-  
[len].

— Goude da dol, bale raktal  
Da glask arre Lukazed all :  
Ne lez hini e Breiz-izel  
Hep mont da rei d'ezhan kentel.  
— Gonid a ri dreze bennoz  
Ne ouzonn ket pet tala-goz :  
Houneze a denno d'id da vad  
Hag er bed-man, hag enn hir-  
[bad].

A : D.

Pa ver pell amzer hep avel,  
E teu enn er falsidigez,  
Ha neuze klenvejo marvel  
A sav buan enn hon touez.

Hon Ine er binvidigez  
A goue e kalz a bec'hejo :  
Doue dre ann davantegez  
He zifenn war he zirollo.

Gwelet aked eur verienen  
Da zastumi ar pezh 'zo red :  
E pad ann hanv e ten abenn  
Da gorgan he frizoun a voed.

E pad ann hanv deuz ho iec'hed  
Dastumet kalz ar vertuio,  
Kent ar gosni hag ar c'hlenved,  
Abarzann heur deuz ho maro.

Ne vank nemed eur fulen dan  
Evit enaouin eunn tan gwall ;  
Flemm ann aer' zo meurbed bian  
Hag a gontamm ann den raktal.

'Barz da greden eunn dra dister  
A zo eur pec'bed veniel :  
Tol evez pe e herr amzer  
E ri ive unan marvel.

Meur a veach a ve kollet  
Ebarz ar mor kalz a vado,  
Pe ve al listri braz flastret  
Ouz arc'herrek gant ar stourmo.

Ann drouk-spered pa hell gonid  
War-n-ompebarz ann emganno,  
E kollomp gant hon holl dellid  
Hor c'horfo hag hon ineo.

Pa wel pañ he blu kaeran  
En em sav son dre veanded ;  
Mes mezek e ten da vezau  
Pa sel ouz he dreid dic'hened.

Mar out douget da rogente  
Vit da spered pe da c'hened,  
Sonj e t'euz diroget Done,  
Souj er pec'hejo e t'euz gret.

E tre gwenan 'n ho ruskenno  
A ve ar brasan unvaniez,  
Pep hini ra he dleado,  
Ne ve nepred dizunvaniez.

Pebez dishevelidigez !  
E tre ann dud ken na weler  
Nemet venjans, nemet drougiez,  
Dizanaoudegez ha krisder.

Tolet aliez ho sell  
War eur wilben huel savet,  
Bepred e tro hag e tistro,  
Mar be avel tammik ebet.

Bezan eo, e gwir, ar skeuden  
Dimeuz ann dud a dro bepred  
A venoz e pep redaden :  
Enn ho c'homzo ne fiet ket.

Eur blei bian mar hen savet  
Ho saout da gentan a dago :  
He fenn da aer ne frotet ket  
Pe hep arvar, ni ho flemmo.

Eul laer dre vicher, a laero  
He vadoherour da gentan ;  
Ne fiet 'n eur gannaz nep-tro  
Pe c'houi a vo touellet gant-han.

Eur penn-moc'h ne hell gouzanvi  
Na c'houesio mad na bleunenno,  
Nag ar bomm deuz ann Arabi :  
Rein 'reont d'ezhan ar maro.

Ar gorked, ar vastokined  
Ne geront ket ar wirionez,  
Gant heuz vraz a welont bepred  
Ar glanded hag ar santelez.

Gand ar vosen pe ve eur re,  
Den ne gredfe lostat out-han ;  
Kar ha mignon a ia pase,  
Pe e varvont holl evel-t-han.

Pella abred deuz c'hismatik,  
Pe chismatik e vi ive,  
Ne dosta ket ouz heretik  
Pe 'koll e-herr ar gwir Fe.



Ouz eur c'hi klanv den ne dosta,  
Hep anavet mad he armo,  
Pe e gwirion, a nep her gra  
A zo diod, enn han e krogo.

Hep bezan stard ha skiantet  
Ne zelao nepred chismatik,  
Pe a gomzo a vi dallet;  
Nebeutoc'h c'hoaz eunn heretik.


'Barz al livaden arc'h Noe  
A oe tolet ha distolet  
Meur a weach a bep koste,  
Mes penseau ne eure ket.

Ar gwir Hiz a zo ive  
A bep tu bepred heskinet :

Bepred war ann holl e c'hone :  
Douc'n deus-hen d'ezhi gwestlet

Kaer en deuz ar mor hag avel  
Skein a bep tu ouz ar c'herrek,  
Ne spontont tamm rak ho di-  
[boell,  
Bepred int sioul ha postek.

Eunn den fur hag eur gwir gris-  
[ten  
Kaer e zo dont d'hen heskinan,  
A vezo feal d'he lezen,  
Sioul eun inou ar brasan.



## GERIOU

### LEKEAT EL LEOR-MA

PERE

N'INT KET KLEVET GAND ANN HOLL VRETONEZ, GANT  
GERIOU ALL EVIT HO SKLERAAT.

### KENTEL.

Ar brezonek a zo el leor-ma eo ann hini a gomze hon tudou  
koz, ken ma oa ar gallek en em silet kement dre Vreiz : beza  
ez eo ivez ann hini en deuz digaset anevet ar Gonidek, hag  
a laka hirio enn he c'houde, ann Aotrounez T. Villemarque,  
Troud, Herri, Brizeu, Klec'h, ArSkour, Aleksandr, Gwizouarn,  
Prou, Goesbriand, Lezeleu, Joubiou, ha meur a zen gwiziek all,

evel ann Aotrounez a laka e brezonek *Lizeriou Breuriez ar  
feiz*. Kredet am euz e oa euz ar gwella ober evel-d-ho, ha chetu  
evit petra n'am euz ket goulennet mont da wea, na da va-  
c'hagna geriou gallek evit skriva va leor. Evit ma vezo kle-  
vet ar geriou koz am euz kemeret, ez ann da lakaat ama, ar  
re ann nebenta anevzet, ha rak-enep d'ezho ar geriou ne-  
vez anavezet gand ann holl.

Aloubi	<i>Usurpi</i>	Kemma	<i>Chanj</i>
Alter	<i>Transport</i>	Keina	<i>En em zeplori</i>
Anaoue	<i>Ekommunikasion</i>	Kemenni	<i>Ordren</i>
Ardamez	<i>Observasion</i>	Kentraoui	<i>Anima</i>
Argaden	<i>Expédition</i>	Kevalal	<i>Egal</i>
Argarzdigez	<i>Horror</i>	Keyret	<i>Asamblez</i>
Argourou	<i>Dot</i>	Kinniga	<i>Ofri</i>
Arnodi	<i>Eprouvi</i>	Klandi	<i>Hospital</i>
Arvesti	<i>Observi</i>	Klostr	<i>Klast</i>
Asrec'h	<i>Chagrin</i>	Kleuzeur	<i>Lampik</i>
Arwez	<i>Merk</i>	Kompod	<i>Kalandrier</i>
Arzaoi	<i>Reposi</i>	Kontamm	<i>Poison</i>
Azaonez	<i>Prevenans</i>	Kork	<i>Fripon</i>
Balc'hder	<i>Ourgouil</i>	Korvigel	<i>Tromperi</i>
Bac'hia	<i>Prizounia</i>	Kouzoumen	<i>Confirmation</i>
Balafen	<i>Papillon</i>	Kred	<i>Kosion</i>
Basta	<i>Pourvei</i>	Kred	<i>Assurans</i>
Barz	<i>Poet</i>	Krinded	<i>Avaris</i>
Barzez	<i>Komedianez</i>	Koun	<i>Sonj</i>
Beoder	<i>Ardor, Zel</i>	Kun	<i>Dous</i>
Blenia	<i>Gouverni</i>	Kunaa	<i>Kalmi</i>
Bloda	<i>Teneraat</i>	Kunuc'ben	<i>Insult</i>
Boaz	<i>Kustumm</i>	Kunvellez	<i>Dousder</i>
Boutin	<i>Kommun</i>	Dael	<i>Disput</i>
Brella	<i>Brouilla</i>	Darvoud	<i>Sirkonstans</i>
Brenjou	<i>Tribunaliou</i>	Daskor	<i>Restitui</i>
Buanekaot	<i>En em facha</i>	Dasprener	<i>Redemptor</i>
Bugadi	<i>En em vanti</i>	Dason	<i>Eko</i>
Kabluz	<i>Koupabl</i>	Dazorc'hi	<i>Resusita</i>
Kantren	<i>Mont-dont</i>	Dellezout	<i>Meritout</i>
Kavailla	<i>Insulti</i>	Deraoui	<i>Koumans</i>
Keala	<i>Adori</i>	Die' halluz	<i>Impossubl</i>
Keeluz	<i>Adorabl</i>	Dianneza	<i>Pilla</i>
Keflusk	<i>Revolt</i>	Diantegez	<i>Innosans</i>
Kefridi	<i>Kommision</i>	Dibourc'ha	<i>Laerez</i>
Kelou	<i>Fablennou</i>	Dieubi	<i>Debarasi</i>



Diellou *Rejistrour*  
 Diforc'hidigez *Divorc*  
 Digeflusk *Immobil*  
 Dilenna *Choaz*  
 Dileuri *Destina*  
 Dioungani *Profatiza*  
 Diskolpa *En em zivertisa*  
 Dispac'ha *En em revolti*  
 Dizeria *Mont da fall*  
 Dremm *Bisach*  
 Drougiez *Malis*  
 Dudi *Pljadur*  
 Dudou *Superstision*  
 Ehana *Repos*  
 Ehaoui *Allumi*  
 Enkrez *Chagrin*  
 Engehenta *Konsevi*  
 Engrouez *Foul*  
 Erezuz *Aviuz*  
 Ergerz *Baleaden*  
 Fallakr *Selerat*  
 Falloni *Trahison*  
 Falsidigez *Korrupsion*  
 Feura *Denonsi*  
 Flatra *Konsoli*  
 Frealzi *Charlatan*  
 Furluskin *Lubrik*  
 Gadal *Tromper*  
 Ganaz *Tristidigez*  
 Gin *Purifa*  
 Glana *Purete*  
 Glanded *A grenn*  
 Glez *Anduri*  
 Gouzanyi *Akora*  
 Gra *Barbouillat*  
 Gragala *Siej*  
 Grounn *Maleur*  
 Gwa *Neglijans*  
 Gwallegez *Kastiza*  
 Gwana *Infirmite*  
 Gwander *Houmaj*  
 Gwazoniezh *Nofragi*  
 Gweledi *Famillou*  
 Gwennou *Evuruz*  
 Gwennidik *Disesper*  
 Gwevi *Histor*  
 Gwerzeen *Jilouet*  
 Gwilben *Pasianted*  
 Habaskded

Harlui *Exila*  
 Hemolc'h *Chasse*  
 Her *Heritier*  
 Herder *Hardiegezh*  
 Herzel *Ampech*  
 Hesk *Se'h*  
 Heskina *Persékuti*  
 Hevelebekaat *Kompari*  
 Hiboud *Trous ann dour*  
 Hir-bad *Eternite*  
 Horelluz *Chanselant*  
 Huerni *Insulti*  
 Inou *Ansi*  
 Ioul *Bolonte*  
 Irien *Konspirasion*  
 Javed *Machouer*  
 Jed *Kount*  
 Livastred *Kanaillez*  
 Lik *Laik, impudik*  
 Lent *Aoumik*  
 Likaouerezh *Kajoleri*  
 Lida *Selebrii*  
 Ligentez *Impureté*  
 Lili *Fourdilis*  
 Leisded *Humidite*  
 Lu *Ridikul*  
 Mac'h *Foul*  
 Mac'her *Tirant*  
 Marc'hek *Chevalier*  
 Mastokin *Fripon*  
 Menna *Imajina*  
 Mennoz *Sentimant*  
 Mera *Kundui*  
 Mezekniezh *Chirurgi*  
 Mibiluz *Adroit*  
 Mizou *Frejou*  
 Namm *Defot*  
 Nammuz *Kriminel*  
 Oriadez *Plac'h fall*  
 Paotta *En em vultiplia*  
 Penn grisien *Soursen*  
 Pensea *Nofragi*  
 Pervez *Avar*  
 Peuka *Serri a dost*  
 Peurbadelez *Eternite*  
 Piaoua *Passedi*  
 Pilpouz *Hipokrit*  
 Pirc'hirinded *Pelerinach*  
 Plouziz *Pasianted*

Poella *Kompren*  
 Poell *Moderasion*  
 Poelladit *Tachit da*  
 Ploue *Ar Champagn*  
 Prederia *Soigni*  
 Preiza *Laerez*  
 Puka *Merka*  
 Puilder *Abondans*  
 Rag-gwel *Providans*  
 Rebecha *Reproc'h*  
 Redia *Forsa*  
 Reiza *Regli*  
 Reustl *Tumult*  
 Rok *Fier*  
 Rogentez *Arrogans*  
 Safari *Krial*  
 Saotra *Souilla*  
 Saotrez *Profanasion*  
 Saouzani *Estoni*  
 Sebeza *Trompa*  
 Seizl *Paralisi*  
 Sened *Konsil*  
 Skarz *Avar*  
 Skeda *Lugerni*

Skilf *Grif*  
 Skoazella *Sikour*  
 Skopa *Krachat*  
 Skleur *Lamp*  
 Splan *Skler*  
 Striva *Disputi*  
 Strobiniella *Sorsella*  
 Stroll *Asamble*  
 Tao-tav *Silans*  
 Tavedegez *Molankoni*  
 Tavantegez *Paourentez*  
 Tear *Vif*  
 Terrizik *Assomant*  
 Teul *Titr*  
 Teul-teuza *Founta*  
 Tonket *Destinet da*  
 Tonella *Trompla*  
 Treanti *Penetri*  
 Tremenvan *Heur-diveza*  
 Trezer *Prodig*  
 Trogemma *Chanj*  
 Tuer *Froder*  
 Urlou *Gouttou*  
 Vuelded *Humilite*

Ann Aotrou Brizeu a lavaraz brema a zo eunn  
 nebeut blaveziou :

» Me drouc'ho ma zeod em bek

» Ken diziski ar brezonek : —

— Hag evit gwir

Mar zo eur breton 'barz ar bed

En defe he iez dizisket,

E tefe he deod trouc'ha,

Pe lakaat he ziframma,

Ha goude c'hoaz e rafe mad

Monet d'ar Chin d'en em guzat.

**A : DURAND,**

Kure e Landreger.



## TAOLEN.

KENT-SKRID.	ENEKEN	I
I. Ann Asamble Nasional.		1
Ann Eskibien goz hag ar re nevez.		10
II. Ann Iliz gatolik.		13
Dalledigez ar Sitoianed.		20
III. Kanaouen diwar ho fenn.		ibid.
Kimiad ar Veleien, 1°.		27
IV. Hirvoudou eur Person.		28
Kimiad ar Veleien, 2°.		40
V. Kimiad ann Aotrou ar Gwillou.		41
Kimiad ar Veleien, 3°.		49
VI. Kimiad ann Aotrou ann Hermit.		50
Kimiad ar Veleien, 4°.		64
VII. Klemmou ar Vretoned.		65
Bac'h Fontevrault.		69
Ann taoliou baz.		73
Furch war ar veleien goz.		75
VIII. Furch e Plouberr.		ibid.
IX. Furch all e Plouberr.		80
Beleien breton ha Bretoned all merzeriet e Pariz.		88
Aliou ar Veleien guzet d'ho farrosianiz.		93
X. Distavar d'ar Veleien douet.		94
XI. Prezegenn e tre eur Bugel hag eunn Doktor.		102



<i>Beleien e Kastel Brest.</i>	ENE BEN	110
<i>Beleien dastumet er bac'hiou.</i>		112
<i>Beleien marvet er bac'hiou.</i>		114
<i>Ann douerien a zeu dre nerz d'ar parresiou.</i>		115
<i>Ali da eur Persoun touer ha kriz meurbed.</i>		115
XII. <i>Eur Persoun koz da eur Persoun nevez.</i>		117
<i>Aliou ar Zalver.</i>		125
XIII. <i>Jezuz hag eur c'hristen difaziet.</i>		126
<i>Dislavariou Beleien touet.</i>		136
XIV. <i>Dislavar eur Belek euz a Leon.</i>		137
XV. <i>Dislavar ann Aotrou Loier.</i>		143
Loeiz XVI.		149
XVI. <i>Testamant Loeiz XVI.</i>		150
<i>Karrier e Naoned.</i>		156
<i>Robesperez e Pariz.</i>		158
<i>Ar Veleien harluet.</i>		160
<i>Ann Aotrou ar C'halvez.</i>	ibid.	
<i>Ann Aotrou Nourri.</i>		179
XVII. <i>Kanaouen da dud parrez Bignan.</i>	ibid.	
XVIII. <i>Al Liberte, ann Egalite.</i>		184
XIX. <i>Ar Rekizision.</i>		191
<i>Dispac'h diwar he fenn.</i>		195
<i>Ar Gompoderien nevez.</i>		196
XX. <i>Kentel d'ar Gompoderien.</i>		203
<i>Ar Pedennou nevez.</i>		205
<i>Ar Bater da Robesperez.</i>	ibid.	
<i>Da Varat.</i>		206
<i>Ar Gredo.</i>	ibid.	

XXI. <i>Kredo Nasional.</i>	ENE BEN	207
XXII. <i>Gourc'hemennou Nasional.</i>		208
XXIII. <i>Prezegenn Nasional.</i>		211
<i>Ar Gwirioù koz ha madou ann Iliz.</i>		220
XXIV. <i>Gourc'hemennou Doue ha re ann Na-</i>		
<i>sion.</i>		224
<i>Ar Brezonek.</i>		229
<i>Saotrezioù e Breiz.</i>		231
XXV. <i>Kanaouen diwar ho fenn.</i>		233
<i>Goel ann Huella.</i>		242
XXVI. <i>Plan ar Gouel; ann Aotrou Feburier.</i>		243
<i>Renerien Eskoptioù Breiz-izel.</i>		252
XXVII. <i>Banniel ar Vretoned.</i>		255
<i>Ann Dukez Anna.</i>		256
<i>Torr-he-benn.</i>		257
<i>Beleien ha tud feal barnet d'ar maro gant breu-</i>		
<i>jou St-Briek.</i>		258
<i>Merzerenti ann Aotrounez Lajat hag ar Gall.</i>		259
<i>Hini ann Itrouñ Taupin.</i>		263
<i>Ann Aotrounez Lannier.</i>		267
<i>Heul euz a varnou breujoù St-Briek.</i>		269
<i>Beleien ha tud feal merzeriet e Koste-ann-Nord.</i>		271
<i>Beleien ha tud feal barnet d'ar maro gant breu-</i>		
<i>jou Brest.</i>		274
XXIX. <i>Menosioù ann Aotrou Branellek.</i>		276
<i>Heul euz a varnou breujoù Brest.</i>		284
<i>Breujoù Kemper.</i>		285
<i>Breujoù ann Oriant.</i>		287



<i>Emgann ar Ville-Mario.</i>	ENE BEN	290
<i>Ar peoc'h goude maro Robesperez.</i>		292
<i>Ar re c'hlaз hag ar Vandea.</i>		296
XXX. <i>Gavaden d'ann emgann.</i>		298
<i>Breiz a zo enep ar Republik.</i>		302
<i>Diskenn Kiberon.</i>		304
<i>Kann Kintin ha Kastel Audren.</i>		315
<i>Ar re Wenn.</i>		316
XXXI. <i>Ar Chouanted.</i>		317
XXXII. <i>Dispac'h Bro-Zaoz hag hini Bro-C'hall.</i>		321
XXXIII. <i>Histor ar Revolution.</i>		333
XXXIV. <i>Kentel d'ann dud dirollet.</i>		342
<i>Ar Vretoned a ra ar peoc'h hag hen torr.</i>		345
<i>Goueliou ann Direktoar.</i>		346
<i>Beleien bannet da Rochefort, d'ar Giana ha da enez Re, ha marvet eno.</i>	ibid.	
<i>Beleien marvet enn harlu.</i>		347
<i>Ann Dommerien.</i>		348
<i>Venjans ar re Wenn.</i>		351
<i>Kannou e tu Gwengamp.</i>		352
<i>Duwiket a glask dieubi bac'h St-Briek.</i>		353
<i>Ar Chouaned a emgann St-Briek.</i>		354
<i>Oberiou all ar Chouaned e 1799, ha derou 1800.</i>		355
<i>Jorj a ra ar peoc'h.</i>		358
<i>Bonapart a ra ar peoc'h.</i>	ibid.	
<i>Maro Eskop Kemper.</i>		359
<i>Maro ar Mersier ha Chouaned all.</i>		360

XXXV. <i>Ar Peoc'h.</i>	ENE BEN	360
<i>Maro Jorj hag he vignouned.</i>		364
<i>Ar Vretoned hag ann Impalaer.</i>		366
<i>Maro Bar, ar Gwern ha Droz.</i>		368
<i>Distro ar Vourboned.</i>		369
XXXVI. <i>Ar Peoc'h, 1814.</i>		370
<i>Konskripsion Napoleon.</i>		371
XXXVII. <i>Diverr euz a histor ar Revolution.</i>		373
<i>Ar C'hant-Deiz.</i>		377
<i>Divez.</i>		382
XXXVIII. <i>Kentel roet gand eur bugel d'he dad.</i>		384
XXXIX. <i>Heveledigezou.</i>		386
<i>Geriou Brezonek.</i>		388

DIVEZ ANN DAOLEN.